

BARR HEOL



Direct. Le Clerc, rect. Buhulien C-d-N
N° 30 Mars 1962, Trimestriell, Prix N° 2NF

Reuer: M. Le Clerc, person. Bulien, Bro-Dreger
N-enn 30 Meurzh 1962, Trimiziek, Koum. 6 LN

T A O L E N N

(Doujañs d'An Den.....p. 1)
(Un Tamm eus Istor BARR-HEOL.....p. 4)
(Rouestladeg ar Yezhoù :
(1 Flandrezeg ha Galleg.....p. 7)
(2 Kembre : Planedenn ar Yezh.....p. 1 1)
(3 Bolivia: Proleterion o Yezh.....p. 2 1)
(Brec'hiad-Plouz...Bozad Greun.....p. 2 6)
(Embannadurioù ar Bibl.....p. 3 1)
(Diell: Respont an F.C.B.....p. 3 4)
(Pajennig an Tregerieg.....p. 3 6)
(Iwerzhon : Ritual Nevez.....p. 3 7)
(Ur C'helt: Tom Dooley.....p. 4 4)
(Ul Lizher (C.B.).....p. 4 7)
(Ni Hon-Daou....(son).....p. 4 8)
(O Heuliañ an Ao.Chaloni Boulard,p. 5 0)
(Taol-Lagad war An Embannadurioù.....p. 5 4)

FOLLENNIG ERRATA

Pediñ a reomp hol lennerion d'hon digareziñ evit ar mankoù
-mañ hon eus merzet hag evit ar re n'hon eus ket gwelet :

-
- Pajenn 2: islinennañ Pennoù ar Gouarnamant, Anaout a reunt, Gouzout a reont.
- Pajenn 3: eil dilinennad an eil lodenn An Arm nemetañ a chom GANTO
- Pajenn 4: Eil dilinennad : (goude forbidden); evit darn all un hent da ziazezañ o mestroni war zouaroù, korfoù ha speredoù an an dud : trevadennourion vac'hom, nazied, marksourion; evit ar re all ez eo hepken un hent da dizhout ar peoc'h hag ar reizhder h. a.
- Pajenn 5 : eus AR rener nevez, Pajenn 6 : WAR ar c'hudennoù
- Pajenn 7 : lenn Troidigezh ul lizher, Troidigezh ul lizher all,
Troidigezh diwar Otello
- Pajenn 11 : Eil dilinennad diwezhañ : Krediñ a R A N
" : (notenn)** Un dra dianav e Breizh e-keñver ar Brezhoneg.
- Pajenn 12 : (Ar Palastr ruz a zo bet laket ul linenn re izel !!!)lenn:
d'ar cheñchamantoù he lemel kuit : o c'ho
- Pajenn 13 : (traoù ar bajenn) : (eil dilinennad) : Hiziv n'hell ket
h.a e vefe (kentoc'h eget MA VO)
- Pajenn 18 : e TEUAS (pedervet linenn)
- Pajenn 19 : lenn BOURC'H, ket bouc'h (!!!)
- Pajenn 20 : (tost d'an diaz) : NE GUMPRENENT ket
- Pajenn 22 : (krec'h ar bajenn) A GEMER (e-lec'h e kemer)
- Pajenn 26 : Setu da gentañ UN NEBEUT... pajenn 27 : Dre ENO
- Pajenn 30 : lenn 1819 ha neket 1919
- Pajenn 37 : Lenn:... ez eo embannadur hag eilembannadur...ur Ritual...
(re laosk ez eo frammadur ar frazenn ha re heñvel ouzh galleg gant EUS...)
- "id" : (izeloc'h, eil dilinennad).. peogwir EO aotreadur...
- Pajenn 38 : lenn KOMUNION,(neuze, 4-et dilin. IMPLIJ AR SALMOU)
" 5-et dilin. tennañ kuit GANT (ar c'hiz)
" : " Poultr ez out hag e poultr e tistroi.."
- Pajenn 42 : lenn (2-dilin.)n'ouzon ket rez peur(peqoulz)
- Pajenn 51 : (traoù) ar Barrez ma teuont ANEZHI
- Pajenn 52 : (7-et linenn en traoù) : ar preder kemeret OUZH
- Pajenn 53 : (eil dilin.) Setu petra 'venne MOARVAT an Aotrou Boulard
" : (en traoù) ne vo nemet RIVIN ha GUELEC'H
- Pajenn 54 : (en traoù) lenn DISTILHADUR ha SKRIVADUR GALLEK AN
Anvioù
- Pajenn 55 : (hevelep laoskentez) : EIL LODENN AL LENNEGEZH VREZHUNEK..)

STAGAN A REOMP OUZH AR MANKOU MENEGET

an nebeudig eveñhiadennoù-mañ:

Yezh an Aotroù Fons Vossen a zo start a-walc'h da dreiñ hag ur ger bennak a zo bet achapet diganimp en ur skeiñ ar sten-siloù.

Lennit eta, pajenn 9, trede dilinennad: KARANTEZ er rannvro evit Hollandiz a zo ur c'hemmesk a lorc'h gant o c'horn-bro, a emc'houzañvusted e pep tra, a frankiz hep sacherezh kreizenn ebet, hag a eneberezh ouzh mac'homerezh pep kreizenn."

Setu amañ a saozneg : Dutch regionalism is a mixture of local pride, general toleration, lack of central attraction, and protest against central presumptions.

(Izeloc'h) But that bloody Fleming Charles de Gaulle, who is unaware that he should call himself Karel van de walle, is advocating a Europe of nations instead of a Europ of men and women, clowns, ascetes, bankers and gardeners...

An Aotroù Bourdellez, kelenner e Lannuon, a dro evel-hen :...
Met ar Flandrezad milliget-se... a zo a-du gant un EUROPAD BROADELEZHIOU e-lec'h un EUROPAD paotred, merc'hed, tud a binijenn, bankerien, ha liorzhourion...

= =

AR STUMM " PENADS" implijet ganimp e troidigezh al lizher(hag a-hend-all), a zo re laosk marteze, met poblek-tre ez eo, ha klo-tañ a ra gant THAT hor c'henskriver...

= = = = =

PENNAD SAUNDERS LEWIS : Daoust d'an notennoù lakaet da heul komzoù al lennegour ha prezegour brudet, 'm eus aon n'eu ket sklaer-sklaer pep tra. An droidigezh a c'hell bezañ kaoz, met ivez anaoudegezh istor Kembre re skort e-touez ar Vretoned: istor ar yezh, istor ar relijion, istor politikel. N'hellemp ket reiñ diskleriadurioù re hir; hogen fiziañs hon eus ne vo re luziet an traoù evelkent !

Pajenn I6 , e dibenn an deirvet dilinennad ez eo bet troet ar ger MUDIAD dre zievezhted STROLLAD. Lenn EMSAV.

* * *

et alibi aliorum plurimorum... mendorum ...

BARRE-HIEOL

War Feiz ha Breizh

DOUJANS D'AN DEN

Sklaeroc'h-sklaerañ e teu da vezañ penaos diazez pep tra ez eo per sonelezh mab-den, hag un toullad darvoudoù tremenet nevez'zo, pe o tremen dindan hon daoulagad d'ar mar-e-mañ, gant an diskleriadurioù hag ar barnedigezhioù diwar o fenn a-berzh Pennoù an Urzhaz Katolik o deus ruet tu da adlakaat ar wirionez-se en he splannañ dirak ar speredoù eeun. Ha tu ivez da spisaat ur wech ouzhpenn gwir natur Kudenn Vreizh hag he Sevenadur.

Kemeromp afer Decazeville, e departamant an Avern, lec'h ma'z eus bet savet trouz ha chao war zigarez mengleuzioù-glaou ha na zegasont gonidegezh ebet pelloc'h, koll ne lavarant ket. Divizet ez eus bet eta serriñ al labouradegoù en ur reiñ un digoll bennak d'ar vengleuzerion dav dezho klask ur stad all a vuhez, pe dav dezho divroañ da glask labour heñvel e lec'h all. Sindikad ar vengleuzerion o sevel e vouezh neuze o tiskleriañ e oa tu d'ober gwelloc'h eget teurel tud war ar beoz gant un tammig aluzen e-giz ma felle d'ar gouarnamant reiñ. Diakrogadeg-labour a voe divizet, ha neuze manifestadegoù ha da echuiñ, tud a-youl-vat o chom war dachenn ar mengleuzioù hep debriñ, keit ha ma padje o nerzh ha ma pargetje ar vedesined dezho chom.

Diouzh un tu eta : gonidegezh, profit, teknikelezh, produusted, ha diouzh an tu all : mab-den gant e ezhommoù personel, tiegezhel, e ezhommoù-korf hag e ezhommoù-ene. Penaos dezvarn etre an div gostezenn -se ?

Mar digorit ar gazetenn gatolik LA CROIX eus Pariz, an 20 a viz Genver, e lennot, war ar bajenn gentañ ur pennad sinet gant L.Guisard " Quand les Sirènes se taisent" hag a lavar kement-mañ, warbouez nebeut : " Dre gustumañs, dre ur resped dall a-wechoù evit an hengoun ha doareoù-labourat dilerc'hiet, ez eus ur bern tud ha

na zamantont ket d'o foan koulskoude, hag a zo divarrek-krenn da vevañ da vare an Deknikelezh, anezhi mare ar Skiant-Vat... Un nebeudig pennadurezhioù karget eus an traoù ekonomikel, a boagn da ledañ menozioù an araokaat, da vezout ar mad boutin, neket hepken diouzh an d gouezhioù a vremañ, met ivez diouzh an emdroadurioù da-zont."

Evel ma weler paotred vras an Ekonomiezh a zo profeded trec'h 'm eus aon da brofeded an Testamant Kozh... Ne dalvez ket ar boan degas amañ arroudadoù hir diwar bluenn Guissard, na terriñ penn lennerion VARR-HEOL gant luc'haj diaes a-walc'h da intent, e-giz m'emañ ar boaz: gant mistri an Arboellouriezh da implijañ. Dastumomp koulskoude ar berlezenn-mañ diwar-benn pennoù ar Gouarnamant " Anaout a reont douaroniezh ekonomikel ar Vro, gouzout a reont n'hell ket dilerc'h ha dileñs ar rannvroioù peusdic'horroet padout da viken, gouzout a reont ez eus etre raksteuennoù an deknikourien ha psikologiezh ar re galvet d'o seveniñ un hent hir ha risklus..." Satu aze un akt a feiz e galloud ar Stad ha n'eur ket boaz da lenn alies dindan ur bluenn gatolik.

Ur pennad c'hwezh ar Varkselezh gantañ, setu ha netra ken. Rak ger ebet eus tiegezh, eus personelezh, eus den na weler ha na lenner. Kement-se a ziskouez ervat ez eus e-touez an dud desket katolik speredoù kontammat gant Kelannadurezh Varks. N'hon eus azhomm da lavarout n'en deus bet pennskrivagner BARR-HEOL o kas klenn da renerion LA CROIX, respont ebet.

*

Hogen ar 6 a viz C'hwevrer ec'h embanne ar c'hazetennoù diskleriadur an Aotroù Menard, eskob Rodez a-zivout darvoudoù Decazeville o veuliñ unvaniezh ar vengluzerion **kenetrezo**, braster sakrifisoù ar merc'hed, spered a intrudu an dud yaouank, ha neuze an emglev dispar etre holl rummedoù-tud an departamant. Gant ar gerioù-mañ eus ar priziuseñ: E 1962, hon eus ur gelennadurezh klok ha resis diwar-benn ar Gevredigezh o tiskouez dimp en deus an den un dalvoudegezh brasoc'h, eus un tamm mat, eget holl grouidigezhioù ar Skiant hag an Deknikelezh."

Enor an den, doujañs d'an den, setu kentel an Eskob war-ierc'h ar Pab Ha perak ne vefe ket mat ar gelennadurezh-se evit Breizhiz? Diaezamantoù heñvel a gaver e Breizh, daoust ma vez graet marteze nebeutoc'h a vruderezh war o zro: Brenniliz, lakaomp, neuze Lannuon gant al labouradegoù nevez da sevel diwar goust atantoù ha feurmerien. Un tamm digoll marteze hag echu: an dud war ar beoz, pe dezho d'en em zibab, mar gallont, da glask ur vicher all pe un atant all. En-dro da Lannuon ez eus 17 monaj hag a vo distrujet pe koazhet-mat da vihanañ, en doare n'hell mui ar familhoù bevañ enno. Ac'hanta! ma renker en anv ar bed

nevez hag an deknikelezh nevez, hag en anv interest an niver brasañ adstummañ traoù'zo, n'eus digarez ebet da aberzhiñ enor an den hag e vadoù hep reiñ dezhañ an digoll klok a zo dieet dezhañ. Met war an dachenn-mañ, evel war veur a dachennoù all, ne vez ket anavezet gwirioù mab-den, ne vez ket roet ar gwirioù-se a galon vat, anez unvaniezh etre an dud wallet ha stourmerezhañ kalet eus o ferzh. Ha mab-den koulskoude n'eo ket ur mekanik hag ul loen direzon ha skla vour, met ur c'hrouadur libr a respont eus e oberoù, ur pried, un tad, ur penn-tiegezh... (Cf. Lizher an Aotroù Menard). Manifestadegoù an hafv tremenet (1961) gant ar baizanted a die bezañ sellet da gentañ-penn evel stourmerezhañ an Den enep an Deknikelezh ha barnet evel-se gant ar gristenien, hag an dud a yowl vat hag ar speredoù eun.

* * *

E-skud brezel Aljeria, ez eus savet ur brezel all: brezel ar mestaolioù: plastik ha bombezennoù, greunadennoù, tennoù o c'hoari hag o hadañ marv ha kasoni, hag o c'hlozañ alies tud dizrouk ha dinnoz. Priziuse-tre ez eo adarre war an dachenn-mañ diskleriadurioù an Urzhez Katolik. An hall eskibion o deus kaset galvadennoù d'ar peoc'h ha pedet paotred ar gwall-daolioù da ehanañ gant o labour a varv hag a zizurzh.

Aes-tre ez eo kompren doare-spered ar sponterion: n'hallont ket mui reiñ o mouezh da glevout dre hent al lezenn, hag o vezañ ma soñj ganto emañ ar wirionez ganto, ne vennont a briz ebet plegañ hag ec'h implijont an **arm** nemetañ a chom: an nerzh hag ar gwalldeolioù. Rak start eo d'un den bennak plegañ ha chom mut pa gav gantañ ez eo gwasket enep reizhder hag onestiz.

Mat eo kuñtuilh lavarioù ar re a zo e penn an Iliz, pa roont o mouezh da glevout, rak a-wechoù, evit digarezioù peuzus, n'hallont ket komz gant aon da sachañ ar bec'h war ar gristenion hag an Iliz. Daoust ha n'hon eus ket anavezet e Breizh ur marevezh evel-se? Ha Breizhiz'zo a zo bet lamet o buhez diganto war zigarez ma oant Breizhiz o labourat a-du gant mad ar Vretoned ha Breizh? Tud vat ha tud veur evel Perrot, evel Lec'hvien, ar Yaoded...

Dallentez an dud, o c'hasoni, o siou-fall, o rakvarnioù, o aheurtrezhañ a vir re alies ouzh ar justis da vleuniañ hag a ru tu d'an drouknerzh, d'ar mestaolioù da zifrollañ ha da hadañ trubuilh ha distruj hag ar mestaolioù o respont ar mestaolioù a leka reveulzi ha dispac'h. Gwasket evel ma'z eo bet ar Vretoned goude ar brezel diwezhañ, ez eo un taol-chañs n'o deus ket talvezet al lazhadegoù d'ar vuntrerien ha graet dezho paeañ o zorfedoù. Daoust d'o

c'halonadoù-glac'har o dous heuliet war ar poent-se kelennadurezh an Eskibion, hep klask veñjiañ war ar re gablus ar gwad dinamm skuilhet war vaezioù ha kêrioù Breizh.

Hogen kement-se ne dalvez ket kement hag asantif d'an droug, na ple-gañ dezhañ. Un hent sershoc'h ha startoc'h alies eget ar brezel ez eo hent al labour er peoc'h, en diseblanted, en digasted, hep ar joa kriiz ha garv a vez e kalonoù ar vrezelourion. Ha n'eus forzh penaos, ar brezel n'eo ur pal nemet evit ar breizhataerion hag ar forbanned; evit ar re all ez eo un hent da dizhout pal ar peoc'h hag ar reizhder, da lavarout eo krouiñ pe adsevel ur gevredigezh 'lec'h ma vo an Dan ha kement tra a aparchant ouzha e Zenalezh, e Bersonelezh, diazez pep lezenn, pep urzhiadur micherel, kelennadurel, ekonomikel- diazez ha pal pep savadur politikel, a-us d'ar Stad, d'ar Skiant ha d'an Deñnikel-lezh. Rak ne deo ar re-mañ nemet servijerion an Dan.

.:!:::!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!:~::~:!

L E N N I T : UN TAMB EUS ISTAR B. HEOL

Alies a vez goulennet diganimp niverennoù kozh BARR-HEOL da brenañ, da glokaat an dastumadegoù anezhañ. Ur wech evit mat e tegasomp da soñj d'hor mignoned ez eo poent bras goulenn an niverennoù kozh diganimp a-raok ma vint peurziviet. Bez'ez eus dija bloavezhioù diglok: 1956, 1957, 1958.

Evel ma oar ar re o deus heuliet penn-da-benn buhez hor c'helaouenn, e teuas er-maez BARR-HEOL, evit ar wech kentañ, ar bloaz 1953, evel kazetenn BLEUN-BRUG TREGER-KERNEV-UHEL, da geñver an Nedeleg, met o vezañ ne oa ket c'hoazh diskleriet evel kazetenn, e voe ret da c'houde ADNIVERENNAN anezhi, ar pezh en deus rouestlet an traoù un tammig (Miz Du 1954, 1 A). Mulet e veze e Boulvriag dindan evezhiezeh an Aotroù Kadoudal, Pennrener Bleun-Brug Tregere-Goueloù-Kernev-Uhel, ha sekretour ar gevredigezh, an Aotroù Sant, kure. Dre-se, betek an niverenn 5 (ha 5 ivez), ne dalvez ket ar boan skrivañ da rener Barr-Heol da c'houlenn an niverennoù kentañ-se mar chom anezho, emaint e Boulvriag, o goulenn eta digant an Aotroù Kadoudal

Goude niverenn Kerzu 1955 (Niv.5, eil rummad) e voe lezet ar gazetenn da gouezhañ, en eskont d'en trouz savet diwar-benn ar ponnadoù emban- net ha droist-holl, dre na venne ket diroudannañ o tegemer menozioù darn eus pennadurezhioù ar Bleun-Brug a-keñver skritur. Hogen goude Bleun-Brug Perroz-Gireg (Pontekost 1956) ec'h addouas er-maez, met an dro-mañ distag-krenn diouzh pep strollad, daoust da falstamalloù pennadurezhioù ar Bleun-Brug a lavare e chome BARR-HEOL kazetenn guzh Bleun-Brug Tregere. An niverenn-se (17 pajenn dezhi) a zougse dindan

an talbenn treset prim-ha-prim gant an Aotroù Moris, person Berla- wenez diouzh skouer an hini aozet e Boulvriag, nemet gant ar gerioù Feiz ha Breizh war gartenn ar vro e-lec'h ar gerioù Bleun-Brug, Aodoù an Hanternoz, Tregere, Kernev, Goelo, Braiz-Uhel-, e lenned e galleg hag e brezhoneg : TRIMIZIEK, Meurzh-Mezheven 1956 Niverenn 6-7, gant an anv e galleg hepken eus Rener nevez. Aozet e oa bet an niverenn- se gant ar rener nevez, penn-da-benn, nemet ur pennadig tennet eus Les Nouvelles : " Kolonioù ha Komunizisteh ". N'eus ket ezhomm da lavarout e voe kerse gant me ar hini o welout BARR-HEOL advevet, tra ma teue gouc'hemennoù a bep tu a-hend-all.

A-benn an niverenn 9, Kerzu 1956 e oa savet un talbenn nevez d'ar gelaouennig, bet prientet gant an Aotroù Y.Floc'h, kelennar war an treserezh, e kelennid-stad Dinam, un diskibl da Yann-Vari Perrot, genidik eus Plougernev. An talbenn-se moarvat e chomo keit ha ma pe- do BARR-HEOL, hag hennezh eo a zo bet moulet war ar golo un tammig kaletoc'h a bako anezhañ hiviziken. Dre un taol-dievezhted avat, en deus ar mouler troc'het un tamm re verr ar bevennoù hag e vank ur milimetr pe zaou da beurbakañ an holl follennoù.

*

N'hor eus ket c'hoant, na digarez ebet evit gwir, da senañ hor c'hloc'h hon-unan. Evel m'emañ ar c'hiz e Breizh, e veuler kement skrid a vez embannet gant aon da feukañ ar skrivagnerion hag ober poan-galon dezho hag o lakaat marteze da fallgalonif. Diwall e ra BARR-HEOL da feukañ den ebet, met kaer a zo diwall...Ha BARR-HEOL diouzh e du n'eo ket sot a-walc'h evit kredif ez eo disi ar pezh a embann, daoust d'ar mel e vez pourchaset dezhañ gant ul loa-bod vras a-wechoù !

Hep mont en tu-hont d'ar wirionez e c'heller lavarout ez eo bet BARR- HEOL frcalzidigezh ha kennerzh evit kalz a stourmerien, hag ano emañ e dalvoudagezh pennañ, petra bennak ma vefe tu a-hend-all da ober un teskad kaer gant ar studiadennoù embannet warnañ gant kenlaboure- rion a-bouez. Ar pep disterañ moarvat a zo bet savet gant ar penn- rener hag ar pennskrivagner e-unan, hogen ma oufa an nobedig pis- migerion e peseurt degouezhioù e vez prientet pep niverenn eus BARR- HEOL e vefent leun a drugarezueted (hag an dro-mañ muioc'h eget biskoazh).

N'hor bafe muioc'h a genlabourerion e vefe tu da greskiñ ar pajennoù rak ar pep diasañ nag ar pep hirañ n'eo ket skriverezañ na mouliñ, na kas dre ar post, na derc'hel roll ar goumananterion, met pour- chas danvez plijus ha kentelius. Ne vennomp ket avat, embann ne vern

petra, e riskl a-wechoù da anaozif hini pe hini eus hor c'henlabou-
rerion, ar pezh ne c'hoarvez ket alies, rak tud sporedet ha dilorc'h,
evel da skouer unan eus ar re fealañ hag a skrive dimp war-lerc'h
an niverenn 29 e oa stad ennañ, goude ma oa distaolet e labour dra
ma oa diaoz a-walc'h, o welout ne veze ket moulet n'eus forzh petra
war " e " gazetenn.

E-keñver daou dra hapken ez eo didruet BARR-HEOL: ar Yezh hag ar
Skiant-Vat. Dimp da c'houzout n'eus bet biskoszh kavet abeg e yozh
ar gelaouenn, daoust ne oa ket disi 'c'honnvat, hag evit pezh ar
Skiant-Vat hon eus peuret an nebeutañ m'hon eus gallet e park ar
Brizh.

Adskrivañ a reomp amañ da heul pennad-digeriñ trede Rummad BARR-
HEOL war Feiz ha Breizh (Meurzh-Mezheven 1956, Niverenn 6 -7)
ma welo adarre hol lennerion Pal ha Mennaouù o C'helaouenn :

A N E I L T E N N

Pa vez erru an arer e penn ar park, e cheñch tu d'e alar evit ober
un tenn nevez.

Barr-Heol en deus graet e denn kentañ dorn-ouzh-dorn gant ar Bleun-
Brug, gant Kevredigezh ar Bleun-Brug. Klask a rae komz en anv Bleun-
Brugerion Eskopti Sant-Brieg ha Landreger ha teurel e sklerijenn
ar c'hudennoù a zo o trubuilhañ ar Vretoned en amzar a ren. Ha moarvat
pe oa ket re fall e labour, rak hervez ar BED KELTIEK (N-Enn 120,
Ebrel 1956) e oa an hini wellañ eus ar c'helaouennoù embannet gant
Strollad ar Bleun-Brug. Ne fell ket dimp kemerout war hon anv ar veu-
leudi-se, met un testeni ez eo bepred eus ar pezh a soñje darn eus hor
c'henvroiz diwar hor pienn.

Met BARR-HEOL a oa warnañ " merk an dizunvaniezh ", ha setu perak gant
aon na vije riskl evit buhez ar BLEUN-BRUG, e paouezo hiviziken da
vezañ " Kannadig ar Bleun-Brug". Rak hiroc'h e talvez ar B.B. eget
BARR-HEOL.

An eil tenn emañ o vont da voutc'hañ eta. War e anv e-unan e valeo
hag e sklerio BARR-HEOL. Chom e raio dishual a-grenn, nemet evel just,
e-keñver ar Wirionez hag al Lealded, - nemet e klasko atav barn an dud
hag an darvoudoù gant ur spored reizh ha kristen....

Barn an dud ? Kentoc'h o labourioù, rak n'eus dan ebet, nemet Doue hag
ar re o deus bet karg a-berzh Doue, e gement a c'hell barn koustiañ

an dud." Mab-den, eme ar Skritur-Sakr, ne wel nemet an diavaez ha
Doue hepken a wel kalonoù an dud ".

Barn an darvoudoù ? Ne davo ket BARR-HEOL war ar c'hudennoù hag a
zo stag ouzh buhez Breizh. Bez'e kaver e-touez kazetennoù gallek
kêrbenn ar Frañs, kazetennoù katolik, disheñvel-kaer o spored,
evito da vezañ sellet holl evel kazetennoù kristen ha da vezañ la-
kaet keñver-ouzh-keñver en ilizoù da vezañ gwerzhet : Kroez Pariz,
Témoignage Chrétien, France Catholique hag all. Perak n'hor bije
ket e Breizh hag e Brezhoneg an hevelep gwir ? Goulenn a reomp evit
BARR-HEOL ar gwir da varn an darvoudoù, hervez ar spored kristen.
Ne vo ket ret d'an holl gatoliked a Vreizh soñjal evel d'omp. Hogen
kement a frankiz - na mui na maez - a fell dimp kaout, evel ma z-
treomp d'ar re all.

BARR-HEOL e-lec'h bezañ " Kannadig ar Bleun-Brug " a vezo BARR-HEOL
war FEIZ HA BREIZH, dre ma kemero hor Bro-Vreizh an he fezh gant
hec'h holl gudennoù Relijiel ha Broadel, evit teurel e sklaerder
warno.

BARR-HEOL.

KENTELIOU AR BED.

R O U E S T L A D E G

A R

Y E Z H O U

1*

F L A N D R E Z E G H A G A L L E G

Notenn : Lakat a reomp amañ da gentañ an droidigezh eus ul lizher
saozneg degaset dimp gant an Aotrou Fons Vossen, kelenner Hollandat
hag hon eus roet dija war niverenn 29 BARR-HEOL an droidigezh eus
ul lizher all diwar e zorn war-lerc'h e droidad da Vreizh, en 1961.

Waalwijk, 17 .2.62

Aotrou Person,

Trugarez deoc'h evit ho lizher eus an 9 a viz Genver hag evit ho
droidigezh eus Othello. Klasket em eus lenn 23 bajenn keñver-ouzh-
keñver gant ar skrid saoznek, met re ziaes eo c'hoazh avidon. Siwazh!

re vac'homet on c'hoazh gant va labour evit plediñ da vat gant studi ar brezhoneg; koulskoude e-kerz mizioù kentañ ar bloaz-mañ e rin gwech ha gwech all ur sell war Yezhadur Hemon, war Otello ha war VARR-HEOL....

Prederiet ez eo mui-ouzh-mui spered ar bobl, e Nederland, gant emzalc'h ar Gouarnement Gall e-keñver hor yezh. Un toullad pennoù taer, en hon touez, a striv da lakaat droug da sevel ennomp " Sellit, emezo, ouzh ar c'hornadoù-bro, en hanternoz ar Frañs ' lec'h na vez ket kelonekaet, kuit a lavarout gwashoc'h, da gomz na da skrivañ en un doare reizh o yezh flandrezek c'henidik. Deoust ha ne vefe ket mat ar Gouarnement Gall penaos, mar ne ziskouezer ket brasoc'h doujañs ha resped d'hor yezh, ne vo mui roet ton pelloc'h da studi ar galleg, en Holland ? Er mare-mañ, kement bugel'zo, paotr pe blac'h, en deus 5 kentel c'hallek er c'hlasoù kentañ eus hor skoloù, tra n'eus nemet 3 saoznek, hag evit ar Germaneg ne vez ket desket a-raok an eil klas. N'omp ket andalc'het, sur-mat, da virout d'ar galleg ar renk kentañ a zo dezhañ bremañ. Sur-mat e vefe muioc'h a arc'hant da c'honit o teskiñ gwelloc'h saozneg; muioc'h a genwerzh hag a aferoù a reomp gant ar broioù saoznek eget gant Bro-C'hall". Hennezh eo menoz un to toulladig tud ha na vo ket degemeret, sur-mat, gant hor gouarnement. Gouzout a ouzomp ne vez ket mab-den gant bara hepken, hag ez eus lod kaer a draoù talvoudus a c'haller lenn e galleg; neuze, mar fell dimp o lenn, hon eus ezhom da virout hon envezhioù-skol ar sizhun, o vezañ m'o diaes a-walc'h dija ar galleg da Hollandiz da zeskiñ. Kalz aesoc'h ez eo ar saozneg evidomp.

Moarvat hoc'h eus lennet penaos ar Parlamant Belgiat a zo bremañ o klasik merkaf bevennoù ar yezh etre ar galleg hag ar flandrezeg. Ar goulen evit kaout gwirioù ispisial a zo deut, ne petre 'ta, a-berzh Walloniz. Ar gelennerion c'hall, e Skol-Veur Louvain (pe evit lavarout an anv gwirion: Leuven) a fell dezho kaout skolioù gallek, hag ar gargidi c'hallek a c'houlenn kement all e karterioù flandrezek Brusel. Mat-tre ! met neuze sevel ivez skolioù flandrezek er rannvroioù gallek. C'hoant en dije an den da lavarout, ma fell dezho gallegerien, n'o deus nemet sevel anezho o-unan evel ma savomp hor re, ha genel muioc'h a vugale.

En amzer dremenet e skolioù an eil-darez e tlee ar vugale flandrezek studiñ ar galleg evel eil yezh, hag ar Wallonegerion ar flandrezeg, met evel-hen e tegouezhe : ar re gentañ a rae ar pezh o devoa d'ober, hag ar re all ne raent ket. Lavaret ez eus bet penaos, ma ne bouez ket Walloniz d'ober fae war ar flandrezeg, e c'hellfe ar galleg lezel ar plas o enor d'ar saozneg e rannvroioù hanternoz Bro-Velgia. Mar kendalc'h ar c'hallaoued d'ober o feotred faeüs, marteze e tegouezho dezho un deiz bannak renkout komz saozneg ouzh an estrenion pe

serrif o genoù. Bez'ez eus 18 milion pe war-dro a flandrezegerien e gwalarin Europa (en ur gontañ ar vugaligoù) tud aes-tre ober ganto, met pennek pa vezont bet heget pell a-walc'h. Un drouez eo e vije ur vroad dispar evel Bro-C'hall gant ar si-mañ en he gwad: an dispriz evit an dud a gomz ur yezh all.

En Europa da zont, e c'hello marteze ar yezhoù nann-ofisiel kaout gwelloc'h c'hañs da chom bev. Ur wech krog an dud d'ant em vaskif gant ar broioù all, e kavint marteze n'eo ket ar pezh a zo er gêr eo ar gwellañ ha neuze e vint troet da vezañ frankoc'h a spered en o bro o-unan e-keñver ar re a gomz ur yezh disheñvel. En Holland e-lec'h n'eo bet biskoazh taer ar garantez-vro, emañ ar rannvroelzh en he splannder. A-viskoazh ez eo bet disheñvel an doareoù amañ. D'am menno, ez eo kêr-Bariz evit holl Frañsizion evel ur re-legouer santel, ur skeudenn eus muredad o bro. Met e gwirionez, evit holl dud Bro-Holland, nemet he zud-hi hec'h-unan, ez eo Amsterdam ur gêr re lorc'hus, re a don ganti. Troet a-walc'h ez omp d'he gouzañv, met biken n'hec'h azeulimp avat. Mar fell da Amsterdamiz en o fazi meulif kêr re uhel, ken lies gwech e skoomp hor fae a-dreuz o genoù plappus.

Kêrioù hon eus hag o deus muioc'h a labouradegoù, evel Rotterdam, ha muioc'h a enor evel Den Haag, ha koshoc'h evel Maastricht. Berr-ha-berr, n'eus kêr ebet dre ar bed, rukunusoc'h eget Amsterdam, mar fell deoc'h gouzout petra'sofjomp diwar he fenn. Karantez ar rannvro evit Hollandiz a zo ur c'hemmesk a lorc'h o c'horn-bro a emc'houzañvusted e pep tra, hep, kreizenn ebet o sachañ warnomp aneberezh ouzh mac'homerezh pep kreizenn.

En Europa da zont e vo marteze kement a elfennoù a-du gant ar rannvroelzh ha ma'z eus e Bro-Holland, hiziv. Met ar Flandrezad milli-get-se Charles de Gaulle ha na oar ket zoken e wir anv Karel van de Walle, a zo a-du gant un Europ a vroadelezhioù e-lec'h un Europ a baotred, a verc'hed, a fuxlukined, a dud a binijenn, a vankerien hag a liorzhourion. Me ' garfe en dije e dad-you kozh klevet anezhañ (bet en dije fest ar vazh !) **

Gwelout a ran hoc'h eus labourer start. Plijet gant Doue skuilh e vennozh war hoc'h holl labour, neket hapken en ho parrez, met ivez war dachenn ar studioù breizhek.

A wir galon. Kenavo !

Fons Vossen.

** Ar gerioù etre kloc'hedoù n'emaint ket el lizher, met reiñ a reont gwell da santout menoz hor c'henskriver ha nerzh a saozneg.

Gout a ouzer, pa gomzomp diwar-benn ar Flandrezeg, ez eus savet bec'h nevez'zo an-dro d'ar Skol-Veur gatolik a Velgia: Leuven. Ur Skol-Veur kozh-meurbet, bet savet er bloaz 1426 gant an dug Yann IV, dezhi ul levraoueg pinvidik-kenañ hag a voe tangwaltet gant an Alamaned e deroù ar brezel-bed kentañ, e 1914.

Goude bezañ bet, evel ar Skolioù-Meur, en amzer wechall, krefvlec'h al latinelezh, e oa deuet tamm-ha-tamm da dreñf war ar galleg. Hag an Aotrou Merser, arc'heskob **Malincz.**, ne voe ket an diwezhañ o reñf ton da yezh Pariz oc'h embann e GENTELIOU FILOZOFIEZH. Ne oa ket diskiant marteze ar pezh a lavare: "Mat eo en em harpañ war ar yezh komzet evit tizhout gwalloc'h a se ar wirionez, ha donoc'h a se!". Met ur seurt lavar a zo evel ur gontell hag a droc'h eus an daou du. Ma oa mat ar galleg da studiañ ha da gelennañ ar Brederouriezh hag ar Skiantoù all, e oa moarvat kerkoulz all ar flandrezeg d'ober e roll war an dachen-se. Setu, e-touez abegoù all, hag en deus kresket ha gwasheet an disrann etre galleggerion, **anezho mac'homerion** dre natur, evel ma ouzer a-walc'h e Breizh, hag en Molland, hervez testeni hor c'henskriver: Fons Vossen, hag ar flandrezegerien, e diabarzh ar Skol-Veur.

Hag an Aotrou Kardinal Suenens, arc'heskob Malinez ha Brusell n'eo ket ken fero-se dirak an disparti-se. Aon a zo bet zoken e vefe tarzhet ar Skol-Veur. A-benn an diwezh ez eo bet divizet e chomfe ar SKOL-VEUR divyezhek: pep rummad o resev ar gelennadurezh en e yezh e-unan, ar pezh a dalvez da lavarout, e gwirionez, e vo div Skol-Veur en unan, dindan ar memes anv.

Livirit din penaos ober a-hend-all ? Diaes eo tamall d'ar flandrezegerion bezañ troet gant o sevenadur o-unan. Diaes eo ivez tamall d'ar c'hallegerion kaout c'hoant d'o lodenn-wastell. Disrann, setu an tu nemetañ, nemet implijet e vefe ur yezh all boutin ? Hogen pehini ?

E Breizh, e klasker en em harpañ war skouerioù broioùgoù da vrudañ ar gelannadurezh divyezhek : Bro-Kembre, Bro-Friza, Bro-Schlewig ha me'oar, evel m'en deus graet an den kalonek Kalvez, en e skol e Ploueg-ar-Mor, hag e gelaouenn. Abegoù poellek a zo da zifenn ar seurt menoz. Hogen skouer Bro-Flandrez a zo tre a-enep: diaes-tre eo an divyezhegezh da gompouezañ. Evel just, ez eus 18 milion a dud o komz ar rannyezhoù flandrezek, ha kement-se a ra pouez, kement-se a zo tu da grouiñ ur vuhez sperec krefv, an ur c'hevredad-tud dishual war an dachenn ekonomikel ha kennerzhet gant ar gerantez ouzh o bro hag ouzh o madoù-korf ha madoù-ene.

Ur benveg-darempred ez eo ar yezh, en ur gevredigezh, se'zo sklaer, met ivez war an dro ar frouezh o tiskouez nerzh, bevder ar gevredi-

gezh-se, o vezañ m'eo maget gant **ez saopr anezhi**, koulz lavarout. Kudenn ar yezh, kudenn an divyezhegezh n'eo nemet ur gudenn faos, evel kalz a gudennoù all, ha na gaver nemet er broioù bihan sujet, : d'en em frealziñ e sell tud ar broioù bihan-se an divyezhegezh evel un dra ret hag un dra vat. E broioù evel ar Suis, ez eo sellet tud pep kanton evel tud unyezhek, gant ar gwir da ober gant o yezh war holl dachennoù ar vuhez, hag evel-se ez eus peder yezh ofisiel. An divyezhegezh eo repu ar pobloù sujet a soñj ganto ez int barrek d'ober o mad eus div sevenadurezh: un huñvre gaer, ken kaer ha ma kerot, hogen un huñvre. N'hellomp ket e Breizh, an darnvuiañ ac'hanomp, soñjal en ur stumm all, gant ar wask a zo war hor buhez en hec'h holl zoareoù, hogen kentel Bro-Flandrez a zo splann evidomp : ur bobl a dro a-du gant hini pe hini eus al lavarioù a zo kinniget dezhañ.

Ur bern traoù all a vefe da lavarout c'hoazh, hogen trawalc'h evit an dro-mañ.

Kembre

(2)

Daoust ma'z eo hir a-walc'h ar pennad amañ da heul troet diwar al lodenn eus prezegenn Saunders Lewis moulet war "BANER AC AMSERAU CYMRU" e kev dimp ne vo didalvoud d'hol lennegien, ha daoust m'eo disheñvel traoù'zo e Breizh hag e Kembre ez eus amañ peadra da brederiañ. Embannet eo bet ar gaozeadenn en ul levrig "Tynged yr Iaith"

PLANEDENN AR YEZH

"Netra nemet un taol-revelizi ne c'hall salviañ anezhi" (J.L)

... Dav eo din kregiñ da skrivañ hag echuiñ ar gaozeadenn-mañ kent ma vo embannet taolannoù an niveradeg a voe graet warlene war Gembreiz Kembraek** e Kembre, hogen d'am meno e vo ar sifroù a vo embannet a-barzh nemeur un digarez a anoaz hag a zrouklaouenedigezh evit ar re ac'hanomp a soñj n'eo ket Kembre a vo ken hep Kembraeg.

"Krediñ a ra ivez e vo echu gant ar C'hembraeg evel yezh vev, mar dalc'h an traoù da vont evel bremañ, a-benn deroù an XXI-et kantved, lakomp e ve tud c'hoazh o vezañ en Enez-Vreizh a-benn neuze.

Setu end-eeun o tont da vat a-benn ar fin ar politikerezh a voe kemeret da bal gant Gouarnamant Bro-Saoz, e Kembre, en divizadur-se hag a vez graet anezhañ "Lezenn an Unaniñ Kembre ha Bro-Saoz", er bloaz 1936.

* BANER AC AMSERAU..15-2-62 - ** Un dra dianav e Breizh, na petra !

E-leal, e-pad ar 4 c'hantvedad bennak m'eo bet ar Gouarnamant o c'ho c'houarn Kembre, daoust d'ar c'hemoù deuet er bed, daoust d'ar chamentoù degaset er Parlamant hag e doareoù ar gouarnamant, daoust da bep reveulzi war dachenn ar gevredigezh, biskoazh n'eo chomet ar gouarnamant-se en amzvin evit pezh a sell ouzh ar politikerezh-se a denn da argas ar yezh kembraek, evel yezh implijet, deus pep karg eus pep lez-varn, hag eus pep skrid lezennel.

AR SKOL-VEUR

Alies ez eus bet lavaret penaos an disheñvelled etre Skolajoù Skol-Veur ar c'hêrioù kofvers ha labouradegoù, e Bro-Saoz, eo e voe krouet an ensavadurioù saoz gant mistri vras ar gofvers hag an ijinerezh, tra maz' eo gwenneion ar bobl a yeas da sevel Skolajoù Kembre. Gwir a-walc'h eo kement-se; met kement-se ne ra nemet c'hwervaat muioc'h a se an drajedienn. Rak un drajedienn goapaus ha c'hwerv eo Skol-Veur Kem're, anezhi frouezh pennañ an dihun broadel e-touez ar werin gembreat ha kembraek.

Sellit ouzh Skol-Veur Jeruzalem, an deiz a hiziv, hag an Hebraeg hag a oa ur yezh varv hir-**amzar** kent donedigezh Hor Salver, a zo bremañ benveg hec'h holl zeskadurezh, war dachenn ar skiantoù ar muiañ amjestr ha modern. Sellit ouzh skolioù-meur Bro-Suis, ha Gent ha Leuven e Belgia. Ha neuze grit ur sell war Skol-Veur Gembre gant he c'hwec'h skolaj hiviziken.

Kiriek ez eo Skol-Veur Gembre muioc'h eget ensavadur all ebet, mar deo dic'hallus hiziv d'al lennegezh kembraek bezañ mezour ur gwir vuhez sevenadurel. Politikerezh Skol-Veur Gembre eo politikerezh al Lezenn-Unaniñ, 1536, ha politikerezh Matthew Arnauld hag al Levrioù Glas; ha kembraek a zo kontant gant se.

DANVEZ-GOAPEHEZH

Taolomp hor sell bremañ war doareoù politikel an dihun e Kembre, er c'hantved tremenet hag e welimp dres an hevelep dispriz e-keñver ar yezh.

Daoust d'ar yezh bezañ goapaet hag enebet gant barnerien, hag eskibion ha kargidi, ne sevas den ebet en e sav da zifenn he gwirioù, er Parlamant, na war al leurenn-gomz. Digembreadelezh eskibion ha beleion an Iliz-Diezezet, hag o c'hasoni ouzh ar yezh a voe implijet zoken da harpañ ar breutaerezh **en afer Lezenn an Deog**.

Daoust hag un hengoun politikel bennak a zo e-keñver difenn ar yezh? Na c'houlennan ket hag-efi ez eus un hengoun bennak da ober lorc'haj gant ar yezh er prezegennoù politikel pe gant ar bolitikerion war leurenn an Eistezvod. Hogen kentoc'h eget gwelout ar yezh e-giz ma ra a-viskoazh Gouarnamant Bro-Saoz, he gwelout evel un dra oc'h **aparchantañ ouzh** ar politikerezh, ha neuze diwar he gwelout er stumm-se, sevel anezhi er vann evel ur banniel da c'her-vel an dud d'an emgann.

STAD AN TRAOU HIZIV.

Gwelomp eta stad an traoù d'ar mare-mañ : enkadenn ar yezh en eil hanterenn an XX-**et kantved**. Dister ha divalav ez eo. Bez'ez eus bet un amzer, da goulz dihun ar bobl etre 1880 ha 1890 ma **Vije** bet ampletus diazezañ ar yezh evel yezh an deskadurezh hag ar Skol-Veur, evel yezh ar c'huzulioù-kontelazh nevez, evel yezh an ijinerezh. Biskoazh ne zeuas ar soñj-se war spered Kembreiz.

Kredif a ran ne vefe ket bet un dra dic'hallus kement-se, gant un amzer ha war-bouez heuliañ ur politikerezh dalc'hus e-doug ur remziad pe zaou, etre an daou vrezel-bad. Kement-se n'eo mui posubl an deiz a hiziv. Bet 'zo kemmoù spontus er gevredigezh, e Kembre, e-pad ar c'hard-kantved diwezhañ. Ur yezh o kilañ ez eo ar C'hembraeg, e Kembre, pelloc'h, yezh an niver-bihanañ, hag an niver-bihanañ-se o terc'hel da vihanaat.

Ne seller ket mui ar C'hembraeg evel ur **skilh** politikel. Mar skrivfed ul lizher e kembraeg da gas d'ur burev bennak e Kembre, ez eo tremen gwarheñvel e vefe degaset ur respont e saozneg; hogen ma vefe kaset d'ur servij bennak ofisiel, e whitahall, pe Cathays Park, e vefe kalz a chañs da gaout ur respont, e kembraeg.

(Goude komz eus afer **TREWERIN**, un draoñienn vrudet, e-kreiz ar vro kembraek, hag a zo bet beuzet d'ober ul lenn-dour da gas dour da Lerpoull, daoust d'an trouz a voe hag ar stourmadeg gant kalz a bennoù politikel, en o fann paotred an Emsav Broadel Plaid Gymru - notenn gant **Barr-Heol**)

e lavar S. Lewis : " Hiziv na c'hell ket Kembre permitif dezhi hec'h unan ma vo dispennet chomajoù ar yezh kembraek. Re nebut a zo e-**nezho** ha re yost ez int.

Bez'az eus bet bodadegoù gant ar pennadurezhioù lec'hel dindan renezh Aotrou Maar Kerdiz da enebañ ouzh diviz Lerpoull, hogen

dihop-kaer e tremenas ar mennad er Parlament. Ur gêr vras poblek ez eo Lerpoull ha bras-euzhus ez eo ha levezon bolitikel.

Peseurt gouarnamant en defe gallet lakaat ur gevredigezh vihan peour diwar ar maez e skudell ar balañsoù enep interest ekonomikel Kuzul bras Lerpoull ? N'eo ket un taol bugellet met un taol displeal, e oa tamall da Vinistr Aferioù-Kembre bezañ chomet hep enebif ouzh ar mennad da virout outañ da dremen.

Hon afer-ni, hor c'harg-ni, ha ni hepken, e oa Trewerin. Hogen " Ni n'omp ket Iwerzhoniz, tamm ebet", a lavare kelaouenn ar bobl a oa karget da ren ar stourm. Daoust hag e kav deoc'h ne voe destumet kement-se gant evezh, e burevioù ar Gouarnamant d'her c'hlenkañ kichen-ha-kichen gant ur skogan kembraek all : BREAD BEFORE BEAUTY ?

DISRANNAÑ KEMBRE

Petra'zeuas da heul ? Rannet ez eo Kembre, an deiz a hiziv, en div gostazenn diwar-benn ar Suliou, Kembre Gembraek ha Kembre Saoznak. N'eo kement-se nemet ar brouenn en deus ar Gouarnamant kemeret muzul eus gwander Kembre Gembraek ha n'eo ket mui ret derc'hel stad anezhi pelloc'h na bezañ nec'het ganti. Bremañ neuze emeur o louzañ Gwelva ha Menai hag Ereuri da buurchas tredan da Lancashire.

dez'ez eus un abeg all o tisplegañ perak n'eo ket ret pelloc'h d'ar Gouarnamant bezañ nec'het gant Kembre Gembraek. Gallout a ra lezel kement-se gant ar pennadurezhioù lec'hel hag ar c'hostezennoù politikel e Kembre. E-touez ar parlamantourion gembraet ez eus en em gavet tud hag o deus roet da gredif d'ar Gouarnamant ne oa ket ezhomm a Gembraeg zoken er c'hargioù o pledif gant sevenadur Kembre, e Kembre

NAC'H SKOAZELLAÑ AN EISTEZVOD.

Ar-uezius-dreist ez eo bat gwelout meur a hini eus ar pennadurezhioù lec'hel, e kroisteiz Kembre o tagañ an Eistezvod vroadel. Nac'hañ a reont reiñ skoazell-arc'hant dre ma'z eo un dra gembraek. Goulenn a reont ma vo miret un davezh diwar ar pemp davezh a ya ganti, evit ar saozneg, a-raok prometif ha skoazellañ en un doare sferus hag enrus.

Setu aze er gwariadur-ene ha spered hag a vefe danvez-studi hep e bar evit ar psikiatr, met ar seurt spered-se a ya war greskiñ er c'hreisteiz ha riskl a zo e tegasfe buan merv an Eistezvod.

N'eo ket un ansavadur e-berzh-stad ez eo hi, nag un dra a reizhaou-riehz pe a velestrevezh. Ur grouidigezh eus Kembre Gembraek ez eo, an arduez nemeti o chom eus unded istorel broadelezh Kembreiz, an hufvre-veur kembraet nemeti. Hogen kalz eus pennoù ar c'hostezennoù politikel hag eus renerion ar pennadurezhioù lec'hel, e Kembre a zo troet, evel er vosenn, enep ar C'hembraeg. Ha bez'ez eus miliadoù ha miliadoù a vicherourion el labouradegoù-dir ha glaou ha nilon, hag er micherioù nevez a bep doare ha na ouzont ket zoken emañ ar yezh war an douar.

Ken dafjerus all ha ken gourdrouzus all ez eo stumm spered ar c'huzulioù-kontelezh hag ar pennadurezhioù lec'hel, er c'hornadoù kembraek. Da ziskoulmañ kudenn an toleadoù diwar ar maez o tizeriañ, n'o deus nemet ur respont, da lavarout eo pouezañ war ar Gouarnamant evit ma vo degaset dezho labouradegoù hag ijinerzhioù eus Bro-Saoz, ha pedif kuzulioù-kêrioù evel hini Birmingham da ziazazañ keriadennañ, an enez Von, pe e Merion pe e Kontelezh Trevaldouen. Ober a ra Ministr an Aferoù Kembraet e seizh gwellañ gant skoazell kevrennoù'zo eus ar melestrevezh sivil da gas war-raok ar politike-rezh-se; ket inporneant

" DIZESPERIÑ "

Daoust ha lec'h a zo da zizesperif dirak an traoù e-giz m'emañ ? Ya, evel just, mar kavomp mat dizesperif. N'eus netra er bed a gement a zo konfortusoc'h eget dizesperif. Rak goude-se e c'hell an den derc'hel da vont war-raok da dafva douster ar vuhez.

Emañ an hengoun politikel a-hed ar c'hantvedoù, emañ holl blegioù ekonomikel an amzer a ren, enep kendalc'h ar C'hembraeg. Ne c'hell netra ebet kemm kement-se nemet diviz start, youl, stourm, aberzh, stiv.

GALLOUT A REER HEN SAVETEÏN

Gallout a reer saveteif ar C'hembraeg. Bez'ez eo Kembre Gembraek ul lodenn frank a-walc'h c'hoazh eus douar Kembre, ha n'eo ket an river-bihanañ un dra peurzibuez.

Diskouez a ra skouer an Aotrou hag an Itron Beasley penaos e tleat mont dezhi. E-pad 8 vloaz ha deus an Itron Beasley stourmet ha diwar he skouer ur C'hembraek all eus ur gevrennad diwar ar maez

a c'houlennes ur baperenn-druajoù e kembraeg. Ar pezh n'heller ober gant abeg mat a-walc'h nemet er c'hornadoù-se 'lec'h ma 'z eus un ni-ver pouezus a-walc'h a Gembreidi gembraek.

Ac'hanta stagañ ganti a-zevri ha dibleg-krenn en doare ma vo dic'hal-lus kas war-raok labour ar melestrezeh lec'hel hag hini ar gouarnamant-kreiz hep ar c'hembraeg.

Goulenn ma vo paper an truaoù e kembraeg pa e saozneg hag e kembraeg. Degemenn da Viniestr ar Post ne vo ket an tailhoù anez kaout ur paper e kembraeg. Goulenn start ma vo pep galv d'al lez-varn e kembraeg. Hogen kement-se n'eo ket ul labour da vezañ kaset war-raok gant prevezidi, unan emañ, unan ahont, hervez tîd pep hini. Ezhomm a vefe urzh ha neuze mont war-raok kammed ha kammed en ur reiñ amzer da zegas gwellaennoù ha kemnadoù. Ur politikerezh d'ur strollad ez eo, hag ar strollad-bruderezh-se o vezañ er sitreadoù 'lec'h ma'z eo ar c'hembraeg ar yezh pemdeziek.

Goulenn ma vo an holl baperoù-vot ha peperennoù a-berzh-stad o sellout ouzh ar vatadegoù lec'hel pe parlamantel, e kembraeg. Ober gant ar c'hembraeg ar poent pennañ e-keñver melestrezeh evit ar gevrennad hag ar gontelezh.

TALVOUDEGEZH AR BOAN.

Marteze e leverot din ne vo tu ebet da dizhout kement-se, ha ne vo biken kavet trawalc'h a gembreidi d'en em glévout ha da renkañ an traoù evit ur bruderezh kreff ha nerzhus. Marteze emañ ar wironez ganaoc'h. Tout ar pezh a lavaran ez eo kement-mañ: war dachenn ar politikerezh ez eo an dra-se nemetañ a gement a dalvez ar boan d'ur C'hembread, an deiz a hiziv, stourm evitañ.

Anaout a ran an diaesterioù. Eneberozh a vefe a bep tu. Diskleriañ e rafed taer penaos ar seurt bruderezh a dennfe digenimp hor cheñs da sachañ labouradegoù saoz d'ar c'hornadoù kembraek diwar ar maez. Hag hep mar ebet, e c'hoarvezfe kement-se. Nes diougenañ n'hor bafe nemet goap ha dispriz gant ar vrizh-kazetennerien saoznek, bemdeiz-Doue.

Konnar ha droug a savfe e kargidi ar pennadurezhioù lec'hel hag e meur a guzul-kontelezh... Ponnar e vefe ar c'haestizoù, ha diwar nac'hañ paeañ an telloù-kastiz-se e vefe mizoù koustus da heul, petra bennak na vefent ket ken koustus ha stourm hep pal reoù evit ar moueziadegoù parlamantel.

Na nac'hañ e teufe ur marevezh a gasoni hag a heskinerezh hag a drouz kentoc'h eget ar garantez peoc'hus a zo ken anat e buhez politikel Gembre, hiziv.

Marteze e tegasfe ar yezh an emrenezh d'he heul; n'ouzon ket.

Pouezusoc'h ez eo ar yezh eget an emrenezh. War va meno, mar kavfed un doare-amrenerszh da Vro-Gembre a-raok diskleriañ hag implijañ ar yezh kembraek evel yezh ofisiel en holl ser-vijoù ar pennadurezhioù lec'hel ha politikel e rannvroioù kembraek hor bro, na vefe ket degemeret tamm ebet evel yezh ofisiel, ha kentoc'h e teufe marv ar yezh eget na zeuio din-dan Gouarnamant Bro-Saoz.

Saunders Lewis.

NOTENNOU.

1* Troet hon eus ar ger POLISI peurliesañ dre ar ger POLITIKEREZH en ur reiñ d'ar ger-mañ e ster ledan.

2* Pajenn 13,14, lenn TREWEREN, diouzh ar c'hembraeg TRYWERYN.

3* Pajenn 12, eveshaat pegen heñvel ez eo an abegoù a roer e Breizh hag e Kembre pa vez c'hoant da gaout ur c'hras bennak a-berzh ar Gouarnamant Kreiz : ober da gentañ un anv a lealded hag a fealded.

4* Paj. 12: Politikerezh Matthew Arnold hag al Levrioù Glas, sellout ouzh ar pennadig emañ war-lerc'h.

5* Pajenn 15: Istor an Itron Beasley. An itron a nac'has paeañ he zailhoù keit ha na vije ket degaset dezhi paper ar resevoir e kembraeg. Bep bloez e veze lakeet ar werzh warni hag ez ae un tamm arrebeuri eus he zi. Met a-benn ar fin he deus gonezet he frosez. E-giz ma lavare ne nac'he ket tamm ebet paeañ he zruajoù, met gortoz a rae an urzhioù kembraek.

6* Pajenn 15 (uheloc'h). Anat eo eo trec'h kudenn an arboallouriezh an deiz a hiziv, en amsav breizhat da bep kudenn all. Sellit da skouer war L'AVENIR, (meurzh, 15, 62) ar pennad diwar-benn Bro-Lannuon; ur pennad mat a-hend-all, met ger ebet a gement-mañ: ul lodenn vat eus ar re a zeuio da c'houm pe da labourat d'an uzin nevez nevez a vo estrenien ha gallegerien a beurgaso ar yezh. Heñvel a gavjed war LE PETIT BLEU, dinden blienn kenedd parlamantel ar rannvro "P. Bourdellez". Ur gudenn arboallerezhel, da gentañ-penn, daoust ma veneged koulskoude a tegouezhe "une ethnîe" (sic!) all e bro-Lannuon.

STAGADENN OUZH (2)
TAOL-TRUBARDENEZH AL LEVRIOU GLAS

Ur paotr eus kontelezh Kerverzhin, ganet e Lanbesante e oa William Williams (1788-1865). Nebeut a zeskamant en doa bet en e yaouankiz, e skol e barrez, ha raktal e oa bet gopraet evel mevel en ur stal dilhad e ker-Kerverzhin. Met a-raok pell e tuelas da gaout labour evel koureter en un Ti saoznek bras hag a rae kofvers ar c'hotoñs. Adalek neuze e voe ur paotr chafsus en e aferioù. En em lakaat a reas da studiañ. Deskiñ a reas galleg hag alamanez hag e voe kaset d'an douar bras d'ober politikerezh hag e voe anvet depute evit Bro-Goventri ha diwezhatoc'h evel kennad Lambeth. Evel Radikal. Ne dapas ket kaout karg uhel ebet dindan ar Gouarnamant, met hepdale e voe brudet evel prezeger akuit-tre diwar-benn Traoù-an-Arc'hant hag a-du c'hoazh evit gwellaat stad a vuhez an dud a renk izel.

Ha neuze d'an 10 a viz Meurzh 1846 e kinnigas kement-mañ da di ar C'hunioù : Pouezañ war ar Roue evit kaout aotre digantañ d'ober un enklask e Bro-Gembre diwar-benn stad an Deskadurezh e-touez ar Bubl, ha klask dreist-holl an tu gwellañ da zeskifiñ d'an dud-a-vicher ar Saozneg.

E Brezegenn

E-skud-se e reas ur pezh prezegenn hir-hir spontus. Da c'hraas Doue ne lakaamp ket amañ ar brezegenn-se war he hed. N'it ket da gaout eon.

Met e oa, emezañ, sevenaat tud Bro-Gembre. Rak on o buhez pemdeziek e kavont un diazament hag ur skoilh eus ar gwashañ : an diazament ez eo ar yezh a gomzont : ar c'hembraeg. Me'levar yezh an dud izel hag ar vicherourion hepken, rak an dud desket hag a dud a bouez ez eo ar Saozneg o yezh. O vezañ ma'z eo ar C'hembraeg yezh ar beorion, n'eus bet biskoazh embannet levrioù a bouez enni, levrioù a dalvoudegezh, ha dre-se e renk tud Kembre bevañ an deñvalijenn hag an diouiziagezh.

Ha dre ma ne oar ket Kembreiz ar Saozneg ez eo diaes ober ar justis ha barn an dud el lezioù-barn. An dud paour-se ne gumpronont seurt ebet er pezh a vez lavaret dezho. Dindan ur gouarnamant tirantod ne vefa ket gwashoc'h o stal. Evel just, na lavare ket William Williams ar seurt komzoù d'ober dismegañs d'ar Saozon deputeed eveltañ hag e oa ouzh hen selaou. Pell ac'hano, met evit o fedañ d'ober o seizh gwellañ da glask ur remed d'ar walenn.

Ha setu ar remed kinniget gantañ : deskiñ saozneg da Gembreiz, hag ar

Na nac'hañ e teufe ur marevezh a gasoni hag a heskinerezh hag a drouz kentoc'h eget ar garantez peoc'hus a zo ken anet e buhez politikel Gembre, hiziv.

Marteze e togasfe ar yezh an emrenezh d'he heul; n'ouzon ket.

Pouezusoc'h ez eo ar yezh eget an emrenezh. War va menno, mar kavfed un doare-emrenezh da Vro-Gembre a-raok diskleriañ hag implijañ ar yezh kembraek evel yezh ofisiel en holl ser-vijoù ar pennadurezhioù lec'hel ha politikel e rannvroioù kembraek hor bro, ne vefe ket degemeret tamm ebet evel yezh ofisiel, ha kentoc'h e teufe marv ar yezh eget na zeuio dindan Gouarnamant Bro-Saoz.

Saunders Lewis.

NOTENNOU.

1* Troet hon eus ar ger POLISI peurliesañ dre ar ger POLITIKEREZH en ur reiñ d'ar ger-mañ e ster ledan.

2* Pajenn 13,14, lenn TREWEREN, diouzh ar c'hembraeg TRYWERYN.

3* Pajenn 12, avashaat pegen heñvel ez eo an abegoù a roer e Breizh hag e Kembre pa vez c'hoant da gaout ur c'hraas bennak a-berzh ar Gouarnamant Kreiz : ober da gentañ un anv a lealded hag a fealded.

4* Paj. 12: Politikerezh Matthew Arnold hag al Levrioù Glas, sel-lout ouzh ar pennadig amañ war-lec'h

5* Pajenn 15: Istor an Itron Beasley. An itron a nac'has pesañ he zailhoù keit ha na vije ket degaset dezhi paper ar resevoir e kembraeg. Bep bloaz e veze lakaet ar werzh warni hag ez ae un tamm arrebeuri eus he zi. Met a-benn ar fin he deus gonezet ha frosez. E-giz ma lavare ne nac'he ket tamm ebet pesañ he zruajou, met gortoz a rae an urzhioù kembraek.

6* Pajenn 15 (uheloc'h). Anat eo eo trec'h kudonn an arboellouriezh an deiz a hiziv, en amsav breizhat da bep kudenn all. Sellit da skouer war L'AVENIR, (meurzh,15,62) ar pennad diwar-benn Bro-Lannuon; ur pennad mat a-hend-all, met ger ebet a gement-mañ: ul lodenn vat eus ar re a zeuio da chom pa da labourat d'an uzin nevez nevez a vo estrenien ha gallegerien a beurgeso ar yezh. Heñvel a gevjed war LE PETIT BLEU, dindan bluenn kannad parlantel ar rannvro "P.Bourdallez". Ur gudenn arboellerezhel, da gentañ-penn, daoust ma veneged koulskoude a tagouezhe "une ethnies"(sic!) all e bro-Lannuon.

STAGADENN OUZH (2)
TAOL-TRUBARDEREZH AL LEVRIOU GLAS

Ur paotr eus kontelezh Kervarzhin, ganet e Lanbesante e oa William Williams (1788-1865). Nebeut a zeskamant en doa bet en e yaouankiz, e skol e barrez, ha raktal e oa bet gopraet evel mevel en ur stal dilhad e Ker-Kervarzhin. Met a-raok pell e tuesas da geout labour evel koureter en un Ti saoznek bras hag a rae kofivers ar c'hotofs. Adalek neuze e voe ur paotr c'hañsus en e aferioù. En em lakaat a reas da studiañ. Deskiñ a reas galleg hag alamanez hag e voe kaset d'an douar bras d'ober kofivers evit an Ti Bras Saoz. A-benn ar fin ec'h an em lakaas d'ober politikerezh hag e voe anvet depute evit Bro-Governtri ha diwezhatoc'h evel kannad Lambeth. Evel Radikal. Ne dapas ket kaout karg uhel ebet dindan ar Gouarnamant, met hepdale e voe brudet evel prezeger skuit-tre diwar-benn Traoù-an-Arc'hant hag a-du c'hoazh evit gwellaat stad a vuhez an dud a renk izel.

Ha neuze d'an 10 a viz Meurzh 1846 e kinnigas kement-mañ da di ar C'huniou : Pouezañ war ar Roue evit kaout aotre digantañ d'ober un enklask e Bro-Gembre diwar-benn stad an Deskadurezh e-touez ar Bobl, ha klask dreist-holl an tu gwellaat da zeskifiñ d'an dud-a-vicher ar Saozneg.

E Brezegenn

E-skeud-se e reas ur pezh brezegenn hir-hir spontus. Da c'hraas Doue ne lakamp ket amañ ar brezegenn-se war he hed. N'it ket da geout eon.

Met e oa, emezañ, sevenaat tud Bro-Gembre. Rak on o buhez pemdeziek e kavont un diaezamant hag ur skoilh eus ar gwashañ : an diaezamant ez eo ar yezh a gomzont : ar c'hembraeg. Me'lavar yezh an dud izel hag ar vicherourion hepken, rak an dud desket hag a dud a bouez ez eo ar Saozneg o yezh. O vezañ ma'z eo ar C'hembraeg yezh ar beorion, n'eus bet biskoezh embannet levrioù a bouez enni, levrioù a dalvoudegezh, ha dre-se e renk tud Kembre bevañ en defvalijenn hag an diouziagezh.

Ha dre ma ne oar ket Kembreiz ar Saozneg ez eo diaes ober ar justis ha barn an dud el lezioù-barn. An dud paour-se ne gumpronont seurt ebet er pezh a vez lavaret dezho. Dindan ur gouarnamant tiranted ne vefe ket gwashoc'h o stal. Evel just, ne lavare ket William Williams ar seurt komzoù d'ober dismegañs d'ar Saozon deputeed eveltañ hag a oa ouzh hen selaou. Pell ac'hano, met evit o fediñ d'ober o seizh jwellañ da glask ur remed d'ar walenn.

Ha setu ar remed kinniget gantañ : deskiñ saozneg da Gembreiz, hag ar

kelennet ar vugale e kembraeg ha neket e yezh ar Saozon.

Un dra vat all hag a zeuas alese e voe ar c'hoant da sevel skolioù Raktal goude ma oa bet embannet an tamalloù a raed d'ar skolioù, ne glaskjont netra ken nemet sevel skolioù ha skolioù-meur zoken. Ar pezh a lakae anezho war an hevelep troad hag ar Saozon...

Evelato, pa voe embannet er bloaz 1870 al lezenn o c'hourc'hemenn d'an holl vugale mont d'ar skol, e voe, siwazh! savet skolioù saoznek ha netra ken... 5 bloaz a oa abaoe ma oa marvet William Williams, ha deuet e oa da wir ar pezh en doa lavaret... Skolioù bihan, Skolajoù, Skolioù-Meur a roje an holl zeskadurezh e Saozneg. Ar stumm da sevenaat Kembreiz a oa reif dezho un deskamant e Saozneg.

Ha setu bremañ sifroù o verkañ an efed eus ar skolioù war ar yezh. (Evel just, ez eus bet traoù all o stourm enep ar yezh, met ret eo lavarout o deus ar skolioù graet kalz a zroug)

E 1870 ne oa nemet kembraeg gant al lodenn-vrasañ, eus un tamm-mat, eus tud Kembre. E 1891, da lavarout eo 21 bloaz goude, pa oa bet graet niveradeg ar bobl ha goulennet diganto merkañ peseurt yezh a gomzent (Ar pezh na ra ket er Frañs ar Gouarnamant, evit abegoù politikel) e voe kavet penaos diwar 1000 den e oa 540 o c'houzout kembraeg.

10 vloaz goude, e 1901 e tiskenne ar gont da 499-10 vloaz diwezhatoc'h, er bloaz 1911 ne oa ken nemet 435 10 vloaz all c'hoazh goude, 301, ha neuze er bloaz 1931, 151 hag er bloaz 1941, netra ken nemet 85....

BOLIVIA

(3)

PROLETERION O YEZH.

Bolivia, evel ma oer hol lennerion a zo ur vro eus Amarak ar C'hreisteiz sterniet gant ar Perou, ar Brazil, ar Paragwai, Bro-Arc'hantina hag ar Chili, enni ur 4 milion bennak a dud, distabil-krenn an traoù enni. Etre 65 ha 75% eus an dud a zo Indianed. Hogen ar ger Indian e-unan, implijet-tre an divizoù pemdeziek, a zo gantañ un arliv a zispriz. Hogen n'eo ket diouz ar perzhioù-korf, na diouz an anv-familh zoken e vez muzuliet an dispriz-se, rak dibouez dibouez ez eo kement-se; ar pezh a sach dispriz war an Indian ez eo e yezh, e wiskamant, stad e zeskamant, e vuhez a baizant.

Hag an Indian e-unan, evit ma anavezio unan bennak evel ezel eus

e gumuniez e kemer harp war zoareoù all : stumm-bevañ, gizioù ha kredennoù relijiel, stumm da soñjal ha da welout an traoù, emzalc'h e-ke fiver an dud a zo sañset eus renkadoù uhel ar gevredigezh.

Setu amañ, hervez ar gelaouenn MISSI, Kerzu 1961) niver an Indianed e-kefiver ar peurrest eus ar boblañs, en departamantoù, hag ar yezhoù pennañ.

Departamant	Niver	% ar boblañs	Yezh Pennañ
La Paz	600.000	70 %	Aimara
Oruro	200.000	60 %	Aimara & Kichua
Kochakamba	450.000	75 %	Kichua
Potosi	500.000	75 %	Kichua
Chukisaka	150.000	75 %	Kichua
Santa Kruz	25.000	25 %	Rannyezhoù Gwarani
Taric'ha	50.000	40 %	Kastilhaneg
Beni	25.000	25 %	Hannyezh Gwarani
Pando	1.000	1 %	Kastilhaneg

Evit pezh ouzh ar Reljion, daoust ma'z eo badezet an darnvuiañ eus an dud en Iliz Katolik, ez eo kemmesket ar gwir feiz gant brizhkredennoù, ha diaes a-walc'h ez eo d'an dud kristen heuliañ ervat o relijion dre ma'z eo distar-tre o anaoudegezh eus kelennadurezh an Aviel. A-wechoù zoken e c'heller en em c'houlenn daoust hag ur c'henn-mesk eus ar Reljion Gatolik hag eus falskredennoù ez eo o Reljion evit gwir, pe ur Baganiezh levezonet da vat gant ar gatoligiezh. Se'zo moarvat diouzh ar rannvroù ha diouzh an dud o-unan.

Ar yezh anavezatañ ha pennañ, hag an hini a zo bet studiet ar gwellañ ez eo ar C'HICHUA, hogen n'eo ket barrek tamm ebet da serviñ da gelennañ an Aviel. Gwech an amzer e weler o tonet er-maez, levrioù-pedennoù, troidigezhioù eus an Aviel, dastumadoù Lennegzh-Pobl, met kement-se n'eo nemet un tamm boulc'h. Daoust d'an taolioù -esa bet graet e chom ar C'hichua ur yezh hep skrivagnerien, hep bezañ aozet diouzh ezhommoù ar vuhez a-vremañ.

En ur seurt plegennoù e tle pep beleg dibab etre daou hent da zeskiñ e greañsoù d'an Indian : pe gomz en e yezh, pe zeskiñ dezhañ ar c'hastilhaneg. Ma tibaber an doare kentañ neuze e renker dont da vezañ filologour ha teologour evit reiñ ur ster gwir-gristen da bep ger, ha kaout e servij an-unan strolladoù tud desket, istorourion ha psikologourion.

Evit bremañ er c'hristenaat er maezioù a chom bepred war dachenn an

an huñvre. Evit ar 4 milion a Voliviz n'eus nemet 700 beleg, ha 500 anezho a zo **setrenioh** (Spagnoled, Amerikaned, Italianed, Alamaned, Hollandizien, Kanadianed, Frañsizien ha Belgiz). N'eus eta nemet 200 beleg brliviati hag en darn eus an departamantoù e kouezh en niver anezho da 1 pe 2 veleg.

Ar c'hoznadoù diwar ar mauz hag a zo tostañ d'ar c'hêrioù hepken a c'hell bezañ tizhet hag eno end-eeun e kaver ar muiañ a zanvez-beleion. Ar c'heriadennoù bihan niverus hag ar pennkêrioù a-us da 3000 m. uhlder (gouzout a reer ez eo Bolivia dre natur ur vro uhel-tre) a zo dilezet, hag un ranngalon ez eo teurel ur sell war -no : roud ebet e gristenidigezh, nag a vedisined, nag a yec'hodusted ha neuze an diouer a voued.

Dav ez eo poanial hep dale pelloc'h : gwelet ez eus bet en ur gêr bourkig kollet war ar menez, skeudenn varvek Fidel Castro peget ouzh ar mogerioù, hag e tiskouez kement-se pegen mall ez eo ober un dra bennak. Spletusoc'h e seblant bezañ mont er skolioù da glask ar vugale en ur lezel a-gostez evit ur pennad an dud en oed. Kompren a ra ar vugale ar spagnoleg hag e c'heller neuze o c'hellen-nañ, reiñ dezho levrioù da lenn, ha tremen dezho filmoù diwar-benn ar relijion.

Soñjal a ra gant an Iliz Voliviat ez eus muioù ezhomm da bleal gant ar vugale-se ha klask danvez-beleion en o zouez eget kelenn ar C'hichua da gêriz pe ar c'hastilhaneg d'an Indianed. Bez'e vo ar vugale-se al liamm etre an eil rumm hag egile.

A-benn ar fin, evito da c'houzout penaos emañ ar stal, n'eo ket ra droet ar gloar voliviat d'ober gwad-fall. Den a feiz kreñv e teu ar paizant da vezañ pa vez bet kelennet, hag hep an disterañ falla-griazh eo e kompenn e gambr gant ur c'haer a boltred eus Fidel Castro, hag ez d'an iliz da lakaat un oferenn en enor d'ar Wer -c'hez... Koulskoude, ma tichañse d'ar veleion dilezet ar skolioù, daoust hag a kavfe reizh mibion ar c'houeriad-se kaout poltred Fidel ha mont d'an oferenn ? Hogozik sur ez eo an Iliz a zilezfent.

* (Missi Kerzu 61 paj.348-9)

STAGADENN

Daoust ne oamp en-sell da lakaat amañ eus pennad MISSI nemet ar pezh a blede gant kudenn ar yezh e Bolivia, hon eus kavet gwell a-barzh ar fin treizh anezhañ war e hed. Peurvuiañ e kaver muioù

ledander-spered hag a objektivelezh gant studiadennoù kazetenn bourrus-tre an Iadoù-Jezuisted a Lion. Hogen ne v re souezhet hol lennerion o lenn barnedigezhioù evel-se; kustum a-walc'h ez int da glevout traoù a bep seurt diwar-benn o yezh g-unan.

Hogen diaes ez eo intent penaos en ur ober 400 vloaz n'eur ket dsuet a-benn da ober gant ur yezh kozh evel ar C'hichua, forzh pegen koue-riadekaet ma c'helle bezañ, ur benveg gwevn a-walc'h da ledañ an anaoudegezh resis eus ar relijion gristen hag eus kelennadurezh an Aviel e-touez Indianed Bro-Volivia. Ur yezh drezi hec'h-unan n'eo ket ur gudenn, hogen an implij a vez graet anezhi. Me'z eus unan bennak da damall en afer-se n'eo ket ar yezh, hogen an diouer a dud desket hag a veleion niverus a-walc'h da stummañ, da ziorren ar yezh, ha gouest da enebif ouzh ar pleg a c'helle o dougen d'ober gant ar yezh bezañ a oa dindan o dorn koulz lavaret: ar c'hastilhaneg.

En deroù an liiz o deus bet ar skrivagnerion hag ar brezejerion ar me-
mea skoilh da ziskar, e gresianeg hag e latin. En em gaout a raent, gwir eo dirak yezhoù gret o c'hresk ganto, gwevn ha soubil-kenañ, anezho benvioù dispar, heson, helusk, pinvidik, hogen breinet gant gerioù ha kredennoù pagan. Ma ! gant ar yezhoù-se, awenet avat ha bevaet gant nerzh ar gredenn hag ar feiz nevez, o deus Yustin * ha Tertullian displeget holl vertuz o helavarded da zifenn Relijion an Aotrou Krist. E-giz ma lavar ar C'hardinal Bacci, en e skridoù latin, ne oa ket mui marteze yezh Kikero, met latin. ^(evalkont, hag) a oa ennañ un dra bennak brasoc'h, gwiroc'h, ha deneloc'h eget gant prezegennoù ha skridoù brudetañ skrivagner latin an Henamzer (Cf. VARIA LATINITATIS SCRIP-
TA paj. 310)

E-touez ar veleion aet da Anaon hag a blije dezho flipata yezh Breizh-
Izel e oa an Aotrou Chaloni Alan Salliou, person kozh Pempoull, brudet evel an hini kaerañ eus brezejerion ha kofferseñsion Eskopti Sant-Brieg. Pell amzer zoken a-raok ma vije bet rasket eus Reolennoù an Eskopti an urzh o c'hourc'hemenn ober katekiz brezhonek er parrezioù lec'h ma veze gret ar prezeg da sul e brezhoneg (Ar Reolenn-mañ a zo bet rasket e 1950, da heul Sened ar Veleion, gant an Aotrou Koupel), en devoa savet e vouezh meur a wech da ziskleriañ e oa poent skubañ ar yezh abalamour da reiñ tu d'ar bobl da gaout gwir zeska-
durezh. Met un den techet da c'hoari ar c'hontrol e oa un tammig ha marteze, daoust d'en droz e reas e ziskleriadur ispisial a-kerz un emvod beleien, e kloerdi bras Sant-Brieg e-doug ar brezel, ne oa ket da gredañ diwar e c'her, rak un tammig farser ha gwesker diseblant e oa. Evel da skouer, pa reas e gaozeadenn e Landreger, evit ar Bleun-
Brug, e 1952. Ur follennig paper e oa gantañ hag e haffvale lenn diwarni un nebeudig digarezioù ha gourc'hemennnoù d'an 2 pe 3 eskob a oa ouzh hen selaou, e-giz ma vije bet ur paourig-kaezh. Ha neuze evel un

* Yustin e oa ur gresianegour, arabat fasiañ.

evel un den a vefe ret dezhañ komz en desped dezhañ, e loc'has war-
raok war e blaen, hag a dra sur, magnetofon an Tad Medarz hag a oa stignet da enskrivañ e gomzoù war e seizennoù magnetek, ma reas mat e labour, a lonkas ur galleg dideuk-mik mesket gant strakadegoù daouarn ha c'hoarzhadegoù ar salied-tud.

Met, rak ur met a zo...

An trede sul a viz Here 1956, en ur erruout war vared Louaneg a-benn kadoridigezh ar person nevez, e frote an Aotrou Chaloni Salliou e zaouarn, moarvat gant ar stad a oa ennañ o welout ur person a dalvoudegezh evel an hini a oa degaset a-berzh an Aotrou 'n Eskob d'e barrez c'heridik, unan hag en devoa anevzet ervat pa oa-ef person-kanton Pontrev a-raok mont da Bempoull, unan hag a selle un tammig evel e vogel : an Aotrou Floc'h, Maudez Glanndour : " Ma ! emezañ, me'ya da zrailhañ brezhoneg amañ hiziv !" Ar pezh a ziskouez ne oa ket deuet dibrepar marteze, met n'eus forzh !

Tremen a reas sioul an traoù ha plaen e-giz ma tere ouzh kadoridi-
gezh ur person nevez. Goude an oferenn e oa bet lein, er sai kaer-
meurbet, unan eus kaerañ salioù -ar-bobl an departamant. An depute P. Bourdellez a gomzas e galleg, ar person nevez a gomzas e galleg, da goulz ar yec'hedoù, Edouard Olivro peurvuiañ eus an helavarañ ne zeuas ket a-benn da zistagañ mat e jeu e galleg. An Aotrou Salliou avat, a zibabas ar yezh an devoa desket er gêr gant e vamm, e Louaneg, pa oa bihan, a-raok da sunañ ar gouiziegezh da skol Sant-
Charlez, St-Brieg, ha skolioù-meur Roma. Un tan-artifis e voe e gomzoù; ne oa d'ober estlammañ ouzh uhalded e venozioù, pe zirol-
lañ da c'hoarzhin d'ober, pa bake deoc'h ur fentigell bennak. An den paour (Doue d'hen pardono !) da schuif, en em zigarezas hag a vennas distagañ ur poz bennak e galleg abalamour d'an itronezed na ouiant ket a vrezhoneg; hogen c'hwitout krenn a reas : ne zeuas ket ur frazenn reizh na propr gantañ : ul luziasenn hep penn na lost a reas gant 2 pe 3 dousenn a c'herioù, ha mat ! Mouezh ar gwad, yezh ar gêr o devoa trec'het war e yezh desket.

Evel am eus spi e trec'ho mouezh ar gwad ha yezh ar gêr war vaezioù Breizh-Izel hag ar c'hêrioù ma raio ar spered breizhat e lodenn-gan e kensonadeg ar bed peoc'hleun ha sevenast.

Erru 'omp pell diouzh Bro-Flandrez ? pell diouzh Kembre ? pell diou
diouzh Bolivia ? N'ouzon ket. Met r ar pezh a ouzon (hag a anzavan
ouzhoc'h lennerion !) biskoazh n'em eus bet evi ouzh gouiziegezh den
ebet, nag ouzh e spered nag ouzh e yezh, nag ouzh e deod evel ouzh
gouiziegezh, ouzh spered, ouzh yezh, ouzh teod an Ao. Salliou. Hogen
n'eo ket dre lorc'haj.

OOOOOOOOOOOOO

Setu da gentañ un beuet fedoù, greun a bep seurt chumet 'barzh va c'hrouer :

- An Aotrou Chalon Gerad HUYGHE a zo bet, nevez'zo, anvet da Eskob. Ef an hini a skrive n'eus ket pell (1) o komz eus "oad-our" an Iliz, aet e-biou e Bro-C'hall :

" Un Doullad rannvroioù eus Bro-C'hall (Breizh, Elsez, Euskaria Flandrez) a zo bet evelato, hag a zo marteze evit ur predig-amzer c'hoazh, broioù a gristeniezh"

N'eus hini ebet avat, e-touez ar broioù meneget-se, hag a vefe gall e gwirionez !

- Emañ Ensavadur Biblek Stuttgart o treiñ ar Bibl e yezh "bali", an hini implijetañ gant Morained ar C'hemeroun. Abaoe ugent vloaz, emañ tud d sket Stuttgart o poaniañ war al labour-se; graet o deus dija hevelep tra evit meur a yezh all : swahile, foulani, noukouor, ha me'oar. E-pad keit-se, e Breizh... Met anavezout a rit kenkoulz ha me, moarvat, diskan ar F.C.B...

- Un eizhvet Kendalc'h diwar-benn al Liderezh a zo bet en Abati Glenstal, Iwerzhon. Kant hanter-kant baleg a oa bodet tro-dro da Ar-c'heskob Cashel ha da eskibion all. Ar C'hendalc'hioù-se a ra berzh muioc'h-mui, evit brasañ mad an Iliz Iwerzhonat. Unan eus ar prezegennoù talvoudusañ a zo bet hini an Aotrou W.Conway, Eskob Neve, a gomzes diwar-benn " An oferezh hag ar bobl er parrezioù iwezhonat".

- Diwezhañ manati urzh Fontevrault, hini Chémillé, a oa bet un nebeut bloavezhioù'zo, staget ouzh Beneadezed misionerized Vanves. Dilezet eo bet ganto ti kozh Chémillé evit mont da chom en un do-meni war ar maez, e Martigné (Maen ha Loar). An Den Evurus Roparzh Arbrissel, ur breizhed evel a ouzoc'h, hag en deus diazezet Urzh Fontevrault o penn kentañ an XII-et kantved, a zo bet dagaset e re-legoù d'ar manati nevez; e gorf a zo en ur c'hef-plom ponner hag e galon en ur relegouer arc'hant. Mat e vefe ma c'houlennfe ar Vretoned

a dremen dre na mont da bediñ dirak relegoù o c'henvroad.

- Buhez daou visioner breizhat a zo bet kontet dimp-nevez'zo : unan gant an Tad Dupuyrat (2), hini an Tad Renan BODET, ur choven anezhañ, penn-kil-ha-troad. Bet ganet d'an 2/10/1882, e Bro an Naoned, e teuas da vezañ misioner e Bro ar Bapouidi. En em reiñ a reas dezho kement ha ken bihan ma tlee, p'en deveze c'hoant da chom sioul ur pennadig, an em glozañ en ur c'helc'h treset gant kleiz en-dro d'e gador. Hag arabat d'ar Bapouidi, kludet e pup korn eus ar gambr mont neuze e-barzh ar c'helc'h ! E-pad ar brezel diwezhañ e voe aluzener prizon Fresnes, ur vicher diées-tre d'ar marse, hag a reas gant madelezh ha douster. Mervel a reas trumm d'an 11 a viz Genver 1961, chomet dezhañ betek ar fin ur galon didro ha digor d'an holl.

An Tad Yann-Vari KENKIZ (Quinquis), 1876-1959, a zo bet danevellet e vuhez e niverenn diwezhañ " Pôles et Tropiques" (C'hwevrer 1962). Oblad Mari Dinamm, e labouras e vuhez-pad e Bro-Natal, e-touez ur bubl a zo enni ur c'hemmesk souezhus a livioù - kroc'hen, a ouennoù hag a relijionoù. Savel a reas ur bern ilizoù ha skolioù; doujet ha karet e oa gant an dud, a rae anezhañ " Ton-ton Kenkiz ", pezh ne lakaas ket an Tad da ankouaat e vro c'henidik. Chom a reas bepred stag-kenañ ouzh Breizh, ouzh e barrouz Lok-Maria Plouzane, ouzh e genvredeur gozh, en o zouez, an Aotrou PERROT ben-niget. Ur blijsadur e oa dezhañ skrivañ e brezhoneg, hag hen ober a rae en un doare buhezek-meurbet.

- Unan eus an tamalloù brein e vez taolet peurvuiañ ouzh ar brezhoneg eo hini ar rannyezhoù. Met e Gwinea-Nevez, ez eo ret d'ar visionerion komz ur bern yezhoù : peder evit ober hepken war-dro ar 7.000 den a zo o chom en Enez-Tana. 32 katekiz disheñvel a zo bet moulet evit Kaledonia Nevez... hag a...Met an Indez, e Bro-Assam, e tle ar Salezianed en em zibab e-touez 150 rannyez.

- Da Winea-Nevez e vez kaset gant ar Vormoned tud yaouank hag a dremen daou vloaz evit skoazellañ misionerion ar Sektann c'halloudus-se. A-raok dont o devez ar Vormonad yaouank desket yezh ar rannvro a dleont labourat enni. Setu perak o devez diouzhtu ul levezon vras war an dud.

Ma vefe goulennet kement all e Breizh....

- Ur Vreuriezh laiked (Institut Séculier) nevez a zo bet krouet e Manitoba (Kanada) evit an Indianezed hag an hironezed. Derc'hel a reas kont da gentañ-holl, eus hengounioù ha doareoù

a-ouenn al leanezed yaouank.

Hevelap diskan hag uheloc'h....

- Un henter-kant bennak a Seurezed bihan Charlez Foucault o deus graet o leoù hollbad e-tel bez St Per, a Roma. Pep unan anezho he deus komzet en he yezh dezhi hec'h-unan, ar pezh a oa fromus-tre, hervez an dud a oa eno.

Hevelap diskan.....

00000000

Deoust hag Ernest RENAN a vefe en-dro diouzh ar c'hiz ? Moarvat, peogwir emañ Anna Huré o priantif ul levr diwar e benn. Ul levr hag a ginnig bezañ souezhus a-walc'h, kement moarvat hag an oberourer. Homañ a zo bet leanez e-pad 5 bloaz, ha goude dezhi bezañ kullet he feiz ha tout, eo bet barnet da seizh vloaz prizon o vezañ m'he devoa sinet chekennoù dibourvez. Emañ o peuez reiñ dimp ul levr iskis (3) ma re meneg ennañ, gant hiraezh, eus abati Kergonan (Plouarnel, Bro-Wened). Arabat avat, reiñ al levr da gurusted, rak ur c'hofad binim a zo anezhañ war an dro !

A-hend-all, un tad Jezuisit eus ar gelaouenn Etudes, a daole fae n'eus ket pell, en un doare diblijus, ouzh unan eus Kardinaled Roma (ne ro ket e anv - met hag-efi ne vefe ket an Ao. Maglione ?), hag evit diskouez berwelerezh ha strizhder-spered pennoù-bras an Iliz e konte an Tad penaos ar C'hardinal a rae eus Renan un den noazus ha kontamus-kenañ.

Kaer en deus ar Jezuisit ober goap, emañ ar gwir gent ar C'hardinal kozh. Ni hag a vev en ur barrouz hag a zo bet e-pad pell hini Renan hag a dud, a c'hell muzuliañ - suroc'h moarvat aget Jezuisited Pariz - peseurt levezon fall en deus bet an Tregeriad, peseurt droug en deus graet d'an eneoù... He kenderc'hel a ra d'ober. Pa varv ar mikrob e talc'h ar viruz da labourat.

Renan un den dinoaz ! Ya sur... Gwelit buhez dramaek ur vaouez a ouenn uhel, merc'h Ministr kentañ Bro-Italia, a zo bet kontet dimp nevez'zo gent an Tad Kermezad Lusian-Vari. Koll a reas ar feiz en ur lenn "Buhez Jezuz" gant Renan. En om silañ a reas an dizesper en hec'h ene : "An deiz-se, emezi, a voe evidon unan eus an teñvalañ-holl. Koll a reas va buhez he fennabeg nemetañ". Prest e oa goude-se Alessandra di Rudini, da vont gent ar berzh d'Annunzio da foetañ

hentoù treuz. Betak ma teuo an Aotrou da drec'hiñ en-dro, en he c'halon war bep brizh-kerantez ha war bep douetañs. Hogen ma teuas a-benn ar fin da vezañ karmeziadez ha priolez zoken, ne voe ket a drugarez da levezon Renan, bezit asur !

Lennit ivez en ur pennad gant Harriet Renan, e Figaro Littéraire 20 a viz Genver 1962, ar pezh a skrive dezhi Paul Claudel diwar-benn he zad-kozh. Lezel a reomp e galleg ar pezh en deus skrivet Paul Claudel, o vezañ m'eo un testeni, dibabet ha pouezet resis pep ger anezhañ :

" Les livres d'Ernest RENAN ont eu sur ma jeunesse, sur ma ma famille, sur tous ceux qui m'entouraient une influence déprimante et presque mortelle. Ils m'ont jeté dans un abîme de doute et de désespoir, à l'époque où, n'ayant pas en moi-même les ressources morales et scientifiques nécessaires pour réagir, j'acceptais comme ont fait tant de pauvres enfants, les affirmations et les insinuations de ce mauvais maître. Dans cette crise affreuse, j'ai failli perdre mon âme et ma vie.....

...Il n'est pas très honnête de minimiser comme vous le faites l'action morale de Renan et la part immense qu'il a eue dans la déchristianisation et la démoralisation de la France. Il a été un véritable fléau de Dieu, et je ne comprends pas que vous vous étonniez que les prêtres et les évêques aient essayé (avec plus ou moins d'adresse) de l'endiguer. Je suis moi-même témoin des ravages que cet affreux livre et tous les autres ont faits dans les esprits. Il a tué la foi et la morale dans des milliers de cœurs faibles. Un des actes les plus abominables de Renan et de son éditeur a été de publier une édition POPULAIRE de la VIE DE JESUS, pour que le poison se dissémine davantage. Par sa moralité, par son jargon religieux, par son autorité scientifique, Renan avait un ascendant immense dont il s'est servi pour empoisonner les cœurs..... Et cependant je suis persuadé que votre grand-père sera sauvé. Il y a eu Ernest Psichari ! Mais ce n'est pas rendre service à une âme en peine que d'essayer de dissimuler à vous-même et aux autres son épouvantable malfaisance."

Deoust ha n'eo ket evel pa respontfe Paul Claudel an a-raok d'hor Jezuisit gall... ha pegen just ar respont !

Un testeni all - priziuz-meurbet, rak an hini ur c'hamalad-a-vihanik da Renan an hini eo - a zo bet roet dimp gant ur Breur eus

an Diskuliadur, pe un oberenn a dalvoudegezh ken uhel ha Levr Yob. Hag eus an tu all, Skol-Veur Bro-C'hall, gant he strizhder-spered anat d'an holl nemet dezhi : he laikelezh digammus a vir na vefe studiet ar Bibl er skolioù, zokan er Skolioù Meur, e keit maz eus frankiz gant nouspet kelenner a brederouriezh, a istor, a lennegezh, da gomz diwar-benn Marks pe Lenin

Ha peogwir e vev al lodenn vrasañ eus hor c'henvroiz dindan brizh-sklerijenn Pariz, hep gouzout dezho o divije kollet pep personelezh ha frankiz-spered, n'on ket bet re souezhet, daoust ma oa souezhus, gant ar respont a zo bet graet din gant Emgelv Breizh, d'ar goulenn-arc'hant, nebeut a dra, am boa kaset evit mouladurioù ar Bibl, un aluzon bennak diwar ar c'hementad dastumet bep bloaz evit ar brezhoneg, hervez. Ma vije bet c'hoazh lavaret din n'hellent ket harpañ pep tra, pe e vije rost diwezhatoc'h, pe me'oar, un digarez bennak... met klevit ar pezh a zo bet kavet : n'eo ket, amez, ar Bibl ul levr klasel. Arabat e lakaat etra daouarn ar skolidi.

Kaerat respont ! Petra'soñjo ar Broioù all eus un digarez ken sod ? Stummet eo bet saozneg al lennegezh gant yezh ar Bibl lennet : studiet gant an holl. C'hoarvezet eo kemend-all evit an alemaneg. Saveteet eo bet yezh Kembre gant ar Bibl. N'eus forzh. C'hwi, Breizhiz, eo difennet ouzhoc'h an anv Pariz, lenn ar Bibl.

Ha koulskoude hon eus divizet treiñ ar Bibl e brezhoneg. Kousto pe gousto ez aimp war-raok. Setu dija ouzhpenn dek vloaz m'hon eus kroget ganti. Fellout a rae dimp sevel un droidigezh rik ha peurreizh, ken e-keñver an destenn-orin ken e-keñver ar brezhoneg. Betek-hen an troidigezhioù graet en hor yezh, pe evit ar Bibl a-bezh, pe evit lodennoù, ha goude ma oant bet aketus ha kalonek n'eo devoa ket tizhet bezañ peurv, na zoken bezañ a-walc'h peurliesañ.

Gwir eo, gant ar studiadenoù a zo bet embannet gant ar Viblou- rion er bloavezhioù diwezhañ-mañ, hon eus bremañ binvioù-studi kalz gwelloc'h eget ar re o devoa hon araokidi etre o daouarn. Dibar- donus e vefemp mar ne rafemp ket hiziv labour resisoc'h egeto.

Eus an Testamant Nevez hon eus dija moulet meur a dra : Aviel Sant Mazhe, Aviel Sant Mark, Aviel Sant Yann, an Diskuliadur. Emaon o skeiñ stensiloù AL LIZHEROU KATOLIK a zeuio ar-maez a-benn ur miz bennak. Ha ne chomo ken d'ober aze nemet gant Lizheroù Sant Paol, Obe- roù an Ebestel hag Aviel Sant Lukaz, e zo prest ivez pe dost an destenn anezho.

Eus an Testamant Kozh eo deut ar-maez pevar eus ar brofaded vihan, Habakouk, Hobdia, Yoel, Yona, hag ouzhpenn-se Koheleth (An

Eklesiast), Levr ar Furnez. Prest eo a-walc'h traoù all, evel ar Salmoù, Isahia ha meur a levr istorek.

Daoust d'an diaezamantoù e renkimp, er bloavezhioù a zeu, mou- lañ bep bloaz, daou pe dri levrig da vihanañ. N'hellomp ket hen ober hep ho skoazell. Bepred evel just eo an hevelep re a vez gou- lennet outo harpañ ar mouladurioù brezhoneg. Peogwir n'hon eus ket sikour da c'hortoz digant ar re all...

Klask a reomp koulskoude ober gant an nebeutañ a vizoù. Evit Al Lizheroù Katolik em bo skoet ar stensiloù me va-unan; al labour- roneo a vo graet gant an Aotroù Klerg. Na vo tennet nemet un niver bihan, 100 skouerenn hepken, evit mirout da lezel arc'hant o kous- ket.

Tud'zo o deus lavaret ha skrivet a-dreuz hag a-hed : perak na vez ken embannet levrioù ar Bibl ? Abaoe 1958 n'hon eus gwalet netra ! Aes eo lavaret perak. Dre maz on bet digalonekaet ! Lakaet em boa tennañ 300 skouerenn eus Aviel Sant Mark : goude pevar bloaz em eus gwerzhet en holl 50 skouerenn. Ar brenerion ne ijinont ket peurliesañ e paseurt degouezhioù tenn e tleomp labourat, ni skriva- gnerion vrezhonek.

Komprenit mat ez eus ur gudenn arc'hant. Mat n'eo ket c'hoazh an hini diaesañ. Kustum omp da forañ arc'hant evit hor menozioù. Ar gudenn pouezusañ eo hini ar galon : perak skrivañ, ma tleer gortoz pevar bloaz evit hanter-kant lenner ?

Prenit. Rakprenit al LIZHEROU KATOLIK, 350 lur franko, da gas d'an dimezell St Gal, Louannec, C.C.P. Rennes 51-940.

Evit deskiñ brezhoneg mat n'eus ket gwelloc'h eget ar Bibl, a zo aes peurliesañ e-keñver ar gerioù, met pinvidik-konañ e-keñver an traoù-lavar, ha stumm ar frazennoù. Skarzhit diouzhoc'h kemple- zhioù ar C'hallaouad : lennit ar Bibl. Al levr klasel e pep keñver, A L L E V R.

Setu amañ prizioù franko levrioù ar Bibl bet embannet betek-hen : AVIEL ST MAZHE : 4,50 Lur nevez; AVIEL ST MARK : 4 ln; AVIEL ST Y YAGB : 4; DISKULIADUR ST YANN : 3; LEVR AR FURNEZ : 3; KOHELETH : 2 HABAKOUK, HODDIA, YOEL, YONA : 3. Goulenn anezho digant an D-all St Gal de Pons, Louaneg

UN DIELL. RESPONT AN F.C.B DA C'HOULENNOÙ ARC'HANT
KUZUL AR BREZHONEG

EMGLEO BREIZ
Fondation Culturelle Bretonne
(Commission Culturelle du C.E.L.I.B.)

Brest, an 21 a viz Du / 61

Aotrou ker,

Kuzul-Rena ha Sodadeg-Meur Emgleo Breiz, en Oriant d'an 21/11/61
o-deus studiet ar goulennou arhant kaset gant Kuzul ar Brezhoneg.

Divizet eo bet :

- 1- Rei 500 LN da "SKOL OBER" M.Gourlaouen (an hevelap sikour
eged da Skol dre Lizer " Ar Falz " hag hini ar " Bleun Brug ")
- 2- 200 LN d'ar gelaouenn-skol " WA NIG HA WENIG " (an Ao.Kalvez.)

Goulennou P.Denez ha R.Huon :

Hervez ar reolenn heuliet betag vremañ gant Emgleo Breiz, diwar
abegou kelenn ar yez, ne veze roet sikour nemed d'al levriou skol
a rae gand an doare skriva implijet er skoliou.

Koulskoude, en desped d'ar reolenn-stur-se, e fell da Emgleo
Breiz harpe embannaduriou skol Kuzul ar Brezhoneg, evid digeri an
hent d'eun emgleo hetet gant an oll; setu perag eo bet divizet
e unvouez:

- 1 - Rei 500 LN evid levriou bugale P.Denez.
- 2 - 500 LN evid levriou skol " Al Liamm ".
- 3 - Lakaad a gostez 5.000 LN da veza roet da embannaduriou skol
Kuzul ar Brezhoneg, ma asant renerien ar Huzul ober en o le-
vriou skol gand an doare skriva a hell beza implijet er skoliou
- 4 - Mar deo degemeret kinnig Emgleo Breiz, goulenn neuze digand Ku-
zul ar Br. envel dileuridi da lakaad e Kuzul Rena Emgleo Breiz
evid komz e ano ar Huzul.

Goulennou ha n'int ket bet degemeret:

- Ar Bibl : N'eo ket eul levr evid ar skoliou
Skol : Ne heller ket rei sikour d'ar helhkeleouennou

Kamp ar Vr. (ezhonagrion) : Ma vefe roet sikour d'eur hamp, e vefe
red sikour ivez kement hini all a zo.

Gand va gwella gourhemennou breizeg
P. Mével.

E-giz ma teree en deus Pennrener KUZUL AR BREZHONEG trugarekaet
EMGLEV BREIZH evit ar profoù hag ar c'hinnigoù a rae hemañ.

Un nebeudig evezhiadennoù a raimp hepken, diwar goust BARR-HEOL, na
petra'ta !

Souezhus a-walc'h ez eo ar yezh implijet gant an Aotrou Mevel,
Eilrener EMGLEV BREIZ. Ne lavaromp ket e-kefver an doare-skrivañ,
daoust ma'z eus traoù divalav a-walc'h evel " d'ar helhkeleouennou !
Merkomp eta un nebudig traoù ha na seblantont ket nemeur bezañ
hervez ijin ar brezhoneg

BODADEG-MEUR : Iann Bodadeg-VEUR

AN HEVELEP SIKOUR EGET : setu trefodadaj leonek ha n'aus ket ezhomm
e brezhoneg mat... Lenn An HEVELEP SIKOUR HA

DIVIZET EO : marteze, ha divizet ez aus bet? E Tregerieg e
lavaromp " divizet " zo " bet.

MAR DEO DEGEMERET ... Setu eza bepred brezhoneg pe gentoc'h gerioù
hag a zo krenn enep ijin ar yezh. Lenn neuze MAR BEZ, hag a zo ar
reizh nemetañ, koulz e Breizh hag e Kembre. (stumm

Goulennou ha n'int ket bet degemeret: AR BIBL ? ar respont a zo bet
moulet a-raok al lizher-mañ n'en deus ezhomm diskleriadur ebet d'e
heul.

SKOL : Arabat ankounac'haat ez eo evel just ur gelaouenn, met ivez
ur gelaouenn hag a embann traoù a bouez evel oberenn gaer
ABEZEN : AL LENNEGEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOÙ

KAMP AR VREZHONEGERION : Perak ne vefe ket roet d'an holl Gampoù,
ma tallezont ur seurt skoazell ?

Evel just, n'aus ger ebet gant ar C'HUZUL da gemmañ e skritur. Met
skrivet eo ar Skritur-Sakr " Ne vinelli ket genoù an ejen o tornañ
war da leur" ha dre-se...Hogen daoust ha daou ejen ne raont ket g
gwel labour eget unan. Daou ejen a zo an deiz a hiziv el leur ar
yezh. Ac'hanta !...o yevañ war an dro...Ha neuze kiañ outi !

PAJENNIG AN TREGERIEG.

Meur a wach ez eus bet goulennet diganin embann an notennoù am eus dastumet diwar-benn Yezh Treger, hag ar gerioù kufituilhet ganin. N'em eus nag amzer na gouzigezh a-walc'h d'ober ul labour skiantal. Gwenole ar Menn eus Pariz en deus lavaret din e tastumfe diwar bajennoù hor c'helaouenn an troioù-lavar hag ar gerioù strewet ganimp, - alies a-ratozh- en hor skridoù. Trugarez dezhañ. Setu amañ un toulladig traoù souezhus a-walc'h

AR STUMM-EMOBER : Studiet mat eo bet ar stumm-se gant Kervella en e e YEZHADUR BRAS paj. 157, niv. 217-218-19. Evit Bro-Dreger stagañ an troioù-lavar-mañ :

En em ankouaat, pe en em ankouazh: chom war-lerc'h, chom re bell da skouer : me 'oa en em ankouaat eno.

En em boket: pokat an eil d'egile. Me'wele'nê o'n em boket, pe zoken evit testaat d'an distagadur : 'n om boket.

En em gaozeal : Ar re-seoù n'en em gaozeont ket, ne gaozeont ket an eil d'egile, n'int ket mignoned, fachtri 'zo etreze, broc'hadeg.

En em skrivañ (pe mar kirit kaout an distagadur : 'n om skrivañ !) : skrivañ an eil d'egile, lakaomp daou zen yaouank, pe zaou vignon. e gwirionez eskemmañ lizheroù.

STUMM OBER: da lavarout eo an implij eus anv-verk gant an araogenn o (oc'h, ouzh) Gwelout Kervella paj. 189 sq.)

E gwirionez ez eus daou stumm hag a seblant bezañ oc'h ober brezel an eil d'egile: ar stumm O, OC'H hag ar stumm E, EC'H. Da skouer.

e oa o vont, e oa e vont. An eil stumm en E, EC'H eo an hini a zo implijet e Bro-Wened. **Iakie** a-walc'h eo, hogen e-touez tud an hevelep tiegezh e vez darn a-wechoù oc'h ober gant O hag ar re all ar stumm E, EC'H.

STUMM EN UR (pe vez daou ober war an dro). Disheñvel ez eo e Treger vras hag en Treger vihan. Bro-Lannuon : EN UR (distaget EUR) hag e Kemper-Gwezenneg : ouzh in. hag e Gweloù ivez moarvat, diouzh ar sonig-mañ : Marv e Grabin, grabin! Marv e Grabin gozh
Ouzh in dibiñ, ouzh in ivañ
Ouzh in flepañ yod en e gof ! (Pludual-Lanvollon)

REIZH AR GERIOU : Ken, trouz, razh a zo gwregel. Ar ger PUBL a zo **ispisiel** evit gwir. Gwregel ez eo, hogen evel raganv ez eo gourel: dezhañ, evitañ, .. Koumanant a zo gg. Ar ger Labour kentoc'h ivez

STUMM KOZH : Klevet e Bro-Lannuon gant : meur a hini ar stumm-mañ **hoc'h dalc'hmet**. Da skouer : **Hoc'h tad, Hoc'h Breur**. (Arzel Even pe R.Memon a c'hell lavarout dimp hag-efi : Hoc'h = Houz (Gwenedek)

Pep tra evit **BENNOZH AR MERC'HED GOUDE AR GWILIOUD**, a c'hell bezañ greset e yezh ar vamm, nemet bennozh ar beleg da echuiñ.

Da evashaat ouzh ar bennozh ispisial evit ar VAMM a zeu d'an iliz, pa vez marv dija he bugel bet badezet. Komzoù leun a frealz hag a fiziañs : Deuit en Templ Doue, azeulit Mab ar Werc'hez Santel Mari hag espedit Doue ma roio deoc'h konfort ha kennarz. Hag an oregon-mañ a glozañ " Pedomp,

Doue hollc'halloudek ha peurbadus, karour ar c'hlanded santel, c'hwi hag a zo bet plijet geneoc'h gervel bugelig ar vaouez-mañ d'ar baradoz, plijet geneoc'h ivez, Aotrou, ober gant trugarez e-keñver ho servijerez, ma c'hello, dre veritoù ho Pasion hollsantel ha skoazell ar Werc'hez Vari bepred Gwerc'hez ha re en holl sant bezañ frealzet ha kennarzhet da drec'hiñ war he glac'har ha da adkregiñ gant deverioù he buhez, en doare ma kavo ar joe beurbadus en ho ruantelezh e kompagnunezh he c'hrouadur...

(diwar al Latin)

*

Setu e-touez traoù all hon eus lezet a gostez an alberz eus lodenn gentañ ar **RITUAL I ERZHONAT**. En eil lodenn ne gaver nemet latin, evit ar bennozhioù a bep seurt a ro d'an traoù he d'ar birvioù-labour an Iliz Katolik: Dour Benniget, Goulaouennoù, Tiez, Kirri, Listri, Boued, Ar Maouezed o tougen, ar Vugala vihan, ar Vugale Glañv, ar Chatal, al Loened, ar Skeudennoù, ar Priedoù goude 25 pe 50 vloaz priedelezh, Skapularioù, Chapeledoù, Medalennoù, Dilhad-ufereñn hag an Traoù-Iliz h.a. h. a.

Ur STAGADENN a zo d'ar RITUAL ha n'eus enni nemet saozneg hag iwarzhoneg (un Orezon hepken e Latin): TRONIDIGEZH KALON JEZUZ, en un tiegezh bennak). Holl lennerion a gavo ar bedenn e brezhoneg e levi-ofereñn UGEN paj. 937 sq. EVIT TRONI AR GALON ZAKR EN TIEGESIOU, pe e levr Gwilhevig-Priellek, e gwenedeg (LIVR PEDEÑNEU ODERENN HA GOUSPEREU) paj. 232 : GLOESTR EN TIEGEHEU DE GALON SAKRET JEZUS).

Dre-se n'hon eus ket ezhumm da bouezañ kaer war gement-se.

*

Hogen ur studi a-ratozh, gant arbennigourion war al Liderezh, war al Latin, war ar Yezhoù Keltiek he war ar Galleg (na petra'ta !) a vefe ezhomm d'ober bramañ, evit keñveriañ an holl destennoù, en holl

Ritualoù-se meneget ganimp: Iwerzhonat, Gall ha Breizhat. Mar befe kreñv buhez ar spered hag an ene, e Breizh, hor befe marteze ur gelaouenn bennak o plediñ gant seurt studioù, met pa n'eus ket, e renk BARR-HEUL ober ar boulc'h kentañ war an dachenn.

Evit pezh a sell ouzh ar RITUAL GALLEK, an neb en deus pledet gant ar gudenn e oar a-walc'h e oa bet aozet ar Ritual-se divyezhek gant Filistined eus ar c'hentañ klan, daoust d'an Imprimatur roet gant Arc'heskob Tour, ha daoust d'an Aotrou Yann Chollet arc'heskob Kembre bezañ skrivet ul lizher e latin d'ereat, evel sekretour Komision al Lidoù-Sakr evit Bro-C'hall. Gwir eo, ez aas-tre abegañ labour c'hraet hogen fentus a-walc'h ez eo gwalet n'eus ket chomet OREZON EBET eus ar RITUAL GALLEK, hep bezañ kemmet, hag a-wachou kemmet da vat, en eil mouladur anezhañ, er bloaz 1957. Ne vennit ket krediñ ? Ma ! Bellit neuze :

	1948		1957
ACCIPERE signum Crucis tam in fronte quem in corde, sume fidem caelastium praecopto- rum: et talis esto mori- bus, ut templum Dei jam esse possis	SOYEZ marqué du signe de la croix sur votre front et sur votre coeur. Recevez la foi qui enseigne les Comman- dements divins, et vivez de manière à devenir la demeure de Dieu.	RECEVEZ le signe de la Croix sur votre front et dans votre coeur. Accueillez la foi et ses enseigne- ments divins, et vi- vez de telle manière que vous puissiez être désormais le temple de Dieu	

Gant aon da astenn re an traoù, ne lakimp ket an droidigezh eus ar bedennig-se en ur yezh bennak all. Hogen, hep mont hiroc'h, daoust ha n'eo ket bezañ berrboellik tamall d'an Iliz Katolik d'ere'hel groñs d'al Latin ? Rak mar bez ezhomm, "bop sach" (gouez da Dregeriz) da adober an troidigezhioù, neuze pebez meskailbez na vo ket ! Gallout a rit ivez keñveriañ berrder sioul al latin gant hirder ar galleg .

Dev anzav evelkent ez eo kalz gwelloc'h troidigezh adsturmet ar bloaz 1957 eget an hini gentañ. Skouerioù e-leizh a c'hellfemp degas, met ne dalvez ket ar boan.

N'eo ket sur tamm ebet e oa kement-se diouzh grad pennadurezhioù an Iliz ober an droidigezh eus ar RITUAL ROMAN, evit Bro-C'hall. War-bouez nebeut, ez eo ar RITUAL ROMAN eo a vez implijet en Iliz ar C'hornog. War gannadig arc'heskopti Paris e oa bet moulet ur studia-

Pep tra evit BENNOZH AR MERC'HEDEG GOUDE AR GWILIOUD, a c'hell bezañ graet e yezh ar vamm, nemet bennozh ar beleg da echuiñ.

Da eveshaat ouzh ar bennozh ispisial evit ar VAMM a zeu d'an iliz, pa vez merv dija he bugel bet bedezet. Komzoù leun a frealz hag a fiziañs : Deuit en Templ Doue, azeulit Mab ar Werc'hez Santel Mari hag aspedit Doue ma roio deoc'h konfort ha kenerzh. Hag an orezon-mañ a glozañ " Pedomp,

Doue hollc'halloudek he peurbadus, karour ar c'hlanded santel, c'hwi hag a zo bet plijet geneoc'h gervel bugelig ar vaouez-mañ d'ar baradoz, plijet geneoc'h ivez, Aotrou, ober gant trugarez e-keñver ho servijerez, ma c'hello, dre veritoù ho Pasion hollsantel ha skoazell ar Werc'hez Vari bepred Gwerc'hez ha re an holl sant bezañ frealzet ha kenerzhzet da drec'hiñ war he glac'har ha da adkregiñ gant deverioù he buhez, en doare ma kavo ar joa beurbadus en ho ruantelezh e kompagnunezh he c'hrouadur...

(diwar al Latin)

*

Setu e-touez traoù all hon eus lazat a gostez an alberz eus lodenn gentañ ar RITUAL IWERZHONAT. En eil lodenn ne gaver nemet latin, evit ar bennozhioù a bep seurt a ro d'an traoù ha d'ar binvioù-labour an Iliz Katolik: Dour Benniget, Goulaouennoù, Tiaz, Kirri, Listri, Boued, Ar Maouezed o tougen, ar Vugale vihan, ar Vugale Glañv, ar Chatal, al Loened, ar Skeudennoù, ar Priedoù goude 25 pe 50 vloaz priedelezh, Skapularioù, Chapeledoù, Madalennoù, Dilhad-ufereñ hag an Traoù-Iliz h.a. h. a.

Ur STAGADENN a zo d'ar RITUAL ha n'eus enni nemet saozneg hag iwerzhoneg (un Orezon hepken e Latin): TRONIDIGEZH KALON JEZUZ, an un tiegezh bennak). Holl lennerion a gavo ar bedenn e brezhoneg e levr-ofereñ UGEN paj.937 sq. EVIT TRONI AR GALON ZAKR EN TIEGESIOU, pe e levr Gwilhevig-Prielleg, e gwenedeg (LIVR PEDENNEU OVERENN HA GOUSPEREU) paj.232 : GLESTR EN TIEGEHEU DE GALON SAKRET JEZUS).

Dre-se n'hon eus ket ezhumm da bouezañ kaer war gement-se.

*

Hogen ur studi a-retozh, gant arbennigourion war al Liderezh, war al Latin, war ar Yezhoù Keltiek ha war ar Galleg (na petra'ta !) a vefe eznomm d'ober bramañ, evit keñveriañ an holl destennoù, an holl

n'en devoa ket klasket ober labour pizh. An Aotronez all: Kalvez, Bourdelloz, ar Floc'h avat, a zo bepred ganin ar skouerenn a oa bet kaset dezho, gant o evezhaidennoù priziue warni, ispisial hini an Aotrou Floc'h, anezhañ ur mestr war latin Tadoù an Iliz, ha war yezh al liderozh.

Un deiz bennak, a greiz holl, n'ouzon ket **roz peur**, setu ul lizher oc'h erruout ganin eus perzh an Aotrou Fave o lavarout kas va faperioù da vikel-vras Kemper. Diouzhtu-dak e voe kaset, na petra'ta, met berzet-mat e oen bet na vije ket moarvat embannet va labour evel ma oa. Pep frankiz e lezen gant Aotronez Kemper, evel just. Hogen an urzh e oa aozañ un droidigezh, hervez an hini c'hallek hag an Aotrou Bleunvenn, rener FEIZ HA BREIZH ha person Ploveilh a adkempennas va zraoù, hervez ar gourc'hemenoù graet dezhañ, se'zo sklaer.

*

Setu an istor ! Hogen pa lakean hiziv, tra m'amaon o skrivañ d'ar perverlamm al linennoù-mañ, COLLECTIO RITUUM ad Instar Appendicis Ritualis Romani Pro Omnibus Diocesisibus Hiberniae & Scotiae moulet kaer hag ur bern danvez ennañ, ha neuze PEDENNOU H. LIDOU AR VADI-ZIANT HA AN NOUENN, Levriq an Dud Fidel, keñver ouzh keñver war va zaol, e-kichen va mekanik, neuze e kredan adskrivañ, -da vihanañ evit ar rumadoù da zont, -ar pezh am boa skrivet war VARR-HEOL, Miz-Mee 1954, Niv. 3, an ur pennad skrivet fall a-walc'h ha digourtez un tamm marteze : "... E gwirionez e vije bet ezhomm d'ober un emglev ...etre TRI ESKPTI Breizh-Izel ha sevel ur Ritual evit Breizh-Izel a-bezh".

Evel just, mar bije bet heñvel Breizh ouzh Iwerzhon e vije bet aozet un dre bennak evit Breizh a-bezh heñvel ouzh COLLECTIO RITUUM. Bez'ez eus broioù end-zeun hag a zo bet dedennet gant skouer IWERZHON. Rak en IWERZHON eo bet moulet ha keinet al levr-, broioù evel ar Belgij...N'eo ket c'hwetzañ an traoù eo lavarout ez eo labour hor Breudeur gelt a Iwerzhon un oberenn hag a ra enor dezho.

STAGADENNOU

Petra bennak n'eo ket frank-frank pajennoù B.H, ec'h aberzhimp unan anezho c'hoazh gant ar fiziañs e plijo a-walc'h d'ar ranellerien a zo e-tuze e vignoned ober ur sell war an div stagadennig-mañ.

1- Ur skouerenn eus an troidigezhioù e latin, saozneg, gouezeleg, galleg ha brezhoneg. N'hellomp ket lakaat kembraeg, poogwir n'eus kital abet en o yezh, siwazh !

2 - Lid an Euredoù. (war un niverenn bennak da zont eus B.H.)

SAKRAMANT AN NOUENN (Bannozh an dud)

OREMUS	LET US PRAY	GUINIS
Introeat, Domine Iesu Christe, domus hanc sub nostrae humilitatis ingressu, aeterna felicitas, divina prosperitas, serena laetitia, caritas fructuosa, sanitas sempiterna: effugiat ex hoc loco accessus daemonum: adsint Angeli pacis, domumque hanc deserat omnia maligna discordia. Magnifica, Domine super nos nomen sanctum tuum; et benedixit nostrae conversationi; sanctifica nostrae humilitatis ingressum, qui sanctus et qui es, et permanes cum Patre et Spiritu S-cto in saecula saeculorum amen. AMEN	O LORD Jesus Christ, may the blessing of God, eternal happiness and joy, living charity and everlasting health enter along with us. Keep far from this place all evil spirits. May the angels of peace make their dwelling here. Let discord and hate depart from it. Show forth in us, O Lord, the power of thy holy Name. Bless and sanctify the words and actions of thy servant in this house. Thou who art holy and merciful and who with the Father and the Holy Ghost livest for ever and ever. AMEN	A Thiarna Iosa Críost, anseo go huirisal go raibh in éineacht linn rath Dé agus sonas síoraí áthas agus síocháin, carthnánacht thothúil agus sláinte bhuan. Go ruai gtear ón ionad seo tionóil na ndeamhan. Go lonnaí aingil na slúchána ann, agus nár fhana aighneas ná urchóid fán áit. A Thiarna, móraigh d'ainm naofa inár measc, agus bean + naigh ár mbearta. Neomhaigh ár gcueirt uiríseal anseo, ós tó atá naofa trídreach agus a mhaireas maraon leis an Athair agus leis an Spiorad Naomh trí shaol na seol. AMEN

GALLEG (1948) PRIONS. Seigneur Jésus-Christ, faites entrer dans cette maison, sur les pas de votre prêtre, l'éternel bonheur, la divine félicité, la joie pure, la charité féconde, la santé qui ne se perd pas. Que les démons soient écartés de cette demeure. Que les anges y apportent la paix et que cette maison disparaisse toute atteinte à la charité. Manifestez en moi votre puissance divine, et bénissez mon ministère. Sanctifiez l'entrée de votre prêtre dans cette demeure, Vous qui êtes le Dieu saint et miséricordieux, et qui avec le Père et le St-Esprit vivez et régnés dans les siècles des siècles. Ainsi-e it-il

(1957) Seigneur J.C. bien que je ne suis qu'un homme, faites entrer avec moi dans cette maison le bonheur sans fin, les bénédictions divines, une joie paisible, une charité active, une santé qui dure tous jours. Que les démons soient repoussés de cette demeure, que les anges de paix viennent l'habiter; écartez de cette maison toute division méchante. Manifestez en moi la gloire de votre saint nom et bénissez

N I H O N D A O U

hervez ar ganaouenn
gembreat "Ni'n dau"

Barzhoneg gant :
Evnig "enn ar C'hoad"

De- lioù ar gwez 'n ur grenañ a ruilh d'an
dou--ar lous. O liv, a - laouret bre---mañ
(mañ) di-za- le a vo rpuz ! Ne-met hor
c'hu---ran---tez-ni ne gol--lo ket he liv
(liv) Va c'ha- lon ma ha da hi - ni a cho-mo
glan o - div

3-e Poz (An Ae..... lez III

1

Delioù ar gwez'n ur grenañ
A ruilh d'an douar lous
O liv alaouret bremañ,
Dizale a vo rouz !
Nemet hor c'harantez-ni
Ne gollo ket he liv
Va c'halon-me ha da hini
A chomo glan o-div !

2
Hon-daou ni'zalc'ho seder
Da vale dorn-juzh-dorn
Hor buhez 'vo dibreder
Daoust d'ar glav ha d'ar skorn
D'an hafv, an heol a strawo
Dudi en hon ene;
Koumoulenn biken ne vezo
Keit ma vi ganin-me !

3
A bep tu dim aezhennoù
A veulo, c'hwek ha drant
Glaster ken glas da selloù
Ha da vousec'hoarzh ken koant.
Ha ni'glevo, evurus
Skoulmet hor c'harantez
Ur ganaouenn' ken dudies
Ha kanoù an Aelez !

Barzhoneg savet diouzh
troidigezh M.Klerg

Perwenan, 30 a viz Du 61

pep gwir miret-strizh. E.P.A.C'H

(Kendalc'h eus ar bajenn 47) (Lizher)

dezhi" Mar faot dezhi ober skol c'hoazh, a vo ret adtremañ an
eksamin, e Pariz." Graet he devoa, ha bet e oa resevet hag
adkemeret er skolioù. Goude, a lavaras ar plac'h kaezh din,
bezañ klevet eus an divalavañ traoù. Dont a rae an dour war he
deoulagad en ur lavarout c'hoazh " En bro-Elsaz, ni'zo bet
taolet he distaolet e kement tu 'zo, ha den ne c'houlenn gwelet
ac'hanomp".

Setu aze un tammig traoù am eus klevet, Aotroù Person, grit gan-
tañ evel ma kirit. Dloavezh mat deoc'h, ha trugarez evit BARR-H.

E.B.

(1*) En Elsaz, ar mestroù hag ar mestrezed-skol a zo tud a reli-
jion an darnvuiañ anezho. Ar C'hrist a zo e kement skol ha kement
meri 'zo. Skol ar gouarnamant hag ar skol gristen a vez lavaret
er pedennoù enno a-raok mont kuit, pe en ur erruout er beure.

KANVOÙ : Bezit soñj en ho pedennoù eus an Itron Loisel, eus Josi-
lin, mamm hor c'heneil Per Loisel, Drouiz-Meur, hag eus an Itron
Le Clerc, interet e Plouvael, an 10 a viz Meurzh, mamm rener
BARR-Haol (Doue d'o fardono !)

O HEULIAN AN AOTROU CHALONI BOULARD, SOSIOLOGOUR

Brudet ez eo ha gant gwir abeg an Aotrou Chaloni Boulard, unan eus mistri vras ar Sosiologouriezh Relijiell, abalamour d'e levrioù, d'e studioù hag ivez abalamour ez eo bet implijet e ouiziegezh vras da adrenkañ e meur a lec'h doareoù an ebostolerezh katolik gant ar veleion hag al laiked. Hogen eviti da vezañ e-giz ma leverer ur Skiant diouti hec'h-unan, distag diouzh ar Skiantoù all, eviti da gaout he reolennoù-labour dezhi hec'h-unan, ez eo arabat diatagrañ anezhi krenn diouzh an Istor, hag alies end-eeun o deus klozadurioù ha kentelioù ar Sosiologouriezh dre vras, hag ispisial ar Sosiologouriezh Relijiell un dalvoudegezh verribad dre ma c'hell an degouezhioù hag ar fedoù a zo tachenn he studioù kemmañ ha ma kemmont a-wechoù buan-tre. Gouest ez eo marteze da zizoleiñ tuadurioù ur bobl, tuadurioù ur renkad bennak eus ar gevredigezh, tuadurioù un amzervezh bennak hir pe hiroc'h, hogen bez'ez eo kentoc'h un Testeni Istorel.

Setu dres ar pezh a soñjen en ur lenn en-dro al levr embannet en 1954, evit Eskopti Sant Brieg, goude ar steudad-studiadegoù bet roet gant an Aotrou Chaloni Boulard, e kloardi Sant Brieg. Ul levr a briz bras, studiadennoù talvoudus hag onest-tre, barrek da sikour ar getoliked da zammelout hent an amzer-da-zont, hep kabot ar riskl da dastornat en defvalijenn. Hogen ken prim, ken fonnus, ken herrek ez a an amzer hag ar bed en-dro ma weler dija dilañs gant darn eus kentelioù ar C'helanner bras. Ur gudenn hepken a gemerimp : hini an DIVROAN, gwalc'h evit lavarout ar ger reizh) an DIVROADEG.

*

Taolennet mat ha resis ez eo stad an Divroerezh er bloavezhioù 1953-1954, divroerezh evit mat, divroerezh rannamzerel, divroerezh pemdeziek, hervez an dud a guita ar vro hep c'hoant da chom pelloc'h, ar re he c'huita evit lod eus ar bloez, sezonerion, ha neuze ar re a ya bemdeiz ur pennad eus ar gêr, - lakomp e kêr, evel micherourion, implijidi h.a. (paj.17 sq ha kofferañs an Tad Quinton, O.M.I diwar-benn ar Vretoned a ya da Jerze da labourat). Ha talvezout a rafe ar boan o zreif e brezhoneg, na pa ve ken evit reif danvez-studioù kevredigezhel da neb a garfe ha da verat ar seurt kudennoù e yezh Breizh.

Merket spis ez eo ivez abegoù an DIVROAN EVIT MAT : abegoù o tont eus an divroerion o-unan, abegoù-tiegezh, dilerc'h ar modernaat war ar maezioù-, abegoù ekonomikel. Kement a draoù a zo bet skrivet diwar-benn an dra-se, mar ne gav ket dimp e talvez ar boan abuzif amzer hol lennerion ouzh o eddisplegañ. Ur studiadennoù war ar FEDOU hepken,

hag ar pennaegoù gwelus. Hogen ger ebet diwar-benn levezon ar SKOL, levezon ar POLITIKEREZH, hag an diouer ar SPERED-BRO. Evel just, pouez ha levezon an traoù-ae a zo dires-tre da vuzuliañ, met na vefe ket bet fall, tamm ebet, ober un damveneg anezho.

Gwir eo, ez eus traoù ha na hafval ket an Aotrou Chaloni bezañ taolet evezh outo tamm ebet. Er bajenn 13 eus al levr e lennar : en tu ar sav-heol eus ul linann PLAGAD-KORLE-MUR e vez an niver-muiañ eus an tiegezhioù en iliz da sul. En tu ar c'huzh-heol avat, ne vez mui nemet an niver-bihanañ eus ar boblañs... Ma! al linenn-se eo dres RANN AN DIV YEZH, e deroù an XX-et kantved....

*

HEULIADOU AN DIVROAN a zo fromus da lenn, ha gwirion, siwazh !
 = Kozh e boblañs ar maezioù
 = Ar C'hoshaat eus ar boblañs dre ma'z a kuit ar yaouankizoù
 = Kresk an dud dizemez.
 = An atentoù dalc'het gant tud tremen 50 vloaz dezho n'int ket digor d'an arakaat hag ar gwellaat micherel.
 = Re a labour d'ar re a chom er vro.
 = Re start labour ar merc'hed hag an dud yaouank.
 = Buhez an tiegezh o paouraat.

Hag an dra-mañ hag a sell ouzh ar RELIJION :

= Fallaat a ra an dud da bleustrif o relijion (diwar re-labour)
 = Eilpennet buhez ar barrez
 = Re zister stern ar barrez da strollañ tud an oberoù katolik
 = Evit ar re o tivoañ : diwriziennet e tistagont diouzh ur relijion a heulient dre voazamant.

*

Ar gelennadurezh a ro an Aotrou Chaloni Boulard d'ar veleion (dreist-holl) a zo traoù kaer enni : emzalc'h ar veleion dirak poan an dud ar skuizher, an dismegeñsoù stag da skouer ouzh buhez an divroerion rannamzerel, dinesterioù o tont eus dispartit ar priedoù e-keit ha ma vez an ozhac'h o labourer pell diouzh ar gêr er broioù-kroc'h, doare-spered an divroerion diwriziennet ha displantet. O foanioù a zle bezañ peanioù, trubuilhoù ar veleion ha digarez d'o sikour ha da bedif evito. Neuze o kement ha ma'z eus tu o derc'hel stag ouzh o farrez kozh : kannedig-parrez, skrivañ h.a. da zorn enezho da vianañ; o lakaat da gaout darempredoù gant strolladoù an Oberoù Katolik (re ar barrez ma teuont ha reoù ar barrez m'an em ziazazont) Hep ankounec'haat avel just, an OBEROU BREIZHAT savet a-ratozh evit

ar Vrestoned, evel AR MISIION BREIZHAT.

Betek - hen e weler a-walc'h pegen fur ez eo darn eus studiaden
an Aotrou Boulard : Breizhiz 'zo a guita ar Vro. Ezhomm o deus da
vezañ skoazillet ha komprenet. Mat-tre. Hag er bloaz-mañ, e deroù
ar bloaz-mañ 1962, ez eo gwir a-walc'h FED AN DIVROEREZH. Ha
koulskoude....

Hogen dav eo dimp distrañ war ur rannig eus kentelioù an Aotrou
Boulard : paj. 19, traoñ ar hann kentañ ha krec'h an eil bann. Setu
e gomzoù : " Ni, beleion, n'hellomp ober hogozik netra enep fed an
divroerezh.

N'eo ket eno emañ hol labour, evit gwir.
Petra emañ Doue o c'hortoz diouzhip ? Ma stummimp kristenien wirion
gouest da chom kristen n'eus forzh pelec'h e vint o vevañ, gant
m'en em gavint, evel just, en degouezhioù reizh evit hen ober.

N'eo ket reñf kustumoù kristen a zo d'ober, met diorren (=kelennañ,
desevel) ar Feiz."

Daou pe dri zraig vihan a zo da verkañ diouzhtu : HOGOZIK NETRA,
ha neuze " GANT MA VINT... en degouezhioù reizh evit hen ober
(evit chom kristen). En daou benn hent an divroerezh, diouzh kom-
zoù ar sosiologour o-unan, ez eus evel div yenn hag a c'hellfe reñf
tu da frankaat labour ar getoliked (hag ar vevsion, na petra'ta):
hogozik netra ? setu ar penn kentañ eus an hent. Met petra eo ar
gerioù-se : Hogozik netra hag ar muzul anezho ? Marteze ouzh
gwirioù an droug m'eo an divroañ ez eus displeaded, mac'homerezh
hag an Iliz katolik a zo bepred a-du gant ar Reizhder hag ar
Frankiz. Dres ar pezh a zifenn ar Pab Meur a zo e penn an Iliz
Katolik, YANN XXIII, an e lizher MATER ET MAGISTRA.

Hag ar yenn all er penn all eus an hent " Gant ma vint, en degoue-
zhioù reizh..." da lavarout eo e plegennoù aseurt ma c'hellint ren
ur vuhez din eus ur c'hrouadur dezhañ ezhommoù-korf, met dreist-
holl ezhommoù-ene hag ezhommoù-kalon. Fur-tre ez eo komzoù an Aot-
rou Chaloni ha gwellañ respon'zo bet eo ar preder hag ar soursi
a zo bet kemeret eus an divroerion gant an Oberioù Katolik hon
eus graet anv anezho, bremaik, evel da skouer ar MISIION BREIZHAT.
Hogen mar lakaer keñver-ouzh-keñver madelezhioù ha gonidoù an
divroañ evit darn ha neuze drougioù ha kolloù spontus darn all war
gement tachenn a zo, daoust hag e c'hell e gwirionez ar getoliked
kaout mat an degouezhioù a voe pennkaoz eus rivin ha dismantr
drestoned ha Bretonezed e pep keñver : korf, ene, feiz ?

" N'eo ket eno emañ hol labour evit gwir. Petra emañ Doue o c'hor-
toz diganimp ? Ma stummimp kristenien wirion gouest da chom kris-
ten n'eus forzh pelec'h e vint o vevañ... N'eo ket reñf kustumoù
kristen a zo d'ober, met diorren ar Feiz.."

Setu aze hag a zo sofistiezh rik. Ar gerioù diwezhañ " n'eo ket
reñf kustumoù kristen, met diorren ar Feiz o devije ezhomm da ve-
zañ lakaat sklaeroc'h, rak ar Feiz, donezon Doue, diazaz pep bu-
hez dreist-natural er bed-mañ, n'eo ket un dra ennañ a-unan, met
ur vertuz o vevañ en den-mañ-den, en ene-mañ-ene hag a zle evel
just bevaat, gant skoazell ar vertuzioù all, an holl vuhez, kustu-
moù ha tout.... Setu petra'venne an Aotrou Boulard lavarout,
met brasoc'h sosiologour ez eo 'm eus son eget teologour.

Hogen gwashoc'h a zo, ha risklusoc'h.

Ober a ra dimp an Aotrou Kelenner patrom ur c'hristen difetis. Ne
var den ebet : e peseurt degouezhioù e c'hell en em gaoz, ha pri-
ziuseñ teñzor en deus ez eo e Feiz, hag e tle mirout koustat a
gousto ar Feiz-se zoken en riek l eus e vuhez. Se'zo diarvar ha
'maez ar gaoz.

Komzoù evel-se ne dint nemet emdouell. Gouda bezañ merket efedoù
noazus an DIVROAN en defe gallet an Aotrou Boulard sellout a dos-
toc'h ouzh ar gudenn. Dav spisaat evit peseurt buhez e prienter
an dud : da chom er Vro, da zivroañ ? D'en eil buhez pe eben, na
vern, setu en gwirionez petra 'sinifi ar gerioù a-us da lavarout
eo sevel pesked ermaez eus an dour !

Allaz ! O tiwadañ emañ ar Vro : 20.000 pe 30.000 o kuitaat Breizh
hep kaout an esper da zont en-dro nemet da vare kofjeoù an hafv.
" Ma! esperomp e vo ar re-seoù evel misionerion nevez laik hag a
skigno ar Feiz el lec'h ma vint o vevañ !" D'ur vamm a familh, in-
tañvez eus unan eus va farrezioù, e lavaren pegen start e kaven na
oa chomet hini ebet eus he bugale er vro : " Ma! emezi, ar re-se
a ra vad el lec'h m'emaint !" - " Ya! met da c'hortoz emañ ar vro-
mañ o vont war-draoñ !"

Betek heñ ez eo Breizh a gae misionerion d'ar broioù all, dambrast
ez eo misionerion ha misionerezed eus ar broioù all a zeuio dre
amañ.

N'eus ket a veleion a-walc'h da reñf ur person da bep parrez. Pe-
lec'h emañ ar bobl a bourchasa beleion ? Gras Doue a zo galloudus
Met pe-naos e raio lec'h ne vo nemet rivin hag ur goualec'h ?

VARR-HEOL

War Feiz ha Breizh

AR PEC'HEDE ENEP AR SPERED

D'ar mare ma skrivomp e talc'h an traoù da strakal en **Aljeria**, ha paotred-o-zreid du o **klask donet** a-benn eus o **mennoù** dre c'hoari gant an nerzh hag ar spont. Repuidi a-leizh o **guita** bemdeiz Hanternoz Afrika, dre vor, dre aer, da ziskenn war an **god** en tu-mañ d'ar Mor Kreizdouarek. A-benn 30, 40, 50 vloaz amañ **hag** ouzhpenn a vo gallet komz en un doare dirakvarn hag objektivel **eus** an holl zarvoudoù-se aet a-benn neuze d'ober danvez an istor, **danvez-skridoù** ha danvez romantoù i **mesk-ha-mesk enno** **degouezhioù** **kriz**, digernezh ha tener ha teneraus.

Ne glaskimp ket amañ, war VARR-HEOL, displegañ dre **ar munud** an darvoudoù a dremen en Aljeria, ne glaskimp ket zoken **reiñ** da glevout mouezh ar furnez e-kreiz an emgannoù hag ar brezel, **ne fell** ket dimp kennebeut kondannañ den ebet. Hogen evel m'emañ ar **c'hiz** ganimp e kemerimp un degouezh dioutañ e-unan eus ar pezh a vo, **evit** an istorourion da-zont, diwezhañ krogad brezel Aljeria etre **Arzulmiz** ha Frañsizien. Setu an darvoud-se: Distruj ar Skolioù **ha** Tanngwall Levraoueg Skol-Veur Aljer.

Politikerezh an Douar Devet a reer eus ar seurt **vandaliezh** : riñsañ kement tra a **c'helle** servijañ da gelennañ, da stummañ **tud**, en doare da zibennañ ar vro ha sachañ anezhi e poull an **dizurzh**, an anarkiezh Setu da vihanañ penaos e c'heller kompren ar seurt **doare**-ober-se. An Aljerianed emsavet o deus bet o-unan c'hwezhet an **tan** pe skoet bombezennoù da ziskar skolioù, ha tu a zo da ziskleriañ al labour **distrujañ-se** evel un akt a veñjañs war ensavadurioù o **tegas** dezho kelennadurezh ha spered estren. Lakomp. Emzalc'h **Europiz** avat, a zo da lakaat war renk ar pec'hed enep ar spered, enep ar **skiant**, ar ouiziegezh.

Mar deo mat ar sifroù a lenner war ar c'hazetennoù e oa el Levraoueg-se: ouzhpenn 200.000 a levrioù, 250.000 tezenn, 2.500 kelaouenn, 350 dornakrid arabek. Da grediñ eo evelkent n'eo ket an traoù-se traoù di-zoubl hag e vo tu da adpouchar ar pezh a zo bet fontet.

Seurt distrujadegoù e-kerzh brezelioù n'int ket dibaot, evit lavarout dibaot. Distrujadegoù traoù ar sevenadur. Hep komz eus an distrujadegoù graet e Breizh e-pad ar brezel diwezhañ, evel da skouer distruj levraoueg Loeiz Herrieu gant paotred ar stourmerezh kuzh, hep komz eus bombezadegoù ar Saizon war Viest, an Naoned, an Oriant, Roazhon, menez-gamp diamantr Menez Kasino. Un taol-chañs e voe da Roma bezañ espernet.

E-kerzh ar brezel 14-18 : levraoueg Louven, Iliz-Veur Reñz. Pelloc'h en amzer dremenet, e-kerzh an Dispac'h, ar Brezelioù a Relijion, hag a traoù fontet. En Amerika pa zouaras ar Spagnolek e voe diskaret a-fete-pañs savadurioù ar bobloù kozh a oa eno : Azteked, Maiaiz hag all, hag an deiz a hiziv emañ an dud gouizieik o klask diguzhat sekredoù an dorn-skridoù, n-beut anezho siwazh! bet diwallet evel dre vuzhdu a-hed ar c'hantvedoù. A drugarez d'ar mekanikoù elektronek eur deuet a-benn da ziskieriañ an arouezlunioù (pe hieroglifoù) maiaek, e-giz ma tiskoulmer gerioù-kroaz. En anv ar Relijion, mar plij, ec'h en em gemere Spagniz ouzh skridoù, monumantoù, temploù an Indianed, evel da zisverkañ diwar an douar roudoù ur sevenadur pagan. An deiz a hiziv, a dra sur, an holl gouizieien ne vern eus peseurt kredenn a rofe un tamm brav evit kaout en-dro an traoù drailhet dre vrizh-aked evit ar gwir feiz. Hag hep eon da faziañ e c'heller krediñ e oa er sevenadur pagan-se, traoù hag o defe gallet bezañ degemeret gant ar sevenadur kristen, e-giz ma'z eus bet degemeret eus perzh ar sevenadur pagan gresianek ha romanek, e-giz ma vez c'hoazh degemeret elfennoù talvoudus ar sevenadurioù digristen en Iliz Katolik, hag e c'heller soñjal zoken e vo digoret frankoc'h an nor d'an elfennoù talvoudus-se da heul ar Sened bras Hollvedel a vo dalc'het e Roma, evit ar bloaz (1962): rak n'eo ket deuet ar C'hrist da zistrujañ met da beurober, da gas da benn kement madelezh a zo ha skuilhañ warno e c'hraes hag e vuhez.

Brav eo gwelout an deiz a hiziv, evel ur Groaziadeg nevez, ar bobloù o tougen dorn da savateñ e traoñnienn uhelañ an Nil monumantoù an Ejipt kozh hag ar Vatikan e-unan n'eo ket bet an diwezhañ o kas e brof. E-giz-se e roont testeni ar spered hag ar skiant en ur bed troet da vat gant an efedustet hag an deknikelezh, hag e c'hello chaoser bras Assouan sikour ezstataat buhez Ejiptiz an amzer-mañ hep ledañ dourioù an ankou-nac'h war Ijin, Deskadurezh, Gouiziegezh, Sevenadur Hen-Ejiptiz.

Evit chom war hon tachenn, n'eo ket hepken na dreist-holl e-keñver tiera-verezh ez eo prizioù savadurioù kozh Bro-Ejipt, met dre ma'z int evel levraouegoù-mein o tanevellañ istor ar Faraoned, o buhez, o brezelioù, hag o reiñ da anaout o c'hredennoù. Hag en askont da se, na pa ve ken

e tellezont bout diwallet evel ul lodenn eus peadra mab-den.

Pebezh teñzor ne vefe ket a-hend-all kaout en-dro levraouegoù Roma, Atene, hag ar c'herioù gresian brasañ, kaout en-dro levraoueg Pergam gant he 200.000 levr. Daoust petra'soñje Kaesar pa gemeras Aleksandria o welout Levraoueg-kêr gant he 700.000 levr o tont da vezañ boued an tan ? Marteze e oa bet trewalc'h dezhañ tañva amourusted Kleopatra evit disoñjal pep tra all, met techet e vo an dud na reont ket fae war labourioù ar spered da geuziañ, ha gant gwir abeg, d'ur seurt koufonerezh. Gwir eo ivez n'eo ket sur e vije deuet betek ennoep at teñzor-se a skridoù lenngel, istorel, skiantel hag all: tek div wech all ez eo bet distrujet Levraoueg Aleksandria, ar tech diwezhañ er bloaz 390 e-pad emganoù ar Gristenion hag ar baganed. Ha gouzout a oar an holl ez eus un enebour garv da bep sevenadur : an Amzer : tempus edax. Met ne vern talioù evel hini Kaesar a chom ar pezh ez int: gwalloberioù.

*

*

Bremañ, mar kirit lakaomp war an dro levraouegoù brezhonek brudetañ hor Bro-ni : hini Lendevenneg, hini Tadoù Jezuisted Kemper, hini an Doktor Breton eus Boulvriag, hini an Aotroù Even eus a Lan-dreger, hag hini an Aotroù Floc'h, person Louaneg. C'hwezhit an tan enno; ne vo ket diaes: daou pe dri c'hiload-plastik hag echu. Ma' Petra'soñje paotred ar Gouarnamant ?

Petra'soñje ar Gouarnamant? Petra'soñje an dud ? Ma' setu aze goulennoù diamzeriet, digoulzet, diezhomm hag hep an disterañ talvouddegezh.

Lakomp e ve skrivet an holl levrioù a gomzomp anezho en ur skritur dianav, en arouezlunioù ha neuze skrivet peil hag amzer'zo : 500 vloaz 800 vloaz, 2000 bloaz. Kerkent burzet-mat ouzh n'eus forzh piv tostast, galvet gouizieien ar bed-holl da filmañ, da vikrofilmañ, da studiañ, da advoulañ ar skridoù brezhonek-se eus an amzer dremenet. Hag hep mar ebet, staget an anv a dorfedour ouzh neb a gredfe lakaat e zorn disakr war ar binvidigezh-se.

Pec'hed eo neuze, a lavero darn, pa n'emañ ket al Lennegezh Vrezhonek evel traoù fosilaet an amzer aet e-biou, pec'hed eo n'emañ ket evel lennegezh-vein an Ejipt kozh. D'un dra bennak e talvezfe neuze. Ya, met studioù marv, war-dro traoù marv ha diriskl e vefe ar studioù a rafed, ha dre-se kalz nebutoc'h a dalvoudgezh dezho eget studioù graet gant tud vev da vegañ o spered.

Bremañ avat, e weler skleer peseurt respont ober d'ar goulennoù eus: brasoc'h torfed ez eo dispenn ha drailhañ traoù a servij d'an dud vev eget fontañ traoù ha n'o deus priz dreist-ordinal nemet evit gouizieien, istorourien, furcherion dismantraoù ha kozhknilhaù.

Met ma komzan eus al Levraouegoù pinvidik a-us, ez eo evit diskouez nerzh spered ar Vretoned o deus gouezet, hep difoetision skoazell ebet : na Skol na Gouarnamant dastum an Teñzor-se a fuzez hag a Quiziegezh !

Arabat luziañ an traoù. Gwir am eus, evel den, da gaout skolioù lec'h ma vo desket din anaout an traoù-se, bezañ gouest d'o lenn gouest d'o barnañ, da bouezañ o zalvoudegezh. Ha n'em eus ket ar skolioù-se em servij ha c'hwi eo a zo ho karg, a zo ho tever pourchas anezho. Ur gwir naturel eo, ur gwir diazoz, ur gwir stag ouzh natur mab-den. Brasoc'h torfed, hep mar ebet, ez eo chom hep reiñ ar gwir-se d'ho sujidi eget plastikañ Levraouegoù hag a c'hell bezañ adkempennet hag adpourvezet da c'houde. A-benn ar fin, kaer'zo lavarout, un torfed enep ar spered ez eo kement-se. Un torfed enep an Den.

Eno emañ gwir abeg hor stourm war dachenn Hor Bro hag Hor Sevenadur : gwazh e se d'ar re na gomprenont ket. Ar Spered zoken a zo kalz a-us d'ar C'horf, ha marteze ec'h eo ankounac'haet kement-se re alies gant ar re a labour evit Breizh.

DIWAR-BENN NIVERENN 30 BARR-HEOL
(meurzh)

Setu amañ un niverenn dev 56 pajenn enni ha boued e-leizh. Ur welladenn ivez eo ar golo kartofs. Pennad digeriñ Klerg a zo fur : Doujañs d'an den dirak an Deknikelezh. Personelezh an den a rank bezañ diazez pep tra. Setu un dra a ziñsoñj ar gouarnamant gall hag ivez alies hor politikerien vreizhat. Gant ma vo savet labouradegoù e vint laouen, ne sellont pe ne welont ket pelloc'h. Ne reont ket kalz a forzh pelec'h e vint savet na gant piv na petra'vo. Doujañs d'an den ha d'ar breizhad! Kêout ijinerezh (labour ha bara) ha "bevañ" evel loened e-kreiz tiez duet, moged, trouz ha c'hwez fall n'eo mui ur vuhez den. Gant se ez a kuit ivez hor sevenadurezh hag hon ene. Petra'chomo eus ar vro vrezhonek etre L'annuon ha Plouvezur(Bodoù) a-benn d'k vloaz amañ : ur c'hornad gallekaet penn-da-benn.

Ret eo stourm war an div dachenn war un dro hag aon am eus e va bet ankounac'haet an eil- hini ar spered, gant hor politikerien. Roet e vo boued d'ar c'horf ha lazhet an ene war un dro, a-wechoù gant Koned ar Vro.

(AL LIAMM Niv.91, Meurzh-Ebrel 1962)

P. BOURDELLEZ

BREZEL

AR FUZUILH HAG AR CHAPELED

Beleg, madelezhus, brogarour. An tri dorfed-se a oa da damall dezhañ. Setu perak p'edo o pignat gant ar c'hrav en ur lavarout e chapeled, e voe lazhet a-dennou-fuzuilh...Miziv c'hoazh, pa glevont e anv, e tretlatont

Digompren ha dilavar e chom ar c'hristen dirak kement all. Rak ma komzer kalz eus ar Gomonisted, ne gomzer ket nemeur eus ar gelennadurezh komunist... Keñver ouzh keñver gant ar gelennadurezh kristen setu amañ un deverrañ anezhi.

1

DOUE

Evito n'eus Doue ebet. N'eus netra nemet " an Danvez " -Penaos, amezoc'h, en dije eta ijinet an den az eus un Doue ? " Evel-hen : An den a wech all, e kreiz ar skorneier, an naon, al loened gouez... en deus bet aon, hag en deus anvet ar spont-se : " Doue " Doue eo lesanv ar Spont

Gwellañ respont a c'hellomp ober war se eo adlenn pajenn gentañ ar Skritur Sakr : Doue o krouiñ pep tra, hag an holl draoù krouet a oa mat, ha Doue o roas d'an den. Ha goude bezañ roet dezhañ an holl draoù mat-se, e krouas ar vaouez, hag e krouas ar Garantez etrezo o-daou - an donezon kaerañ, skeudenn Karantez Doue- Ar Spont evat, kenkoulz hag ar Marv, n'int diwanet nemet war deil ar pec'hed.

Ur respont kaeroc'h c'hoazh a zo en Avial : pa baras an Eil Ferson eus an Dreinded e-touez an dud, n'eo ket an dud a spontas dirazañ : Jezuz, e liorz an Olived hag ouzh ar Groaz eo a spontas dirak fallagriezh an den.

Doue n'eo ket Spont. Doue a zo Karantez.

2

A N D E N

Peogwir n'eus netra nemet Danvez, n'en deus an den ene ebet. Arabat eta bezañ chalet gant ar marv, ran an den a zo " danvez gouest da brederiañ" ha netra ken. Ar bugel o vervel etre divrec'h e vamm n'eo nemet danvez o vezañ adaozet dre gemmadurioù chimikel ". Eürusted an den n'hell bezañ sevenet nemet er bed-mañ... (Diwezhatoc'h avat, rak bremañ emamp e koulz fall : an dud a vremañ a rank bezañ "aberzhet " d'ar re a zeuio war o larc'h !)

Ar gelannadurezh kristen, hi, a lavar en deus an den un ene speredel, divarval. An den na vev ket hepken evit bezañ breinadur er bez, met evit lakaat buhez ar spered da ren zoken en e gorf badezet, evit Klod Doue hag un eürusted peurbet " Ar gelannadurezh a glaskan, eme un den hag a oa bet digristenet, a ranko bezañ mat zoken evit an den mac'hagnet, kamm pe vofis pe dort ". Setu perak eo distroet an den -se d'ar feiz kristen, warlene.

*

Anat eo ne rener ket an den en hevelep doare hervez ma seller outañ evel kant hanter-kant lur bouez a zanvez, pe evel Bugel Doue.

Rak-se, evit ar gomunisted, an den ne gont ket, n'en deus gwir ebet, n'eo nemet benveg ar Gostezenn. Homañ a c'hell " gwalc'hiñ dezhañ e empenn" ober dezhañ ' anzav e dorfedoù anezhañ e-unan", en em"zizober " dioutañ, h.a.

Evidomp, en deus pep den e dalvoudegezh. Ar bugel, adalek m'eo bet krouet e korf e vamm (ha zoken an den goude e varv, dre e destamant) en deus gwirioù. Ha Jezuz a zo marvet evit pep hini eus an dud " Gant gwad un Doue omp bet prenet ".

*

N'eus, emezo, na lezenn-goustiañs, na madelezh, na gwirionez, na truez, na bro evit an den (nemet an U R S S !)

N'eus pec'hed ebet, nemet :1) dihentañ diwar " Linenn ar Gostezenn " 2) C'hcantaat ar pezh n'o devez ket ar re all.

An druez evit an dud e poan n'eo nemet klammichezh (mat hepken hepken da implijout er prezegennoù evit dedennañ, davet ar Gostezenn, ar c'halonouigoù tener). Rak n'eus netra reizh, netra vat, netra wir

nemet ar pezh a sach'o an dud d'ar Gostezenn hag a gresko he galloud dre ar bed. Hag ar pezh a oa mat ha gwir dec'h (pa blije d'an dud) a vo marteze fall ha gaou arc'hoazh (pa ne blijo ken). Pa oa Hitler ha Stalin mignoned, e 1939, e nac'has Thorez difenn e vro. Met pa savas enebiezh etre an daou genseurt, e troas ar gomunisted o chupenn ruz evit diskouez an doubleür triliiv, hag e teuas Thorez da vezañ ministr gant de Gaulle. - Trotsky a zo bet un den meur; goude-se eo bet drouklazhet - Stalin a zo bet un doue da c'hortoz bezañ dizouaret - En amzer gentañ goude o Dispac'h e voe roet an douar d'ar v-Moujiked. Abaoe, emañ ar gouarnamant o klask hen difremmañ diganto - D'ar c'houlz-se ivez ne oa ar briedelezh, emezo, nemet giz kozh ar vourc'hizien", met pa o deus gwelet pegen dinerzhet e oa Rusia nevez gant an dizonestiz, e laka-jont an tiegezh da ziazez d'ar bed komunist, ha ne boltrder ken sputniker ebet nemet e dad hag e vamm (ha Khroutchev) a vefe en e gichen.

An den n'en deus gwir ebet, kennebeut, d'en em dommañ ouzh e vro. N'eus nemet ur vro evitañ an URSS. Eviti e tle labourat; dezhi e tle kas muiañ ma c'hello eus eostoù hag arc'hant e vro c'hanidik. Eviti e tle mervel. Kaeroc'h : e zevel eo lakaat dizurzh ha dispac'h en e vro-efñ, ma teuio an URSS da drec'hiñ warni aasoc'h a se.

Setu m'eo distroet an den d'ar bed kozh, a-raok donedigezh Hor Salver, pa n'en doa ar sklavour bro ebet nemet ti e vestr, koustiañs ebet nemet youl e vestr !

Er bed navez, er bed kristen, ez eus lezennoù evit ar goustiañs ha n'hell gouarnamant ebet o zerrif : deverioù, vertuzioù, ha deist-holl ar Feiz, an Esperañs, ar G rantez - Ken bras e vez an dizurzh lakaat er bed pa dorrer al lezennoù-se ken eo marvet Mab Doue war ar Groaz evit digoll e Dad. Ur Wirionez a zo ivez, pa wirionezioù, holl anezho bannoù skedus diwar Wirionded Doue. Darn anezho a zo a-vent gant spered an den hag e c'heller o anaout dre glask ha dre studi. Darn all a zo re uhel evitañ, met Doue en deus o diskleriet dezhañ.

Ha ma tle an den kazout pep krouadur, e tle, da gentañ, karout e nesañ, da lavarout eo tud e di ha tud e vro; ha dreist-holl ar re eo ar gwashañ o stad, ar re a zo izel evit ar gomunisted hag evit kement kostezenn a zo : an isproletourion.

3

P L A N E D E N N A N D E N E L E Z H

1* Karantez pe Gasoni ?

Hervez ar Gomonisted, ez eus, e rank bezañ e-touez an dud, enebiezh etre ar waskerien hag an dud wasket, evit ma reno dre ar bed " emgann ar renkadoù-tud". Pa zeuont da vezañ mistri war ur gêriadenn hag en em glev enni an dud, o c'hentañ pal a vez klask " gwaskerien", trenkañ, isañ, lakaat ar gasoni da virviñ hag an amezeien d'en em zebriñ. Dindan diktotouriezh ar Gostezenn (anvet diktotouriezh ar Bro-letoarelezh) eo ret, dre gaer pe dre heg " en em zizober diouzh "... "adkentaliañ"... "gwalc'hiñ o empenn" d'an "naered hudur", d'ar "gapi-talourien", d'an " dihentourien".

Ni, Kristenien, a oar omp " unan e Jezuz-Krist" dre ar Garantez. Ar pezh a reomp d'an den ezhommek, e ouzomp eo da Jezuz a reomp. Ar rouantelezh a garantez-se a vez savet tamm ha tamm, gant ar Bobl Kristen (anvet an Iliz) dre ar bedenn, an abostolerezh, ar binijenn unenat gant Pasion Jezuz. Abaoe daou vil bloaz'zo, hon eus "trec'het war an drouc dre forzh ober vad". " Ma skoer dit war ur jod, eme Hor Salver, astenn da jod all". Khroutchev avat, a lever " Pa skoer din war ur jod, e skoan-me betek frikañ ar penn !"

Trec'hiñ war ar gasoni, ha zanchoù hag he fuzennoù atomek, dre forzh kerantez... Un huñvra, eme darn'zo : " Pet divizionad-soudarded en deus ar Pab ?" eme Stalin. Ha kouslkoude eo evel-se hon eus trec'het a bep eil war Impalaerien Roma, war ar Vartbarod, war ar Brezelioù a Relijion ha war Zispac'h Bro-C'hall. N'eo ket evel just, gant kerantez klouar na gant pedennoù gwak !

Hag ar gomonisted a oar a-walc'h eo ar Garantez Kristen ar brasañ dañjer evito : n'eus nemet gwelout ar brezel krix a reont e Bro-Sina da skouer d'an dornedig kristenien a zo er vro-se beuzet e-touez kant-milionadoù a baganed. A-du gant Mao emañ an niver hag ar galloud. A-du gant ar gristenien n'eus nemet ar Garantez " Karout betek mervel". Trawalc'h eo.

War niverenn 12 " ESPRIT" (Kerzu 1961) paj.699 em eus lannet ar frazennoù-mañ diwar bluenn an Tad Kongar " Ret e vo, emezañ, kavout an tu da doullañ kaoz hervez sperec an Aviel... War un dachenn e c'heller en em glevout da genlabourat (gant ar varkselezh) : war aozidigezh ar peoc'h".

Souezhus eo al linennoù-se. Evit ar varksourien, an enebiezh (an dialektouriezh, emezo) eo lezenn an araokaat. Evit kas ar bed etrezek eürusted ar bed komunist, eo ret lakaat da ren dre holl an enebiezh, ar gasoni, dizemglev, ar brezel, an dispac'h. E diabarzh an Iliz da skouer, eo ret krouiñ strolladoù " Beleien ar Peoc'h" pe " Beleien Brogerourien", hag evel-se en em zisranno hag en em

zispenno an Iliz drezi hec'h-unan. Penaos eta e fell d'an Tad " aozañ ar peoc'h " gant tud na na glaskont nemet brezel ? Ur skouer ouzhpenn hag a ziskouez n'eo ket anavet an tezennoù komunist zoken gant ar spereodoù meur !

2. Lezenn al Labour.

An den, dindan ar Gomonisted, a dle "loeniñ e gorf dindan un urzhiadur-dir", evit aozañ eürusted a-benn an amzerioù da zont. " Neb na labour ket, n'eo ket dleet dezhañ debriñ", hervez ma ad-lavare Lenin war-lerc'h Sant Paol ! Rak evit ar gristenien ivez eo lezenn an den labourat. Met al lezenn-se a zo ul lezenn santel : dre al labour a peurc'hra an den an oberen: boulc'het gant Doue : **Krouidigezh ar Bed.**

3. Pal diwezhañ ar Bed.

An dud a vremañ, en URSS, a zo en "tunel" bountat, mac'het, flastret, evit ma'z aio an Denelezh etrezek ar penn all, devet an deiz mil gwech eürus ma tavio da vleuniañ ar gwir Ved Komunist. Ur pennedig brav a omzer a vo ret gortoz c'hoazh a-benn neuze : ret e vo da gentañ divoazañ holl dud an douar diouzh klask o med o-unan, ha deskiñ dezho klask mad an holl. Neuze na vo ken e renkadoù-tud, na vo ezhomm gouarnamant abot ken. Kement a vadoù a vo krouet ma vo an holl "war ar bern" - Ken maotr e vo an den d'ar bed ma ne vo ken na re yen, na re dumm, na re sec'h, na re c'hleb : an Natur a vo bet adkempennet.

-Biken, eme ar gristenien, ne vo peureürus an den war an douar. Ha pa vefe " war ar bern", e vo bepred o vroudañ en e greiz, ar pec'hed orijinel diouzh un tu, ha diouzh an tu all " Ankoù, tad an Anken", anken santel an den hag hen sav dreist al loened.

Hogen pa vo deut termen an amzerioù, adsavet ar c'horfoù da vev, ha barnet pep hini hervez e oberen, e vo pauniveret "Pobl ar Re Santel" e Nefnvoù nevez ha Douaroù Nevez ar Gwannvoud, ur Bed a Beoc'h hag a Sklerijenn, a vo speredekaet ennañ ar c'horfoù o-unan.

Emañ an amzer o tostaat ma renko pep hini ober e zibab. An neb e vefe c'hoazh nac'het goude bezañ lannet, ar pennad-mañ, an "**Tezennoù**", a c'hallio kerkoulz all ober e zibab hervez oberen an eil rummad hag egile : lakaat keñver-ouzh-keñver ar pezh a glevet an Ilizoù, an alioù roet d'ar gristenien, hag an urzhioù roet d'ar

2
AL LABOUR

Diwezhat en noz, e klevan trouz un droc'herez-dornerez o tont en-dro, en ur park e-kichen. Ken skeltr, ken sioul ez eo an noz ma tle an drouz-se bezañ klevat eus a-bell.

Evel deoulagad splann o toullañ an deñvalijenn hag o skleriañ hec'h hent dirazi emañ daou c'houlou an droc'herez-dornerez: nebeutoc'h a riskl a zo evel-se, evel just, hag e c'heller darc'hel gant al labour ken na vo echu troc'hañ ar parkad, pe da vihanañ ken na zeuio ar glizh da virout ouzh ar mekanik hag an dud da beurechuiñ.

Hag em eus komprenet gwell eget biskoazh an urzh roet gant Doue d'an dud kentañ : " Gonit a ra da vara diwar c'hwezenn da dal".

En amzer a ren ne vez komzet nemet eus ar re a zo o labourat en uzi-noù, e kêr : ar vicherourien, evit trueziñ cute, dre na vezont ket paeet a-walc'h, ha dre ma vezont lojet-fall. Mat eo a-dra-eur, ober lezennoù a-du gant ar vicherourien abalamour dezhe da gaout ur pae dereat, abalamour dezhe da vezañ diwallet diouzh pep riskl en o labour ha da gaout sikourioù pe gouezhont klañv ha pen erru un droug bennak gante. Un dra dispar ez eo pourchas tiez frank ha mat d'o lojañ int-i hag o ziegezhioù, ha reiñ dezho e-kerz an hañv amzer a-walc'h da gull-teat o labour ha poultr ha trouz ar c'hêrioù evit gallout mont war ar maez pe e lec'h all da nevesaat nerzh o c'horf hag o spered.

Met azebat ankounac'haat ar vicherourien diwar ar maez, ar re a vez graet anezhe : al labourerion-douar. Ha moarvat n'eus ket kemeret kement a breder hag a soursi gante, evel ma'z eus bet kemeret gant an dud a zo o chom e kêr. Daoust ma plij a-walc'h o buhez dezhe, daoust ma'z int stag a-walc'h c'hoazh ouzh o labour hag ouzh o douar, ez eo mat koulskoude soñjal e rafe lezennoù a-du gante kalz a blijadur dezhe.

* * *

Mekanikoù nevez a zo bet savet evit sikour an dud diwar ar maez en o labour. Mar befe ret, en amzer a ren, c'hoari gant binvioù a-seurt ma oa gwechall, ne chomfe den ebet ken da labourat douar : re start ha re zifonn e vefe al labour da gas war-raok, ha kozhet-mat an dud c'hoazh war ar marc'had er menajoù. An deiz a hiziv e plij d'an holl ober o labour diboniañ ha buanañ ma c'hellont. Hag ees eo kompren kement-se, dreist-holl da goulz an eost : rak a-wechoù ez eo diaes c'hoari gant an amzer.

Met e-skeud-se, ez eo deuet an den da vezañ un tamm sklavour ar mekanikoù nevez : noz-deiz, sul-gouel-pemdeiz, ez a ar mekanikoù bras da droc'hañ ha da zornañ en-dro, ha kement-se n'eo mui na reizh na mat.

...Ken ker ez eo an troc'herez-dornerezed ma rank ar berc'henned anezhe labourat muiañ ma c'hellont evit en em dennañ. Ret eo kontañ ivez gant ar c'hevezerzh pe an heligentañ etra paotred-ar-mekani-koù : ma n'houl ket unan donet diouzhtu d'ober al labour, e vez kemeret un all, ha kement-se a laka bec'h da seval ha trouz a-wechoù kement-se n'eo ket mat.

Pa vo intent vat etra paotred-ar-mekani-koù ha pe vo deuet stank a-walc'h ar mekanikoù-se, neuze o vo graet en traoù gant fur-nez, hep kaout ezhomm da lammat kement-se. Hag ar mekanikoù nevez o devezo graet ar garg a dle bezañ o hini : skañvaat labour an dud, reiñ tu dezhe da ziskuizañ un tamm, da gaout ivez ur pennad-ehan bep bloaz, en ur ger o dishualiañ hag o digabestrañ korf hag ane, ma o devezo muioc'h a amzer da soñjal en traoù uhel, da studiañ kuden- noù o micher, da glask an tu da ingaliñ gwelloc'h o labour, ha da zigeinañ da bediñ Doue.

(KOULMIG AR GINDI, 10^e a viz Eost 1958)

3
WAR-DU AR BARADOZ.

(E memor eus KLEIER BULIEN lakaet war DREDAN : C'hwevrer-Ebrel 1962)
Notenn evit lennerien VARR-HEOL: Er bloaz 1961, p'edo Bulien war-nes bezañ staget ouzh kêr-Lannuon, an devoa person Bulien goulennet ma vije lakaet ar c'hleier war-dredan, betekout na vije bet re ziaes ur wech aet da Lannuon. Asantet e voe d'ar goulenn, nemet ur farser bennak a lavaras e vije bet koulz d'ar person trokañ e wetur ouzh ur marc'h-houarn ha soursial ouzh ar c'hleier e-unan. Ac'hano e tivizas ar person aozañ ar pennadoù emañ da heul, gant ar soñj da genderc'hel ganto, ken na vije peurechu al labour en-dro d'ar c'hleier... Eru Erru 'oa nec'het a-walc'h ar person kozh a-benn ar fin, rak un tamm dale a voe gant al labourioù ha ret dezhañ lakaat e wenterezh da vont en-dro e-pad ar c'heit-se. Ul lodenn hepken eus ar pennadoù a gavor emañ.

(1)

PARABOLENN.

Aet e oa ar person kanton kuit goude bezañ nouet person kozh Bulien. Hag ar person kozh stad ennañ a santas evel ur vravadenn da gentañ, mat dambrest e santas ur pouez euzhus o waskañ e vruched : ne oa mui evit digeriñ e zeoulagad. Klask e reas sevel war e gostez : un huanadonn hepken a zeuas gentañ. Echu e oa : e ene distaget en un taol diouzh e gorf en em gevas e-kreiz ar gambr prest da vont 'lec'h ma vefe lavaret dezhañ monet. A drugarez Doue, e Ael mat a oa eno o c'hoazhin dousik ha karantezus outañ : " Deut d'am heul, emezañ, Aotrou Person, ma'ziskoueze an hent deoc'h. Hon-daou ez efomp

1.4
asamblez en ho gwetur-dre-oar. Primoc'h ha buanoc'h e refomp".

- Penaos, va Ael mat ? C'hwi'zo o farsal ! C'hwi'oar a-walc'h n'em eus mui gwetur-dre-dan ebet, hag e ran evel ar veleien vat ha santol : mont en bisiklet !
- Hastañ buan neuze tapout ho bisiklet. Me'vounto warnoc'h da grapat rak krapat 'zo d'ober. Sonn-mat eo ar c'h'hrav da sevel..."

Ar person a dapas e varc'h-houarn hag eñ a--c'haolliad warnañ. Tamm poan ebet o sevel war e varc'h. Gwir eo, ne oa mui e gorf kozh gantañ, ha skañv-skañv e oa e ene, souezhus... An Ael war e lerc'h a vounte warnañ gwech ha gwech all da reiñ un tamm lañs dezhañ da sevel war-du an oabl glas. Bez'e oa tud a-leizh o sevel war-du dor ar baradoz, darn e kirri-nij, darn e gweturioù eus ar c'haerañ, unanig bennak war e drcad, met nebeut. Ne oa nemet ar person kozh a gement a ranke c'hoari nant ur bisiklet. Met ken buan, ha zoken, evit lavarout ar wirionez, buanoc'h zoken e pigne war grec'h evit ar re a oa e kirri-nij. Ne voe ket pell oc'h erruout dirak dor Sant Per :

" Aotrou Sant Per, eme an Ael Gardian, degas a ran deoc'h person kozh Bulien-Kaoueneg-Lanvezeg. Ranket em eus bountañ warnañ da sevel betek amañ, rak e bisiklet emañ.

- Demat deoc'h, Aotrou Person, deuit war-raok hardizh. Plas a zo evidoc'h er baradoz. Met n'hellfet ket gwelout an Aotrou Doue hiziv. rak ur bern labour en deus. Gant se, mar keret, e chomfet amañ ganin e-pad an deiz da sellout ouzhin, da welout penaos e tegemeran an dud. Hag hiziv end-eeun, e tle, diouzh ar pezh a zo merket war va c'haieroù ur bern tud eus ho parrezioù dont da rentiñ kont eus o buhez. 'M eus aon'zo bec'h da vezañ !

- O ! Aotrou Sant Per ! Trugarez deoc'h evit an degemer mat a rit din a-berzh an Aotrou Doue. Met n'em eus c'hoant ebet da welout lenn o setañs d'an farrezianiz, betagout n'em befe trubuilh ha glac'har e-lec'h joa ha levenez..."

Skrapat a reas Sant Per kostez e benn : " Ya ! omzeañ, met se zo diaes da cheñch. Ar pezh a zo skrivet war va c'haieroù, a zo d'ober evel just...Penaos e rin neuze ? Gortozit, Aotrou Person, ez an da gas un taol-telefon d'an Aotrou Doue ha gwelet e vo penaos e vo kont...
... Alo ! alo ! Amañ an Aotrou Sant Per. Mar plij, Aotrou Doue. Un dra am eus da c'houlenn diganeoc'h. Evel ma ouzoc'h e tle ur bern tud eus Bulien-Kaoueneg-Lanvezeg dont amañ da glevout o setañs, met person kozh Bulien a zo o pevez erruout hag a gavfe diaes gwelout barn a dud. Daoust ha ne vefe ket tu da cheñch an traoù ?

- Geo ! geo ! Aotrou Sant Per. Reoù Vulien-Kaoueneg-Lanvezeg a zeuio warc'hoazh neuze, hag evel-se e c'hellho ar person kaezh-se gwelout penaos e vez barnet an dud amañ. Kompren a ran e kavfe **Kriz**

1.5
gwelout o dud barnet ha kondaonet da viken marteze. Met e lec'h all ez eo kont evel eno, hag ar pezh a vo da lavarout da dud ar parrezioù all, a zo war-bouez nebeut ar pezh a vefe da lavarout da Vulianiz, Kaouenegiz ha Lanvezegiz... Gra diouzh da wellañ d'ar person kozh, ken oa c'hellin hen degemer, en doare ma kavo berr an amzer ganit, ha ped anezhañ d'am digareziñ. Kenavo."

Mont a reas ar person kozh en e goarez, war ur gador-voulouz eus ar c'haerañ hag eus an doueñ e-kichen Sant Per, hag eno a reas an diskuizh da c'hortoz an dud d'erruout.

" Sellit, Aotrou Sant Per, eme person Bulien, erru 'zo unan eus a Lannuon !
- Eus a Lannuon ? eme Sant Per. N'oc'h ket fur a-walc'h 'm eus aon ! Rak hemañ n'eo ket muioc'h eus a Lannuon eget eus a lec'h all"
E gwirionez ne oa ket diaes en em dromplañ, rak an hini a oa o tont a oa ur meskl war e fas, e-giz ma vez gant kaiz a dud e Lannuon, da genver Meurzh al Lard ! Malarjez, metu !

Derc'hel a rae an den da dostaat, faeus, haotus, lorc'hus. Ul le-douet a laokse fuloret-ruz : un dorn diwelus en devoa diframmet e vaskl diwar e zremm, un dremm euzhus. Lugerniñ a rae daoulagad Sant Per hag e zaouarn a grene kement ma rankas tapout krog e bord an daol : " Foris canes ! Ar chas er-maez, emezañ. Piilpouz ! Te'soñje ganit e oa trawalc'h kaout un tamm livaj a relijion evit bezañ salvet. Daoust hag evit ur farsar e kemerez-tre da Zoue bet staget ouzh ar Groez. Ar Relijion n'eo ket ur sorc'henn. Un dra sirius eo servij Doue. Gwazh a se dit. Kae da gaout tad ar bilpoused hag en dud direlijion".

Spontet e oa ar person kozh o klevout ar gerioù-se o tont evel luc'hed ha kurun eus genoù Sant Per, met ken vil e oa penn egile, ken heugus ma ne oa ket evit trueziñ outañ. Ur pezh mallozh a voe klevet c'hoazh, met ne oa mui den ebet eno da vezañ gwelet.

E-pad ar c'heit-se e oa tostet ur vaouez en du, gwisket evel merc'hed Treger pa vezont en kañv : " Deuit war-raok, hep aon ebet, Itron vat, eme Sant Per." Ar vaouez a savas ha fenn : dour a oa war he daoulagad, met e don en daoulagad-se e lugerne karantez, madalzh ha joa, ha mouezh Sant Per a oa ken flour da glevout !

- Ya, ya ! deuit eta, intañvez pmour. N'it ket da vezañ nec'het gant ar vugalañ hoc'h eus lezet war ho lerc'h. O Savet hoc'h eus penn-penn-da-benn, hervez lezenn santel an Aotrou Doue. Daoust d'ho klac'har da heul marv ho pried n'hoc'h eus ket dilezet ho Toue, ha

biskoazh n'eo chomet goulllo ho plas dre ho faot, en oferenn da sul. Doue a soursio ouzh ar re a zo chomet war ho lerc'h, met c'hwi a ya da cheñch dilhad raktal. "Kerkerent e voe gwalet ur cheñchament souezhus enni: ur vaouez yaouank a oa deuet da vezañ, war he zro dilhad ken kaer ma oant evel ar joa bev hag ar sklerijenn lugernusañ. Evel ur steredenn a nijas war-du tron Doue.

Derc'hel a eure person kozh Bulien da heuliañ anezhi gant e zaou-lagad, ken na voe beuzet a-hont krec'h, e sklerijenn karantez Doue.

E-pad an amzer-se e oa tostaet ur vaouez all da doull dor ar Baradoz. Paket e oa en ur pezh mantell evel ar merc'had muzulma weler o foltredoù war ar c'hazetennoù, nemet e oa gwisket e glas-moug, ha kaer a oa sellout a-dreuz al lien glas-moug ivez, a c'holoe he fenn ne oa tu ebet da anavezout doare he bizaj, na da c'houzout pe e oa ur vaouez yaouank pe ur vaouez aet war an oad. Plegat e oa he fenn izel-izel, avel o c'hortoz: "Ya! gwelout mat a ran, eme Sant Per hag en devoa tapet krog en e gaier bras. Pe gentoc'h ne welan ket ar pezh a dlefen da welout. Un toulladig traoù a vank amañ... ha c'hoazh pa lavarin ervat n'eo ket traoù eo a vank, met tud..."

Ar person kozh a savas e skouarn. Sellout a reas talarek adarre ouzh ar vaouez gwisket en glas-moug, plegat izel he fenn o c'hdal barnedigezh Priñs an Ebestel: "Tud? Tud eo a vank? Ne gomprenan ket. Ne welan nemet unan amañ" a soñjas ar beleg, 'm eus son ez eo erru Sant Per pell ganti. Ne wel ket sklaeroc'h evidon-me!"

Sant Per avat, a reas ur sell dreist e lunedoù war-du ar person: -Aotrou Person, emezañ war un ton goapaer, gout a ouzon petra' dremen dre ho spered. Me'oar va micher eus ar c'hentañ, rak desket eo bet din gant an Hini a oar pep tra, a wel pep tra en deiz evel en d'valijenn duañ, a zalc'h soñje eus pep tra hag a oar reiñ da bep hini hervez ar pezh a verit, nag en tu-mañ nag en tu all d'ar muzul just..."

Sebadennet e chomas ar beleg o welout e lenne Sant Per en e spered ken aes, hag e tavas mik.

- C'hwi, Itron, a oar a-walc'h piv a vank amañ war va c'haier, kalz gwelloc'h eget pa oac'h en buhez, rak bremaik p'en deus hoc'h ene kuitet ho korf, ez oc'h bet sklerijennet gant sklerijenn an Aotrou Doue da anavezout ar vugale hoc'h eus bet serret dor ho kalon ha dor ho ti outo, pa ne felle ket deoc'h kaout kement se a charre ganto. Chafis hoc'h eus bet c'hoazh, rak ar seurt pec'hedoù n'int mat nemet da stoufañ ar galon ouzh gras Doue ha da deñvalaat ar feiz.

-Aotrou Sant Per, eme neuze ar vaouez keezh gent ur vouezh raouet ha trist, goulennet em eus pardon digent an Aotrou Doue evit va fec'hedoù-ma hag ar re ez on bet kaoz d'am fried d'ober. O c'hofesaet

am eus.

- Ya! pinienn start hoc'h eus graet, met pellec'h e teufec'h amañ gant dilhad evel ma'z eus war ho tro hag ur Vouezh raouet evel-se da gemerout lod e meuleudioù ar Sant hag an Aelez. Kit da beure-chuiñ ho pinienn el lec'h market evit-se, ha neuze pa vo echu ar binijenn-se e vo roet deoc'h ar eus-eured hag ur vouezh eus ar c'hwaskañ da ganañ gloar an Aotrou da viken. Kenavo, gant an esperañs a -berzh an Doue a varvas evidoc'h."

.....

(2)

.....

Erru e oa an abaradaez, ha krog e oa ar Person kozh da soñjal n'en devoa mui nemet un nozvezh da dremen, e kompagnunzh porzhier ar baradoz, kent tañva ar joa dreist-muzul da welout Doue fas-ouzh-fas.

Krog e oa dija ar stered en eil werlerc'h eben da zigeriñ o legadig melen, pa voe klevet trouz ur wetur-dre-dan, un drouz laosk a-walc'h, evel ma vez gant ar gweturioù daou-a-gezeg sitroen. Alum e oa gouleier ar wetur en kod, hag en ur dermal e teus war grec'h, gorrek-gorrek. Pa voe en em gavet dirak an nor e chomas a-sav hag e voe gwalet ur person kozh gant ur boned bask war e benn o tonet er-maez. Lemel a reas e voned da saludiñ hag e tiskouezas diaraog moal e benn:

- Erru 'oac'h, Aotrou Person, eme Sant Per dezhañ.

- Ya, erru 'oan, Aotrou Sant Per, eme ar beleg.

- Mat eo, eme Sant Per. Hir eo roll hoc'h oberoù mat hag ho meritoù; ul lec'h eus ar c'haerañ a zo miret deoc'h en Neñvoù. Deuit war-raok hardizh, ha lezit ho kwetur er-maez, rak n'eus ket ezhomm gweturioù amañ da vale dre alezioù santel Liorzh ar Baradoz. Ha neuze e vo roet deoc'h diwaskell hañvel ouzh re an Aelez deoc'h da vont ha da zont dre lec'h ma karfet. Hogen en noz-mañ em eus urzh digent an Aotrou Doue d'ho mirout amañ da zerc'hel kompagnunzh d'ar person kozh a zo amañ. Antreit eta hag azezit e-kichen ho kenvezur; berr e kevfet an noz ho-taou o tivizout diwar-benn ho puhez tremenet.

- Pelec'h avat, eme ar beleg nevez-deguezhet, amañ, mar plij, ar person kozh a gomzit din diwar e benn? Ur beleg a welan amañ azezet en ur gador-voulouz, met evit ur person kozh n'eo ket pell ac'hano. Ur beleg yaouank-flamm an hini eo."

Person kozh Bulien a zirollas da c'hoarzhin: "Evelkent! Setu aze un all c'hoazh! Kemerout ac'hano evit ur beleg yaouank." Ne zalc'has ket hiroc'h avat, met teurel ur sell war e zaouarn, ha tremen e zorn war e zremm... Biskoazh kement all..."

Abaos ma oa antreet er baradoz ha ma oa azezet e-kichen taol-skrivañ Sant Per, e sante evel ur vuhez nevez ennañ e-unan. Ne sante mui netra eus ar pezh en devoa roet kement a dregas dezhañ e-keit ha ma oa war an douar : droug-izili, poan-benn, poan-gof, poan-daoulagad. Evel pa vefe bet roet dezhañ ur galon yaouank dezhañ ha gwad nevez. Met pa oa en em lakaet da sellout outañ e-unan e vanas estlammet. E gwirionez e oa deuet da vezañ yaouank-yaouank. Yaouank da viken. Hag ar person all, dre ma tostae a wela o kemmañ stumm ha neuz ivez hag o vont war yaouankaat, e selloù o tont lemmoc'h ha bevoc'h en e benn, hag e vlev tro-war-dro d'e dal oc'h ober ur gurunenn a sklerijenn dezhañ.

- Demat, Aotrou Person ha kenveur ker, eme berson Bulien. Me'oa person teir barrez e-kichen Lannuon, en Breizh-Izel.

- Me, a eilgerias ar beleg all, a oa person en Aovergn. Ur vro disheñvel-met diouzh ho pro c'hwil, ur vro a veneziou tra ma'z eo hoc'h hini bro ar mor hag an amzer glouar. Ur vro varv va hini, pe hanter-varv, nebeut a relijion gant an dud. Ur vro o kouezhañ e pep kenivar. Nag a wech n'am eus ket garmet war va zud ouzh o gwelout ken diseblant ouzh traoù an Aotrou Doue, o labourat da sul, o ren ur vuhez dibater. Ha pemp parrez war va chouk, ha den ebet da zougen dorn din koulz lavarout, hag ar vugale o tec'hel diouzhin kerkent hag echu o faskoù ganto... Marteze em eus gonezet meritoù, evel ma lavar Sant Per, met 'm eus aon e vefe gwell ganin bezañ bet person e Breizh."

...Prest e oa person Bulien da respont dezhañ e oa ivez da "zebrif ha da evañ", e Breizh, ha ne dalveze ket mui ar vrud a oa bet graet dezhi. Met n'en devoa ket bet amzer da respont. Un dra dreist-ordinal a oa en em gavet gant Priñs an Ebestel : lezet en devoa e bluenn da gouezhañ war e daol-skrivañ hag e oa aet en e sav. E teñvalijenn an noz o kreskiñ e pare e zremm yaouank-yaouank, sonn e oa en e sav ha gant e viz e reas sin d'an daou veleg da devel ha da selacu.

* * *

Deuet e oa an noz, met un noz sklaer, gant ar stered o lugerniñ evel fubu-ten, en donder an oabl, war un tapiz-voulouz glas-teñval. An heol pell-pell-pell a oa evel ur rod-tan; al loar avel ur plad arc'hant nevez-puret, a nije goustadik-goustadik e-dreuz an amzer, hag en traoñ izel-izel e oa boull en douar gant mantell skañv-skañv ar c'houmoul en-dro dezhi...

N'eus netra war an douar-mañ a gement a c'hell reiñ da intent pegen kaer e oa ar stered hag ar bed a-bezh da welout eus krec'h, eus burev Sant Per. Gwelout e raed ar stered an eil disparti diouzh eben pe stok-ha-stok. Stered hag o deus kalz eus ar Vretoned ankounac'haet

o anv : ar Sterenn gant an daou Garr-Kamm hag etrezo ar Sarpant, neuze linennoù kamm-jilgamm Kasiopeia, ar Yar gant hec'h Evned bihan, ar Rastell, ar Rod-Arc'hant, ar C'hi bras gant e lagad c'hlas, ar C'hi bihan, ar Maen-Forn, an Daou Vreur Gevell, Kroaz ar C'hreisteiz... Ar planedennoù brudet...

A bep tu, o tont eus pevar c'horn ar bed, eus pep steredenn, eus pep planedenn e klevet muzik, ar muzik hag a sile joa ha dudi betek bouedenn ar galon hag an ene, 'an ma teup ar galon hag an ene da vezañ muzik o-unan. Ar bed a-bezh a oa muzik. Ma soñje gant an daou berson e vefe bet o eskern hag o c'horf ivez da vezañ muzik ma vefe bet o eskern hag o c'horf ganto, o-lec'h bezañ gant o ene hapken evel ma oant. Dindan kement stumm a zo, war gement ton e c'hell bezañ e klevet ur ganadeg a leunie ar bed-holl : Alleluia! Meulit an Aotrou Doue !

" Me' anavez unan hag a dle bezañ en e vleud amañ, a soñjas person Bulien: unan eus va farrezianiz gwechall, ur muziker eus ar c'haerañ : an Aotrou Gwazdoue, gant muzik dezhañ bremañ 'leizh e ene hag e spered !"

Sant Per ne fivfe tamm. Troet e oa e zaoulagad war-du boull an douar a weled o vralloñ war he flaen, an traoñ. Tostaat a reas an daou veleg sioulañ ha didrousañ ma c'helljont gant aon da zirenkañ an tonioù dudiñ a strinke eus pevar c'horn ar bed hag en em fuilha evel sklerijenn e bep tu... Ha sellout d'o zru.

Ar c'houmoul tanav-tanav hag a rae evel ur vantell-seiz d'an douar a voe gwelet o tigeriñ evel rideziou ha dre an toull digor ec'h en em ziskouezas un iliz vras, gant ur volz ront warni, evel un tog bras, hag ur pezh-pikol plasenn dirazi. Sac'hañ a aure ar gerioù e korzailhenn an daou veleg, hogen ar memes anv a oa war o spered : " Iliz Sant Per Rom !" Met ha difiñv e chome bepred Sant Per : un dra bennak a oa o c'hedal hep mar ebet...

A greiz-tout e voe gwelet ar blasenn goloet a dud. Ur prenestr a zigoras war fasadenn an iliz. Un tapiz-voulouz-ruz a voe lakeet a-istribilh ouzh barlenn ar prenestr ha neuze e voe gwelet un den kozh gwisket en gwenn, ur stol vras en e gerc'henn, o tont da doull ar prenestr. Hag e komzas. Latin a zeue gantañ, latin ledan skañv ha flour evel ma vez gant an Italianed hag e lavare : " Bezit fiziañs va bugaligoù, va dañvedigoù, ma eo ar Pastor Mat. Digor ez eo adalek bremañ ar C'honsil bras a nevesaio an Iliz Katolik. Pedit, bezit fiziañs an Aotrou Krist hag en labour ar Spered Santel..."

Sant Per a bare war e zremm holl levenez ar Spered Santel, e-keit ha ma pigne war-du bolz an oabl komzoù ar Pab... Met ne voe ket klevet hiroc'h : kleier an Iliz Veur a oa krog da vrallañ, hag ivez holl gleier holl ilizoù ha santualoù Roma, ha re ar bed kristen a-bezh.

Ma kavas da berson kozh Bulien ec'h anaveze e-touez mouezhioù an holl gleier-se mouezh kleier e deir barrez. Holl e kanent Alleluia! Met kement e vrallent, kement e vrallent, kement a drouz hag dourni a raent ma tigoras ar person e zaoulagad, daoulagad e gorf : kleier Bulien an hini a oa o seniñ klod an Aotrou Krist dasorc'het, ar Sul-fask-se eus ar bloaz 1961, hag o-unan e vrallent hag e sonent dre nerzh an Tredan.

N'EUS KEN.

```

O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O
O
O HOR PAJENN DIWEZHAÑ O
O
O O O O O O O O O O O

```

Bep pemzek deiz eta e vez graet ar GOULMIG : kalz a boan a vez kemeret a-wechoù evit nebut a dra ! Kalz amzer a ya a-wechoù da aozañ, da voulañ, da gas ar peder bajennad - skritur a vez graet anezho gant an dud " Journal ar Person" ha marteze n'eus ket daou zon war an douar a-bezh a gement a lenn anezho war o hed.

Gwir eo, skañv-skañv ez eo an danvez : ar Servijoù ? Ar re-seoù a vez lennet peurvuiañ; rak souezhus a-walc'h ez eo kement-mañ : an drovezh ma ne deo ket bet kerc'het ar journal, just an drovezh-se e oa servijoù a-bezh ar familh ! Met ar Servijoù n'eus enno tamm kelen-nadurezh ebet d'o heul, nemet marteze hol lakaat da soñjal e vo brav dimp, mar bez gwelot hon anv ur wech bennak e-touez an dud lakaet servijoù evito, pa vimo aet diwar an douar. Kement-se a ziskouezo ez eus chomet war hol leri'h tud ha n'o devo ket hon ankounac'haet mik.

Gwir eo ez eo skañv-skañv danvez ar journal : an eil pajenn a vez warni ur pennad hir-hir, laosk ha diaes a-walc'h gouzout da belec'h e fell d'ar skrivagner mont, ha skrivet en ur galleg na vez mui skrivet gent den ebet. (Etrezomp-ni : un dra fentus a-walc'h ez eo gwelout Bretoned o c'hoari gant galleg etrezo, e-lec'h ober gant o yezh, evel un dra naturel. Met evel-se emañ ar bed an deiz a hiziv c'hoazh !).

Bez'ez eus un dra avat, hag a vez lennet gant kement hini a gouezh e bav war ar GOULMIG " BUHEZ HON TEIR BARREZ". Poan a-walc'h

a vez o lenn, met dont a reer a-benn evelkent da gomoran ar brezhoneg-se skrivet gant un den kaezh hag un deus ankounac'haet ar peurrest da esa deskiñ ar yezh-se (unan eus ar re ziaesañ a zo er bed, war a lavar darn ha n'int ket deuet a-benn biskoazh d'ha deskiñ !). Met un tamm lorc'h a vez an un tad pe an ur vamm o welout anv o bugelig nevez-vadezet war ar gazetennig - lorc'h an ur plac'h yaouank pe ur paotr yaouank deuet da vezañ priedoù... C'hoant a zo ivez da welout anvioù an dud kaezh-se hag a zo aot da rentiñ-kont eus o buhez d'o Barner.

Skañv-skañv-skañv (teir gwech !!!) ar bajenn diwezhañ-holl. Honnezh avat, kaer a zo skrapat kostez ar penn, sechaf war ar blev, honnezh n'eus ket voien da gompren petra'vez warni... Meur a hini eus kostez Kaugeneg (ret lavarout an traoù evel m'emaint) hag o deus kuitaet ar vro evit mont d'ar Broioù-Krec'h da c'honit o buhez, a oa chomet batet - pa oa cheñchet person Kaugeneg ha lakaet hini Bulien da soursial eus o farrez kozh- o welout brezhoneg war ar GOULMIG- ha daou pe dri a skrivas da lavarout da skrivagner bras ar GOULMIG ne dalveze ket ar boan kas dezho ar journal ken, pa ne oant ket evit lenn. Ma ! Gwir eo ne gollent ket kalz a dra, rak skañv-skañv-skañv (teir gwech adarre !) e oa ar pezh a felle dezho diouerout.

Ha koulskoude, honnezh, ar bajenn diwezhañ-mañ, eo o blij da baotr bras ar GOULMIG ar muiañ-tout. Hag alies ez a ar bajenn diwezhañ-mañ da graskiñ goude ar gazetenn BARR-HEOL. Boued skañv, gant ma vo fichet mat, a zo gwell eget boued re bonner : setu endeeun ar pezh a gerfe ar GOULMIG ober. Met siwazh ! he rener a zo keginer fall.

(KOULMIG AR GINDI, 12 a viz Du 1961.)

Evit bezañ leal ha gwirion, dav anavez e vez graet a-wechoù un tem-mig kempenn d'ar pennadoù tannet eus ar GOULMIG a-raok o moulañ war BARR-HEOL: skridoù ar GOULMIG a vez savet a-droc'h-treñch, hep brouilhed na netra. Hogen evit ober gant tro-lavar Maodez Glanndour Lennegezh Kannadigoù-parrez e chomont atav. Ar pezh a zo ken sur all avat, eo n'eus Kannadig-parrez ebet e Breizh-Izel oc'h ober kement all. Siwazh ! (Evezhiadenn B-H)

```

O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O O

```

DEG UEZHIOU A VREMAÑ

BELGIA EN ARVAR

DA

DARZHAÑ ?

" Ne soursion ket eus an amzer dremenet, plediñ e ran gant an amzer da-zont; lezel a ran traoù an amzer dremenet gant ar re n'o deus mui netra da c'hedal !" Eval-se e plij d'an Aotrou Gilson displegañ e soñj ; anezhañ ministr yaouank aferioù-diabarzh Bro-Velgia, hag en deus war e dachenn-labour kalz a gudennoù o sellout ouz an darempredoù etre ar c'humuniezhoù flandrezat ha wallonat.

Dev eo koulskoude komz eus an amzer dremenet a-benn kompren perak ha penaos ez eus bet savet diaezamantoù e Belgia, en amzer a ren.

Reveulzi ar bloaz 1830 hag a grouas Bro-Velgia a oa bet renet gant ar vourc'hizien liberal gallegerion enep gouarnamant ha beli an Holland. Netra souezhus eta, ma roas ar Stad nevez d'ar galleg ar renk kentañ. A-hed an XIX-et kantved, bourc'hizien ha noblañsoù, e flandrez kouiz hag e Wallonia, a ree gant ar galleg. En rannvroioù an hanternoz avet, e talc'he ar bobl d'ober gant ar rannyezhoù flandrezek. Met ur wech tizhet ganto ar frankiz e-keñver labour ha kenwerzh, e fellas groñs d'ar vicherourion ha d'ar baizanted flandrezat, e dibenn ar c'hantved tremenet, kaout war an dro gant o gwirioù war dachenn ar gevredigezh ar gwir da gaout servijoù ar Gouarnamant en o yezh. Betek neuze, en arme hag el lezvarnioù e veze renet ha bernet ar Velgiz-se en ur yezh na gomprenent ket.

Tamm ha tamm e tizhas Flandreziz bezañ lakaet war an hevelep troad hag ar re all. Ret e voe gortoz koulskoude betek ar bloaz 1961 ha donedigezh ar gouarnamant Theo Lefevre-Paul Heeri Spaak evit ma vije degemeret e kuzulioù ar vinistred ar yezh flandrezek, hag hi komzet gant 60% eus Belgiz. Ha c'hoazh e vo kavet abeg en neventiz-se gant ar journalioù belgiat galleg, war zigarez ma ouie ar vinistred a orin flandrezat galleg, ha ma vije bet neuze un dra seven eus o ferzh komz ur yezh a gomprens o c'henvreudeur gallegerion.

Gwir eo e kompren ar vinistred flandrezat galleg, hogen ne reont ket gantañ ken aes hag o c'henvreudeur gallegerion a-vihanik (berroc'h o geriadur, diaesoc'h disac'hañ ar menozioù), en doare m'en em gaver bep tro, en holl guzuliadegoù dindan ar re all. Ar vinistred wallonet pe vrusellat ne gomzont ket holl flandrezeg, kement ha ken bihan ma'z

bet ezhomm da c'hopre jubennourien. Evel just, ur seurt doare-ober n'aesa ket an eskammadegoù menozioù, met piv'zo kaoz ? Ar vinistred flandrezek hag o deus c'hoant d'ober gant ar yezh a anavezont er vat ? Pe ar vinistred gallegerien ha na gomprenont ar yezh komzet gant an darnvuiañ eus o c'henvroiz ? Evit gwir, ar Flandrezidi hag a gemer ar boan da gomz galleg a vez goapaet alies gant Walloniz ha Brusselliz, daoust pe en abeg d'o zaol-mouezh germanek, daoust pe abalamour d'o frazennadurezh dizakuit ha d'o geriadur re zister. Yezh Belgiz gallegerion kennebont n'eo ket, na tost, ken disi-se, koulskoude.

Setu amañ fentigelloù, div anezho, hag o deus graet berzh nevez 'zo e-salioù-degemer kran Frusell ha Wallonia, hag a ziskouez penaos emañ ar bed :

- Gouzout a ouzoc'h peseurt kemma a zo etre ur Flandrezad hag ur plac'h gwerc'h ?
Respont : Ar Flandrezad a chom e-giz-se da viken...

- Un aotrou kozh gwenn e varv a zo o vale en ur wetur-dre-dan eus ar c'haerañ, bleniet gant ur- paotr-karr eus ar c'hwekañ. A-greiz-tout, e wel war ribl an hent ur paour-kaezh den o ouelañ dourek. Ober a ra d'ar blenier ehanañ, diskenn a ra ha gouenn digant an den kaezh : " Petra'c'hellan-me ober evidoc'h ?"

Hag ar c'hozh denig da hejañ e benn : " N'hell den ober seurt evidon !" hag e tiroll da ouelañ gwashoc'h eget biskozh.
- Eo! eo! eme an aotrou kozh, me 'zo berrek d'ober un dra ben-nak evidoc'h: me eo Doue an Tad !"

- Allez! eme ar paour-kaezh gwalleurus, me'zo Flandrezad." Hag an aotrou kozh barv gwenn da azezañ war ar c'hleuz e-kichen egile hag en em lakaat ivez da ouelañ asamblez gantañ... rak pa vezer Flandrezad, ac'hanta! n'eus NETRA d'ober !

Ar fentigelloù-se, na petra'ta, ne reont kement-se a blijadur da Flandreziz....

Goude ar brezel 1914-18, pa voe savet lezenn ar vot gant an holl, e welas ar vourc'hizien gallegerion o levezon o koazhañ, evel just, war dachenn ar politikerezh. E 1932, dindan atiz ar flandrezegerion deerañ, e voe ret d'ar Parlamant sozañ ul lezenn di-war-benn implij ar yezhoù e servijoù ar Gouarnamant. Ar re diderañ a oa a-du gant un divyezhegezh eus ar frankañ; hogen paotred ar flandrezeg e gavas mignoned war bankoù an deputeed wallonet ha na venent ket rediañ Belgiz gallegerien da zeskiñ galleg. A-benn ar fin e voe votet an Unyezhegezh : Flandrezeg e Bro-Flandrez, Galleg e Wallonia. Koulskoude rannvro Vrusell, lec'h ma komzer peurvuiañ

gant enezennadoù bras a flandrezegerien, e oa bet degemuret an divyezhegzh.

Hogen tra ma kozzhe Walloniz ha Bruselliz da c'henel bugale, e kreske ar boblañs da vat e-touez Flandreziz chomet kristen-mat. Er bloaz 1932 ma oa bepred eus Walloniz ha Bruselliz harpet gant bourc'hizien gallegerien Bro-Flandrez 50% eus poblañs Belgia, an deiz a hiziv ne dint mui nemet 40 %, ha c'hoazh a-boan.

En div Sambr emañ an tu-krañv gant ar gannaded flandrezat ha war greskiñ ez aio c'hoazh o nerzh pa vo ret ingaliñ niver an deputeed diouzh kont wirion ar boblañs. Un abeg a nac'hamant hag a zrouklevenez ez eo kement-se e Wallonia. Socialist eus an tu pellañ, evitañ da vezañ enep-komunist, Andreu Renard, paotr-araok ar sindikadoù e bro-Liej, taot gantañ un disouezhenn gant " difiñvusted ha digastad" ar vicherourien flandrezat (ar pezh a zo bet kaoz c'an diskrogadegoù-labour enep ar gouarnamant, e-kerz ar goañv tremenet, d'ober chat) en deus klasket tennañ ampled eus trubuilhoù Walloniz:

- Mar ne vez ket kemmet framadur unan Belgia, emezañ, e viot dalc'hmet dindan gazel-ge gant ar vroad-veleien-se m'eo Bro-Flandrez. E Wallonia ez eus ur muiañ-niver o c'hoantaat adrenkañ an traoù war dachenn ar arboellerezh hag ar gevredigezh, hogen ne c'hellont netra enep nerzh ar Flamanked sacherien-adrañv. An hent nemetañ da en em zibab ez eo ar Federaliezh."

An aon rak bezañ da vikan an niver-bihanañ en deus douget kalz a Walloniz da vont e Kostezenn-ar-Bohl Walloniat an Aotrou Anrev Renard. Efedusoc'h a se ez eo bet galv paotr-araok Liej en abeg d'an diaesterioù ekonomikel (n'heller ket komz eus enkadeg) o waskañ Bro-Wallonia.

Ha kement-mañ a zo un afer all. N'eus ket er vro a benndanveziou Dre-se ez eo bet savet al labouradegoù-treuzfurmiñ e traoñiennoù ar Sambr hag ar Meuz, anezho " arroudenn an ijinerezhioù " 'lec'h ma kaved ar gweleadoù-glaou-douar digoret a-holl-viskoazh.

Hogen diviet eo kalz gwiskadoù glaou, e Wallonia. Hag er c'hontrol el Limbourg flandrezat, en hanternoz da Liej ez eus bet kavet glaouegoù fonnue-tre, en donder a 100 metr bennak. Met, evel ma'z eo renet e gwirionez ar mengleuzioù glaou-douar gant Emglev Bras Belgia, o deus gallet ar gouarnamantoù, a drugarez d'un doare-kempouezañ, miret digor kalz a boullou-glaou, dizampled, e Wallonia : ar broduerien Limbourgat a ro o " dreist-gonidegezh" d'ur c'hef-kempouezañ.

E-giz-se eo deut Bro-Velgia da vezañ ur vro 'lec'h ma'z a war geraat an danvez-nerzh-labour. Ker ar glaou, uhel ar goproù, trawalc'h e oa kement-se da zougen ar vistri-labouradegoù da ober gant mazout da gas o uzinoù en-dro : ar pezh en deus gwaashaet stad fall kenwerzh ar glaou, diaesset c'hoazh muioc'h doare an ekonomiezh e Wallonia, o vezañ ma teu ar mazout dre vor, da lavarout eo, d'ar porzhioù-mor a Vro-Flandrez. Peogwir eo aet an danvez-nerzh-labour da Vro-Flandrez, e vez savet hiviziken, e Flandrez, nav labouradeg nevez diwar zek, hag eno c'hoazh e kaver a-fonn danvez-micherourien. Er c'hontrol, er Borinaj (Wallonia), gant ar mengleuzioù dizampletus, ez eus bet lakaet war ar beoz miliadoù micherourien. Neuze 'vat, ez eus bet eveshaet penaos ar Voriniz-se hag a glemme o vezañ ma oa serrret o mengleuzioù, a chome brav-mat o-unan hep diskonn enno : a-boan ma oa dek dre gant a vengleuzierion eus ar vro. An 90 % all a oa Italianed, Spagnoled, Norzh-Afrikaned, ha zoken...Flamanked : etre 40.000 hag 50.000 micherour flamank, en gwirionez, a gaver bemdez trenioù ha kirri-boutin da vont da labourat da Wallonia.

Hogen paotred ar poullou--glaou a c'honeze tremen 10.000 lur en arc'hant Belgia, ar miz; hag ar baotred-se a lakae da vezañ ur bobl a genwerhourien vihan, a lojerien, a ispisourien, a gigerien, a varc'hadourien bostoù-skingomz ha skinwel, a vekanikerien, h.a. hag ar re-mañ d'o zro a sikoure derec'hel bleunius stal kenwerzhourien all ha tud ar micherour-uhel.

Ma'z eus savet bec'h etre Flandreziz ha Walloniz ez eo eta evit abegoù ekonomikel hag ivez war an dro evit abegoù-poblañs. Arabat evelkent krediñ ez eo schu gant ar stal. E-touez renkadoù ar C'hos-tezennoù politikel kozh : Sosial-Kristen, Socialist, Liberal (deut da vezañ bremañ Kostezenn evit ar Frankiz hag an Araokeed) ez a war greskiñ mui-ouzh-mui an enebiezh ouzh paotred-araok taerañ ar Flamanked hag ar Wallonidi a-du gant ar Federaliezh. Ur Federaliezh hag a washafe dreist-holl evit Walloniz, stad an arboellerezh. Komzet ez eus bet eus " dispac'h ar re zidaer ". Niverus eo an dud a gred ne harpe ket Belgia ouzh un taol-esa Federaliezh. Hervez testeni an istor, e c'hell div gumuniezh o santout kaout an hevelep interest en em gevrediñ, hogen n'eus testeni ebet na skouer ebet eus ur Stad Unan o treiñ da Stad Kevredel, war zigorez ma wel ar strolladoù-tud a zo ouzh hec'h ober ez eo disheñval o interest : tarzhañ a rafe Belgia ha netra ken, ar pezh n'eus ket ur Belgiad diwar zek o c'hoantaat.

(diwar LE SPECTACLE DU MONDE, Ebrel 1962)

Pep pleg eus an hent a zispake dirazomp un doalenn nevez. El lec'hioù bravañ e tigouezhemp gant un doare leti (ostaleri) anvet "motel". Ar motel a ra berzh en Amerika abaoe meur a vloaz'zo. Bez' ez eus anezhañ ur c'horf-ti bras, ennañ ar gegin, ar selioù, ar burev h.a.. Ar c'hambroù avat a zo distag diouzh an ti-kreiz. Gwech e vezont bodot en ur savadur hir pe zaou, e stumm logelloù stok an eil ouzh e-bar. Gwech all - ar peurliesañ - e vezont lec'hiet a-regennadoù, distag avat an eil diouzh eben e-giz ken lies ti bihan. En daou zoare e vezont dirann diouzh ar savadur kreiz, pep logell oc'h ober he darempred dre an diavaez war-seun. E pep hini e kaver an holl aesterioù a vremañ eveljust hag er re gaerañ anezhe binvioù pellgomz skingomz ha skinwel. Plijout bras a ra se d'an dud rak frankiz o dev devez da vonet ha da zonet hep ober o zremen dre an ostaleri a-bezh, ezhomm ebet dezhe da bignañ gant dererioù pe da heuliañ trespasoù tefval a-benn tizhout o c'hambroù. En noz ne vezont ket direnket pe zihunet gant tousmac'h ha kalemarc'h ar gouskerien diwezhat. Kaeraet e vez diavaez al logelloù gant glazennoù ha palejadoù bleunñv. Un hentig teret pe draezhet a gas da bep logell : evel-se e c'heller monet bete toull-dor a gambr gant e garr-dre-dan mar kerer.

Meur a votel koant ha dedennus a weljomp a-hed hon beaj, hogen a-benn n'hon boa ruilhet e-pad un div eur bennak he redet a-hed dour-ugent lev pe war-dro en em gavjomp en ur c'hontre ledanoc'h an traoñ-iennoù ennañ hag uheloc'h ar menezioù ive. Rouesoc'h avat e teue ar c'hêriadennoù da vezañ. Dre ar vro e kammigelle ur stêr vras a-walc'h goloet a gefioù-gwez troc'het a dammoù tri pe bevar zroatda hed dezhe danvez-paper anezhe, o tiskenn war-du ar c'hreisteiz gant kas an dour. Skeiñ a rejomp neuze etrezek ar c'hornog dre un hent ledan c'hoazh met kildroennek, penn-da-benn dezhañ plegoù a-zev gwech war an tu dehoù, gwech war an tu kleiz, pouez-krec'h ha pouez-traoñ dibaouez gantañ, ken na oamp gant an aon rak gwelout ur wetur all o tifl. dic'hortoz war he zu fall dirazomp. Brav a-walc'h dimp c'hoazh pa oa nevez-teret an hent-se. Graet roud ganimp a-pad un dek munud bennak, setu ma weljomp war hon tu kleiz ul lenn hir o'n em goll etrezek ar c'huzh-heol etre daou verez. Er c'hreisteiz e oa digoadet he ribl hag e verzemp tiez ha kenkizoù-hañv a-hed un aod gwenn he zraezh. Adalek neuze avat e fallas an traoù. Kenavo d'an ter-du. Ne oa mui nemet skoaselloù ha krenegelloù, mein ha poultr. Pa zegouezhe ur c'harr all ganimp e rankemp chom a-sav, hogozik, abalamour d'ar goumoulennad - poultr hon gronne. Ne welomp seurt. Gwir eo, war hon lerc'h ne veze ket bravoc'h d'an hini a glaske hon heuliañ pe dremen araozomp. Ur c'hard-eur, unan hir, e padas ar c'hoari-se. A-sav-taol, ha ni de - gouezhet neuze e beg ul lenn vras all war hon tu dehoù, setu ma'n em gavjomp adarre war an ter-du. Goude bezañ bet moldet evel ma'z oamp bet e soñje dimp e oamp o ruilhal war voulouz ! Boued "d'hon

"loen" neuze ha ni war-raok adarre gant herr ! Prestik goude e krogjomp da welout tiez a bep tu d'en hent, ar pezh a roe da c'huzout dimp e oamp o nesaet ouzh ur vourc'h bennak. E gwir, krapet ganimp ur c'havr sonn, setu ni war lein un dosenn. Diwarni e pare hon selioù war ur vro nevez. Ur gêriadenn a welomp en traoñ etre div lenn. An hini a oa en tu all dezhi a hañvale bezañ bras-divent ha kamdroisk : kas a ra he brec'hioù amañ hag a-hont e-touez an torgenoù, briata a ra begoù-douar, dougen a ra enezennoù ha war-gaout ur c'hreisteiz ez ae da guzhat a-dreñv menezioù. Glas-mor e oa dour al lennoù-se ha koadoù glas-du a wiske an tosennoù, ar runioù hag ar menezioù betek an dremm-wal nemet en izelenn a oa dindandomp hag enni ar gêriadenn gant hec'h iliz-prenn wenn, he ziez liesliv mistr, he bernioù koad - labour nevez-heskennet, ha farkeier hag he fradoù ma peure ane saout bihan-iskis da welout e-keñver diventelezh an doalenn-vro.

Ha ni bremañ war traoñ betek ar vourc'hig. Adalek eno avat e oa ken amtesis ar gartenn-heñchañ a oa ganimp ma rankjomp chom a-sav da c'houlenn pe dre lec'h e oa dimp monet da Lenn-ar-C'hlu-jiri. Evit gwir, echuiñ a ra an hent bras en ur c'hroazhent e-kreiz ar vourc'hig. Ac'hane e welomp tri hent-karr : unan a gas e ouzh-seun dirazomp war-du ar c'huzh-heol, an eil a oa trost da - gaout an hanternoz hag an trede a skoe etrezek ar c'hreisteiz. Karhentoù strizh ha poultrennek a oa anezhe. Ha ni nac'het.

E korn hini an hanternoz e oa ur pezh ti-koad livet e gwenn hag e gell-arvelen, leur-draoñ ha leur-laez dezhañ. An traoñ anezhañ a oa disheoliet gant ur baled o redek penn-da-benn d'an talbenn. Dindan ar baled-se e welod daou brenestr an ti-annez, un nor hag er c'horn, tost d'ar c'hroazhent, prenestr-diskouez ur stal. E-kichen an nor etre prenestroù an ti-annez, daou bikol penn karv-meur plouaset, pezhioù kernioù skourrek dezhe ha lakaet daoulagad-gwer enne.

Er stal e veze graet kenwerzh-pep-tra aval ma c'hoarvez ar peurvuiañ war ar maezioù en Amerika. Bez' e oa anezhi kigerez ha spiserez, hernajerez ha kerserez, gwastellerez hag armerez, stal-vutun ha stal-gelaouennoù ha me'oar-me, war un dro. Hag ezhomm ho pezh eus paper-lizher, aspirin, lunedoù pe ur voutailhig dour-orañjez ? Eno e vezit sur da gavout hervez ho c'hoant !

Diwezhatoc'h e klavimp ez oa perc'henn an ti-se maer ar barrez ha dezhañ kenwerzhioù all o'hoazh er vourc'h : ar c'hardi, an ti-forn h.a...!

Chom a rejomp a-sav enta dirak dor ar stal hag unan ac'hanomp a yeas da c'houlenn pehini e oa en hent da Lenn-ar-C'hlujiiri. Diskouezet e vos dimp gant ur paotr erru war an oad - an aotrou maer moarvat - an hent-karr o skeiñ war-du ar c'hreisteiz:

- N'hellit ket faziañ, emezañ. Dalc'hit da vonet ken n'arruot gant an dour. An hent n'a ket pelloc'h !

- Pegeit emañ al lenn ac'hann ?

- Teir lev. Kit, n'ho po ket a geuz !

Goude e drugarekaat ha ni da reiñ kentr d'hon c'hezeg. Ezhomm a oa d'o broudañ e gwirionez rak ar straedig, en tu-hont ma'z oa leun a skoaselloù, a rollec'hioù, a vein-ruilh hag a boult, a oa start, strizh ha kammigellek. Muioc'h eget biskoazh hon beze aon rak kavout ur skoilh disourpen bennak en ur c'horn-tro pe e beg ur c'hraev gant an erk ma veze a-blasoù. War ar marc'had e krape gant torgennoù sonn ma kave p en tu all d'o lein diribinoù ken sonn all. Stardet e veze ar "mekanik" neuze, m'hen lavar deoc'h.

Kerkent ha kuitaat ar gñriadenn ganimp en em gavjomp er c'hoad bras. Skourroù ar bezv gwenn, ar bezv melen, ar sapt, ar skav-gwrac'h, ar pin hag an tilh a rae ur volz c'hlas a-us d'hon pennoù. Gwech e treuzemp ur eklêreenn bet difraostet tregont vloaz'oa marteze ha dilezet bremañ. C'hoazh e welemp en he c'hreiz al lab oc'h ober neizh d'ar c'haouenned, an ti-prenn duet gant an amzer, ridezioù hanter-freget o tamzallañ e branestroù. Gwech all e ruilhemp a-hed ul loc'hig digenvez ha na oa nemet gwez war he nij, nij an evned pe red ar c'houmoul o'n em skeudenniñ enni. Degouezhout a reas ganimp treuziñ ul lec'h a oa bet gwastet gant brasañ enebour ar forest meur, an tangwall. Kefioù du-pod a oa en o sav evel divrec'hioù peñseidi o c'houlenn sikour. Re all gourvezet war an douar du ivez gant al ludu. Hag int bet gwez glas balc'h, bod d'an evn ha d'ar gwinver, skeud madezhus d'ar raden ha d'ar bleuñv gouez, n'oa ken anezhe nemet relegoù suilhet.

Goude un hanter-ecuzvezh ruilhal dre an hentig digompez a heuliemp ec'h errujomp e krec'h un dinaouig traezhek hag en traoñ anezhañ e skede dour ul lenn. Pelloc'h ne gase ket an hent.

*

E oamp enta dirak Lenn-ar-C'hlujiiri. E gwir, ne welemp nemet ul lodenn anezhi. Ur beg-douar war an tu kleiz e harze ouzhimp da gaoñt un alberz eus hec'h holl c'horread. Ha ni da ziskenn eus hon c'harr stad ennomp o c'hellout dic'hourdañ hon divhar. Souezhet-mik e

voemp gant an didrouz hon gronne. Ne veze torret nemet stañs ha stañs gant sutelladenn an evn-c'hwisteller er gwez-sapr en-dro dimp ha neuze ec'h adkouezhe ar sioulder meurdeuzus warnomp. Chom a rejomp ur pennad dilavar ha difiñv oc'h arvestiñ ouzh an dour sklaer a rae van d'en em goll dindan gourizad gwez glas-du ar ribl. Merzout a rejomp ur pezh baot arc'hlas ha gell, un trostad ment dezhi d'an nebeutañ o heoliañ war ur c'hef hanter-ziblusket war neuñv. Pa c'hoarvezas da unan ac'hanomp komz e voemp souezhet adarre o klevout an heklev oc'h adteurel e gomzoù meur a wech. Seblantout a rae an disterañ trouz tizhout meur a gilometrad er pellder.

E beg an hent, tost d'an dour, hon anavezet gwetur hon c'heneil. Hemañ en devoa lavaret dimp :

- Pan erruot, n'ho po nemet kornial hag e klevin. Mont a rin d'ho kerc'hat gant va bag plat paneogwir n'eus hent ebet da gas bete va zachenn !

Ha ni enta da gornial. Kavout a reas dimp e oamp o lakaat ar vro a-bezh da dregerniñ. Hogen hep dale e teuas a-ziabell betek ennomp fraoñv ur gefluskerez diavaez-bourzh. E oa Alberz o tonet d'hon c'hê. Ne oamp ket faziet. Un toullad munutenoù goude ha ni o welout ur vagig gwenn ha ruz o tflukañ eus a-dreñv ar beg - douar en ur fregañ a-herr dour al lenn. N'hon boe tamm poan ebet oc'h anavezout hon mignon krog er barr-stur en e sav, diskabell, e gorn-butun berr en e c'honoù, gwisket gantañ ur gorfenn-stamm c'hell hag ur bragom lien glas. Erru ur c'hant metra bennak diouzh an aod e lazhas e "sardonenn" hag e lezas e vag da zonet gouestadik d'ober un ehan war an traezh melen-kouevr en hon c'hichen.

- Oc'ho, eme Alberz en ur lammat war ar sec'h, deuet oc'h 'ho-c'hwec'h ? Plijadur e ra se din ! Ac'hañ, penaos emañ ar bed ?

Jourdon annañ evel kustum hag eñ da astenn e zorn d'an ail pe egile ac'hanomp, o c'houlennata, oc'h estlammañ, o c'houz'hemennaouañ. A-vec'h hon boa amzer da respont ur ger bennak. A-vis-koazh ez eo bet Alberz evel-se, leun a verv, oberiant, laveant ha seder. E-lec'h m'en em gave e veze bapred c'hoarzh ha levanez. Er vuhez ne wele nemet nevezinti dre ma 'z ae ha kerzhout a rae dreizi evel un tourist en ur vro dianav, c'hoant dezhañ dalc'hmet da c'houzout petra a oa da zizoleiñ en tu all d'ar pezh a c'halle tizhout e lagad. Aes kompren, gant-se, pegen plijadurus e kavemp e gompagnuezh.

Ne voe ket pall amzer oc'h urzhiañ hon treizh.

- Div dro a rankimp ober, emezañ. Da gentañ e teuy pevar

ganin hag en eil tro e kemerin an daou ziwzhañ ac'hanoc'h hag ho pakadoù.

Diouzh e lavar e voe graet. Lezel a rejomp hor c'harr e-tal e hini ha setu kaset tud ha pakadoù d'ar penn all d'al lenn. E-pad hon pennad-bageal ne wlemp tu ha tu nemet gwez glas-teñval o koach ar c'hlan. Roud ebet a zorn mab-den neblec'h. Dishegar ha digevannezus e seblante ar ribl bezañ ha kaer dimp klask gant hor selloù ul lec'h digor, ne verzemp seurt. E-kreiz ar ouezeri e oamp. Ma santemp un doare from en hon c'hreiz dirak un arvest dianav - krenn d'hon daoulagad Europiz.

Hag unan ac'hanomp da c'houlenn digant Alberz :

- Daoust da belec'h ez out ouzh hon c'has ?

- War-du ar reter ouzh-eeun dimp, a respontas-efñ ken dise-blant ha tra.

Ha gant e viz-yod e tiskoueze ar ribl teñval ur c'hard-lev diouzhimp c'hoazh. Digeriñ a rejomp hon "brinikenoù" war-du ar reter, gouez dezhañ. Ne wlemp netra nemet linennad ar gwez a-rez an dour. Toull ebet, war a hañvale dimp, ne oa evit lezel fri ar vag da stekiñ ouzh an douar. Padal, di e oamp o vonet, tizh warnomp ar "sardonenn" o frañval ingal hag an dour o vourboulhat war hon lerc'h.

Un nebeut munutennoù diwezhatoc'h e tostaemp ouzh an eod. Pa voemp erru un ugent metra bennak diouti ha ni o welout un toull, ur riboul graet gant ar vouc'hal er gwern a guzhe an douar ouzhimp. Lazhet en devoa Alberz e gefluskerez ur pennad e oa. Eeunañ a reas fri ar vag war-geout ar riboul-se ha ni da vonet war-bouez hon lañs dreizañ betek un oufig traezh. Lammata rejomp war ar ribl ha dilestrañ hon pakadoù.

- N'hoc'h eus ket da zispakañ ho traoù amañ, eme Alberz o welout unan ac'hanomp - atav mainaoniet hannezh - o firobouchal en ur sac'h. Deuit bete va c'habanell : eno e kavot ar pezh ho po ezhomm da aozañ merenn, hag, ouzhpenn, un daol ha kadorioù.

Hag efñ arak dimp dre un tamm gwenodenn o krapat etre ar gwez ken ne zegouezhjomp war un dosenn vihan, un den metrad bennak uheloc'h eget gorre al lenn ha diskaret ar c'hoad diwarni d'ober ur frankizenn.

E-kreiz homañ en devoa Alberz savet e gabanell. N'en devoa ket graet anezhi gant kefiou-gwez evel ma ra ar forestourien : re a labour hag a skuizhder, a lavare, a vez o troc'hañ, o tibluskañ,

o heskennet. Degaset en devoa gant e vag kebridoù, plunk, follennoù "isorel", ur prenestr, un nor ha paper tarduet bet preret gantañ er gêriadenn ha charreet dezhañ bete penn an hent. Gante en devoa strujet ul lochenn garrezek a bevar metrad led war gemant all a hed, un doenn blat un tammig war zinaou warni, ur gwiskad livaj gwenn diabarzh ha diavaez, ha mat pell'zo. Setu kastell-hañv ar paotr !

Ur gwale-pleg, un daol, keder ha zoken un dommerez-voued dre ezhenn-vutan a oa anezhe arrebouri hag aezamantoù ar c'hastell.

Merenniñ a rejomp holl a-gevret. Ur bannec'h sistr hon boa degaset ganimp, met da lakaat Alberz da latennat ne oa ket azhomm eus ar gwad-avaloù. Ne baouez ket hemañ da veuliñ dimp e damm tachenn, e lenn, ar c'horn-bro a-bezh, an hemoic'h hag ar pesketaerezh burzhudus a reer eno, an tarzh-deiz dudius a-raok ma tfluk an heol-sav dreist-kribennoù tosennoù ar reter, sioulder an abardaez ha na vez torret nemet gant beogadenn ar glesker-ejen. E lezel a raemp da zisklêriañ e drivliadoù dimp. Ken flour e komze ken na gavemp ket hir e gaoz.

Gouda merenn, ez eas darn ac'hanomp da besketa : a-hervez e oa, e Lenn-ar-C'hlujiri, ur bern dluzhed, brelled, meilhi-stêr, karped ha me'oar pet seurt all c'hoazh; gwel e voe gant darn monet da vageal; da zizolañ dre zour "domani" Alberz, o heuliañ ar baseoù, ar begoù-douar pe oc'h ober tro an enezennoù. Div stêr vihan, unan diwar ar c'huzh-heol, eben diwar an hanternoz, en em daole el lenn, homañ o'n em ziskargañ d'he zro dre ur froud herrek o redek war-du ar c'hreisteiz etre daou verezeg sonn a-walc'h. Un devezh heol lintrus e'oa. Glas-glas an daol, digoGabr-mik. Re domm ne oa ket c'hoazh, evel ma vez er vro-mañ adalek diwezhañ miz Mae. Nebeut a gelien d'hon hegasañ, dibaot fubuenn-flemm d'hon broudañ. Kaeroc'h amzer n'halljomp ket bezañ dibabet.

Da enderv ec'h eomp d'ober ur pennad-bale er c'hoad gouez, Alberz o kerzhout araozomp, ur vouc'helig gantañ an e zorn evit divleñchañ ar gwez ha toullañ hent dimp e-lec'h ma'z oa re stank rouestlad ar brankoù. Ne gredemp ket pallaat diouzh an dour avat, abalamour d'ar riskl d'en em goll pe da gajout ouzh un arzh bennak, rak, e miz Mae, war hon boa klevet, e vez c'hoazh o re-vihan gant an arzhed hag arabat degouezhout fri-ouzh-fri gante : ker e c'hallfe koustout d'hon lâer.

E rannvro Menezioù St-Laorañs, evel ma reer eus ar c'hontra ma'z oamp ennañ, ez eo treut pe fall an douar nemet en un draoñenn bennak. Goloet e oa gwachall-gozh gant skornegoù hag o deus kaset,

a-hervez, an douar mat diwar an holl gontre betek rannvroioù pradek kreiz ar C'hanada. Ac'hene eo e kaver dre amañ ervadoù bili evel re hon aodoù e Breizh. Dre-holl, hogozik, ne gejer nemet ouzh pri, traezh pe un doare mailhdraezh damruz. War-benn ez eus ur gwiskad gell-du, anezhañ un donnenn en em stummet diwar ar gwez hag ar plant o vervel hag o vreinnañ a-hed an c'hantvedoù, ha pemzek pe ugent santimetrad tevder dezhañ hepken peurvuiañ. N'eo ket aet da daouarc'h a-walc'h c'hoazh. Se eo a zo kiriek e teu da vezañ kraz an danvez - taouarc'h-se pa vez amzer sec'h o ren. Neuze e ranker diwall diouzh an tan, rak ludu ho sigaretenn, ha pa na ve ken, a c'hell bezañ kaoz d'an tangwall da gregiñ ha da wastañ miliadoù a zevezhioù-arat mar-teze kent ma vo lazhet. Alies ne vez nemet ar glav a gement a vefe gouest da zonet a-benn anezhañ.

Guloet-holl eo ar vro gant ar forest, koulz lavarout. Pinvidi-gezh al lodenn-mañ eus ar C'hanada eo. Koulskoude, an traoñiennoù brasañ, gwelloc'h an douar enne, a zo bet digoret. Eno eo ez eo bet savet ar bourc'hioù hag ar c'hêrioù bihan ma veve an dud enne betek-hen diwar ar megañ-chatal ha diwar boaniañ er forest o tiskar gwez d'ober danvez-paper, danvez-tan pe koad-labour. Bremañ avat gant an douristed o tonet niverusoc'h-niverusañ adal ma tigor koulz ar pesketaerezh en nevez-amzer bete hini ar chase en diskar-amzer ha zoken, e meur a lec'h, e-pad ar goañv koit ha ma c'heller redak war ski, e vez degaset kalz a wellaennoù er vro hag e vez gwelloc'h ar bed gant an dud. Ouzhpenn-se e kavadenner e douar-kondon ar c'hontre divent-se metaloù a bep seurt a zo oc'h ober eus Bro-Gebek, mui-ouzh-mui, unan eus brasañ galloudegezhioù-ijinererezh ar bed.

Diouzh m'hon eus gallet gwelout o kentren en-dro da Lenn-ar-C'hluji, e hañval ar c'hoad bezañ stummet evel-hen eno : a-rez an dour, o gwirizioù ennañ, koulz lavarout, e kresk ur regennad gwern. dreñv dezhe, daou pe dri zroatad uheloc'h, amañ ar c'heir (sedroz) "tuya" o gwir anv hervez ar skiantourien. Alies e valiront a-us d'ar gwern kent sevel o fennoù dek pe bemzek metra en aer. Uheloc'h c'hoazh egete, setu ar bezv gwenn hag ar bezv melon, ar re-mañ meurdezusoc'h ha ledanoc'h eget ar re gentañ. En o masoù e kejer c'hoazh ouzh ur wezenn-geir bennak ha neuze e kroger da welout pin ha sapr. Stankaat a ra ar re-mañ bep ma'z aer war grac'h. Meur a seurt a zo anezhe : sapr gwenn, sapr ruz, gwez balzam h.a.. War an uhel ez eus un toullad gwez skav-gwrac'h. El lec'hioù ma vez izel a-walc'h ar ribl hon eus merzet ivez haleg ha gwez-tourmantin. Rouesoc'h eo ar gouennoù all, tilh (oulm), onn pe vrous-gwez ha n'on ket evit lakaat un anv warne.

* * *

Ma, plijadurus ha dudius e voe an devezh evidomp holl ha d'abardaez pa voe deuet ar c'houlz da gimiadif diouzh hon c'heneil Alberz e oa kerse ganimp pa ne c'hellomp ket chom da dremen un devezh all er c'horn dihuedus-se.

- Mar plij kement-se " va lenn " deoc'h, a zisklêrias Alberz neuze, grit evel-don-ma: prenit un dachenn a-kichen va hini. Ho sikour a rin da sevel ur gabenell hag en doare-se hon bo tro d'en em gavout alies amañ e-kerz an hañv, holl a-gavret.

Ac'hanta, evel m'en devoa lavaret, hon eus graet. Hep tamm keuz abet, er c'hontrol, rak eveltañ hon eus gallet taffva boemerezh tarzh an deiz war al lenn, heuliañ d'ar roañv, d'ar poent ma sav ul lata-renn danav diwar an dour, ar gwazi-gouez hag o evned o neual di didrubuilh pell diouzh ar raoskleg m'emañ kuzhet o neizh anni. Meur a wech hon eus gallet arvestiñ ouzh nij ponner ar gerc'heiz vras. War greiz an deiz, evel da zegas dimp an añvor eus ur vro bell garet, e teue da basketa nepell diouzhimp div ouelanenn ha na oamp ket e sell da gabout eno.

Da enderv, pa goachemp diouzh bennoù grizias an heol e skeud ar gwez-keir e veze gwifvered o troiellañ en-dro dimp en ur griel konnaret ha skiltrus evit da reiñ da c'houzout e tirenkemp anezhe, oc'h aloubiñ o zachenn evel ma raemp. Un deiz m'hon boa ranket monet d'ar gêriadenn davit boued ha diankajoù all gant hon gwetur e voe ret dimp chom a-sav da lezel un torkad-klujiri da dreuziñ an hent war o hañvig. Meur a dro e c'hoarvezas ganimp gwelout yourc'hed. Goude ur selladenn souezhet ouzhimp e tec'hent d'ar red. Alies ivez o vale, e souprenemp gedon war o ched.

Met d'abardaez ha dreist-holl diouzh an noz eo e tihune ar c'hoad. A-hed an eod neuze e tapemp merzout an diskeud eus gwizoned (vizoned) o redak, eus broc'hed-gwalc'her o'n em silañ dindan ar gwern, eus hac'hed-dreinek o voueta pe eus avanked o neual ouzh skleur al loar en ur dresañ ur pezh lizherenn " V " hag a graske war o lerc'h bep ma'z aent war-raok.

Fromet omp bet ur wech o klevout er pellder, war-dro teir eur diouzh ar beure, yudadenn skrijus bleiz ar c'hoadoù (timberwolf), ur pezh ki gell anezhañ, uhel war e bavioù, treut ha moan e vruched.

Gwech abet n'hon eus gwelet an alberz eus an "original", ur c'harv-meur brasoc'h eget ur marc'h. Klevet hon eus e vlejadenn avat da strink an deiz en un traoñienn bell.

YEC'HED AR VRO

DERIADENNOU
Hegredik
diwar-benn
AN ALKOOL

Petra a c'hell ur Breizhad divroet lavarout diwar-benn an al-alkool e Breizh, nemet kinnig d'e genvroiz un tamm eus e skiant - prenet, gonezet gantañ er broioù-krec'h ?

Ar vro ma'z on deuet da labourat enni, a zo ken tizhet hag hon hini gant an alkoolegezh, ha deuet on da blediñ un tamm bennak gant ar stourm enep d'ar c'hleñved-se, dre vicher, hag ivez, hep gouzout din marteze, dre'n eñvor eus va bro.

Graet e vez prezegennoù, diskouezet filmoù. Warlene hor boa aozet, e-pad un degad-devezhioù, ur gwir vision, gant traktoù, e skritelloù, filmoù, testenioù everien bareet.

Ne guzhan ket ouzh an dud en-dro din avat, e plijfe gwelloc'h ganin ren al labour-se evit mad va c'henvroiz...Hervez pennad an Aotrou Troal en Niv.24 B.H, e ra paotred ar Groaz Aour labour efedus (e brezhonag ha tout), met oberenn an everien bareet ne deo nemet ul lodenn eus al labour.

An ALKOOLEGEZH a zo anezhi un dachenn da zifraostañ hag a c'hell bezañ strujus : kelennañ hor c'henvroiz, o lakaat da zigeriñ o daoulagad, mont da glask ar re glañv, o lakaat en ur greizenn evit o fareañ, o derc'hel da beurbareañ e-pad daou pe dri miz en un ti evit diglañvourien kent adkregiñ gant o buhez nevez, o degerout en ur vreuriñzh.

Studiadennoù, enklaskoù, a zo bet graet e-touez an dud a vor hag an dud diwar ar maez, hep dament peurvuiañ da bersonelezh hor bro. Lennet em eus avat, (Alcool ou Santé, 1959, Niv.38, paj.16), penaos danevell Medesinerzh al Labour, e Brest, evit ar bloavezh 1956 a veneg " Temz-gouenn ar Breizhad ", hag " Ezhomm digeriñ e galon, staget ouzh e zivarregezh d'hen ober ". Bez'e vefe, e-keñver an alkoool,- eme an danevell- un " emzalc'h keltiek ".

Mer dint Kelted, ha douget da evañ abalamour d'o zemy-spered,

perak chom hep ober ganto, hervez o ferzhioù o-unen, mat pe fall ?

Un arnodenn a zo bet kaset da benn warlene, n'eo ket e Penn-ar-Bed avat, met war hentoù departamant gall ar Finistère. Frouezhus eo bet, war an dachenn skiantel rik, dre m'he deus anataet e c'haller muzuliañ kementad an alkoool bet evet gant un den div eur a-raok, dre c'hwezhañ e korzenn ur benveg a-ratozh. Lezet eo bet ar brezhonag a-gostez, ha koulzhaoude, un tamm bruderezh, e yezh keltiek, a vije bet dereat, en degouezh-se.

Nevez'zo, e-kerz ur vodadeg eus kuzul hon departamant a-enep an alkoolegezh, ez oan en em gaset gant rener ar yaouankizoù hag ar sportoù er c'huzul "broadel", deuet da zegas dimp e venozioù. Edo o tont eus un droiad e Breizh. Gweladennet en doa dreist-holl ar skolioù-merdeadurezh, e Penn-ar-Bed hag er Morbihan. Goulennet am boa digantañ ha den ebet n'an defe kinniget dezhañ treiñ e brezhonag an traktoù, skritelloù, hag all.. " Nann avat, emezañ, " ar c'hontrol an hini eo. An Dimezall hag a zo e penn ar Bruderezh, er c'huzul broadel, he devoa endev kinniget moulañ traktoù ha skritel- loù e brezhonag, ha responet e oa bet dezhi gant Breizhiz ne dal- veze ket ar boan, dre ma oar an dud a-walc'h a c'halle, hiziv an deiz !".

Lakomp, betek gwelout. Met den ebet na nac'ho penaos ez a donoc'h donoc'h ar brezhonag er speredoù, dre ma vez komprenet gwelloc'h gant un darn vras eus an dud, zoken gant ar re a gav dezho e ouzont galleg mat.

Setu aze ur gelennadurezh da reiñ d'ar yaouankizoù, d'al labourerien-douar, d'al labourerien-epereid koulz ha d'ar vicherourien, d'an dud diwar ar maez, da gerviz, hag a vo c'hoazh roet e galleg. Hag ar brezhonag, ur wech ouzhpenn, a chomo e fri war ar glouedenn.

Daoust hag ar Vretoned ne vefent ket, anezho, evit kemer perzh er stourm a-enep ar walenn villiget ? N'eo ket a-walc'h gortoz ar silvidigezh digant ar re all. Ma'z omp da vezañ salvet, ra vo dre nerzh hor bro, hor yezh hag hor gouenn.

Ret eo dimp dizoleiñ ar gouenn, he studiañ, rektresañ diskoul- madurioù, ha dreist-holl en em ouestlañ er c'huzulioù enep-alkoolal, sevel is-kuzulioù, ar muiañ ar gwellañ, e pep kanton, pe zoken e pep parrez. Er c'huzulioù-se e tlefed gwelout brezhonagerien a bep rumm : kelennerien, servijerezh kavredadel, beleien, medesined, sindikadourien, stourmerien oberannoù ar feiz hag ar vro. Peurvuiañ

ez eus plas er c'huzulioù evit an holl youloù mat, rak diaes eo an dud da zibredañ !

Roll ar C'huzulioù Departamantel a zo bet embannet e-barzh " Alcool ou Santé ", 1959, niv. 37, gant o chomlec'hioù hag anvioù ar renerien.

Diouzh al labour a raint, ha diouzh m'en em zibabint, o devo tro da gnot skodoù digant ken lies kef a zo : Suretez Kevrededel, Kef an Armerzh, Kef ar Roadoù Tiegezhel, hag all..

O labour ? Kelennañ, distrujañ ar rakvarnioù kozh, ma'z eus kement anezho, dre ar skritell, an trakt, ar brezegenn; brudañ labour ar C'hendalc'hioù hag o mennadoù; aozañ diskouezadegoù da goulz ar foerioù; heuliañ ar studiadennoù skiantel, kevrededel, arboellouriezhel hag a sell ouzh an alcool; skignañ ar c'helleier. Da skouer ! emañ ministr an armeoù o paouez aotren ar velestrourien da reiñ chug-avaloù d'ar soudarded e-lec'h gwin. Ur skouezig all : konstrivedegoù evit bugale ar skolioù, war destennoù enep-alkoolek, a vez paset gant ar C'huzul Broadel.

Un oberenn a bouez ez eo soursial eus breuriezhoù everien bareet : pourchas dezho arc'hant evit o bruderezh, o bodadegoù, evit sikour an ezel-mañ-azel kouezhet er verrennez, o aliañ diwar-bann o c'hudennoù o-unan.

Bez'ez eus meur a vreuriezh : " Ar Groaz C'hlas " protestant, " Buhez Diaub " neptuek. Homeñ an hini eo a ya ar muiañ an-dro, er broioù digristen. An emsav-mañ, bet diwanet an Naoned, a zo anavezet dre ar Frañs a-bezh, a drugarez da dud evel Jermena Kampion, ur vreizh-uheliadez anezhi, hag he deus gouestlet ha buhez d'ar stoum. Met kenerzhusoc'h c'hoazh evidomp, Breizhiz, eo lann war VARR-HEOL (Niv. 24) e ra berzh en hor bro, breuriezh ar " Groaz Aour, a drugarez da gristenien hag o deus, evel Nouel Jakob, un dra bennak da lavarout e Brezhoneg, d'o c'henvroiz. An dud kalonek-se a zellez bezañ anavezet, heuliet ha skoazelliet.

Klasket em eus diskouez penaos, d'am meno, e vefe tu da dizhout ar palioù-se, hervez ar pezh am eus gwelet dre amañ.

E.ROPARZ
Mezeg, Bro-Arden

30.6.61.

*

(11 a viz Hêre 1962)

Re bouezus ez eo ar Sened-Iliz Meur da zont evit ma tevjeomp warnañ. Kalz eus hol lennerien o deus bet lennet ar pezh a verkimp amañ, hogen talvoudus e vo bepred meret en hor yezh hini pe hini eus ar c'hudennoù bras a glasko Emvod holl Eskibien ar Bed Katolik dirouestlañ da lekaat da splannañ ur wech ouzhpenn kelennadurezh an Iliz, hervez ezhommoù an amzer-o-ren, -da renkañ urzhiadur dia-veez an Abostolerezh ma vo efedusoc'h ha frouezhusoc'h, ar broioù kozh-kristenet evel dreist-holl er broioù nevez-kristenet ha nevez-savet da renk Stadoù politikel, - en ur ger da ziskouez ez eo ken barrek ar Gvredigezh savet gant an Aotrou Krist ha gwechall da sklerijennañ ar speredoù hag ar c'houstiañsoù ha da ledañ lezhoù war c'horre an douar.

Lavarat ez eus bet e oa deuet ar soñj da vodañ ar C'honsel -se d'ar Pab, en un taol, ar 25 a viz Genver 1959, a-vec'h pevar miz goude ma oa bet kurunet. Gwir eo e oa bet souzprenet ar Pab e-unan gant e gomzoù, evel pa vefent deuet war e vuzelloù en desped dezhañ diwar stiz ar Spered Santel; hogen ar soñj-se a oa o c'horif en e benn un tamm a oa, petra bennak n'en devoa c'hoazh divizet netra, na graet e venoz start. Bezet a vezo, luskat e oa an traoù war-raok, ha savet strolladoù-studi da brientiñ labour ar C'honsel Meur, evel da ziatredañ an hent. Strolladoù-studi a bep seurt evel just, o plediñ pep hini gant hini pe hini eus tachennoù an Iliz Katolik: feiz, buhez kristen, abostolerezh, laikelezh, gant ur sekretouriezh ouzhpenn evit Unvaniezh ar Gristenien. An holl studiadennoù o vezañ kaset d'ar Strollad-Kreiz,*pe d'ar Gomision-Greiz e-giz ma lavarar.

* Strollad-Kreiz. E latin bautin e leveront COMMISSIO CENTRALIS, e-giz displeger latinak ar Radio Vatikanat, hogen "pastred al Latin klasel" a skriv " Pontificium ac Primarium Consilium rebus Decumeni- ci Concilii apperandis ". E brezhoneg e c'heller lavarout KUZUL-KREIZ, mar bez c'hoant.

Raktresoù pe "skemaoù" a vez graet eus an danvez da studiañ, met eus holl "skemaoù"-se ne vo miret nemet ar pezh a vo bet dibabet gant ar Pab. Ne vefe tu ebet d'o studiañ holl e-kerz ur Sened Hollvedel, nemet, evel just, e c'hello al labourioù graet talvezout da c'houde da beurglokaat divizoù Tadoù ar C'honsil.

En ur dremen menegomp e vez graet al labour-se holl e Latin, hag e vo al Latin yezh ofisiel ar Sened. An deiz a hiziv ez eo koarhat-mat er bed-holl an anaoudegezh hag an implij eus al Latin evel yezh komzet, ha goulennet e oa bet ma vije kemeret skouer diwar ar Bodadegoù etrevroadel ha ma vije pourvezet ur servij-jubannerezh. N'eus ket bet asantet da gement-se, hogan ne vo ket strizh-strizh ar reolennoù war boent ar yezh.

Ar pezh a zo sur avat, eo e vo embannet e latin divizoù ar Sened-Meur: pep hini en er zibabo da c'houde gant-se, na petra'ta.

Kontañ a reer war 2800 bennak a eskibien, tadoù-abaded, pennoù-bras an Urzhioù-Meur leoned, ha n'eus ket ezhomm da lavarout ez eus ur bern traoù da renkañ : pourchas lojeiz, kempenn iliz ar sened hag all. Trawalc'h ez eo lenn ar c'haztennoù pemdeziek hag ar c'helaouennoù evit kaout keloù resis war gement-se. Diwar-benn ar stumm da votiñ, rentañ-kont ar bodadegoù... Ur c'helenner brudet a Vro-Alamagn a zo krog da reiñ kentelioù d'ur strollad berrskriverion me c'hellint berrskrivañ e latin prezegennoù hag emzivi-zoù Tadoù ar Sened-Meur.

Kent mont hiroc'h : peseurt ger resis implijañ e brezhoneg evit ar Sened-se ? Sened Hollvedel ? Sened-Meur ? Sened Ekumenek ? Konsil Bras ? N'ouzon ket. Bep sul o tigeriñ ar pron e lavaran e-touez ar mennadoù ez eomp da bediñ evito " Hag evit ar C'honsil bras da zont". Ober a raimp eta gant an holl c'herioù-se.

E-skeud ar Sened Hollvedel ez eus un dra hag a vo kemmet evit ar Broioù hag a reer anezho ar Broioù Latin: Italia, Bro-C'hall, Bro-Spagn. Da vihanañ evit Bro-C'hall ez eo boulc'het-mat ar gaoz hag erru pell a-walc'h an enklaskoù ; gwisket e vo ar veleien e-giz ar veleien saoz, e klerjiman. En Alamagn, Bro-Saoz, Iwerzhon, Amerika ez eo gwisket ar veleien gatolik hag ar bastored protestant gant bragoù hir, ur porpant du, ur c'holier roman. Kerkent ha ma vo aotreet en em wiskañ er stumm-se e c'hellit bezañ sur penaos an deiz-se pe an deiz war-lerc'h e vo beleien ar ger-veur Bariz o redek ruioù kêr, e beleg-saoz, hag ivez e kalz a lec'hioù all.

Kavet e vo iskis moarvat da gentañ, met ne vo ket pell an dud o kustumiñ : ar c'hiz da zougen ar soudanenn, a-ziavaez d'an iliz ha d'an ofisoù a zo deuet, a-hervez, d'en em ledañ e Bro-C'hall, hag e Breizh, abaoe ar Reveulzi-Vras, draist-holl abaoe ar bloavezhioù 1850.

Un dra souezhus a zo avat. Abaoe un toullad bloavezhioù ez eus krog ar veleien da leuskel o soudanenn, evit digarezioù skeñv a-wechoù. Unan eus kuraed Lannuon am eus klevet o lavarout kement-mañ ur wech (ha Lannuon a zo lec'hiet-mat evel ma ouzoc'h)."

- Gwechall, ha n'eus ket pell abaoe, e weled barnioù belaien o tremen hag o tistremen ker. An deiz a hiziv ne weler hini ebet ken koulz lavarout, e-kerz an haff !

Aesoc'h e vo marteze an dilhad nevez. Aesoc'h draist-holl d'ar re a zicheñs dezho mont da veajiñ d'ar broioù estren: Bro-Alamagn, Suis, Bro-Saoz, Broioù Keltiek: ar gelennerien war ar saoz-neg en hor skolejoù a oa kustum da gaout un abid-klere an a wiskent da vont da dremen un toullad sizhunioù da Vro-Saoz da wallaat o saozneg.

Evit pezh a sell an urzhioù leoned e vint laosket moarvat e-giz m'emsaint, gant eezamantoù bras da ober gant dilhad all, an degouezhioù dreist-ordinal. Dre-se e vo gallet komz bepred eus an tri rumad bugale da Sent Frañsez Asizi : Barv ha Pazh, Barv hep Pezh, na Pezh na Barv !

*

E-keñver ar Vuhez Kristen, ez eus kredennoù da lakeat da splannaat muioc'h-mui ha tezennoù faos da ziskar : ar Briedelezh, ar Genel-Bugale, ar Reolennañ-ar-Ganedigezhioù, An Eutanzia, Kudennoù ar c'hwec'hvet hag an navet gourc'hemenn, da skouer. An Iliz Katolik, evel just, n'he deus ket gortozet ar Sened-Meur kant disklariañ he soñjoù war gement-se: sklaer ha resis ez eo ha c'helennadurezh war ar pennoù-se, nemet mouszh en 2.800 kannad oc'h embann e-unan ar gredenn-se, kredenn an Iliz dre an douar a-bezh a roio dezhi un ton hag ur pouez dreist-ordinal.

E-keñver ar Feiz kristen avat, ez eo arabat bezañ engortoz da glavout diskleriadurioù bras. Rak ne vo ket Eil Sened Ekumenek ar Vatikan ur Sened o plediñ gant traoù ar Feiz hag an Deologiezh Dogmatek Katolik. Gouestlet e vo kantoc'h d'ar pezh a vez graet anezhañ ar Bastorelezh, met Pastorelezh en ur ster ledan-tre : doara ar parrozioù, stad ar veleien ha kalonnerzh an danvez-beloien, roll, karg ha labour an Eskobelezh, lidadurezh hag ofisoù an Iliz.

Diechu e oa chomet Sened Kentañ ar Vatikan, troc'het berr ma oa bet gant ar brezel etre Frañsizien ha Prusianed, e 1870. E-touezh ar "skemaoù" chomet war o c'hement all, hep bezañ studiet e oa roll ha karg an Eskibien, en Iliz. An 18 a viz Gouere 1870, en Iliz-Veur Sant Per, e-keit ha ma c'hoarie un tempest eus ar gwashañ er-maez ha ma stroñse bolz an Iliz-Veur gant an tarzhioù-kurun; e voe diskleriet gant Tadoù ar C'honsil difaziusted ar Pab, daoust da enebiezh meur a hini eus Eskibion Bro-C'hall. E-touezh an Eskibion c'halliken enep d'an diskleriadur-se edo an Aotroù David, eskob Sant-Brieg : ur c'hrogad hag a zo chomet brudet en istor an Eskopti-mañ a voe end-eeun etre an Eskob ha person va bro c'henidik, en Aotroù Chaloni Louail, person-kanton Plouvael, ha bet kelennet e kloerdi bras Sant-Brieg. Met en em lakaat da zanevellañ kement-se e vefe tec'hel re bell...

Mep mar ebet e voe an diskleriadur un taol a-berzh Provi-dañs Doue, nemet o reiñ ar pouez eus ar c'hentañ hag eus ar brasañ da Lez-Veur Roma ez eo taolet en amc'houloù un tamm roll an Eskibien, ha p'emañ o tigeriñ tachenoù nevez e abostolerezh ar broioù pell (Afrika hag Azia) e seblant an Iliz bezañ re roman e-lec'h bezañ hollvedel ha katolik. Tamallet e vez re aes, zoken gant katoliked ha tud-e-iliz, d'an Iliz bezañ re "gornogat", "re europat", mar kirit, hag e lavarar ez eo re bell tro-spered ar broadoù all evit gallout en em ober diouzh ar relijion gatolik. Marteze ez ankouez re penaos ar "Gomunistiezh" hec'h-unan, eviti d'ober berzh e broioù frank evel Sina, Bro-Indez hag all, a zo "kornogat" he spered ha savet gant tud stummet o empenn gant an doare-soñjal europat.

Ret eo d'erc'hel kont hag ober diouzh gizioù ar pobloù da avialañ, gizioù ha ne dint ket enep ar Feiz kristen na Lezennoù an Onestiz kristen. Da skouer, dre Azia a-bezh, ez eo sellet ar pokoù evel un dra mezhus, dizoare, hudur, evel merk an amou-rousted hudurañ. Hag hervez reolennoù al lidoù evit an Oferenn, e tle ar beleg pokat meur a wech e-kerz ar Sakrifis Santel, da relegoù ar Sent klozet er maen-sakr. Kompren a rit!! Se'ra un efed dispar war an dud !!!...Traoùigoù all (traoùigoù evidomp, rak evit Indeziz ha Sinaiz ne dint ket traoùigoù, pell ac'hano): un den enorus na dle ket bezañ diskabell, ret eo dezhañ kaout un dra bennak, un tog pe ur boned war e benn, ha setu perak o devoa goulennet gwechall an Tadoù Jezuisted digant ar Pab aotre da wiskañ bonedoù hir war o fenn evit ofisañ. Afer al lidoù sinaat a zo ivez da dostaat ouzh kement-se. Trouz a-walc'h a oa bet, evit ar Vadeziant, evit pezh a sell ouzh an tamm-halv pe grañch da lakaat war zivskouarn ha war fronelloù an danvez-kristen. Bremañ ez eo

torret ar c'hiz-se e pep lec'h. Arabat kemmeskiñ gizioù, forzh pe- gen kozh hag enorus ma c'hellont bezañ, gant ar Feiz kristen. Ezhomm ha deus feiz an dud da vezañ harpet, sterniet, bevaet gant gizioù ha lidoù diavaez, nemet evel just ez eo ar feiz a dremen da gentañ.

ooo

Bez'ez eus un dra avat, hag a c'hallfe (hag en devo hep mar ebet !) kouñt vl levezon eus ar brasañ war amzer-da-zont hor yezh: an implij brasoc'h-brasañ eus ar yezh-pobl el Liderezh. Pa lavaran yezh-pobl e fell din komz eus ar yezhoù komzet, forzh pere ez int: yezhoù bras pe yezhoù bihan, yezhoù ar stadoù bras pe yezhoù ar broadelezhioù bihan.

Evit pezh a sell an ober gant ar yezh-pobl el lidoù-sakr, ro- omp da gentañ un nebeut sifroù umbannet war " Gannadig Eskopti Pariz" (13 a viz Genver 1962). Iliz Sant Jakez (456 respont war an dro, 76% o sellout ouzh al Liderezh, 29 a-du gant al Latin ha 89 enep). Iliz Ivri (67 respont) : 33% evit an implij eus ar yezh-pobl.

Setu bremañ, hervez "la DOCUMENTATION CATHOLIQUE", (1.IV.1962, paj. 438) ar pezh o deus bet goulennet Kanadianed dre berzh an Tad Marsel DUBOIS. 134 lizher en deus resevet an Tad, kent mont da Rom da genlabourat, evel kuzulier e Komision al Liderezh o prientiñ ar Sened Ekumenek, 124 a berzh beleien nann-leaned, 7 a berzh reli- jiuze pe leanezed, ha 3 a-berzh laiked. (Kement ha reiñ da lenne- rion Varr-Heol un dremseud eus ar mennadoù kinniget da Gomision al Liderezh e troomp an aroudad war e hed):

1* Ma vo an oferenn penn-da-benn (da vihanañ ar pezh a sell ouzh Komzoù ar Skritur) e yezh ar bobl, en doare ma ne vo mui ez ezhomm a zisplegerien nag a lenneerien a laka evel un disparti etre an ofiser-lider hag ar bobl. (109 a-du)

2* Ma vo tennet kuit ar pedennoù ouzh troad an aoter, an Aviel diwezhañ ha pedennoù Leon XIII. Ma echuo an oferenn evel-hen: Pla- ceat, Bennozh ar beleg hag Ite Missa est (116 a-du)

3* Ma vo berroc'h ar c'homzoù da reiñ ar Gomunion, da skouer: Corpus Christi custodiat te in aeternum (Korf an Aotroù Krist d'az tiwallo da viken) pe Corpus Christi (Korf An Aotroù Krist) ha netra ken; ha c'hoazh e vefe emsav-tre lavarout ar c'homzoù-se e yezh ar bobl (81 respont a-du)

4* Ma vo aotreet kenferennañ (oferennañ meur a velg war an dro), e degouezhioù dreist-ordinal, evel da skouer Yaou Gamblit evit oferenn ar C'hristma Santel, hag en oferenn In Caena Domini, evit Noz-Fask, da genver ar C'hendalc'hioù hag ar Retredoù-beleien hag all (98 respont a-du).

5* Ma c'hello pep beleg oferennañ Deiz Yaou Gamblit (110)

6* Ma c'hello an holl fideled kanañ ar BATER NOSTER a-gevret gant an ofiser, en oferinier-wer-gan (86).

7* Ma vo hiraet ar Pedennoù a Drugarez goude ar Gomunion: gallet e Vefe lavarout ur psalm bennak, unan pe ziv orezon ha marteze zoken lenn diwar ar Bibl ur pennadig o sellout ouzh Sakramant an Apter.

.....

Hep mar ebet, er Sened-Meur e vo kalz a Dadoù a-du evit implij ar yezh-pobl evit ministrerezh ar Sakramantoù ha marteze evit ma lavaro ar re'zo dalc'het d'ar Brevial, n'eo ket mui e Latin, met e yezh-ar-vro.

Petra a vo degemeret eus an holl vennadoù-se ? Arabat dimp ober hon diouganerien; gwell dimp gortoz! Bez'ez eus traoù hag devo poan o tremen, bremañ goude taol dic'hortoz al Lizher diwar-benn al Latin " VETERUM SAPIENTIA": lakomp ar Brevial e yezh-ar-bobl evit an dud-a-iliz.

Ar pezh a zo sur avat, eo ez eo poent lakaat un tamm urzh en ofisoù e-giz ma vezont graet an deiz a hiziv, gant ar veleien. Kement a gemmoù a zo bet degaset al lidoù hag en ofisoù abaoe un nebeudig bloavezhioù ma n'eo ket mui ar veleien evit heuliañ nag evit gouzout en un doare diarvar petra'zo aotreet, petra'zo difennet. Pep hini a re evel ma tro en e benn, evel ma soñj gantañ ez eo mat ober.

Poent eo ivez ober un tamm skol war an displegañ hag al lenn d'ar re a ziskleir al lidoù hag ar pedennoù e-kerz an ofisoù :oferennoù, obidoùioù. An hanter eus an amzer ne gomprenet ket; ton al lennadur hag an diskleriadur peurlvuiañ a zo displejus-tre. Nav diwar zek eus an displegerien ne vefent ket degemeret e stumm obet evel komzerien, lakomp, er Radio ! Pa ne vez ket belaien e vez lakaet marc'hed da lenn ar Skritur-Sakr d'ar bobl fidel, a-vouezh-uhel, tra m'emañ ar beleg o hastañ buan lonkañ e dammig latin. Dav gouzout evelkent petra'zo mat, petra n'eo ket, ha neuze dav deskiñ o micher d'al lennerien.

Arabat ivez bezañ dallet gant yezh-ar-bobl ha bezañ aotreet toz da welout burzhudoù o tonet eus degemeridigezh ar yezhoù komzet al lidoù-Sakr. Al Latin n'en deus nemet ur si : ne vez ket intentet gant an dud. Ur si bras, lakomp. Met ar yezhoù-pobl a zo pell diouzh e stumm meurdeuz, heson, pinvidik e sillabennoù, ha labour 'vo d'ober evit donet a-benn da reiñ d'ar yezhoù-pobl splannder al Latin. Selaouit galleg, selaouit saozneg, selaouit kembraeg er Radio d'ar sul da unnek eur pe da 4 eur ½ evit " Kanadeg ar Santual", ha kemerit brazhoneg flour ha kaer Maodez Glanndour. War-lerc'h emaint holl gwitibunan.

Evit Sakridigezh an Aotroù Kerveadoù, eskob Sant Brieg ha Landreger, en Iliz Veur Wened, e oa bet lennet, (evel ma'z eo aotreet) goude al latin, troidigezh c'hallek an Abostol hag an Aviel, gant an Abostoler hag an Aviel. Ne oan ket bet evit en em virout da lavarout d'ar beleg a oa em c'hichen : " Pegen plat ha dister ar galleg war-lerc'h al Latin" -" Gwir eo" emezañ.

Met n'eo ket eno emañ an dalc'h. Ha neuze e-giz ma plijo gant an Iliz, gant Tadoù ar Sened-Meur divizout e vo mat, na petra'z d'an dud fidel... Ha tamm ha tamm e vo tu da stummañ ton, doare-ispieg ar yezhoù-pobl d'ober dezho klotañ gant santelezh ha braster servij an Aotroù Doue. Ha da urvaniñ an traoù un tamm gwalloc'h. Nevez'zo e oan bet e gouestloù bras ul leanez eus va farrez ha tapet d'ober Aviel. Goude kanañ an aviel e latin- berrañ aviel'zo er Misal! - e voe dav din lenn an droidigezh c'hallek diwar levr ul leanez bennek. Setu emañ troet diwar ar galleg ar pezh a voe dav din lenn d'ar bobl : En amzer-se, e savas ur vaouez re mouezh a douez ar bobl hag e lavaras " Eürus an daou gastez o deus ho touget hag an divronn hoc'h eus sunet... hag all.." An Aotroù'n Eskob e-unan a gemeras un tamm fent gant an abadenn-se... Evelato ! ne deo ket ur chapel-leanez ur c'hlinik-gwilioudiñ nag an Aviel ur gentel war ar puerikul-tur.

Hor yezh hon eus-ni, ivez, ur yezh hag e zo dleet pep doujañs ha pep enor, dezhi, da vihanañ an enor hag an doujañs dleet d'ar beorien, mar ne vez ket roet an enor hag an doujañs a ziskouezer e-keñver ar binvidien, an noblañsoù, an dud e karg !

Betek-hen, dav hen an zav n'eus ket bet graet kalz a dra evit reiñ, pouzhas, stummañ, godeliañ d'hor yezh ar binvioù he deus ezhomm evit bezañ barrek da c'hoari al Liderazh karg ha roll ur servijerez sentus, doujus, oc'h ober gant deraedigezh ha gant meur-dez zoken, he c'hafridi sakr ha santel.

Gwelomp eta peseurt levrioù-liderezha a vefe mat o c'haout, en hor yezh ha keñveriomp war an dro ar pezh a c'heller da gaout e yezh ar C'hallaoued.

1* Ar RITUAL. War niverenn 30 BARR-HEUL (meurzh 1962) e vo kavet meur a dra war ar poent-se. E brezhoneg, moulet-distet, e ti v-Mame, ez eo bet embannet lidoù ar Vadeziant hag an Nouenn. Nebeut-tre e-kichen ar pezh a zo aotreet. Evit kaout bennozhioù all ha lidoù all e renker treiñ ouzh al Levrioù-Oferenn. Eeunet ha kemmet e vo hep mar ebet, meur a dra, er RITUAL da heul ar SENED-MEUR, - ne lavaran ket GANT, met da heul, da c'houde - Savet e vo strolladoù-studi ha strolladoù-evezhiañ da adrenkañ ar pezh a vo bet kavet mat da adrenkañ ha da gemmañ. Mat e eo d'ar vrezhonegerion bezañ war evezh ha prest, ma fell dezho gwelout o yezh o kaout he lod eus ar wastell.

2* Ar MISAL, pe Levr-Oferenn. Ur bern ofisoù nevez a zo deuet da greskiñ ar Misal er bloavezhioù tremenet. Kemmet eo bet ivez stumm an ofisoù, evel da skouer Ofisoù ar Sizhun Santel, ha Noz-Fask-Kavet a reer, an deiz a hiziv, mouladurioù niverus ar Misal evit an dud fidel. Tu a zo da rendaeliñ diwar o fann, da veuliñ pe da ziveuliñ anezho: bez'e c'heller dibab avat, ha setu un dra hag a zo talvoudus-tre. E brezhoneg: tri levr-ofereñ kozh dija: Hini Ugen, hini ar Gall person ar Follgoad, hag hini ar chaloni Prielleg (evit Bro-Wened). An hini kentañ hag an trede eo ar re dalvoudusañ hag e c'hellont c'hoazh rentiñ servij da vat d'ar vadezien vrogerour, hogen evel m'emaint emaint dilec'het, rak moulet ez int bet pell amzer a-walc'h'zo, ha neuze ne gaver ket enno an ofisoù nevez na gouelioù hag ofisoù ar sent nevez. Quzhpenn, ne gaver ket enno an oferennoù pemdeziek, ar pezh a zo kasaus-tre e-kerz Retredoù, Misonoù hag all. O zroidigezhioù diwar al latin ne dint ket resis-resis, hogen tu a zo d'ober brav-mat ganto.

An deiz a hiziv, evel labour graet war an dachenn-se e kaver en un dornskrid bennak a zo atre daouarn person Luaneg, oferennoù ar C'horaiz.

3* AL LEKSIONAL (Lectionarium). El levr-mañ nevez-voulet evit Bro-C'hall e kaver ar pezh a zo aotreet lenn d'ar bobl e-doug an ofisoù-sakr: Abostol hag Aviel. N'emañ ket an holl abostoloù nag an holl avieloù e-barzh; moarvat dre ma vefe bet re dav al levr ha re ger. Studiet-pizh ez eo bet ar gerioù hag an troioù-lavar, en doare da vezañ lennapl-mat, ha diouzha doare ar bobl ar muiañ ar gwelleañ. Aozañ ul LEKSIONAL a vefe ur c'hoari diban e brezhoneg: trawalc'h kemerout troidigezhioù ar Bibl, o adaozañ un temmig da

heson, plijus da glevout. Ha sklaer: e koment ha ma'z eus tu da lakaat sklaer ar Skritur-Sakr, rak ur gwall-fazi a ra "paotred ar yezh-pobl koustet a gousto" o krediñ e teuo komzoù Doue sklaer evel lagad un nae, war zigarez ma vint troet en ur yezh komzet bennak: an adaozadurioù servijet dimp gant ar C'hallaoued er bloavezhioù tremenet - ha c'hoazh an deiz a hiziv! - a zo ur skouer eus ar pezh a skrivomp amañ.

4* LEVR AN DISPLEGER-SAKR. Komzet hon eus a-us, diwar-benn ar Gana-dianed-se a garfe gwelout an "displeger" o paouez da vezañ evel un disparti, ur speurenn etre an ofiser hag ar bobl. Gwir a-walc'h eo ez eo kasaus-tre gwelout unan bennak o vont war gaoz ar beleg oc'h ofisañ, hep komz zoken evel m'hon eus graet uheloc'h eus ar stumm alies amzereat ma ra an displeger e labour. An deiz a hiziv avat, ez eus ul levr aozet gant Strollad al Lidoù-Sakr, en Eskopti Gwened hag a ra berzh, souezhus! Met kement a verzh a ra ma vez klevet ar memes-doue diskan eus Dukark da..Damanreset, evit ober gant ger ar "Paotr bras" (da lavaras Anna-Vari eus du-mañ!). Koulskoude evit mont da heuliañ ar c'hiz e tlefe bezañ ul levrig bihan o sikour an displeger da heñchañ pedenn ar gristenien e-kerz an ofisoù. Bout'zo beleien ha misionerion barrek-tre d'ober al labour-se.

5* LEVR KANENNOÙ-SAKR. Derc'hel a ra ar c'hallegerien da ober taolioù-esa war dachenn ar Gan-Iliz: kantikoù nevez, troidigezhioù (pe gentoc'h adeozidigezhioù) diwar ar Salmoù. Goude bezañ skoet kostez meur a wech e seblantont bezañ kavet o hent. Ezhomm a vezo c'hoazh bloavezhioù ha bloavezhioù-labour a-benn stummañ ur yezh ha n'eo ket graet nemeur diouzha varzhoniezh, pinvidik, heson a-walc'h da vezañ din eus Templ Doue. N'eo ket a-walc'h dimp sevel hor mouezh evit klemm war zigarez ma vez beuzet mui-ouzh-mui hor c'hantikoù brezhonek gant ar re a zo deuet eus an tu-all d'ar C'houeznon, mat e vefe studiañ a-dostoc'h sonerezh ha komzoù ar c'hanennoù nevez ha marteze e kavfemp peadra da en em skoueriañ diwarnañ. Evel just, n'eo ket hepken diwar labour ar c'hallegerien ez eus d'en em skoueriañ, met ivez diwar labour yezherien arall; hogen ar re nesañ eo ar re a servij peurluviañ da bennskouerioù.

Hogen an trevell-mañ 'm eus eon eo ar pep skoempañ hag ar pep amjestrañ da gas da benn, an abag d'an anaoudegezh distet o deus an dud eus o yezh, dreist-holl eus ar yezh peurunvan.

ooo
ooo

Evit moulañ ha brudañ ar binvioù-labour-sakr-se, e enebor ez eus ezhomm arc'hant, kalz a arc'hant hag e ranko ar bobl moarvat kemerout ar garg-se warnañ e-unan. Lakomp, met kerkent e respontan

BENEAD

B R E C ' H I A D - P L O U Z B ' O Z A D - G R E U N

=====
 ==
 ==

Ne oar ket ne vat ar c'hallegerion daoust hag emañ o yezh hollgaret o trec'hiñ pe o kilañ (1). Lamet kuit diganto o zravadennoù betek ar begad diwezhañ, e plijfe dezho en em frealziñ o huchal : " Sellit 'ta, pebezh chañs hon eus ! A drugarez d'an emrenerezh " roet " madelezhus ganimp nevez'zo da 3 bro eus Indez-Sina gozh, ha da 14 republik afrikat, setu ar galleg gonezet gantañ ar penn kentañ en UNESCO hag en ONU. "

Hervezo bepred, e vefe ar galleg studiet muioc'h ha gwalloc'h eget e 1939. El lodenn vrasañ eus ar broioù estren, e vefe ar skolioù gallek leun-chouk, rediet da nac'hañ resev studierion nevez. Tair gwech muioc'h a levrioù gallek a vefe lennet er-maez eus Bro-C'hall. Da skouet, 1.200.000 eus levrenn gentañ " Ar Mauger ", ul levr o studiañ yezh ha sevenadurezh Bro-C'hall, embannet e 1955, a zo bet gwerzhet buan-tre. Ar galleg, emezo c'hoazh, a zo deuet da vezañ " Latin ar bed a vremañ ".

War un dro setu kañv. Ar yezh-se, "ken mistr," " ken sklaer " a zo dilezet gant he mibion o-unan ! Mastaret e vez bemdeiz-Doue gant ar Radio en un doare mantrus. Ha ne gomzan ket eus ar c'hazetannoù ar muiañ tri-liv... N'hoc'h eus nemet lenn "QUEST-FRANCE !" Met gwashoc'h a zo : Gallacoued'zo, niverusoc'h-niverusañ, a zo deut da vegañ disfiziañs a-keñver da-zont ha galloud o Bro, pezh a zo dañjerus-kenañ, rak, evel ma lavare ar gazetenn " TIMES" n'eus ket pell : ur Vroad a zo ar pezh e kev dezhi ez eo. Ar yezh he deus evel just, da c'houzañv ivez eus ar soñjoù teñval-se. Meur a stal-labour vras hag a gevredigezh a bep seurt, a ra bruderezh e saozneg, dre ma soñjont n'eo ken ar galleg gouest da zisplegañ traoù'zo. Muioc'h-mui e vez skarzhet ar galleg kuit eus ar skiantoù, ar teknikoù, ar beajoù, ar c'henwerzh, gant an estrenion ha gant ar c'hallaoued o-unan. Lezel a ra plas d'ar saozneg, met ivez d'an alamaneg. Labourat a ra an Alamaned a-lazh-korf war ar poent-se evel war ar re all: setu perak emañ ar studierion estren tost da vezañ ken niverus an Alamagn hag e Bro-C'hall, ha bremaik e vo al levrioù alamanek ken gwerzhet en estrenvro hag ar re c'hallek.

Memes tra en Yougoslavia : trec'h a zo gant al levrioù saoznek abaoe ur pennañ hag ar re alamanek a zeu dija d'o heul. N'eus

ket pell e'oa koulskoude beuzet stalioù Zagreb ha Ljubljana gant levrioù gallek a bep seurt. En ur ober daou vloaz, e oa bet gwerzhet div wech muioc'h a obereñoù gallek : evit 200 milion a zinaroù e-kerz 1961 hepken ! Met kouezhet eo bet izal talvoudegezh moneiz Yougoslavia : koll a rae Bro-C'hall forzh arc'hant o kas evel-se he lennegezh da d-Tito. Erhu bremañ ar c'hoari ! Levr ebet, kaset ebet eus Pariz abaoe penn-kentañ ar bloaz-mañ.

Gwashoc'h a zo : e-pad miz Kerzu 1961, e oa bet paet 150 milion a zinaroù evit ar c'houmanantoù, al levrioù goulennet, h.a. Harz a zo bet lakaet war ar gwenneion-se gant hon Arc'hantour-Meur... Re a voneiz yougoslaviat a oa dija en e gef...Gwazh a se evit ar glianted hegredek !

Hael ha kaer ha largentezus eo Bro-C'hall, gwelout a rit. An diskan brudet ne liv ket gaou !

Ha koulskoude, pebezh bernioù arc'hant a vez foranet a bep ta evit lakaat ar galleg da zerc'hel penn dirak ar bed, p'emañ brud vat hag enor Bro-C'hall o kouezhañ donoc'h-donañ er fank hag er poullou gwad !

vvv

Hoegn e-pad keit-se, e c'hellomp lenn kement-mañ a diefe hol lakaat da soñjal, ya, da vegañ soñjoù du :

" Pa ho po ur bugel, daoust hag-ef e teskot galleg dezhañ?"
 - Ya vat ! Pa c'houlannan bara digant va mamm, e komzan en arabeg rannyezhel, e soñjan e galleg. Pa grogomp da debutal, e teu hor menozioù e galleg ken sklaer ha tra. Miret hon eus eus hor stummidigezh gant ar skol, ur stern evit hor meiz, ha boezioù-soñjal a ra ac'hanomp heritourion ar sevenadurezh latin ".

Setu ar pezh a lavar ur plac'h a zo, hervez, ur vrogerourez, seul giriekoc'h maz eo speredek ha desket-bras. Nemet n'omp ket ni marteze, dinamm a-walc'h evit teurel outi er maen kentañ...

vvv

Koulskoude, pa zic'hañs d'ar galleg bezañ en ur vro yezh al lodenn vianañ gwallgaset gant al lodenn vrasañ, neuze ni zoken a dle sevel hor mouezh d'e zifenn.

Hag ar pezh a c'hoarvez bremañ gant gallegerion ar C'hana-da ne seblent ket bezañ reizh. Emañ Jakez Godbout, un den yaouank eus Montreal (Krec'h-ar-Roue), o paouez lavarout traoù a c'hell talvezout evidomp-ni. Godbout a zo war un dro fiñskeudennour, livour

ha barzh, met dreist-holl romantour (e levr diwezhañ l'Anuarium, e zo bet ambannet nevez'zo gant ti Le Seuil). Guzhpenn-se en em ziskleriañ a ra evel agnostikour, ar pezh a zo rouez-tre noarvat er C'hanaada.

" Ar re a zifenn ar yezh en hor bro, amezañ, n'eo ket ar skrivagnourion e sav geriedurioù, ar mammoù ne laveran ket, ar bourc'hizezed biheñ a gomz galleg bemdeiz-Doue hag hen laka da bedout. Hogen gwesket ez omp gant saoznegerion a vilionoù. Nemet e-barzh Stad Kebek e vo, ne zeuio ket ur metalour ne gomzfe ket saozneg da vezañ mestr-micherour. Er c'harr-nij eus AIR CANADA hag en deus va c'haset da Bariz, ne da levr ne kazetenn ebet e galleg; den ebet n'en deus komzet galleg ouzhin...Forbannerezh start a zo er C'hanaada war dachenn ar yezh. Stad ar c'hallegerion e c'hell bezañ keñveriet ouzh hini ar Voriened eus U.S.A. Ne c'hell ket avat kroc'hen ur morian dont da vezañ gwenn, keit ha ma c'hellfomp-ni mont da hironed e tilezel ar galleg. Met hor yezh c'henidik ez eo. Setu perak e chomomp morianed wenn ar C'hanaada."

Ret e vefe reiñ da c'houzout da Jakez Godbout ez eus ivez ac'hanomp morianed-wenn Bro-C'hall, gwashoc'h hor stad eget e hini, sur mat.

ooo

Jaou eus pennoù bras an Iliz anvet nevez'zo da Gardinaled gant H.T.S. ar Pab, a sell ouzh Breizhiz en un doare ispisial : an Tad Mikael BROWNE, mestr-meur an Dominikaned abaoe 1955, rak un iwerzhonad a zo anezhañ.
-- an Tad Anselm-Vari ALBAREDA, ur c'hataloniad penn-kil ha troad, stummet a-vihanik gant Abati Montserrat. An Abati beneadat-mañ a zo muic'h-mui ur greizenn a vrogarouriezh, pouezus-tre he levezon war Gatalonia a-bezh. Bet ganet d'ar 16.2.1692 e Barselona, aet da Vontserrat d'e 12 vloaz, n'en devoa nemet 16 vloaz pa reas e leoù-manac'h. Mont a reas goude-se da Roma da labourat war an Henskridoniezh e Skol-Veur St Anselm; gonezet gantañ e skrid-testeni e 1921, e tistroas d'e vanati, lec'h ma reas evel henskridonour war-dro dielloù pinvidik Montserrat. Krouiñ a reas div zastumadenn skiantel e delvoudgezh uhel : Analecta Monserratensia, ha Catalonia Monastica. Ezel eus Ençavadur ar Studioù Kataloniad, ec'h embannas meur a studiadenn talvoudus-meurbet diwar-benn ar venec'h e Katalonia. E oberenù, priziüs-tre evit e vamm-vro hag evit an Iliz a-bezh, o deus graet brud da Gatalonia ha d'he yezh. Prefed Levraoueg ar Vatikan abaoe 1936, en deus lakaet ur benn dornskrid doù kozh da vezañ mikrofilmet...Ret- mat eo, en hon amzer, diwall

diouzh ar Varbared !

Saludomp doujus an Tad ALBAREDA, Kardinal St Apoliner, un den a bedenn hag a skiant uhel, ur brogarour erudus ha gwirion.

ooo

E piverann Barr-Heol, Kerzu 1961, hor boa komzet eus an Tad de Clorivière. Setu deuet er-maez ul levr diwar-benn ha merc'h speredel MARI ADELAI DE CICE (3). Ul levr plijus-meurbet, moulet-brav war baper kaer, gant skeudenoù e-leizh. En o zouezh, ur poltred eus Clorivière, a ziskouez dimp un dremm hael ha didro, dedennus - kenañ. Goude danevelañ buhez Mari Adelaid, e ro dimp al levr un nebeut pajennoù speredel skrivet ganti. Ur pennad all a zispleg panaos he deus kresket souezhus ar gumuniezh vihan savet gant Breizhadezed e-pad bloavezhioù tefvalañ an Dispac'h bras. Strawet eo bremañ Merc'hed Mari e pep kron eus ar bed, seul c'halloudusoc'h hag efedusoc'h peurliesañ ma chomont damguzh pe guzh da vat.

Div wech e voe M.A. taolaet en toull-bac'h, e Pariz. E 1799, o vezañ ma seblante bezañ " enebourez ar Gouarnement ". Lezet da vont kuit, e chomas evelato dindan evezhieriezh strizh. Goude tarzhadeg ar ru St Nikez (3 nivose = 23.12.1800), e voe un abadenn all. M.A. he devoa pedet unan eus he mignonezed da reiñ bod d'ur paotr erbedet gant an Tad de Clorivière. Klask a oa war ar paotr-se, a voe tapet a-benn ar fin gant ar polis hag a flatres e vadobereuzed. Toullbac'h e voe M.A. e prizon Stez Pelagia e-touezh gisti hag hailhonezed a zeuas da vezañ buan mignonezed dezhi. Ne c'houle ket, evel just, flatrañ an Tad de Clorivière, ha chom a reas hep lavarout ger diwar e benn, daoust dezhi bezañ goulennataet hir ha pizh. Implijout a reas ar barner finesoù ha goudrouzoù, met en aner. Dont a reas ur bern tud da zougenn testi eviti: testenioù dre skrid e-leizh a zeuas ivez eus Breizh... A-barzh ar fin e voe didemallet ha lezet da vont kuit ; nemet a tlee distreiñ goude-se da Stez Pelagia, hogen neuze evit degas frealz ha karantez d'ar prizoniadezed.

Bet ganet e Bruz, tost da Roazhon, d'ar 5.11.1749, e varvas an Dimezell de Cice e Pariz, d'ar 26.4.1818, e-pad m'edo o pediñ dirak an Tabernakl, ar pezh a c'hoarvezas ivez d'an Tad de Clorivière, un nebeut mizioù goude-se.

- (1) Sellit da skouer ouzh pennadoù Mark Blanpain, Revue des 2 Mondes 1 ha 15.11.1961.
- (2) Figaro Littéraire 2.6.61
- (3) Embarquet 37 rue N.D. des Champs, Pariz, VI-et.

PREZIDANT IWERHON
DEGEMERET
GANT H.T.S.A.R P.A.B, YANN XXIII



Setu amañ er c'homzoù lavaret gant e Santelezh YANN XXIII, ar 17 a viz Meurzh 1962, d'an Aotrou de Valera hag e heulierion, da geñver gweladenn a-berzh-stad Prezidant Republik Iwerzhon.

" Dhéd mille failte roth, a Uachtarain uasal."
" Dies is Muire ilve is Padraig "

(Mil bennozh warnoc'h, Aotrou Prezidant, da geñver ho tonadigezh amañ. Doue hag ar Merc'hez ha Sant Padrig da vezañ ganeoc'h !"

AOTROÙ PREZIDANT

Ur joe eus ar bresañ ez eo evidomp ho tegemer amañ hag ho saludiñ, en deiz-mañ ma klozer Bloavezh Kentved marv Sant Padrig. Ur bloaz'zo hor bos bet an eurvad da zigeriñ Hon-unan Gouelioù ar Jubile-mañ en ur bediñ Iwerzhoniz Roma da gemerout perzh a-unan ganimp an Hon oferenñ a anaoudegezh-vat. Ha neuze, etre div wech, ez eus aet kannaded a-berzh Kador- Bêr da ren en Hon anv Gouelioù-Meur an Eñvor a-kerz ar " Patrician Year ". Ha setu m'hoc'h eus mennet hiziv. Aotrou Prezidant, dre ur weladenn a-berzh ho kouarnamant, rentiñ enor d'ar Sez Abostolel a gasas gwechall, dre urzh Hon Diaraoger, Selestin I-añ, Sant Padrig da brezeg en Aviel d'ho proiz. Mil bennozh ha trugarez deoc'h.

Penaos chom, en degouezh kaer-mañ, hep eñvoriñ dremm hael an Abostol Bras-se a voe ar gred hag al labour anezhañ benniget, en un doare ken anet, gant an Aotrou Doue ? E brezegennou a-unan gant e skouerioù a zedennas gant un nerzh didrec'h tud ho pro da zegemerout ar feiz katolik. Ha setu neuze pajennoù gloriüs ar c'hantvedoù-se a feiz a c'hanas d'an Aotrou Krist kement a eneoù kalonek hag a lakas da sevel bagadoù diniver a venec'h hag a veleion a strewas an anaoudegezh eus ar feiz kristen e kalz vroioù a Europa: honnezh eo ar c'hiz kozh, an hengoun, hag a dlee diwezhatoc'h, ha dreist-holl en amzerioù-mañ, skignañ he madoberoù d'an douaroù-bras all.

Gwir abeg o deus hor bugale a Iwerzhon da virout gant lorc'h en o spered ar soñj eus an taolioù burzhudus-se. N'hellont ket kennebeut disoñjal ar bloavezhioù hir a drubuilh hag a anken a

c'houzañvjont gant nerzh-kalon evit o feiz katolik hag abalamour d'o fealded divrall e-keñver Kador Sant Per, anezhi ur frouezh eus prezegennoù-diazez Sant Padrig : " Bezit Romaned e-giz ma'z oc'h kristenien."

Ar menozioù-se a zo war Hor spered, Aotrou Prezidant, bremañ, pa saludomp a dreuz ho personiezh-c'hwi - hag hon eus bet ar blijadur da enoriñ en ur reiñ deoc'h Urzh an Aotrou Krist- hon holl vugale garet a Iwerzhon, gant teneridigezh ha karantez : ar re a zalc'h en o sov, war zouar o zadoù-kozh gizioù kozh"Enez ar Sant !- ar re a zo gwiziennet e broioù degemerus all - o deus pinvidikaet gant tenzor o feiz ha peadra o vertuzioù-a-familh; ar re erfin, hag o deus un tamm dre holl er bed, beleion, relijiuzed, leanezed, lakeet o buhez a-bezh e servij an eneoù hag a zo an em c'hraet testoù ha kannaded Aviel an Aotrou Krist hag e garantez e-keñver an holl.

Meulomp eta an Aotrou Doue evit an holl zonezonoù-se hag a zo evel bragerizoù pinvidik an ene iwerzhonat. Nerzh ar feiz katolik, stagidigezh ouzh an Iliz, fealded e-keñver Kador Sant Per, brokusted en oberoù a drugerez, spered misioner, gred da respont da vouezh Doue o c'hervel d'ar veleגיעzh ha d'ar vuhez a-bedenn hag a binijenn, daoust hag e c'haller huñvreal e kaeroc'h perlez evit kourunenn ur bobl bennak ? Ur blijadur vras ez eo evidomp han diskleriañ dirazoc'h, Aotrou Prezidant; hag eñrus ez omp o saludiñ an ho kichen ho priod meurbet-enorus, an Itron de Valera, ha tud azaouezus ho kompagnunezh.

A greiz hor c'halon, Aotrou Prezidant, e c'houlennomp ma tevio warnoc'h, war gement hini a zo amañ ha war holl vugale ho pro hael, an Iwerzhon ha dre ar bed a-bezh, grasoù puilh an Aotrou Doue, hag an arrez anezho e roomp deoc'h gant holl garantez hor c'halon a dad ar Bennozh Abostolel.

" Bannacht Dè urriv go léir." (Ra ziskenno warnoc'h holl bennozh an Aotrou Doue !) *

Notannoù.

* E galleg e oa bet graet ar brezegenn, hervez an dastenn ambannet war " L'OSSERVATORE ROMANO ", 18 a viz Meurzh, 1962.

An div frazenn iwerzhonek a gaver ivez er skrid-se.



BRO-ALBAN

GWELADENN AN DOKTOR CRAIG
d'E.S. YANN XXIII

An 28 a viz Meurzh 1962, ez eo bet degemeret diwar e c'houlenn, an Doktor Craig, Moderator Iliz Bro-Skos (presbiteriat), gant H.T.S. ar Pab. Setu amañ an diskleriedur moulet an deiz war-lerc'h war " L'OSSERVATORE ROMANO ":

Er mintin-mañ en deus H.T.S. Ar Pab Yann XXIII degemeret an aodias, da 11 eur 15, an Holl-Reverant Dr. Arkibald C. Craig, Moderator Kevredad Meur Iliz Bro-Alban (presbiteriat).

Plijet-dreist gant jestr seven ar gweladennour meur, en deus H.T. ar Pab graet dezhañ un degemer eus ar c'halonekañ, ha chomet ez eo bet e-pad un henter-our bennak da gomz gantañ diwar-benn meur a sujed, ha da enforiñ degouezhioù ha traoù eus e vuhez tremenet war dachenn traoù an eiz.

En em blijet eo E Santelezh o pouezañ war spered relijiel, dalc'husted hag intrudu skiantek ar bobl skosat, a zo bet savet anezhañ e pep amzer, met dreist-holl en hon amzer-ni, speredoù kaer a dud o deus sachet brud-vat war o anv ha meritet anaoudegezh vat holl dud an douar. Kolaj-Sakr ar Gardinal a zo enni ur C'hardinal genidik eus Bro-Skos, hag e Roma - ma teu ar biziter da welout evit ar wech kentañ - emañ Skolaj kantvloaziek vleunius an-dud-a-iliz, evit skolidi ar Vroed illur-se.

An Holl-Reverant Dr. Arkibald C. Craig en deus roet en donezon d'E Santelezh ur sined seiz, warnañ kinkledurioù eozet diouzh doare an arz keltiek kozh, en ur penn anezhañ ur groaz arc'hant heñvel ouzh hini abostol Bro-Skos, an Abad beneadat, Sant Kolmkill, a gaver en Enez Yona.

Hon Tad Santel ar Pab, diouzh e du a roas d'an Doktor Craig un toulladig medalennoù eus e renerezh-a-bab, gant levr Aktaoù ar c'hentañ Sened-Iliz, e Roma, ha levr Attività della Santa Sede, e 1961.

E dibenn an aodias e voe degemeret d'o zro gant H.T. Santel amheulierion an Dr. Craig : ar Reverant Dr. Aleksander Mak Lean, penn-kargiad an Templ Skosat, e Roma, hag ar Reverant Dr. Stuart Loudon, pennrener ar C'huzul evit an darempredoù etre Iliz Bro-Alban gant an Europ hag ar broioù all.

Gant kalz a hegarated en deus H.T. Santel divizet gant ar re-mañ ha roet en deus da bep hini anezho, e memor eus an emwel-se, ur vedalenn eus amzer-e-babelezh.

BRO-NEDERLAND
1962

U L L I Z H E R

Wealwijk, 8 a viz Ebrel

Autroù Person,

Trugarez deoc'h evit an niverenn 30 eus BARR-HEOL. N'em eus ket echu c'hoazh gant an niverenn a-raok. Pennad an Autroù Kalvez diwar-benn ar Relijion Gatolik, en Izelvroioù, a oa kalz aesoc'h da intent, o vezañ ma oa ennañ meur a "c'her etrevroadel" ha ma plede gant un danvez anavezet. Hogen ho kontadenn "AR VOGERENN" a oa diaes-tre: graet e oa, anat deoc'h, evit "studierien ampart". Enni avat, e oa ur bern gerioù o sellout ouzh buhez al labour-douar, ar plant hag al loened, ha kentelius-dreist ez eo evit an dud o deus c'hoant da zeskiñ ar gerioù-se - boutin-tre evel just, evit Bretoned- en o aergelc'h naturel. War va meno, ez eo priziüs-tre ivez, da studiañ an amzer-dremenet, er verboù, hag e kav din penaos, mar befe savet ur wech bennak ul levr-lennerzh da vont gant ur yezhadur brezhonek, e vefe ar gontadenn diouzh ar c'hentañ da vezañ laket ennañ da zis-kouez splann penaos implijañ an amzer-dremenet. Ne oan ket evit lenn ouzhpenn div bajenn bemdeiz, ken alies evel ma ranken sellout ouzh ar geriadur.

Ar pennadoù en niverenn 30 a oa aesoc'h da lenn. Kerse a oa ganin o lenn e oa merv ho mamm. War-dro ar memes koulz ez eo bet marvet va mamm-me ivez : an 9 a viz Meurzh. 83 bloaz e oa, ha bez'he devoa : 16 bugel (me eo an hini yaouankañ), 107 bugel bihan, ha 33 douar-bihan. En ur gontañ ar vugale-gaer hag ar vugale-vihan-gaer, e oa, d'ar c'houlz m'eo bet marvet, 181 a dud hag a rae anezhi o mamm, o mamm-gozh pe o mamm-you-gozh. Setu aze un tiegezh hollandad ! Pa oa bet ganet he 100-et bugel bihan he devoa bet bennozh hon T.S. ar Pab hag ur pellskrid eus e berzh (Pius XII). Stad a vefe bet enni o kaout unan bennak eus he lignez o vont da veleg, met siwazh, marvet eo bet a-raok. Dec'h diwezhañ (Sedorn ar Basion) ez eo bet beleget an hini koshañ eus bugale va breur henañ, evit eskopti Roermond, hag hep mar ebet edo Mamm o sellout eus barr an Neñvou.

*

Troet em eus en hollandeg, kement hag ober ur bleustradeg, al lodenn eus pennad Benead " Broc'hiad plouz...Bozad greun " o sellout ouzh Renan. Marteze e c'hellfec'h reiñ eotre din da gas ar pennad-se da " ROTONDE " anezhi ur gazetenn boblek sizhuniek embannet gant an Tadoù Kabusuned. Dedennet eo. Hollandiz gant Breizh, hogen dreist-holl abalamour da gaerder ar vro, ha n'eo ket abalamour d'he stourm da virout he yezh.

A - DREUZ LENN

Nevez'zo e kouezhe etre va deouarn ul levr skrivet gant Charlez ar Govig " l'Ame bretonne ", quatrième série, Edouard Champion, libraire-éditeur, Paris 1924. N'on ket gwall lenner a levrioù gallek hogen keit-mañ eus ar gêr (meur a vil kilometrad mor etre Treger ha me) e vezen dedennet muioc'hik gant al levrioù estrenyezhek (ha levrioù gallek e vefent) pe gomzont diwar-benn hor Bro. Ma ! e levr ar Govig em eus teskaouet traoùigoù talvoudus e-mesk ur gefalennad vragoùbrazegezh. Lakaet on bet souezhet avat gant ur bomm brezhonek restet gant ar skrivagner er pennad anvet " L'héroisme breton ", paj. 383. Setu-er ger ha ger :

NEP NA RA MAT, HER DRA GUIELI DREZO !

Treiñ a ra ar Govig e galleg " Quiconque ne fait pas bien, sus à lui tant que tu pourras ! ". Goude-se e tiskleir : " An Ao. Anton Thomas eo a zizoloas en deiz all (sic) war un diell gozh er Sorbonne, ar frazenn-se skrivet e brezhoneg ar bloaz 1360 gant Herri Dahelou, kloareg eus Eskopti Kemper. Ar skrid koshañ eo, a-hervez, hon eus e krann-arvoreg "... (1*)

Eus a balec'h e teu e gwirionez an arroud restet gant ar Govig : E levr brezhonek ebet n'em eus lennet meneg a Herri Dahelou hag eus e frazenn. Daoust ha kavet en dije Ivoned Omnez ur c'hevezer

* *

El levr " Hor Bro e-pad ar Revolusion " gant C.Jézégou em eus kavet (p. 181) e roll ar c'hwec'h h gouarnour warn-ugent eus ar " Finistère " bet barnet d'ar marv d'an 22 a viz Mae 1794, war zigarez m'o dije stourmet ouzh ar " Gouarnision ", anv Chalez-Frañsez Malmanche, ganet e Verteuil hag o chom e Lambazelleg, 46 vloaz.

Un tad-kozh da Dangi ?

O vonet d'ar marv a-gevret gantañ a oa ivez Pêr-Mari de Bergevin, 43 bloaz, ganet e Brest hag o chom e Laniltud. Hemañ e gwir a oa un tad-kozh da g-Coulette Yver, ar skrivagnerez c'hallek a ouenn vrez-izelat. Diwar-benn homañ, gwelout " Le Pays Breton ", viverenn 59, bloaz 1953, paj. 578.

J.Konan

1*. Ma lenner "Nep na ra mat, Her dra c'helli dezho" ez eo reizh troidigezh ar Govig, rak e gwirionez "dezho = dezhañ, cf. gwenedeg dehou kembreeg : iddo, kerneveg : dhodho (notenn gant B.H.)

LIZHEROU KATOLIK (troidigezh gant Maodez Glanndour, 350 lur). An drouz a zo bet war al LIAMM ha war VARR-HEOL a zo bet kaoz moarvat m'eo bet diviet prim-ha-prim al lodenn-mañ eus ar BIBL KATOLIK. Gwir eo ne oa bet tennet nemet 100 skouerenn ! Dav e vo advoulañ al LIZHEROU KATOLIK-se da ober plijadur d'an holl.

Al liesskrivañ a zo un dra marc'had-nat a-walc'h, hogen ul levr evel hemañ a zo lastrammus (landrammus) ha diaes-tre da implijañ en ofisoù-sekr, da skouer. Un oberezh da studiañ ez eo ha netra ken. Merket ez eo war an talbenn TROIDIGEZH GANT MAODEZ GLANNDOUR HA MARSEL KLERG. Aozet e oa bet un droidigezh gant Klerg, un 12 pe 15 vloaz'zo, hogen an droidigezh-se laosk un tammig ha koshaet dija da heul embannadurioù nevez ar Bibl hag an Testament nevez, n'he deus netra da welout gant an hini kinniget dimp gant Maodez Glanndour: labourioù disheñvel-mik ez int e-keñver geriadur, troioù-lavar frazennadur. Gwell ez eo eta lezel pep merit gant an troour nevez, on deus klasket reiñ da galennadurezh an Ebestal St Jakez, St Jud, St Pêr ha St Yann, en brezhoneg, nerzh ha bevder ar gresianeg.

Traoùigoù a vefe da rebech d'ar mouladur-mañ : n'eus taolenn ebet nag er penn kentañ nag er penn diwezhañ da verkañ an danvez hag ar pajennoù. Bozetoc'h ez eo " gant ur gwiskamant lous " (St Jakez II,2) eget " an gwiskamant lous ". Skrivañ ivez " hervez ar c'homzoù-mañ eus ar Skritur-Sakr " ha naket " komzoù-mañ ar Skritur-Sakr " (ib. 8)

Arabat disoñjal ne deo ket ar Skriturioù pennadoù-lennagezh, na traoù aes da lenn ha da intent bep tro. Mar bez embannet gwech pe wech ur MISAL pe ul LEKSIONAL e vo ret marteze heuliañ skouer ar C'halloued hag eunañ pe souplaat geriennoù ha troiennoù. Hogen troiñ hag embann Komzoù Doue e-giz m'emaint setu kentañ labour a zo d'ober.

L'ECHO DE LANVION : Derc'hel a ra ar gazetenn sizhuniek-se da embann pennadoùigoù e yezh ar vro. Traoù skañv ha dinoaz avat. Moullet eo bet a dammoù AR VOGERNN (kontadenn an Nedelag diwar V.H) ha Kontadennoù ar SEIZH DEN FUR A ROMA warni, troet diwar ar c'hembraeg gant Klerg. h.a.

AR VRO : Daoust ma'z eo start yezh Abanna ez eus gant e bennadoù un nerzh hag un donder n'eur ket kustum da welout e loc'h all. N'eo ket souezhus emañ Abanna e gouloù Marksourion Vreizh : aesoc'h abegañ e yezh eget e venozioù avat !

DIWAR-BENN AR FESTOU-NOZ : " D'ar mare n'eo ket deuet a-benn ar brezhoneg da c'honiñ ar skolioù na servijoù ar gouarnamant, d'ar mare m'en em wel argaset eus ar c'hatekiz hag eus er gador-brezeg, taolet er-maez eus er misionoù hag ar gouelioù a relijion, prest da vezañ

BARR HEOL



Direct. Le Clerc, Buhulien-Lannion, C-d. **X. Foch**
N° 32 Septembre 1962, Trimestriel Prix du N° 2 NF

Rener: M. Le Clerc, Person, Bulien, Bro-Dreger
N-enn 32 miz GWENGOLB 1962, trimiziek, Koumanant: 6 LN

T A O L E N N

Kendalc'h Etrekeltiek Landreger, Eost 1962	P.1
Prezegenn an Tad Yann Chapel.....	P.9
Breizh hag ar C'henvarc'had.....	P.13
Penn er C'hreisteiz.....	P.19
Ul lizher(war ar C'hechoua).....	P.27
Kein-ouzh-Kein (Belgia)...Optimistiezh(Iwerzhon).....	P.29
Telstar (Breizh hag Amerika).....	P.31
Goulennadeg Kelennerien a Skandinavia d'an Unesco.....	P.34
Yezhoù en Argoll.....	P.39
Brec'hiad Plouz.....Bozad Greun.....	P.40
Embannadurioù Barr-Heol : Utello, Seurez Kerwenan.....	P.45
Anvioù-Lec'hioù Breizh-Uhel.....	P.51
Ekumeniezh (1) Kendalc'h Landreger.....	P.57
(2) En em ober ouzh ar Paour.....	P.58
Barr-Heol hag e Lennerion.....	P.61
Skridoù o stankaat.....	P.62
Degouezhioù ha Kampoù an Hañvezh 1962.....	P.64

BAR-R-HIEOL

War Feiz ha Breizh

KENDALC'H ETREKELTIEK LANDREGER

18, 19, 20, 21, 22 a viz Eost

1 9 6 2.

E-touez an degouezhioù o sellout ouzh Breizh hag h buhez war dachenn an Arboellerezh hag ar Sevenadur en em gavet en hañvezh-mañ (1962) e tibabomp da zanvez d'hor pennad-stur, un degouezh hag a zo da verkañ gant ur maen gwenn,- gouez d'al latinegourion-, Kendalc'h etrekeltiek Landreger.

Hervez ar reolennoù-diazez ez eo bet savet ar C'HENDALC'H ETREKELTIEK da gas war raok an darempredoù hag ar c'henlabour etre an holl Gelted war dachenn ar sevenadur, reiñ tu dezho d'en em anavezout ha d'en em brizout gwelloc'h ha d'en em harpañ kene-trezo. An hevelep anv a vez roet peurvuiañ d'ar Gevredigezh hec'h unan ha d'an Emvod bras a vez graet bep bloaz a bep eil er Broioù Keltiek da geñveriañ o skiant-prenañ, da zisplegañ stad an traoù ha da sevel raktresoù a-benn an amzer-da-zont. Amañ ne gomzimp nemet eus an Emvod bras e Landreger hevlene da dennañ un nebeut kentelioù

*

Div lodenn a zo e pep Emvod: ar studioù ha kaozeadegoù, ha neuze an diduamantoù, diouzh an noz peurvuiañ. Ar re-mañ a sell ouzh doare poblek ar Gouelioù gant daou bal dezho: brudañ ar sevenadur keltiat, reiñ da anavezout an doareoù ha stummoù anezhañ d'ar Gelted o-unan, met ivez d'ar bobl 'lec'h m'en em gav ar C'hendalc'h, hag e skeud dedennañ ar bobl dastum ur gweneg bennak da herzel ouzh ar mizoù bras-meurbet a vez alies (evel ar bloaz-mañ) da heul ar

seurt gouelioù.

E-keñver an abadennoù merkomp raktal n'eo ket chomet ar Vretoned war-lerc'h, tamm ebet ! Pell ac'hano. Aesoc'h e oa evel just d'ar Vretoned kaout tud war al lec'h eget d'ar Gelted dont niverus a-walc'h da reiñ dimp abadennoù fetis. Ur 30 bennak a Gelted Tramor a oa e Landreger, hogen eus peder bro disheñval e oant: Iwerzhon, Bro-Alban, Kembre ha Kernev-Veur (eus Enez-V nav ne oa den). Kernev-Veur drezi hec'h-unan a oa er-maez eus ar jeu, rak ar peour-kaezh Kernev-Veur, evit lavarout an traoù evel ma soñjan, a chom stag ouzh Tiegezh ar Broioù Keltiek, dre an hengoun, an istor, dre an amzer dremenet, dre an eñvor mar kirit, rak war dachenn an arzoù, ar sonerezh, al lennegezh ez eo dister-tre, siwazh! Chom a ra bepred ur skouer c'harv evit ar Broioù Keltiek all o taolennañ dezho en a-raok ar stad m'en em gavfent ur wech aet o yezh hag o spered- ro da get. N'helled ket kontañ nemeur war Gerneviz eta e-keñver diduamantoù ar C'hendalc'h. Hep kaout an disterañ da izelaat ar Gelted all e c'hellomp avat, gant lorc'h diskleriañ o deus ar Vretoned dalc'het o renk gant enor ken ez eo manet souezhet ha boemet ganto o breudeur geltiat.

Ar sul da noz e voe sonerezh breizhek (gant ur gevrenn miret d'ar Gelted Tramor ivez) e diabarzh kloastr Iliz-Veur Landreger. Aozet e oa bet sonerezh a-ratozh evit ar C'hendalc'h gant ar mestr sonour m'eo Jef Penven, ha degemeret e voe gant dudi ar sonerezh-se: gwir eo e oa pep tra a du ! Sioul ha brav an noz stergannek, stern marzhus ar c'hloastr e-unan, didrouz an dud ar pezh a oa un testeni splenn ne oa nemeur a filistined pe a snobed en o meskoù.

Al lun da noz, abadenn-filmoù. Leun-kouch ar sal-sinema, ha tomm da vat. Dav dimp lavarout raktal ez eo an abadenn-mañ eo a voe an disterañ. Evit abegoù anat : re hir ar filmoù, dreist-holl gant er gwrezus ma oa an aergelc'h. Den enez-Aran a zo brudet-tre, gant gwir abeg: taolenn fromus buhez kalet eneziz, arvestoù kriz ar mor diroll, gwelvaoù dishegar ar c'herrag hag an tornaodoù serzh, abadennoù pesketaerezh ha me'oar. Nemet hirik a-benn an diwezh. Dreist-holl pe oa ar film iwerzhonat hag iwerzhonek MISE EIRE (Me Iwerzhon) da vezañ luc'hvannet. Daoust d'en diskleriadurioù roet e saozneg da gentañ a-raok bannañ ar film, gant un itron eus Iwerzhon, hag e brezhoneg (fall a-walc'h !) hag e galleg gant Meavenn, e oa diaes-diaes ar film da heuliañ en askont ma oa pep tra e gouezelag. ha netra nemet gwech an amzer skritelloù hag embannoù e saozneg (anezho lod eus ar film) da aesaat intent an darvoudoù. Ne c'helle ket ar film bezañ degemeret evel-se gant ar sellerien: ret e vefe

bet istitlañ ar film-se greec da gentañ-penn evit Iwerzhoniz. Re ziaes e oa an degouezhioù istorel da heuliañ ha ken diaes ma ne oa tu ebet da santout na da dañva sonerezh Sean O Riada aozet a-feta-pañs evit ar film. Fromus-kenañ e oa avat, gwelout oc'h adtremañ dirak hon daoulagad emsavadeg Lun Fask, klevout an tennoù-fuzuilh o verkañ laz hini pe hini eus ar vrogarourien, hag arvestiñ ouzh engroez diniver an dud o heuliañ an interamentoù p. oc'h ober un degemer trec'hlied d'ar Contez Markiewiz ha d'ar brizonidi all o tistreiñ d'ar gêr. Ya! ar bobl-se, ar engroez-se o seveniñ komzoù Padraig Mac Piarais en e varzhoneg "An Emsaver " :

Diwanet on diwar had ar bobl, ar bobl en anken ha n'he deus teñzor ebet nemet ar goaneg...
Hag e lavaran da vistri va fobl : diwallit !
Diwallit ouzh ar pezh a ya d'en em gaout : ar Bobl Emsavet..

Aes-tre e oa meizañ e oa addiwanet e kreiz kalonoù ar bagadoù-tud -se leizh ar straedoù, an nerzh-kalon hag ar youl-se n'hell gouarnamant abet mougañ na plegeañ.

E-kreiz ar film o tiskouez dimp Emsavadeg Veur Lun Fask, setu o tarzhañ war ar skramm ar Banniel triliv Iwerzhonat. Hag ar sal strakadeg-daouarn. Ne oa tu ebet da faziñ war ar ster da reiñ c'ar strakadeg-daouarn-se d'ar Banniel-se o hejañ e beg ur warn uhel. Komzoù eeun, didro, dilorc'h, diginkl ha gwirion a zo trawalc'h, komzoù Padraig d'e vamm, a-raok bout fuzuilhet : Evit Iwerzhon hag ar Frankiz !

Mat e voe abadenn ar Vretoned ar meurzh da noz hag e plijas. Bez'ez eus un dra hag a laka souezhet ar Gelted Tramor, un dra dianav dezho (un dra o vont da goll dre amañ ivez, gwir eo !): dilhad ar Vretoned, hag e renken, diouzh va zu, hastañ buan reiñ un nebeudig diskleriadurioù d'ar re a oa azezet em c'hichen. N'aus ket ezhomm amañ da gomz diwar-benn holl lodennoù hag holl sonerien, kenerien ha dañserien an abadenn-se. Ar stourmer kozh, serzh bepred war an dachenn, da c'hras Doue, Job Kadoudal a c'helle kaout un tamm lorc'h gant e dud eus Boulvriag hag eus Rostren (Lomig Dro-niou hag e gamerad). Aonik avat, e seblante bezañ laz-kanañ Kamlez dirak sellerien ha selaouerien a renk uhel a oa dirazo, met ne oa ket re fall o jeu koulskoude. Eus ar plijusañ ha dudiusañ e oa mouezh hag emzelc'h Andrea ar Gouilh (eus Pluguen) koulz hag he stummkanañ. Eilet e oa he mouezh gant telenn A. Kochevellou.

C'hoari an delenn ? Emañ ar c'hiz-se o tonet da Vreizh da haul skouer Kembre hag Iwerzhon. Marteze ez eo un tammig gwan muzik an delenn er-maez, en aer vras: setu da vihanañ soñj meur a hini, daoust d'an teknikoù nevez evel ar songreskeréz. Dav anzav koulskoude o deus graet merc'hed Bleimor kalz a labour ha kalz a hent war an dachenn-se. Un dra avat hag a zisplijas kreñn din-me e voe kan bale-Yugon:

"N Aotrou Person n'houl ket 'pokfe'r baotred d'ar merc'hed,

Hogen ne zifenn ket ' pokfe'r merc'hed d'ar baotred ! "

He bezit sur n'eo tamm ebet abalamour d'ar c'homzoù dibouez a zo er ganenn-se, met dre ma oa galleg dreist-holl: distonañ a rae, ur souezh, gant ar peurrest. (Mar o devez c'hoant hiviziken da ganañ ar son-se, e brezhoneg e c'hellint hen ober avat, rak en ur skrivañ ar pennad-mañ em eus savet an div rimadell a-us !)

Klozet iskis e voe Abadenn Vreizh gant Glenmor; daoust ma teuas gant hemañ un nebeut bommoù fentus-tre a lakas meur a hini da zizrollañ da c'hoarzhin, e oa anat-mat ne oa ket **kaer** er paotr en e charreoù....

D'ar merc'her da noz e voe **ABADENN GELTIA** : Bro-Alban, Kembre hag Iwerzhon. Kanoù eus ar c'haerañ gant Albaniz. Evit Kembre en em c'houlennet da gentañ petra'oaer tiagezh an Itron Dwyryd o vont da zispakañ deomp pan errujont war al leurenn : un delenn gant er vamm hag u. pezh tog uhel (evel ma plij da merc'hed Kembre gwiskañ pa vennont ober un tamm folklor, pe kaout ur stumm broadel) ur skubelenn gant unan eus he merc'hed yaouank, ha div voutailh gant bep a gantol-c'houlou war alum peg e gouzoug ar boutailhoù gant eben: dañs ar peurzorn a voe dañs gant unan eus ar merc'hed yaouank ha ne oa ket fall tamm ebet, nemet marteze un tammig re a s'ouplasaou evit ur plac'h yaouank. He c'hoar a zafsas un draig bennak heñvel hag he breur a zisplegas ur pezhig barzhoniezh eilet e-keñver muzik gant e vamm, war an delenn. Berzh a reas avat ur C'hembread all I.Gwyn Jones gant ur ganaouenn boblek 'lec'h ma komze eus ejen,kezeg, azen, chas bet en prof digant e vradeur

Eus an dudusañ e voe donedigezh Iwerzhoniz war al leurenn, gant o stumm didro hag aezet, o dilhad liv-flamm. Kalz muioc'h a hirnez an o sonerezh hag en o c'hanaouennoù eget gant kanaouennoù Skosiz.

Un darvoud a bouaz bres avat e-kerz an nozvezh-se e voe donedigezh Kannad Meur Iwerzhon, e Pariz, an Aotrou Denez Mac Donald : ur merk sklaer e oa sellet ar C'hendalc'h Keltiek evel un dra etrevroadel, un dra ha na chome ket diseblant outañ Gouarnamant ar Vro Geltiek, an hini digabestr nemeti.

Gwir eo e oa a-hend-all eus Bro-Iwerzhon o heuliañ labourioù ha Gouelioù ar C'hendalc'h tud a renk uhel evel an Aotrou Conchubhar Uasal Mag Uidhir, Pennvarner-a-enor Lez-Varn Meur Iwerzhon, hag an Aotrou kelenner Liam O Buachalla, Rener Sened Iwerzhon !

Forzh pegen hir ez eo hor rentañ-kont eus an Abadennoù--Noz n'hon eus eus ket gallet menegiñ pep tra na pep den evel da skouer ar c'hoarier biell eus a Sant-Brieg Tostivint hag an dañsoù graet gant yaouankiz ar C'hendalc'h ouzh son ar viell end-seun. Mat eo evelkent menegiñ un den yaouank hag a oa e penn an abadennoù, evel jubennour :A. ar Berr, met re sammet, re vac'homet e oa gant e labour. Evel penndis-pleger e kinnige pep tra e brezhoneg (da gentañ, na petra'ta!), e saozneg ha da echuiñ e galleg. Ar meurzh da noz, noz Abadenn ar Vre-toned edo en e wir wellañ ha reizh-meurbet e teuas ar yezh gantañ, an dro-se.

AR PREZEGENNOÙ

Kalz barroch'h bremañ e vo hor rentañ-kont diwar-benn ar c'haezeadennoù e-doug ar C'hendalc'h evit an abeg ma vo embannet moarvat an darnvrasañ anezho gant PREDER, en ur strobad. Holl ez int bet kemeret war vagnetofon gant an nebeudig diskleriadurioù e veze d'o haul a-wechoù. Ya! an nebeudig a ziskleriadurioù a skrivomp, rak kompren a rit, pa vez graet prezegennoù a bep eil gant pemp den : unan evit pep bro (nemet Enez-Vanav evit ar bloaz) ne chom ket mui nemeur a amzer da dabutañ na da c'houlenn hiroc'h doareoù, ha sklaeroc'h munudoù.

E saozneg ez eo bet an holl gaozeadegoù war-bouez nebeut, ha da c'houde e oa ur servij-jubennourien karget d'ober un diverrañ anezho evit ar re n'o devoa ket an enor da intent yezh John Bull ! Gwell dreut e veze, siwazh! an diverrañ-se peurvuiañ, evel ma c'heller soñjal, ha fentus a-walc'h e veze gwelet brezhonegerion ampart evel Y.B. Piriou ouzh en em luziañ e-unan hag o komz difrom-kaer eus "tri" skol e-lec'h "teir" skol " ha traoù all evel-se ! Evit o youl vat e tleer kaout anaoudegezh en o c'heñver. An darnvuiañ eus ar jubennourien-se a oa re yaouank ha dre-se, dre ma'z ay e kozho niver ar Vre-toned dic'houzvez eus ar saozneg hag a-benn un nebeut bloavezhioù amañ ne vo ket ezhomm a jubennourien, dre ma vo barrek an holl da heuliañ ha da gompren ar prezegennoù. Rak....

Ya! rak ur...rak a zo ! Evit ar Gelted tramor ne seblant ket ar saozneg bezañ ur spontailh, tamm ebet. Ober gant ar saozneg a zo un dra naturel pa vezont etrezo: kustum ez int da voumañ gwashañ ha nesañ enebour o deus, ha neuze, evit gwir dre besourt yezh e c'hellfant en am zereprediñ? Heñvel-tre ez eo ar gudenn an deiz a hiziv evel ma oa e-tro ar bloavezhioù 1925 en amzerioù kentañ GWALARN.

Evit ar Vretoned avat, n'eo ket un dra fall tamm ebet gouzout saozneg. Enebiezh ebet eus o ferzh, war ar poent-se. Nann ! pell ac'hano. Hogen ur goulennig dinosaz en ur dremen : ma vefe bet grant ar studiadennoù... e galleg, abalamour dezho ? Trouz a vefe bet hep mar ebet ! Ma ! N'eo ket ken fur na ken poallek ar Vretoned kaezh hag o breudeur eus an tu all d'ar mor....

Hogen anez e vo klask un diskoulm all keit ha ma vo ken izel anaoudegezh ar yezhoù keltiek arallvro e pep bro eus ar Vraudeuriez keltiek. Rak izel-kenañ ez eo an anaoudegezh-se. A-douez Iwerzhoniz e oa unan hepken oc'h anaout ez-dereat hor yezh Oscar Mac Uillis, feel da zont oa Vreizh, ha troet da gomz hor yezh: e brezhoneg hag e saozneg e reas e brezegenn diwar-benn AR YEZHOU KELTIEK EN DESKADUREZH HAG EN-EMBANNEREZH, al lun vintin, 20 a viz Eost, ha daoust d'e bouez-mouezh estren e voe intentet ervat.

Un iwerzhonad all a oar un tamm hor yezh Donn Piatt, met ampar-toc'h ez eo 'm eus aon war ar galleg.

Eus Bro-Gembre, ne dalvez ket ar boan komz. Eus ar re a oa eno ne oa hini ebet o c'houzout hor yezh. Ha Kerneveuriz ? Hag Albaniz ? Ne gomzomp evel just, nemet eus ar re a oa deuet da Landreger, E gwirionez n'eus moarvat war an douar a-bezh nemet ur C'hembread hag a oar yezh Vreizh koulz ha n'eus forzh peseurt brezhoneger, en em c'hraet Breizhad Brezhoneger; o studiañ hag o vevañ e-touez tud ar bobl emañ e Kernev-Uhel abaoe un nebeut bloavezhioù....

Ha diouzh tu ar Vretoned ? Gwalloc'h ar stad un tamm, met hep bezañ dispar hennebeut....Unan hepken, war a seblant, a gomz gouezeleg eus ar c'hentañ hag a zo barrek da zifenn e gaos e kembraeg, hag hennezh a zo ur Breizh-Uhelad eus Roazhon, (desket brezhoneg mat gantañ ivez !). N'eo ket labour eo a vank dimp, mar keromp...

*

Menegomp e-touez ar c'haezeadennoù hini MAOZ DEZ GLANNDOUR, e brezhoneg hep muiken : ur berlezenn, hep mar ebet o taolennañ doare al lennegezh vrezhonek, pe pa lavarimp ervat plegioù ha tudioù al

al lennegezh vrezhonek, an deiz a hiziv. Evit Maodez Glanndour, n'eo ket garet marteze ar skrivagnerien vrezhonek avit sevel o-oberennoù hir, en doare ma vefent evel " Japonizien Europa" !

Prezegenn ABANNA diwar-benn EMSAVIOU O LABOURAT EVIT AR YEZHOU KELTIEK, o tiskouez dimp n'eo ket e gwirionez an EMSAVIOU, met an ezhomm a zo da grouiñ un Den Nevez emskiantek ! reizhat. Hag emañ en em gavas un darvoudig a dalvez ar boan bezañ meneget. Pa oa echu e brezegenn gant ABANNA, setu Par Denez, rener-meur ar C'hendalc'h, o c'houlenn e baperoù digantañ hag o vont da benn an daol, hag o treiñ a-droc'h-trañch kaozeadenn vrezhonek e geneil en Saouzeg. Gwir eo, pe vrezhoneg da droiñ e saozneg, pe saozneg en brezhoneg, pe c'hallec'h en brezhoneg pe e saonag, se' oa memes tra dezhañ 'm eus aon, hep teukañ na sac'hañ na chom da chom da glask e c'herioù. (*)

Ar Vretoned all hag a reas prezegennoù: R.HUON (Lun vintin, 20) A.J.RAUDE (Merc'her baure, 22, diwar-benn AR C'HENVARC'HAD, a gomzas en div yezh a bep eil. O-daou e rejont ivez da julannourion pa veze ezhomm, kalz gwelloc'h eget ar jubennourien yaouank; met n'eus ket peadra eno da vezañ souezhat, o vezañ ma'z int boasoc'h eget ar re-mañ da vezañ brezhoneg ha yezhoù estren. Heñvel a vefe da lavarout diwar-benn KERLANN, seven, hegarat, farsus, mat, dev e voe dezhañ distreiñ da Bariz, kerkent hag ar sul da noz.

Kaozeadenn an Aotroù LIAM O BUACHALLA a oa diwar-benn IWERZHON hag ar C'HENVARC'HAD. Da c'houde e lavare dimp ur C'hembread: " Plijus-meurbet e oa prezegenn Aotroù Prezident Sened Iwerzhon, daoust ne oan ket a-du gantañ penn-da-benn ". Diskouez a rae ar prezegeger ne oa ket Iwerzhon tamm ebet enep ar C'henvarc'had, hag e oa a-du gant Europa Unanet hag ar Bad Unanet. Ha marteze e vo ar C'henvarc'had un tu da ziskouez e c'heller tremen hep ar saozneg. " Emglev Roma a-zivout ar C'henvarc'had n'eo ket bet troet en un doare ofisiel e saozneg, zoken!"

Kembraiz ha Kerneveuriz diouzh o zu a oa kentoc'h enep ar C'henvarc'had : sikourioù bras a vez roet d'ar baizanted gant ar Gouarnamant Londrez da zerc'hel o stal en he sav. Ha riskl a zo na ve an tu koll neuze ganto, mar bez kevezerezh war dachenn al labour-douar etre paizanted an Inizi Breizhek ha reoù an Douar-Bras.

(*) Ar weurzh vintin, an Ao.Y.Sikard, hag eñ galleg e vikanik e zisplegas e brezhoneg mat stad ar YEZH ER GEVREDIGEZH.

K L O Z A D U R

Kentelioù pouezus ha frealzus a zo hep mar da dennañ eus ar C'hendalc'h Keltiek.

Da gentañ. Souezhat-mik ez eo bet ar Gendalc'hidi gant niver ar Vretoned yaouank e deredet d'ar C'hendalc'h, brezhoneg ganto'leizh o genoù, paotred ha merc'hed seven hag hegarat, leun a virvidigezh. Betek leanezed an ospital lec'h e vezent o lojañ hag o tebrif ne ehanent ket d'o meulif. Rikouret ha milrikouret eo bet sozerion ar C'hendalc'h ganto a-hend-all. Ha Kuzul ar Brezhoneg ivez, mar plij !

D'an eil ret kreskiñ an darempredoù etre ar Broioù Keltiek. Divizet ez eus bet seven ur Burev etrekeltiek evit Aferioù ha Kudennoù an Arboellerezh. Un dra diaes-tre peogwir n'eus nemet Iwerzhon a gemont a zo mestr warni hec'h-unan, hogen gant ar C'henvarc'had o tonet e vo tostaet an eil d'eben mui-ouzh-mui ar Broioù Keltiek, mar keront ha mar poaniont da zougen dorn an eil d'eben.

E-touez an darempredoù-se, ret kreskiñ an darempredoù sevenedurel. Mañ e reas R. Huon o pouezañ a-du gant KAMP AR VREZHONEGERION. Hep chom da galfichat e gomzoù, en un doare sklaer ha spis-meurbet e verkas e oa dija un dra bennak a-bouez prest ha tout.

Kerkoulz all an eskemmadeg tud yaouank ha na vez ket roet ton a-walc'h dezhi marteze. Hogen amañ, mat eo merkañ ez eo c'hoazh gwalloc'h d'ar Vretoned yaouank chom da dremen an hañv, e Breizh, da beurzeskiñ o yezh.

Ur Burev-avezhioerezh e-keñver ar Skoliata a zo bet goulennet ivez ma vefe savet.

Ur mennad a-du gant al Lizher skrivet gant kelennerien eus Skandinavia d'an UNESCO da zifenn gwirioù ar yezhoù en arvar a zo bet votet a-unvouezh, gourc'hemenoù ar C'hendalc'h kaset d'ar galennerien o-unan.

Ne vefe ket mat na reizh echuiñ gant ar pennad hir-mañ hep ober hor gourc'hemenoù d'ar re o devoa prientet abaoe mizvezhioù ha mizvezhioù AR C'HENDALC'H KELTIEK: an Aotrou P. Denez hag an D-eil THEVENET eus kêr Landreger. Kement a verzh en deus graet ar C'hendalc'h ma c'houlenne Aotrou Maer Landreger " hag-efñ ne vefe ket tu d'ober unan bep bloaz evel-se, e Landreger !". Evel just, an D-eil Thevenet ha P. Denez a zo bet skoazallet gant tud all, met gouezet o deus klask ha kaout ar skoazell-se, ha renkañ pep tra ez-pervezh.

KENDALC'H KELTIEK

19 Eost 1962

(X-et Sui ar Pant.)

PREZEGENN AN TAD Y. CHAPEL

en

ILIZ-VEUR

LANDREGER

Va breudeur ha va c'hoarezed kristen.

Bep bloaz, pa zegouezh an hañv, e vez gwalet ur bern tud o vont gant o hent da weladenniñ amañ hag ahont an traoù kaer **krouet** gant Doue pe savet a-hed ar c'hantvedoù gant tud an amzer dremenet. Ul lod mat anezho a zeu evel-se da Vreizh.

Estlammañ a reont dirak kaerder hor bro : ar maezioù hag an traoñiennoù didouez gant ar c'hêrioù bihan skaochet e-touez ar gwez, ar Menez-Arre hag ar Menezioù du, an Ilizioù hag ar Chapelioù, ha dreist-holl ar mor, o flouañ goustadik an traezhioù gwenn hag ar bili, ar mor o vont gant al lanv don betek a-kreiz ar parkeier hag ar c'hoadoù, pe da zeiz ar wall-amzer, o sailhat en e gonnar ouzh reter ha kerreg an Aod.

Ya, brav-tre eo hor bro, hag ar re o deus bet an survad da vont da Iwerzhon, pe da Gembre, da Vro-Skos, da Enez-Vanav, pe da Gernev-Veur, a oar ervat n'o deus ket hor breudeur tramor da gaout avi ouzhomp er c'heñver-se. Bennozh 'ta d'an Aotrou Doue en deus roet d'ar Gelted un douar ken kaer.

Koulskoude, piv a gredfe lavarout n'eus ket a vraventez er bed

nemet e Kornog Europa ? Petra a vefe ul liorz ha na greskfa enni nemet bleunioù heñvel-mik o liv hag o stumm. Hag-efñ e ve eürusoc'h an dud ma ve o daoulagad, o fenn, o c'horf a-bezh, o gwiskamant diouzh ur petrom nemetken ? Daoust ha n'eo ket anat da lenner ar Skritur Sakr en deus bet levnez an Aotrou Doue o krouiñ milionoù a draoù, a blant, a loened, a dud disheñvel a-grenn an eil diouzh egile, pep hini anezho o kanañ hervez e vod meuleudi e Grouer ?

Ha se a zo ken gwir all war dachenn ar Spered. Hervez kelenna-durezh Sant Paol, bet klevet ganeomp bremaik, "Gras Doue a zo meur a zoare dezhi, hag en Iliz meur a gefridi a zo, meur a labour a zo". (1)

Gant gwir abeg 'ta e c'hallomp lavarout "Va Doue, me ho trugareka abalamour n'on ket evel ar re all".

Va Doue, me ho trugareka evit va zad ha va mamm, n'int ket tad ha mamm ar re all, me ho trugareka evit ar Vro hag ar Bobl m'hoc'h eus va hadet enno : ar vro-se gant an aer, an avel, ar mor hag an dremwelioù anezhi, ar bobl-se gant he boazioù, he yezh hag hec'h istor o deus roet fuzm d'am ene. Int a zo donezonoù kaer degemeret digant ho largetez, int a zo ouzhpenn-se hentoù ha gwenodenoù d'ho Kras da dizhout va c'halon ha va spered.

Va Doue, ni ho trugareka abalamour n'omp ket evel ar re-all, ni ho trugareka da vezañ grest ac'hanomp Kelted".

Setu aze, avat, ur bedenn gaer, a c'hoarzho goap marteze unan bennak... Ur bedenn gaer a ya dres a-enep d'an Aviel a zo bet embanet deomp a-raok ar brezegenn. (2)

Ar Farizian aet d'an Templ da bediñ Doue a lavare ivez : "Va Doue, me ho trugareka abalamour n'on ket evel ar re all", ha gouzout a rit pegen garv eo bet tamallet gant an Aotrou Krist ! - Gwir eo. Ar Farizian-se n'edo ket e gwirionez o veuliñ Doue, met o 'n em vaul veuliñ e-unan- Pa lavaromp ni e vennigomp an Aotrou Doue da vezañ grest Bretoned pe Kelted ac'hanomp, n'eo ket da lavarout en em lakomp uheloc'h eget ar re-all, en em gavomp gwelloc'h eget ar re-all, evel izili ur ouenn dibabet o tisprizout ar re-all hag oc'h ober fae warno !

Nann ! N'omp ket gwelloc'h eget ar re-all. Ar pec'hed, siwazh!

a ra kement a reuz e Keltia hag e lec'h all. Doue n'eo ket adoret, karet, servijet evel ma tle bezañ. Fals-doueoù a ren war lod ac'hanomp, staget m'emañ o c'halon gant al lorc'h, ar gasoni, ar c'hadaliezh, ar garantez direizh ouzh an arc'hant. Bretoned ha Kelted e-leizh n'eo ket ken avito an Aviel lezenn-stur ha skleri-jenn o buhez.

Anavezet mat eo, a-hend-all, hor gwall-dechoù, leziregezh-spered ha dizurzh, o deus c'hoariet ken pell en amzer dremenet hor broioù. Ni, diskibien Hor Salver J.K., hon eus 'ta d'en em zistrobañ atav muioc'h-mui diouzh rouedoù ar pec'hed, ni hon eus da ziwri-ziennañ an tachoù fall legadet deomp gant hor gouenn.

Diwallomp mat, padal. N'omp ket da ziwriennañ war un dro kement a zegas sev ha boued d'hor spered. War zigarez bezañ kristenien, n'eo ket ret an em nac'h hon unan evel Bretoned.

Klevomp adarre an Abostol St Paol ex pennad a zo bet lennet deomp hag un tammig pelloc'h ivez, en e lizher da Gorintiz. Displegañ a ra dezho penaos korf an den daoust dezhañ bezañ grest gant meur a ezel, a zo ur c'horf, unan hapken.

Izili ha skiantoù ar c'horf o deus pep hini o labour da gas en-dro evit brasañ mad ar c'horf a-bezh. Seul yac'hoc'h e vezo al lagad, seul dalvoudusoc'h e vezo d'an izili all. Ha ma teu da glañvaat an dozn pe an troad, deut mat e vezo 'michañs ar medisin gouest d'o fareañ.

Heñvel eo gant H.S.J.K. Ar re vadezet a zo staget outañ ha maget gant e Spered evel an izili staget ouzh ur c'horf a vez maget gant ar gwad anezhañ. - Gant ma chomint unanet dre liamm ar garantez, gwell a se mar deo disheñvel ar gristanien, gwell a se ma'z eus en o zueez re wenn, re zu, re velen, gwell a se ma'z eus Bretoned, Kelted, Germaned hag all. Ra chomo avat, pep hini en e roud da vezañ talvoudus d'ar re-all.

Setu aze menoziou ez oc'h boazet outo, c'hwi, va breudeur deredet amañ da geñver ar C'hendalc'h Keltiek. Meur a hini en ho touez zoken en deus gouestlet e vuhez da bareañ spered damglañv e genvroiz. Gouzout a rit ne c'honezot ket war an hent-se nag arc'hant, nag enorioù nag amzer da ziskuizhañ. Petra'vern !

A-hed ar wech eo bet ar Gelted diouzh tu ar Spere, ar Frankiz, ar c'haerder. N'o deus ket savet rouantelezhioù kreñv ha pinvidik war an douar. N'eus forzh ! O levezon war istor Europa a zo bet bras-kenañ, levezon ur goell eo bet peurvuiañ, levezon ar spere.

Emañ bremañ an oferenn o vont da genderc'hel. An oferenn n'eo ket Babel : Babel, rouantelezh al lorc'h, ar gasoni hag an dizunvaniezh.

An oferenn a zo skeudenn an Douar Nevez emaoamp en hent etrezek ennañ, an Douar Nevez a zo bet diskuliet d'an Abostol St Yann : " Goude-se, emezañ, e welis ur mor a dud ne oa ket posubl o c'hontañ, tuñ eus pep bro, eus pep gouenn, eus pep pobl ha yezh, en o sav sav dirak tron an Dan-Doue " hag o youc'hal dezhañ en o levezon.

Maget gant kentelioù an Aviel ha Korf H.Salver roet deomp er Sakramant, poaniomp 'ta, va breudeur ker enep al leziregezh hag an disablanted, da zerc'hel bev ha yac'h ar Vro gaer roet deomp gant Doue.

Ha poaniomp war un dro enep ar gasoni hag a lorc'h da chom unanet etrezomp-ni Bretoned ha Kelted, unanet gant holl bobloù Europa, unanet erfin gant holl vroioù ar Bed, en Iliz hor Mamm !

E.B.G.

- (1) Korintiz I,12(2sq)
(2) St Lukaz XVIII.

v v v
v

Kudannoù an amzer o ren

BREIZH HAG AR C'HENVARC'HAD

v v v

Ar merc'her 22 a viz Eost e oa bet gouestlet ar beurevezh da gudenn ar C'HENVARC'HAD hag ar BROIOÙ KELTIEK. Rener ar studiadeg (ar c'hadoriad e-giz ma leverer) e oa an Aotroù Per Bourdellez, beleg. Setu amañ 'ta festenn vrezhonek ar brezegenn-digeriñ a reas. Evel just n'eus ket ezhomm da lakaat ar skrid saoznek amañ.

Aotronez, Itronezed.

Kudenn unanidigezh Europa hag amzer-da-zont ar Broioù Keltiek eo danvez an abadenn-studi-mañ.

Broioù Europa a hañval bezañ oc'h unaniñ tamm ha tamm o buhezioù, kerkoulz war dachenn an Ekonomiezh ha war hini ar Politikerezh. N'hellomp ket kalz tra da herzel ouzh kement-se. Peseurt vad, peseurt droug a c'hellfe bezañ e gor evidomp. Setu ar gudenn.

Un diverrañ eus an darvoudoù, eus gonidoù ar spereuropek e-pad an daouzek vloaz tremenet a lakaio urzh en hon divizoù.

Er bloavezhioù 1949 ha 1950 eo e krogas an traoù a dro vat. E 1949 e voe krouet KUZUL EUROPA. 16 Gouarnamant souveren, dizalc'h a zo er c'huzul-se bremañ an deiz. Ur C'huzul liesbroadel eo eta, pep gouarnamant a chom mestr war e zaouaroù. Da gas war-raok unanidigezh Europa, ar C'huzul n'hell nemet reiñ alioù da bep gouarnamant, hag hemañ a c'hell o degemerout pe o nac'h.

N'hell ket eta Kuzul Europa ober kalz tra. Ha setu " paotred-araok " Europa Unanet, pa o deus gwelet n'helled ober ken war dechenn ar Politikerezh, o deus klasket unaniñ an Ekonomiezh evit

sachañ ar Politikerezh war-lerc'h. Er bloaz 1950, C'hwec'h gouarnamant o deus asantet sevel Kevredigezh Europa ar Gleoù hag an Dir. Teir Stad vras a oa ezno (Bru-C'hall, Alamagn hag Itali) ha teir vihan (an Izelvroioù, Belgia ha Luksembourg).

C'hwec'h hepken diwar c'hwezec ! Met ar Veli-Veur (uhelveli) a zo er penn a zo dreistbroadel, Kevredel, ha ne zegemer gourc'hemenn ebet a-berzh gouarnamant ebet. Ar pezh he devez sevenet a vez sevenet.

Er bloaz '54, ar strivoù, al labour a-du gant Europa a seblantas mont da netra pa nac'has Bro-C'hall asantiñ kevredañ an armeoù (Kevredigezh an Difenn). Hogen ar baotred-araok, an difraosterien, a adkringas gant o labour war dachenn an Ekonomiezh hag a oa bet frouezhus. E 1958 e savjont etre an hevelep c'hwec'h stad ar C'HENVARC'HAD, hag a zo bremañ brudet.

E penn hemañ, evel e penn Kevredigezh ar Gleoù hag an Dir, ez eus ur Veli-Veur na zegemer gourc'hemenn ebet a-berzh ar Gouarnamantoù. N'eo ket liesbroadel eta, dreistbroadel eo, ha kevredel.

Pal kentañ ar C'henvarc'had a zo diskar an traoù etre ar broioù, d'ar varc'hadourezh da vont e pep frankiz eus an eil bro d'eben, hag an dud hag an arc'hant kerkoulz all, ma ne vo Europa nemet ur marc'hallac'h hepken, a benn ar bloaz 1970, hag ur Stad hepken ar c'hentañ ar gwellañ goude.

E pevar bloaz en deus graet berzh ar C'henvarc'had en un doare souszhus. Trec'het en deus war an eneberien hep enebiñ outo, netra nemet dre ober gwelloc'h egeto. An testeni sklaerañ eo gwelout Breizh-Veur, goude bezañ stourmet, ha savet Emglev ar Seizh enep ar c'hwec'h, o c'houlenn bezañ degemeret er C'henvarc'had.

Ha setu bremañ n'eo kudennoù ar C'henvarc'had nemet Kudennoù-Kresk:

reiñ degemer da Vreizh-Veur, ha broioù all, marteze Iwerzhon, ober emglev gant Afrika hag ar Stadoù-Unanet- sevel Kenvarc'had al Labour-Douar.

- ha dalc'hmat(evit pell amzer c'hoazh), ar pal diwezhañ: Peurunanidigezh Europa en ur Vro hepken.

N'eus souezh ebet e chomfemp nec'het e toull dor Europa,

pe vont e-barzh pe chom er-maez. Broioù galloudek a zo bet ken nec'het all.

An U R S S a drelat netra nemet klevout anv Europa. Breizh-Veur a stourmas ouzh Kuzul Europa kent dont da vezañ ezel anezhañ- Sevel e reas Emglev ar Seizh keñver-ouzh-keñver gant hini ar C'hwec'h, met bremañ e c'houlenn bezañ degemeret e-touez ar re-mañ.

Bro-C'hall n'eus nemeti o nac'hañ sinañ Gwirioù an Den e Kuzul Europa- Nac'het he deus ivez degemer Kevredigezh an Difenn. Met gant ar C'henvarc'had e labour start.

Arabat dimp eta huñvreal, e vo Europa nevez na peurvat na peurfall. Lec'h a vo da goll ha lec'h a vo da c'honit. Met ne vefe nemet koll evit ar Broioù Keltiek o vont davet Europa evel tud dall pe dizunanet.

Ur c'hanned eus pep bro a zisklerio bremañ e venozioù war ar c'hudennoù-mañ. Goude-se e vo un diviz etrezomp.

Da sklaeraat ha da urzhiañ an diviz-se ez eus bet kinniget deoc'h ur roll-goulennoù. Marteze hoc'h eus goulennoù all d'ober, pontoù all da ziskleriañ; met mar plij heuliomp urzh ar roll:

da gentañ: penaos e c'hell Kuzul Europa hag ar C'henvarc'had levezoniñ amzer-da-zont pep hini eus hor Broioù

d'an eil : penaos mirout ha startaat an darempredoù etrekeltiek en Europa Nevez. Kement-mañ a vo un digoradur da zivizoù an endervezh.

(2)

BREIZH HAG AR C'HENVARC'HAD

Al lodenn-mañ eo an hini a oa da vezañ displeget gant an Aotrou Bourdellez da glozañ, nemet e oa en em gavet re verr an amzer. Anat e oa avat, war brezegenoù dileuridi ar Broioù Keltiek all, nemet hini Iwerzhon, ne oa ket darev o speredoù da zegemerout ar C'HENVARC'HAD. Daoust ma'z eo kentoc'h ur steuenn eget ur gwir zisplegadenn, ha ma vefe ezhumm da astenn meur a boant, ez eo re brizius komzoù hor c'henlabourez evit m'o lezfemp a-gostez pa ma rafemp fae warno. (Notenn gant B.H.)

EVIT BREIZH EO AR C'HENVARC'HAD UN DANJER BRAS:

1) Kalonenn ar C'henvarc'had eo Gwalarn Europa: Lotringen, Elzas, Broioù ar Ster-Roen, Bro-Velgia, an Izelvroioù - Pariz e-uan n'eo ken nemet Versailles Brusell.

Ar broioù tu an diavaez : Breizh, Kreisteiz Itali h.a. ne raint berzh ennañ nemet dre youl : skouer Jerze ha Monako (Douaroniezh diwar youl)

2) Breizh a zo ur vro sekret war dri gostez gant trajoù-maltouterezh ha porzhioù-mor chomet diaoz abaoe ar bloaz 1932- Holl Binvidigezhioù ar bed (glaou, houarn, gloan, kotoñs h.a.) a dremen dirak porzh-mor Brest, met n'eo ket digor an nor dezho.

Gwelloc'h eo gwelout govelioù an Henbont o kouezhañ hag ar vi-cherourie o tivroañ eget o sotreañ da zegemer glaou marc'had-mat dre vor.

D'an deiz kentañ a viz Here 1962 e vo gwashoc'h c'hoazh : prizioù an hent-houarn a vo keraet, a serro ivez tu an douar-bras. Adalek neuze e vo keroc'h c'hoazh pep tra da brenañ ha ret gwerzhañ gwelloc'h marc'had.

Emaomp o vont er C'henvarc'had gant porzhioù-mor diaoz-linenoù hent-houarn fall-sozet ha ker.

Setu evit ar Vro: GWELOMP BREMAÑ AN DUD.

1) Emaomp o vont er C'henvarc'had gant ur bobl n'he deus ket ar skolioù ha deus ezhomm anezho. Kalz re nebut a skolioù-micher, nebutoc'h c'hoazh a skolioù-labour-douar (4% e-lec'h 50%, ha souden 100 % e Bro-Holland) - ha Skol ebet war he yezh hag he sevenadurezh-Gouzout mat a reomp eo an dilerc'h kultural abeg pep dilerc'h.

2) Emaomp o vont er C'henvarc'had gant ur boblad tud kozh, faezhet o c'halon pa vo aet diganto o bugale.- Tud hag a dameller dezho, eus Pariz, bezañ a re war an douar. " Perak, eme ur c'hentañ Ministr, e c'hñ ar Vretoned bugale ? "

MET HA PA VEFE KANT GWECH DANJERUSOC'H EO GWELLOC'H DIMP MONT E-BARZH EGET CHOM EVEL M'EMAOMP.

N'eo ket me, na Breizhad all ebet kennebut en deus krouet al lazerenn: " Pariz hag ar Gouelec'h Gall ". En ur gêr vihan hag he

deus kollet an hanter eus he zud, ez eus bet 10 eured etre miz Eost warlene ha miz-Eost ar bloaz-mañ. 3 diegezh nevez a zo c'hoazh er vro, met daou a zo war vont kuit. Doust hag e chomo an diwezhañ ?

Em c'hêriadenn e-lec'h ma oamp 52 bugel er skol n'eus ken nemet 8. Er bloaz-mañ, va amezeg tostañ a zo en em grouget, unan all a zo marvet beuzet, soubet en alkool-

Al labourerien-douar yaouank n'eus e gortoz evito nemet chom dizemez, labourer start evit eostañ rivin. Petra'raint neuze? Epañ hag en em grougañ ivez ?... Ar baotred yaouank a gomzan anezho a zo baotred yaouank dispar. Met pa vez re bonner bec'h an dizesper e vez trec'het ar c'halonoù startañ.

N'it ket da grediñ e washaen dre blijadur. Darvoudoù a zo bet a Breizh, ha c'hoazh e vo, hag a destenio ez eo gwir kement-mañ ha gwashoc'h c'hoazh.

RET EO DIMP MONT ER C'HENVARC'HAD. N'eo ket bet savet dre garantez evidomp, met da vihanañ ne ziskouez ket ober fae warnomp.

Bank Europa he deus roet ali hag harp evit gwellaat stad hon hentou-houarn, evit lakaat an tredan dre hor maezioù.

Govelioù an Henbont hag a oa barnet d'ar marv gant Pariz a vo, a lavarer, miret buhez dezho gant Alamanned.

Mar deu Breizh-Veur ha Bro-Spagn ennañ, hag ar Stadoù-Unanet diwezhatoc'h, e vo Breizh, Bro-Gembre, Bro-Iwerzhon n'eo ken lec'hioù distro, met Kreiz ar C'henvarc'had, divrec'h Europa digor da zegemer. Brest en taol-se, a vefa digoret d'ar madoù a dremen betek vremañ evit lakaat sorc'henn.

DA SEVEL ER-MAEZ EUS AN DIZESPER hon eus ezhomm eus ar C'henvarc'had. Arabat mont ennañ evel tudigoù dilerc'hiet ha faezhet. Ar C'henvarc'had a zo un hent digor. Arabat mont warnañ gant div-c'har troc'het.

R E T eo dimp a-barzh mont ennañ kaout skolioù, skolioù-micher, skolioù labour-douar ha kelennadurezh war hor yezh hag hor sevenadurezh, hon istor - d'ober tud ganimp.

R E T eo dimp kaout hevelep kelennadurezh dre Radio, dreist-holl evit al labourerien-douar - rak hol labourerien-douar ne chomont er skol nemet 14 vloaz - Ha peogwir o deus well-wazh 54 bloaz, ez eo deuet labourerien-douar ar bloaz 2000 er-maez eus ar skol a-benn bremañ.

R E T eo dimp ivez, a-benn mont er C'henvarc'had, karut hentoù-houarn aozet-mat ha marc'had-mat. Porzhioù-mor kerkoulz all.

C'hoazh ur wech, ne vean pegen dañjerus eo, ar C'henvarc'had eo an toull diwezhañ da ziflipañ eus krabanoù an dizesper.

N'eo ket ken dañjerus hag hini-kreñv, kordenn ar groug nag ar gouelec'h gall.

Met evit bezañ lodenn e park ar C'henvarc'had eo R E T dimp kaout ar Skolioù
ar Radio diouzhtu
an trenioù

R E T pe V E R V E L

0,0
0

n'ankounac'hait ket ho prof evit " Kuzul ar Brezhoneg "
teñzorier:L.Morvezen,6 Bali ar Gar, Konk-Kernev (P.a.B)
K.R. 13 16 - 63 An Naoned

Tud Mor Bro

P E N N E R C ' H R E I S T E I Z

Ur mestr - pesketaer breizhat : Loeiz K A L L E G

~~~~~

D'ar 6 a viz Eberel 1956 e varve trumm e-kreiz e vrud, e Kameled, ur mestr-pesketaer Loeiz KALLEG p'edo e vag war-nes loc'hañ diouzh ar porzh evit mont da c'hriheta war aodoù an Afrik. Ne vos ket komzet nemeur anezhañ er c'hazetennoù pemdeziek eus ar vro, ha koulskoude Loeiz Kalleg a oa anezhañ eus gouarn an dud-a-vor taer ha kalonek a grouas dre o labour pennek hag o ijin pesketaerezh Breizh evel m'e anavezomp hiziv.

UR PAOTR TAVEDEK

N'am eus gwelet ar C'hallek nemet ur wech, pa zeuas asamblez gant mistri-pesketaer all ha marc'hadourien-besked d'ur vodadeg dalc'hat e Kambr-Gofivers Kemper, d'en 11 a viz Kerzu 1954. Dalc'hat em eus soñj eus ur paotr kstiz ha du e vlev, doare dezhañ da vozañ tavedek. Hag e gwir ne rannas ger, koulz lavaret, e-pad ar vodadenn. Selaeu a reas avat, gant evezh ar pezh a vos lavaret gant an aotronez deut eus Pariz evit an em geout gant tud a vicher. Ar gaoz a oa war stad al legestreta hag ar grilheta, na petra'ta, a oa fall a-walc'h d'ar mare ha diwar pezh a vije da ober evit ma toufe war vad. A dra sur e vije mat kavout bazennoù nevez e vije stank ar grilhed warno, met e palec'h mont d'o c'hlaek ? Ket eo soñjal ez eo bet taolet dija o rouedoù pe o faneroù gant hor pesketaerien war gement bazenn beskedus a zo etre aodoù ro-c'hellek ha yen Bro-Skos en hanternoz hag aodoù geuniek ha tomm-gwirizias ar Gambi saoz er c'hreistaiz, hep menegiñ inizi'zo eus an Antilhez hag ar Bahamaed an tu all d'ar mor Atlantel.

Komzet em eus dija eus al labour-meur-se sevenet gant paotred Kameled ha Douarnenez en hanterenn gentañ ar c'hantved-mañ hag a zo kaset war-raok an deiz a hiziv, gant o mibien pe o gourvibien. ( cf. AR GRILHETA E BREIZ, Sterenn, 2, C'houevrer 1941 ).

Loeiz Kalleg, evel ar vistri all eus Kameled a oa eno, en doa e soñj diwar-benn ar gudenn-se. Kaout a rae dezhañ e oa tu da bakañ grilhed,ruz-roz o liv, a oa stank c'hoazh e don ar mor e kostez ar Vaouretani, rak ne oant bet pesketaet morse a-zevri gant ar Vretoned na gant pesketaerien ar broioù all, hag eno e vije talvoudus mont, moarvat.

Kinnig a rae antronez Pariz ur yalc'had da zigoll ar baotred a yafe du-hont d'ober un taol-esa ma ne zufe ket da vat ganto. A oa mat a dra sur. nemet ma ne vije ket koll ne vije gonit ebet, ha sed end-eeun pezh a lakae ar vistri a oa eno, da dermal.

Pilavar e chomas Loeiz Kalleg e-pad ar vodadeg. Ne ziskuilhes ket e soñjezon wirion a oa graet sur a-walc'h d'ar mare-se. Lentegezh diouzh e berzh, pe evezhiegezh pe aon c'hoazh na vije bet graet goap outañ gant Douarneneziz, anezho paotred taer ha distagellet mat o zeod, hag int ampant-kenañ a-hend-all war ar vicher grilhed-glas ? Piv'oar ? Pe marteze e oa eus an dud-se a soñj " e talv un oberezh kant lavarer ".

## E E FOLLENTEZ VIHAN

Ur miz bennak a-raok, en doa Loeiz Kalleg roet urzh da sevel ur vag evitañ e chanterioù Chauffetaud, er Sabl, departamant ar Vande, ha bremañ e oa-hi echu hag a-barzh nemeur e c'hellfe loc'hañ ganti evit e veaj kentañ.

Ur vag vras an hini e oa, 30 metr hed dezhi, war ha bourzh daou geflusker nerzh pep unan kement ha 120 jav. Brasañ bag Porzh Kameled e oa d'an ampoent hag hi aozet evit ar vicher-c'hirilhed er morioù pell, plas a-walc'h enni da lakaat war-dro 20 tonellad-pouez a besked krogennek bev. Roet en doa da anv dezhi " Ma Petite Folie ". P'am boa goulennet ar perak eus an anv-se, iskis a-walc'h war va men, e voe respontet din e oa abalamour d'ur ganaouenn a veze kanet ha diskanet gant an dud d'ar mare-se. A c'hell bezañ ! Marteze e oa ivez, a gav din, abalamour m'en doa soñjget ar C'halleger ne oa ket bet fu - tre o lakaat sevel ur vatimant ker bras ha ker koustus hag ef erru

dija war an oed ha tost d'e retred. A oa gwashoc'h: edo war-nes mont e morioù na anaveze ket peogwir en doa pesketaet dreist-holl betek-hen war aodoù Breizh hag e felle dezhañ kavout un dachenn-labour nevez d'e gamaladed e-lec'h mont eeun hag eeun war o roudoù. Pa soñje mat, e kave moarvat e oa un tammig diskiant evitañ en em deurel en avañtur e-giz-se.

Ne voe douetañs ebet ken da gaout war soñjezon wirion ar C'halleger pa voe gwelet e vartoloded o kas war al lestr nevez-flamm ur c'hantad kewell da vac'hañ grilhed hag un donellad pesked da dalvezout da voued d'o dadennañ e-barzh. N'eo ket da bakañ grilhed glas eo edo ar C'halleger o vont, e soñjas Kamelediz, peogwir e vezont tapet peurvuiañ gant rouedoù. Koulskoude ar paotr fur ma oa a glenkas ivez e bourzh e vag un toullad rouedoù dezhañ da ober ar vicher c'hirilhed glas, betekout na zeufe ket e daol gentañ da vat.

A-raok kinnidiñ da vat, deiz Sul Fask 1955, e voe benniget gant lid ar vag nevez gant an Actrou Person. Un engroez a oud a oa eno hag int bamet gant bras ha kaer ma oa al lestr nevez. Riskoazh kement all n'oa bet gwelet an o forzh. Dorn eus an dud deuet da arvestiñ ouzh ar vadeziant a savas war ar bourzh d'ober un dro war dourioù sioul ar porzh hag ar pleg-mor, hervez ar c'hiz.

Un devezh joas e oa bet an devezh-se. Joa evit ar C'halleger hag ef puzh ar stur o lakaat e lestr da dreiñ-distreiñ war ar mor glas evel ur garnigell, hervez e youl. Joa ivez evit Kamelediz, paotred tuet ar grilhed, o welout un toulladig diouto o vont da labourat war un dachenn nevez ha difraost eus ar mor. Al lorc'h a oa ar C'halleger an devezh-se ne oa ket digemmesk-kaer moarvat, un tammig enkreiz a ranke bezañ en e greiz: " Ha dont a rin a-benn eus va zaol ? ", setu ar goulenn a rae outañ a-unan gwech ha gwech all, moarvat. Mat bast ! Kuit a soñjoù du en un devezh ker kaer all na yao d'ar friko gant ar gerent hag ar vignoned.

\*\*\*\*\*

UR MAOUTIG NE DA KEN

\*\*\*\*\*

Loc'hañ a reas Loeiz Kalleg diouzh Kameled d'ar 25 a viz Ebrel 1955 gant e lestr nevez-flamm hag ur wech tremenet e-biou da Veg ar Gerreg-Hir e lakaas penn er c'hreisteiz.

Ur wech erru e kostez ar C'hab Gwenn, en Afrik, e krogas da glask grilhed ruz-ruz hag e taolas e baneroù er mor. Hini ebet ne baskas. Derc'hel a reas da glask, met taol gwenn a reas bep gwach. Ma renk as eta dilezel ar c'heinvor da vont da labourat en aod, e-giz pautred Douarnenez.

N'en devoe ket muioc'h a chañs eno, rak e-kerz 10 devezh-lebour ne c'hellas tapout nemet un hanter tonellad grilhed glas. Nebeut-nebeut e oa, peogwir ma talc'hfe ar pesketaerezh e giz-se en dije lakaet 6 miz da hanter-gargañ e lestr nemetken. Distreiñ a eure d'e venoz kentañ hag eñ oc'h ober penn er c'heinvor. Ennañ e-unan moarvat e sante broud an anken. Met krediñ a rae c'hoazh koulskoude e c'hellfe kargañ e lestr gant grilhed ruz-ruz e berr-amzer, nemet ne ouie ket re vat da beloc'h mont.

Toullañ a reas kaoz gant mistri ar chaluterien a gave war ar mor bras, hag e voe aliet ganto da vont muioc'h er c'hreisteiz, pezh a reas. Laouenik e voe moarvat d'an 22 a viz Mae, rak an deiz-se eo erd-eeun e pakas e c'hilhed kentañ, div anezho hepken !

Derc'hel a reas da glask. War ali ur mestr-pesketaer eus Bro-Spagn a oa o tregiñ dre eno, e reas penn muioc'h c'hoazh war-du an donvor hag erfin e kavas ar pesked krogennek edo o klask.

Etre 55 ha 70 metr sond e oa. E gevell taolet er mor gantañ, e pakas, an taol-se, 96 grilh ruz-ruz, ha re vras peogwir e save ar pouez anezho-holl da 340 lur. Kalonekaet gant arasketadenn vras-se e talc'has hor pautred da labourat hag e-doug ar 5 devezh war-lerc'h e tapjont well-wazh 600 lur grilhed bemdeiz.

Distreiñ a rankas ar C'hallec da Borzh-Stefan, er Vaoureneni, da lakaat ur c'hlañvour en aod. Deut en-dro en donvor e klaskas adarre bazernoù peskedus, ken na gavas a-benn ar fin un dachennad-vor ma pakas 1800 lur-pouez grilhed bemdeiz ! Un taol-grilhed !

Koll amzer a reas goude avat, rak e-pad 5 devezh ne c'hellas ket sevel e gevell gant a greñv ma oa kas an dour dindan nerzh an avel. Karget e lestr gantañ a-barzh ar fin ez eas ar C'hallec ur wech c'hoazh en aod da baka grilged glas a ouie tennañ arc'hant anozho, rak ur priz met e vezont gwerzhet bapred.

D'an 21 a viz Gouere e oa erru en-dro e porzh Kameled. War vor e oa chomet tost da dri miz.

Aet e oa ar maout gantañ ! E gwir, ur maoutig ne oa ken, ha treut a-walc'h c'hoazh. Rak ouzhpenn ma varvas lod kaer eus e c'hilhed a-pad m'edo war hent an distro, n'en devoe ket evit ar peurrest eus e lestrad ar priz edo en-gortoz anezhañ, dre ma oa

mentet re vras ar pesked krogennek a oa deuet gantañ, hag int dianav o stumm hag o liv d'ar pratikoù. Deg figus e reas ar varc'hadourien-besked.

\*\*\*\*\*

## T A O L - G W E N N !

\*\*\*\*\*

Ne gontin ket dre ar munud an teir beaj a reas c'hoazh Loeiz Kalleg war aodoù Afrika gant e " Follentez Vihan ". Ne ziskoueze ket bezañ ker foll-se a-benn ar fin !

Ma oa anat, diouzh an droiad edo o paouez ober e oa c'hoazh e don ar mor grilhed a vil-vern, n'en doa ket peurziroustlet ar gudenn, ha meur a skoilh a ranke c'hoazh kavout war e hent.

Ur wech paket grilhed, ez eo ret o degas bev-buhezek (1) da Vreizh d'o gwerzhañ d'ar varc'hadourien a zo ouzh o gortoz, all ganto o c'haout. N'en devoe ket gallet ar C'hallec degas en-dro da Kameled nemet teir donellad grilhed, ar peurrest o vezañ bet taolet er mor, en desped dezhañ ha d'e gompagnuned, e-giz ma c'hellit krediñ. Gwashoc'h c'hoazh e voe an eil beaj, rak o vezañ aet kerkent war ar bazernoù kavet a-ziagent, ne voe ket hor pesketaerien evit mirout bev ar grilhed a vac'hjont er o c'hevell : mervel a raent kerkent ha lakaet e strad ar " Follentez Vihan ".

Etu ma voe ret d'ar C'hallec dilezel an donvor da vont en aod d'ober ar vicher c'hilhed glas, evel Douarneneziz, ken na zeuas en-dro da Kameled gant ur garg eus ar re-mañ hepken.

Perak e varve ar grilhed ruz-ruz evel-se, pa chom ar grilhed glas bev-buhezek e-pad mizvezhioù ha mizvezhioù goude bezañ bet tapet ? Ar grilhed-glas, evel ma ouzoc'h marteze, a vev tost-tost d'an aod, da lavarout eo nepell diouzh gorre an dour. Eval-se 'ta ne vezont ket diaesaet betek re pa vezont paket ha dastumet er c'hilbelloù (2), er bigi breizhat pa chomont bapred tost da c'horre ar mor.

(1) Pe gentoc'h RET E DA, rak n'eo mui ker ret all abaoe m'eo deut ar c'hiz da virout lostoù ar grilhed nemetken, goude bezañ o sklaset d'o lakat kalet evel skorn.

(2) Ar bevlec'hioù, mar deo gwell ganeoc'h, da lavarout eo ar c'hilbelloù auzet e strad ar bigi da virout bev ar pesked Cf B.H.N-enn 14



Disheñvel eo avat, gant ar grilhed ruz-ruz, anezho pesked kro-gonnek o vevañ pellik diouz an aod ha rak se, e lec'hioù don a-walc'h. Gwelet hon eus dija en doa ar C'hallek paket bernioù anezho dre 55-75 metr sond, met kavet e vezont donoc'h c'hoazh ha betek 200 pe 300 metr sond. Neuze p'en em gavont e bourzh al listri, n'emaint ket en "o bleud", ma c'heller komz e giz-se, o vezañ ma'z eo tommoc'h eno ha ma n'eo ket ken stabil hag e foñs ar mor.

Sed aze da nebeutañ penaos eo bet displeget gant gouzieien'zo ar varventez war ar grilhed ruz-ruz a lakeas nec'het hor pesketaerien d'an ampoent.

#### UN HUÑVRE O TONT DA WIR

A c'hell bezañ ! Daoust pe zaoust, ne voe ket kement a c'hirilhed o vervel e-pad an trede beaj a reas ar C'hallek e-kostez ar Vaouretani, ha rak-se e voe kalz frouezhusoc'h eget an eil e pep kañver. Moarvat ez eo a-bouez merkañ e voe graet e-pad ar goañv.

Loc'hañ en doa graet ar C'hallek diouzh Kameled d'an 20 a viz Kerzu 1955 ha d'an 11 a viz C'hwevrer e oa distro. Ne oa chomet war vor eta nemet 53 devezh. Ur veaj honnezh, hag a oa bet graet buan ha buan !

Oc'h erruout war ar bazennoù peskedus a anaveze met bremañ, e oa en em gavet ar C'hallek eno gant al lestr "Tramontane", gant Joz Haskoed deus Douarnenez da vestr warnañ. Teurel a eure er mor ar 175 kavell a oa deuet gantañ. Mat-mat e voe ar pesketaerezh. E korf 16 devezh labour e pakas Loeiz Kalleg hag e vertoloded war-dro 6.200 grilh, ar pouez anezho o sevel da zaouzek (12) tonellad. Bev-buhezek e choment, ar wech-mañ, e bourzh al lestr ken e oa ur blijadur evit ar besketaerien sellout outo o tifreñ hag o sevel an eil re war ar re all.

Evezhiet-mat e voe outo war hent an distro, hag ez eas pep tra evit ar gwellañ, nemet e kostez an inizi Kanariaz ma krogas aon en hor paotred o welout 400 grilh o vervel e-kerz daou devezh. En holl avat, ne voe taolet er mor nemet 600 grilh varv, da lavarout eo 10 % eus ar gargad. 10.760 kiload grilhed a voe gwerzhet gant ar C'hallek war-bouez 460 lur ar c'hiload. Ur priz izelik e oa.

Ne vez ket prizet ar grilhed hag al legistri bras kement hag ar re vihan. Priz ar c'hilo a vez diouzh ar pouez, hag ez a ar priz

uhelañ d'ar grilhed a zo o fouez etre 400 hag 800 gr. Pouezañ a rae ar re a oa bet degaset gant "Va Follantez Vihan", 4 lur pep hini well-wazh. Laouenik e voe ar C'hallek memes tra.

\*\*\*  
\*\*\*

D'an 28 a viz C'hwevrer e kimiada Loeiz Kalleg diouzh Kameled evit e bedervet beaj hag a dlee bezañ, siwazh! an hini diwezhañ evitañ.

E soñj, ar wech-mañ a oa kaout evit e varc'hadourezh ur priz uheloc'h eget ar gwechoù all. Hag evit-se e klaskas pakañ grilhed bihanoc'h eget ar re en doa degaset a-raok.

Ne gavas ket dres, ar grilhed edo o klask, nemet ne vias en e vourzh nemet ar re a blije dezhañ. Eval-ae 'ta, ar grilhed bras-bras,- ouzhpenn 2000 anezho a oa o fouez etre 4 ha 7 lur !- a voe adskoet gantañ er mor. Un doare-ober aus ar gwellañ hag e tleje ar besketaerien teurel muioc'h a evezh ouzh pinvidigezhioù er mor eget na reont peurvuiañ, pa'z int douget re alies da zistrujañ didruez kement pesk na c'hell ket bezañ gwerzhet ur priz dezant.

O vezañ ne vias nemet an dibab e poueze well-wazh ar grilhed a zeuas gantañ 300 grammad nebeutoc'h eget ar wech a-raok. Ouzhpenn se, ne oa ket bet diaes dezhañ kargañ e lestr, ha d'ar 1-añ a viz Ebrel e rae "Va Follantez Vihan" penna war-du Kameled ma errue eno dek devezh war-lestr'h. Gwerzhañ a reas ar C'hallek 12.300 kilo a c'hirilhed hag ar priz en devoa evito a savas well-wazh da 550 lur.

#### LAOUENIK AR MESTR KALLEG

Tennañ a ran diouzh ur skrid-danevell kement-mañ : "Da zastum, laouen a-walc'h eo ar mestr Kalleg gant e besketaerezh diwezhañ, hag e lavar ez eo bet kaset da vat gantañ ar pevarvet taol-arnod-se. Pesketaet (1) en deus ar wech-mañ war bazennoù nevez a zo muioc'h

(1) Treiñ a ran strizh ar galleg ofisiel-se, ha setu perak e sk e skriven "pesketaet". War ar c'hraf-se, ne ziskouez ket ar galleg bezañ ker resis ha ken berr hag ar brezhoneg a lavar "pesketa", met ivez, diouzh tro, "grilheta", "morlouaneta", "sardineta" hag all...

en hanternoz ( 19°50' led hanternoz) eget ar re a veze hoaz da besketa warno a-raok ( 19°24' led hanternoz). Keuz en deus avat, da vezañ chomet hep teurel e baneroù dre 150-200 metr sond evel ma oa en soñj ober. N'en deus ket gallet avat, sac'het ma oa e ardivink-sondañ. Setu perak ez eo chomet e-pad 8 devezh ouzh haul war ar vazenn gentañ, plijet ma oa gant ment ar grilhed a gave eno.

Ur c'hrih vihan bennak en deus bac'het en e gevell,-war-dro ul lur pouez enno ha 27 santimetr o ment (1)- met nebeut-nebeut a oa ajezho. Un taol-eas all a raio marteze ar mestr Kalleg, muioc'h er c'hreisteiz avat, etre 18° 20' ha 18° 24' led hanternoz, dre 80 pe 100 metr sond m'eo bet lavaret dezhañ gant mistri-chaluterion eus ar Spagn hag eus ar Marok e veze kavet grilhed hag int etre 400 grammad ha 2 lur pouez enno. P'en deus gouezet kement-se e oa re zivzhat dezhañ da vont di da welout, e lestr o vezañ karget a-benn neuze "

Ar skrid m'eo tennet anezhañ ar pennad emeur o paouez lenn a zo bet savet d'ar 16 a viz Ebrel 1956, nebeut amzer eta goude distro ar C'hallek.

En e niverenn eus ar 7-8 a viz Mae ec'h embanne ar gelaouenn " Ouest-France " ar c'heloù ranngalonus eus marv trumm mestr " Va Follentez Vihan " c'hoarvezet ar gwener a-raok, diouzh an noz, p'edo o vont, gant e garr-dre-dan, eus e lestr d'ar gêr.

Evurusoc'h eget an darn-vrasañ eus an dud, en doa Loëz Kalleg maget en e spered ur menoz meur hag e oa bet lezet amzer a-walc'h dezhañ gant an Aotrou Doue, ha nerzh a-walc'h d'e seveniñ. Evel-se' ta, en doa gallet toullañ a-raok kimiadiñ da vat diouzh ar bed-mañ, un hent nevez d'ar grilheta, e Breizh, a gemero a-ziwar neuze ul lañs nevez.

A B E R H E L

uuuuuu  
uuuuu  
uuu  
u

( 1 ) Hervez ul lezonn-stad e vez muzuliet al legistri hag ar grilhed eus penn " ar rostr " betek penn pellañ al lost.

BARR-HEOL HAG AR BED

U L L I Z H E R

Karthada d'an 3 a viz Gouhere (1962)

Aotrou Person,

Dudi am eus bet o lenn niverenn Meurzh " Barr-Heol", ha dreist-holl ar pennadoù diwar-benn ar yezhoù. Souezhet-bras on bet evelloc'h o lenn ne oa ket ar c'hechoua\* " barrek tamm ebet da sèrvijañ da gelennañ an Aviel ". Emañ ar wirionez geneoc'h, pa skrivit " diase eo intent penaos en ur ober 400 vloaz n'eur ket deuet a-benn da ober gant ur yezh kozh evel ar c'hechoua, forzh pegen koueriadekaet ma c'helle bezañ, ur benveg gwevn a-walc'h da ladañ an anaoudegezh resis eus ar Relijion gristen hag eus kelenadurezh an Aviel ".

Ha souezhetoc'h a se e tleomp bezañ ma ra an Iliz gant ar c'hechoua abaoe 400 vloaz end-eeun-, a zo muioc'h : skignet ha deus an Iliz ar c'hechoua dre genderc'hel war roudoù an Inkaed. Evel ma skriv Alfred Métraux en e levr " Les Incas " (Editions du Seuil, Pariz, 1962):

" En abeg d'an Iliz Katolik ez eo ar c'hechoua, a veze radiet sujidi an Inkaed d'hen deskiñ gant o mistri, deuet a-benn ar fin da drec'hiñ war ar yezhoù all; deuet eo da vezañ yezh voutin an Uheldirioù, eus an Ekwador betek Hanternoz Arc'hentina "... Kenderc'hel a ra zoken ar c'hechoua da c'honit tachenn, rak ar visio-nerion a ra gentañ da avialañ ar meuriadoù "gouez" er rannvroioù amazoniat.

Abalamour da gement-se ez eo arvet ar c'hechoua "lengua general " ( yezh voutin ) gant an Indianed. Ouzhpenn, bez'ez eo ur yezh gouest abaoe pell'zo da zisplegañ menozioù difetis. Lennet em eus n'eus ket pell war ar gelaouenn " Diogène " ( embannet gant Kuzul Etrevroadel ar Brederouriezh hag ar Skiantoù Denel ), ar pennad-mañ : Francesco Davila, AR PASTUR MAT ( Sarmon Pask 1646) troet diwar ar c'hechoua ha meulet gant Georges Dumezil.

(\*) Kichua eo stumm BARR-HEOL, Meurzh 1962, hervez MISSI.

Tennet eo ar sarmen-mañ eus un deotumad sarmonioù e div levzenn embannet e 1646 ha 1648 gant un droidigezh spagnolek. Setu pezh a skriv an Ao. Dumezil :

" Ar prezegennoù a zo bet ampennet ha skrivet e kechoua, anat eo an dra-se. Diskouez a reont pezh a c'helle ober ur spered donezonet-mat gant ar c'hechoua evel ma oa bet legadet gant Impalaerded an Inkaed d'ar re o devoa he distrujet. Ar beleg Davila n'en deus ket bet da c'hoveliañ benveg e brezegenn, evel m'eo c'hoarvezet gant ar visionerien e kement a bobloù hag a vez graet "pobloù gouez" anezho. Kavet en deus ur benveg eus ar gwellañ, gwevnaet gant meur a rummad beleien ha skiantourien, ur yezh ha na oa ket barzhoniell hepken, hogen meizel ivez, mat da verat kealioù hep forc'hellegezh na dizampartiz. Sur-mat e vo e levr en amzer da zont, vit an adc'hinivelezh o tedarzhañ, e-touez levrioù klasel ar c'hechoua."

Ui lennegezh en deus ar c'hechoua, hag anni oberennoù skrivet gant beleien; rak-se e c'heller bezañ souezhet neuze o welout, hervez ar pennad a venegit, emañ an Iliz o tilezel ar c'hechoua, goude bezañ graet gantañ e-pad pevar c'hantved.

Ouzhpenn m'en deus ar c'hechoua un hengoun lennegel, ez eo c'hoazh ur yezh komzet gant milionoù a dud e rannvroioù meneziek ar stadoù-mañ : Ekwador, Perou, Bolivia, hag en hanternoz Arc'hentina. E rannvroioù'zo, un darn vras eus an dud ne gomprenont ket ar spagnolek. Biskoazh n'eus bet kement a dud oc'h ober gant ar c'hechoua, abalamour da gresk ar boblañs abaoe 100 vloaz, ha da emled ar yezh diwar goust yezhoù indianek all.

Kas a ran deoc'h va hetoù gwellañ a vuhez hir da VARR-HEOL, ha va gouzoc'hemennoù gwellañ.

Geneoc'h a greiz kalon.

P. Penneg.

0000  
0 0  
0000

Bro-Velgia

KEIN - O U Z H - KEIN

Gwall nec'het eo bet en em gavet Eskibien Velgia gant kudenn Skol-Veur Leuven, en askant d'ar stourmerien flandrezegerien a venne ober gant ar Skol-se ur greizenn sevenadurel flandrezat. ( Cf Barr-Heol, Meurzh 62). A dra sur ne oa ket aes ar gudenn-se da zifuilhañ. Pa ne oa tu ebet da virout ar Skol ovel m'edo, pa gawe da Urzhaz Katolik Bro-Velgia e oa ret koulskoude derc'hel ar skol en he sav, ez eus bet divizet, evel ma oar hol lennerien, ober div lodenn enni: ul lodenn flandrezek hag ul lodenn c'hallek. Kein-ouzh-kein ez eo bet lakaet an daou rumm. Da welout da vihanañ. Hogen kentoc'h, d'hor meno, emañ an tu-koll gant ar Flandrezegerien evit meur a abeg.

Gallout e raent soñjal e vefe aloubet ganto ar Skol-Veur. An dro-mañ ne vo ket, rak ur chaoser a zo savet da ziwall ar galleg, hag ar c'hallegerien. Flandreziz hag Hollandiz a oa a-walc'h talvoudgezh ar chaoserioù meur o deus savet a-hed o aodeier da herzel ouzh ar mor da veuziñ o douaroù, izaloc'h e kalz a blasoù eget liver ar mor. An dro-mañ ez eus bet savet ur chaoser ivez, met anep d'ar morad flandrezegerien.

Tu a vefe bet marteze da sevel e Wallonia ur Skol-Veur all, katolik. N'eo ket moarvat evit abegoù erc'hant ha dispignoù o deus souzet an Eskibien hag ar Gatoliked, met dre ma'z eo Skol-Veur Leuven ur Skol hollvrudet, ur Skol anavezet, koulz lavarout, dre ar bed-holl. Ha koll a vefe bet a dra sur, war ar poent-se gant ar Skol-Veur nevez. Ha setu and-seun palec'h an tu-koll gant flandreziz, rak ur wech deuet da vezañ evel heritourien ar Skol hollvrudet a vefe bet well-a-se o sevenadurezh dezho o-unan betek tizhout ur renk etrevroade!, e-lec'h chom dreist-holl ur sevenadurezh anket, dre gaer pe dre heg, en Europa( dreist-holl bremañ pa'z eo echu gant trevadennoù an Nederland, e Broioù ar Sav-Heol pellañ)

En Antwerpen e talc'h an trouz bepred en ilizoù enep d'ar prezegennoù gallek. Diviz an Eskob o verañ an ilizoù hag an eurioù ma vefe aotreet prezeg e galleg n'en deus ket degaset sioulder ha peoc'h, rak ar sul 9 a viz Gwengolo, en iliz Sant-Jozeb, kerkent ha ma stagas ar beleg gant e brezegenn c'hallek, ec'h en em lakaas manifestourien da ganañ kantikoù flandrezek, hag e voe zoken un tamm krogad gant polised en sivil a oa o klask bouñtañ er-maez an drouzerien. Anat eo ne venn ket ar flandrezegourien reiñ ul lec'h ofisiel d'ar galleg en o bro, hag e tamallont d'ar c'hallegerien c'om hep klask kemerout perzh e buhez ar Gumuniezh flandrezat.





Daoust ma talvezo TELSTAR da gas a-us d'an Atlantik skeudennoù-tud, dre ar Skinwel, e servijo moarvat kalz muioc'h evit an Telefon, pe ar PELLGOMZ.

Ma ! setu d'ar c'houz m'emañ ar Vretoned o paouez dont a-benn a-benn da zeskñ un tamm galleg propr a-walc'h, ez eo poent dezho soñjal pegañ war an Amerikaneg ! Bez'emañ ar c'hiz gant ar Frañsiziñ da veuliñ o galleg hag o stal, da lavarout eo, da son o c'hloc'h o-unan ( evel m'eo tachet pep den d'hen ober, rak an hini a son e gloc'h a son anezhañ pa gar hag evel ma kar ! ) ha Ministr ar P.T.T. e-unan o vezañ n'helle ket c'hoari gant e c'halleg a zo bet klevet o kas e c'hcuc'hemennoù d'an Amerikaned evit o labour dispar, e saozneg ! Ma ! ar Vretoned a zo risklet da sachañ war o chouk, ma talc'hont da cheñch langaj evel-se, ar vrud da vezañ un tammig ( lakomp ! ) skañv o fenn. Ha n'o devo ket laeret ar vrud-se, e gwir gwirionez.

\*

Met, ne servij ket lavaret : un amzer nevez a zo o tigeriñ, ur bed nevez a zo o tont warnomp, kalz buanoc'h eget na soñj dimp. En ur ober dek vloaz, ne vo mui den ebet evit anavezout Bro-Lannuon na zoken ar vro-mañ a-bezh a zo risklet da vezañ fontet ha cheñchet penn evit penn.

N'eo ket nec'het an dud kement-se abalamour da se ! N'eus mui nemet ur rumm-tud pe zaou ha n'int ket prest a-walc'h c'hoazh da gemerout o flas er bed nevez: ispisial ar venajerien a vez o terriñ o c'horf noz ha deiz, hep gwelout kaer da belec'h e ver o kas anezho. Konversanted vihan ar bourkoù n'ay ket o stal war wellaat moarvat, kennebeut. Konversanted Lannuon o-unan n'int ket sur tamm ebet, eus o jeu. Hag ar micherioù all ? An taol-mañ ez eo kont un tamm bihan, evel ma vez kont gant ar brezelioù. Lavarout a reer e oa bet darbet d'ar Frañsiziñ koll ar brezel 14-18, evel ar brezel 70, dre na oant ket prest, e-giz m'o deus kollet ar brezel diwezhañ, e 1940. Bezañ prest ! Eno emañ an dalc'h.

Hep kelennadurezh penaos e c'heller bezañ prest ? Piv en du deus soursiet da reiñ d'hor yaouankizoù ar gelennadurezh o devoa ezhomm da vezañ barrek da antren er bed nevez ? Pa vezont o redek bep sul, bep gouel, bep pardon, an dañsoù betek 2 ha 3 eur diouzh ar mintin, a dra sur, n'int ket nec'het gant ar pezh a zo ouzh o gortoz.

Ar voull vihan-se TELSTAR, 15 sm treuz dezhi, 15.000 pezh enni, bet lakaet da vont en-dro d'an douar, an 10 a viz Gouere

1962, a zo sklaer-tre he c'hentel d'ar Vretoned : kiañ outi pe vervel ! Unan a zaou.

( Tennet eus KOULMIG AR GINDI, hep kemmañ ger )  
22 a viz Gouere 1962

Notenn gant BARR-HEOL: Den ebet ne oar dre just penaos e tremeno an traoù evit Bro-Lannuon, nemet ez eus riskl bras dezhi da vezañ beuzet gant estrenien, tud deuet a-ziavaez-bro.

Ha neuze Lannuon gant an doueroù tro-war-dro zoken n'eo nemet ul lodenn vihan eus Breizh. Derc'hel a ra departament "Aodoù-an-Handernoz" da goll he zud. Kantonioù Mael-Karaez, Kallag, Benac'h, Roc'h-ar-Yeodi, Pontzev, Kastellaodren, Uzel a zalc'h ar boblañs anezho da goazhañ : tremen 10 %, en ur ober 8 vloaz. E kanton Mael-Karaez ez eo eet war-dreñ niver an dud eus 14,21 %. Kantonioù all evel Plistin, Plouared, Landreger, Boulvriag, St-Nikolaz, Rost-en, Gwareg, Plagad, Mur, Plouwinaz, Koad-Linez, Mardri-gneg, Kœln, Broñs, Ploulan, Staol er c'huzh-Heo da St Brieg, ha Lezardrav, n'eo ket kalz gwelloc'h ar stal enno. E kantonioù an Argoad n'eus nemet hini Loudieg a gement a zalc'h e grog; en tu-hont d'ar re hon eus meneget uheloc'h, e weler a-walc'h o deus kantonioù evel Korle, Kintin, Lafnon, Pempoull, Plouc'ha, Pleug, Monkontour, Yugen, Plankoed, Matignon, Evran, Kergaza, poan a-walc'h o terc'hel o renk\*

E kêrioù bras evel Sant-Brieg ( kantonioù an Handernoz hag ar G'hreisteiz ), Gwengamp, Dinam (tu ar Sav-Heol) e weler ar boblañs o vont war gresc'h, da vat. Un nebeudig kantonioù eus an Arvor evel Perroz, Plounevez-Penteür, Plouvalae ez eo chomet difiñv kont ar boblañs, war a seblant.

Er bloaz 1866 avat, e oa bet niveret 641.210 den. Hag evit ar bloaz tremen : 497.852, ar pezh a ra ur goazhadenn eus 150.000 den well-wazh. war-dro ar bloaz 1866 e oa bet bleunius-tre ar vro, dindan c'houarnament Napoleon III, ha soñj am eus da vezañ klevet ur c'hozhad ganet ar bloaz 1839, ha marvet da 94 vloaz o komz gant un doujañs eus ar vrasañ eus an Impalaer: " Dal ma oa en em gavet Napoleon e oa bet gwalet aour e-touez an dud ! " emezañ. Ar pezh a zo zo sur eo e oa bev ar Vro, d'ar mare-se. Dav a oa bet kreskiñ pe adsevel ur bern ilizoù hag a zo kalz-kalz re vras an deiz a hiziv, war-dro ar bloavezhioù 1850 ha diwezhatoc'h betek fin ar c'hantved pe dost.

\* Anvioù-lec'h: Plouwinaz=Plouguenast, Kœln (pe Keun)=Caulnes Broñs pe (Bron)=Broons, Kergaza: La chèze.

## Breizh hag an Unesco

### GOULENNADEG KELENNERIEN A SKANDINAVIA

Da Guzul an Danmark, en Unesco  
Da Guzul Bro-Finn d'an Unesco  
Da Guzul Bro-Norvegia, da Guzul Bro-Sued.

Ni hag a sin emañ war-lerc'h, kelennerien ha mistri-koñferañsoù ar Broioù Skandinavia, a bed gent doujañ Kuzulioù ar Broioù Skandinaviat en Unesco, da c'houlenn, pep hini en e bart e-unan, pe gentoc'h holl a-gevret, da c'houlenn digant Sodadeg-Veur an Unesco e Pariz, kemerout muzulioù a-benn diwall ar yezhoù hag a zo, evit abegoù politikel pe abegoù all, en riskl da vont da get a-barzh nemeur pe a zo o vevañ e plegioù re ziaes evit ma c'hellfent en em ziorren.

Un dra vat e vefe d'an Unesco envel ur strollad yezhourien hag a vefe o c'harg sevel roll ar yezhoù en argoll, ha kinnig muzulioù evit o saveteiñ. Un dra a bouez e vefe e teufe ar c'houlennadeg-se a-berzh Broioù an Hanternoz, rak diouzh un tu e komprenont gwallec'h eget an darn-vuiañ eus ar broioù all talvoudegezh hep he far ur yezh e-keñver buhez sevenadurel ur bobl bennak, ha diouzh an tu all, forzh pegen dister ez eo niver o foblañs emaint e-touez ar re a boagn ar muiañ da virout o-unan o yezhoù broadel, en ur zivall ivez ivez war an dro, ar yezhoù bihan komzet war o douaroù.

En amzer a ren ez eus en holl vroioù pe dost strolladoù ha lezennoù o tiwall traoù an natur. Stourm a reer da herzel da vont da get seurtoù rouez ar plant hag al loened; ha n'hallomp nemet bezañ a-du kreñn gant kement-se. Hogen - e kement ha ma ouzomp - n'eus ket ur gevredigezh, ha pa ve ken, anavezet gant ur gouarnamant, gouestlet da zifenn ar broadelezhioù bihan hag ar bobloù naturel, ez-vras, ha da virout o yezhoù hag o sevenadurioù, ez-ispisial. Ur seurt labour koulskoude n'eo ket disteroc'h tamm ebet, a gav dimp, eget difenn seurtoù-plant ha seurtoù-loened.

Nivorus ez eo abegoù an dras-se. A-wechoù ez eo diouiziegezh an dud a-keñver ar bobloù hag ar yezhoù eo a zo kaoz. Hogen an abeg kentañ-holl hep mar ebet ez eo an nebeut a istim hag anaoudegezh evit an talvoudegezhioù a zo stoc ouzh yezhoù ha sevenadurioù ar bobloù bihan. An darn-vuiañ eus ar bobloù hag a vez graet anezho pobloù sevenaet, pe bobloù tizhet ganto stad ar sevenadurezh, a sell o doareoù-bevañ dezho o-unan hag o sevenadur

eve traoù un tamm brav a-us da reoù ar bobloù bihan, hag ispisial da reoù ar bobloù naturel. Marteze e c'heller kaout ez eo gwir kement-se, e keñverioù'zo, met ne ro ket kement-se da bobl ebet ar gwir da gas da get pobloù all naq en o c'horf naq en o spered.

N'eus ket ezhomm, sur-mat, da lakaat Kuzulioù ar Broioù Skandinaviat, en Unesco, da deurel evezh ez eo politikerezh emledañ ar Stadoù bras an hini eo ar skoilh a harz ouzh ar bobloù bihan da vevañ o buhez dezho o-unan, hervez o hengounioù, en ur zerc'hel mat d'o yezhoù. Ar politikerezh emledañ-se, ma ne gaver ket doareoù evedus a-walc'h da virout outañ da vont re bell, ne zeuio anezhañ nemet ar frouezh-mañ : peurzistrujêt pe beurlonket e vo ar bobloù bihan gant unan vras hepken, pe gant un toulladig bihan-bihan a reoù vras.

Deoust dimp da vezañ kustum da brizout hor sevenadur-ni eus broioù ar C'huzh-Heol, evel trec'h da hini kalz a bobloù all, ez eo arabat ankounac'haat n'eus patrom ebet degemaret gant an holl da varn dioutañ talvoudegezh ur sevenadur bennak. Ha zoken pa vezo sellet pizh ouzh hor sevenadur-ni, diouzh reolennoù an onestiz, e renkimp anavez ez eus ennañ perzhioù ha na roont ket nemeur a enor dimp, ha ne gaver ket e-touez ar bobloù naturel. Hag er c'heñver-se emañ ar re-mañ a-us dimp.

Kemeromp da skouer ar yaouankiz dihentet : ar gudenn-se hag a zo kan grevus en amzer a ren, a hañval bezañ dizanav d'ar bobloù naturel. War dachenn an arz emañ kont evel-se ivez ar bobloù a seller evel pobloù sevenaet, o deus abaoe meur a zegad bloavezhioù emprestat ur bern traoù digant ar bobloù naturel.

Diouzh un tu, gant pobloù ar sevenadurezh ez eo muioc'h war-raok Skiant-ar-Yec'hed, hag an Deknikelezh eget gant ar re all. Hogen gallout a reomp respont penaos e-touez ar bobloù naturel a c'hoari ar veventi vras enep ar re-boblañ en un doare ha n'eo ket krisoc'h eget ar brezelioù, anezho en hor broioù-ni, betek ur poent'zo, efed ha frouezh ar re boblañ-se and-eeun. Ha pa gomzimp eus an Deknikelezh, n'eus tu ebet da nac'hañ penaos ar stummoù nevez da grouiñ ma madoù gant mekanikoù, ha da gaout dre-se ispisialourien o labourat war dachenoù strizh, a zo bet, allazi, m'eo disterast e pep den an nerzh-krouiñ hag ar blijadur da grouiñ. Hag ouzhpenn, politike-rezh ar gwerzhañ hag a zo e bal gwerzhañ traoù ar muiañ ar gwellañ ar marc'hadmatañ ar gwellañ n'en deus graet koulz lavarout nemet demet derc'hel da gas war-draoñ, hep paouez, madelezh ar varc'hadou-rezh.

Diskouez a ra kement-se holl ez eo silvidigezh ar pobloù bihan un dra eus ar pouezusañ e-keñver sevenadurezh, hag hervez ar gredenn a zo en hor c'hreiz, un taol-bruderezh bras e broioù Skandinavia a zeufe a-benn da c'honit ar bobl da gas war-raok al labour a-du gant ar pobloù naturel ha zoken muioc'h a-se a-du gant ar broadelezhioù bihan, muioc'h "diorroet" war dachenn ar sevenadurezh. Ar c'hlemmadegoù savet anezho o-unan un tamm dre-holl e Skandinavia, ouzhpenn ur wech, a-enep an doare ma ra ar re wener ouzh an dud a-liv en Unvaniezh Kreisteiz-Afrika a zo ur merk hag un testeni a-du gant ar pezh a ziskleriont amañ.

oo  
oooo  
oo

Mar fell dimp eta dougen dorn d'ar strolladoù dinden gazel-gê, e tleomp en em c'houlenn da gentañ penaos en em gomerout.

An diskoulm berrañ e vefe, na petra'ta, terrin ar mella I: 2,7 eus reolennoù-diazez an ONU ha lakaat en e lec'h un diviz o roññ "an ONU ar gwir da emellout" en aferioù -diabarzh" ar stadoù-se. Hogen n'eus ket nameur da grediñ e tizhfed lakaat kemañ an traoù war ar poent-se, ha neuze douetusoc'h ez eo c'hoazh e tapfe an ONU pourchas dezhi hec'h-unan ar galloud a zo ezhomm da gas da bennvat ar seurt emellerezh.

Bez'ez eus evelato un dachenn ha n'eo ket laret tamm ebet e kavfe warni en ONU ur skoilh didrec'hus-krenn, un dachenn a-bouez bras-meurbet evit difenn ar sevenadurioù a gomzomp anezho: tachenn ar yezh. Ha pa vo lavaret arvat an traoù henezh eo tu pouezusañ ar gudenni:

Difenn yezhoù ar broadelezhioù bihan hag ar pobloù naturel, setu eze an diazez a dle bezañ kemeret evit kement a vo graet da wareziñ ar rummadoù-pobloù-se.

Ha m'emañ kont evel-se ez eo abalamour n'eo ket ar yezh, evel ma kav da galz a dud, ur benveg trok-didrok o servijañ da zisplegañ menzioù ha soñjoù kmet ha tout; ar c'hontrol, stag ez eo en un doare diskoulmus-krenn ouzh ar menzioù hag ar soñjoù-se. Ken lies yezh, ken lies stumm-soñjal.

Faos ez eo ivez krediñ, evel ma reer alies, ez eo trec'h yezhoù ar pobloù a vez graet anezho pobloù sevenaet, da re ar pobloù hag a vez graet anezho pobloù naturel. Evit ar yezhour, hag a zo ar barnar nemetañ barrek war an dachenn-se, n'eus yezh ebet a gement a zo trec'h d'un all; pep yezh he deus he madelezh

dezhi hec'h-unan. Gwir eo ez eus kalz a c'herioù o sellout ouzh ar skiantoù hag an teknikoù o vankout da yezhoù ar pobloù naturel, met n'eus digarez nag abeg ebet da gement-se nemet n'o deus ket bet tu ar pobloù-se d'ober ganto: o degas a raint e diabarzh o yezhoù, pe dre grouiñ gerioù nevez pe dre amprestañ digant re all, pe vezo ezhomm. E-giz-se eo o deus graet a-viskoazh ar pobloù desket hag e-giz-se e talc'hont d'ober c'hoazh. Hogen an darnvuiñ eus yezhoù ar pobloù naturel a zo gouest da zisplegañ, dreist-holl -keñver ar chadennañ-menzioù, arlivioù kalz liesdoareetoc'h eget re ar pobloù diorroet. Tu a vefe da reiñ amañ skouerioù e-leizh, hogen na vefe ket ur seurt displeg en e lec'h amañ.

Peogwir ez eo stag-ha-stag en ur mod didorrus ar yezh hag ar menoz, ha peogwir ez eo ken kreñv all al liamm a zo etre ar soñj hag ar sevenadur, neuze da heul distruj ur yezh e teu distruj ar sevenadur m'eo ar yezh-se ar benveg-displegañ anezhañ. Enep al lavar -se n'heñler ket kaout a gredomp, skouer enep d'hen dispenn. Morianed Amerika, hag o deus dilezet o yezhoù genidik evit kemerout ar saozneg, o deus miret a-walc'h, gwir eo, o dañsoù hag o c'hanaouenoù-pobl, met netra ouzhpenn, na c'hoazh n'o defe ket miret kement all, anez dienez ha paourentez tud wenn Amerika war an tachenoù-arz-se hag o redias o-unan da amprestañ digant re all.

War baouraat ez a ar bed bep tro ma varv ur sevenadur. Aes-tre ez eo da skouer ijinañ dre ar spered petra'vefe al lannegezh ma krogfe an holl bobloù da skrivañ er memes yezh. En ur goll o yezh o-unan, e kollfe ar skrivagnerien pep darempred gant hengounioù o bro, ha dre ar bed a-bezh e teufe al levrioù da vezañ mui-ouzh-mui hañval an eil ouzh egile, evel takennoù-dour.

E meur a geñver e vefe ampletus-tre, hep mar ebet, evit pobloù an Hanternoz laoskel o yezhoù o-unan evit degemerout ar saozneg. Hogen piv a asantfe? Den ebet, evit gwir, rak holl e santont dre natur ez eo stag-ha-stag yezh ha sevenadur an Hanternoz, hag ez int zoken an hevelep tra. E-giz-se emañ kont gant an holl bobloù-daoust pe Ielandiz pe Feroez hag a zo ar yezhoù anezho e savete a-benn bremañ; pe Gatalaniz, a oar lakaat doujañ o yezh daoust dezhi da vezañ gwallgaset hep paouez; pe Eskimoed ha Laponed m'eo gwarezet o yezhoù, hep bezañ trawalc'h koulskoude c'hoazh; pe Euskariz hag an Ainoued - ar re-mañ henvroidi ar Japan - hag a vez graet brezel d'o yezh a-zevri-bev pe daulet dispriz warni hag a zo o vont hep mar ebet da verval ma ne vez graet netra efedus d'o saveteiñ.

Al labour-se e silvidigezh hag a c'houlennomp amañ a zo mall hen ober. Bep degad bloavezhioù e weler o vont da get meur a hini eus yezhoù bihanañ ar bed, ha mar ne stourmer ket enep ar pleg-se, e vo gwalet a-berzh nemeur o vervel yezhoù bras a-walc'h zoken. Da skouer, jedet ez eus bet penaos a-raok 40 vloaz amañ e vo bet skubet an Euskareg komzet e rannvroioù euskarat ar Frañs, ha kalz gwa-shoc'h eo c'hoazh stad an Ainoueg.

Da virout ouzh pep treuzintent ha pep treuzdiskleriadur eus hor mennad a-berzh tud brizh-youlet, e verkomp splann ne lavaromp tamm ebet n'o deus ket ezhomm ar pobloù bihan da zeskiñ yezh o amezeien niverusoc'h egeto, pe ur yezh "vras" bennak all. Spleitus eo atav evit an darn-vuiañ eus an dud gouzout meur a yezh, hag atav ez eo kement-se evito a dra euz, ur gonid e-keñver sevenadur.

Hogen kudenn ar mirout yezhoù ar pobloù bihan n'emañ ket da vezañ kumprenetavel-hen : "pe" met "hag". Deskiñ yezh ur bobl all ne sinifi ket e tleer abalamour da se dilezel yezh an-unan. An dra-se hag a zo evidomp-ni, Skandinaviz, sklaer evel lagad un naer, a zo dreist komprenet kalz a bobloù bras.

Berr-ha-berr, pouezañ a reomp c'hoazh ur wech war ar poentoù-mañ:

- lazhañ ur yezh, ur sevenadur hag ur bobl a zo tra heñvel
- en degouezhioù politikel a vremañ, netra nemet difennidigezh ar yezhoù hag en ur muzul bennak, hini ar sevenadurioù a c'heller kas da bennvat.
- ordrenañsoù diouz se a dle bezañ graet da stagañ ar c'hentañ ar gwellañ gant al labour-difenn-se.

Rak-se e c'houlennomp digant Kuzulioù Broioù an Hanternoz en Unesco, da goulz o bodadeg veur e miz Eost 1962, reiñ o ali a-du gant hor mennad hag en em glevout etrezo da ober a-gevret o c'hinnig a-benn kentañ Emvod-Meur an Unesco ar 17 a viz Gwengolo 1962.

Lund, ar 1-añ a viz Mae 1962

( Sinet eo ar c'houlennadeg gant 52 kelenner ha mestr-koñferañsoù, en o fenn an Aotrou Naert, eus Skol-Veur Lund )


ROLL AR YEZHOU  
en  
ARGOLL

Da heul kelc'hlizher ar gelennerien Skandinaviat e lakomp darn eus ar roll savet ganto eus ar yezhoù an argoll


- Ar Frizeg e Gwalarn an Alamagn ( ket avat e Nederland )
- Ar Sorbeg e Luzasia ( Reter Germania )
- Ar Skoseg ( gouezeleg ) e Gwalarn Bro-Skos
- Ar Brezhoneg, e Breizh
- An Euskareg a bep tu d'ar Pireneoù, e Spagn hag e Bro-C'hall
- Al lodenn vrasañ eus ar yezhoù kaokaziek ( nemet ar Georgieg )
- Ar Samoiedeg, en Hanternoz an Dural
- Ar yezhoù bihan finnougriek ( Finlandia, Lenn Onuga, Pleg-Mor Riga
- Ar yezhoù bihan turkek, (Siberia, Kaokaz)
- Ainoueg, en hanternoz ar Japan
- An Tibeteg abaoe aloubidigezh ar vro gant Sinaiz
- Yezhoù Henvroiz Aostralia
- Ar yezhoù indianek, ar Stadoù-Unanet hag en darn-vuiañ eus ar Stadoù amerikan all.
- Ar Bochimaneg hag an Hottentoteg

Al labour a c'houlennomp, eme c'hoazh ar gelennerien, a zo c'hoazh d'ober war-dro ar RANNYEZHOU, da skouer an Okitaneg, e Bro-C'hall, ar Galaikieg e Gwalarn Bro-Spagn... An Istrouroumaneg en tu ar Sav-Heol da Istria, ar Meglenoroumaneg, e Gwalarn Salonike.

Gwelout a reer ez eus div yezh keltiek en argoll: Gouezeleg Bro-Skos, ha neuze hor Yezh-ni. En ur gompagnunezh hir emaint. Evel m'hon eus merket uheloc'h, paj. 8 ez eo bet degemeret a-unvouezh gant Kendalc'hidi Landreger ar mennad da gas o gourc'hemmoù da Gelennerien Skandinavia hag ivez war an dro da gas al lizher-se, war o anv, d'an UNESCO.



Degas a reomp da soñj d'hol lennerien e krog koumanantoù BARR-HEOL gant niverenn gentañ ar bloaz. Dre-se neb a gemer ur goumanant e-kerz ar bloaz a vez kaset dezhañ an niverennoù bet moulet dija, er bloaz-se.





## BENEAD

## BRECHHAD - PLOUZ..... BOZAD GREUN

mm  
mmmm

Hag-eñ e vefe ar Geltrd donezonet ispisial evit rakwelout traoù ?

Setu pezh a soñjen, ur wech muioc'h, o lenn pennad ar breizhad Mikael de PENFENTENYO ( 1 ), diwar-benn ur breizhad all, an Tad de la CLORIVIERE, anavezet mat bremañ gant hol lennerien. Souezhus eo penaos en deus ar jezuit m'edo diouganet an Dispac'h a-benn 1779, e-pad m'edo person e Parame : " teñvalderioù ar baganiezh o c'holeiñ adarre an douar, an ilizoù diskaret pe drouk-roet d'an idoloù, gwad ar fideled o ruilhal war an aoterioù..."

Met souezhusoc'h a zo c'hoazh : e 1808, e-keit ma oa toull - bac'het gant Napoleon, e skrivas Clorivière displegadenoù diwar-benn Diskuliadur Sant Yann, chomet diembann, siwazp, betek vremañ evito da vezañ a dalvoudegezh vras, hervez an ispisialourion. Dedenne e oa bet a-viskoazh gant al Lev'r Sakr-se, met an zav a ra ne voe digoret da vat e zavalagad nemet pa voe bet tremenet dirazo freuzh ha reuz an Dispac'h. An amzer dremenet a sikouras anezhañ da zizoleiñ amzer da zont an Iliz.

Evel m'hen lavare Rene Bazin : ur sklerijenn souezhus a bar en testennoù Clorivière; n'hon eus ket ar gwir da lavarout ez int profediezh rik; daoust ha n'heller avat komz eus rakwelerezh ur prederour meur a oa, war un dro, un dan santel ? Goude bezañ displeget ar goulioù graet da Vab-Den gant soñjazonoù difeiz ha distrujus an Dispac'h, en em c'houlenne Clorivière gant peseurt louzoù e c'hellfe pareañ ar gristenien. Peseurt armoù reiñ d'ar Gatoliked evit ma teufe ar trac'h ganto ? Clorivière en deus moarvat lennet en dazont pa respont :

- Komuniañ alies ( Pius X )
- Anzav hollvestroniezh ha difaziusted ar Pab ( Pius IX, kentañ Sened Meur ar Vatikan ).
- Enoriñ ha pediñ ar Werc'hez Vari " skedus evel an heol, spouronus evel un arme renket evit an emgann ". Kemenn a ra an Tad C. e vo ar maread da zont Kantved Mari: sklaer eo evidomp n'en deus ket faziet.

- Bodañ ur Sened Meur, a vo dispar, emezañ, ken bras ma vo e c'halloud hag e levezon. Sklaer e vo da bep hini e vo ar Spered Glan e-unan o ren ar Sened-se en e holl zivizadurioù.

Gant ma vo bet amañ ivez an Tad C. sklerijennet gant an Aotrou ! Gant ma teuo da wir ar soñj diwezhañ-mañ evel m'eo c'hoarvezet evit ar re gentañ.

Ar pennad-se en deus degaset din en-dro koun eus al levr kaer savet gant Remon CHRISTOFLOUR diwar-benn GRIGNON VONFORZ (2). En ivez a boueze war ar spered a profediezh a oa sur-mat hini St Loeiz Vari. Diouganet en deus Monforz kreskidigezh souezhus an devosion d'ar Werc'hez en hon amzer. Lejior Vari a zo bet moarvat rakwellet gentañ, hag ivez an enebiezh ferv he deus kavet war he hent, e Bro-Sina, da skouer. Lejior Vari gant he merzherion, gant ar frouezhioù diniver a santelezh he deus lakaet da zareviñ.

Monforz en deus gwelet : " gouezviled o tont fuloret da zrailhañ dinuan o dent diaoulek ar skridig-mañ ( Le Traité de la Vraie Dévotion à la Ste Vierge ), hag an hini bet implijet gant ar Spered Glan evit hen skrivañ; pe da vihanañ o tont evit serriñ anezhañ e-barzh ur c'houfr teñval he mut, evit ne zeuje ket er-maez ". En gwirionez ne vo kavet " Ar Gwir Zevosion " nemet dre zegouezh, hag e 1842 hepken, 126 vloaz goude marv Monforz. Ha pa soñjomp nen eus bet kavet betek vremañ brezhoneger ebet evit trañ e brezhoneg oberenn gaer ar Breizhuhelad ! Un oberenn a zo bet moulet 55 gwech e galleg, 21 wech e flamankeg, 2 wech e japaneg, 5 gwech en arabeg, e katalaneg, hag en ur bern yezhoù all, bras pe vihan !

Daoust ha ne oa ket un dro-spered a seurt-se ivez gant Ernest HELLO, ar skrivagner bras e dalvoudegezh, re n'ebus anavezet siwazh ! gant e genvroidi o-unan ?

Ha Felisita de LA MENNAIS ? En a-raok edo war an amzer ma veve anni, ar pezh a zispleg ul lodenn eus e walleurioù. Skediñ a ra, a gav dimp, luc'hedenoù a rakwelerezh en e oberoù, hag adkavout a reomp enno un heklez eus ton meurdeuz profedet an Testamant kozh.

War un dachenn all, hini ar skiantoù, ha ne gav ket deoc'h e vije bet Jul VERNE un diouganer gwirion ?

N'on ket evit komz hiroc'h amañ eus kement-se; hogen spi am eus e vo displegat dimp, deiz pe zeiz gant ur prederour a vicher, Maodez GLANNDOUR, a zo bet dedennet ivez gant ar menoz-se.

Ret e vo deoc'h degas da soñj dezhañ en deus bet prometet hen ober. Evidon-me en em c'houlenn muioc'h-mui : daoust hag e vefe riklet mantell Elia diwar divskoaz ar Vretoned ?

mmm

Ha c'hoarvezet eo bet deoc'h douarañ en un enezennig du-hont, du-hont, pelloc'h eget Douar Bro-Skos ? Neuze ho pije klasket e-pad pell, bauset er vrumenn, treantet gant ar yenijenn, hep klevout tra nemet trouz an tonnoù ha garm an evned-mor. Hag a greiz-hol, setu ar porzh bihan gant un toulladig bigi dislivet o vrafsellat sioulik; un darvoud bras eo pa dosta bag an ti-post ouzh ar c'hae, div wech hepken ar sizhun. Tro-war-dro, tiez bihan ar vartoloded hag a-dreñv, paour a-walc'h ivez, un nebeut mereurioù. Ret eo kantren pelloc'h evit tizhout ho pal a-benn ar fin: ur manati bihan, iskis, nevez a-grenn maz eo, ha kozh-Noe war un dro doare an dud a zo o chom ennañ.

Un degemer hegarat a zo bet graet deoc'h, mat betek-hon n'hoc'h eus gwelet see-vanac'h ebet. Ar sal gumun a zo plijus ha tomm, gant levrioù ha kazetennoù war an daol ha kadorioù-brec'h aes, evito da vezañ kozh. Kammed n'ho pije kredet e vije bet an Tad Abad e-unan, an den-se, a oad-etre, gwisket gant dilhad teuc'h, heñvel-mik ouzh re ar besketaerion pe gouerion du-se. Gwall-souezhet oc'h pa doull kaoz geneoc'h ken eeun ha ken digor all.

Ya, ofisour war vor eo bet e-pad ar brezel diwezhañ. Ya, ar re all a zo, hogozik holl, martoloded kozh, deuet en enezenn-mañ war e lerc'h, tri bloaz'zo. Nann, n'int ket beleion, n'eus beleg ebet en o zouez betek-henn; dont a raio hini pe hini da chom ganto diwezhatoc'h, mar deo bolontez Doue. St Benead e-unan ne oa ket bet baleget. Evit ar mare, ur beleg a zeu, ur wech an amzer, evit oferenñ ha kofesaat.

Nann, n'int ket menec'h, da vihanañ hervez ster kanonek ar ger-se. Tud a vev asamblez dindan Reolenn St Benead ha gant bannozh o Eskob ne lavaran ket. Bevañ a reont diouzh ar Reolenn gozh en un doare strizh a-walc'h : paour-razh - pep tra kumun ken-etrezo - o kousket en hevelep kambri - o vuzuliañ an eurioù evel gwechall, hervez an heol. Studiañ a reont teir eur bemdez. Ar peurrest eus o amzer, e labouront er parkoù, e stalioù-labour ar manati, pe o pesketa war o bagoù. Dreist-holl, e pedont hag e kanont meuleudi d'en Aotrou....

N'eus ket a dommerezh-kreiz, ha koulskoude eo kalet ar goañv en hanternoz Bro-Skos ! Ur pallenne ouzhpenn ha mat ar jeu ! N'eus radio ebet; sioulder ha tavedegezh a ren. Hogen, bapred e c'hell tud an enez dont da veneti BREAMORE (3), da c'houlenn ali pe sikour. Ur vuhez a labour hag a bedenn, eeun-tre, tost-kaer da hini St Benead ha d'e venec'h kentañ, tost-kaer ivez da sent kozh ar Galted, a bede an Aotrou en o fenitioù, e-touez ar reiar pe er c'hoadoù bras.

Souezhus eo ivez pegen heñvel e seblant bezañ pal Breamore ouzh hini Boken ( Abati Boquen en Eskopti St Brieg ). Boken ivez en deus klasket, hag a glask bapred hiziv an deiz, adkavout mammennoù ar vuhez beneadat, ur speredegezh eeun, distag diouzh pep klakennerezh ha brizhsanterezh, pall-bras diouzh an " devotio moderna ". Ar speredegezh-se, an doare-bevañ-se, a zo re ar vuhez-vanac'h en hec'h orin, en he donder. E Breamore evel e Boken e seblantont klotaat aes-kenañ ouzh an eneoù kelt.

A greiz kalon e hetomp d'ar manati skosat kreskiñ hag ober berzh. Ha da Voken, ya sur, da Voken kant gwech kement all !

mmm

Un Abad nevez a zo bet lakaet e penn Abati FONTGOMBAULT, adsavet n'eus ket pell gant Solesmes. Ur breizhad an hini eo : Dom Roy, bet ganet en Naoned e 1921 -

Ur breizhad ivez a zo bet dilennet gant " Mibion ar Garantez " evit bezañ o Rener-Meur hiviziken : an Tad BUUCHAUD, bet ganet ivez en Eskopti an Naoned e 1922.

mmm

Abaoe an 20 a viz Kerzu 1961 eo echu ar prosez kanonek graet adalek 1957 gant Eskopti Namur, e-sell da enskrivañ Dom MARMION war roll an Dud Evurus. Tud e-leizh a zo bet goulennataet e c'hwec'h eskopti ! Ur bern lizhiri a zo bet silskrivet ha dielloù ar prosez a zo anezho 1.500 pajenn. N'eus d'ober bremañ nemet gor-toz o pediñ an Aotrou ma vo klodusaet e servijer feal hep dale re. Piv ac'hanomp en devoa soñj da bediñ evit ma vo roet da Galtia ur Sant nevez ? Ha koulskoude e-touez ar Brotestanted, ez eus kalz a dud o c'houlenn bemdez kement-se digant Doue. Relegoù ha luc'h-skeudenoù Dom Marmion a vez enoret bras gant Leaned St Yann

Avieler eus Redoc'hen ( Oxford ), anglikaned anezho. Dont e reont zoken da bediñ war vez Dom Marmion e Maredsous.

Traoù e giz-se a ra kalz evit unvaniezh ar Gristenion, muioc'h eget tabutoù.

( 1 ) Verbe, miz Du 1961

( 2 ) " Pantekost war ar Bed ", 393 straed ar Pireneoù, Pariz 20°, dastumadenn Breuriez ar Spered Santel, he deus graet nevez'zo ( N-enn 34, Mae-Mezheven 1962 ) un niverenn dediet holl da Vonforz " misioner an Itron Varia "

( 3 ) Moarvat n'eo ket an anv gwirion : gw. pennad Helen Lubienka de Lenvak er " Vuhez Speredel ", Mezheven 1962.

BENEAD

o o o o  
o o o  
o o o  
o o o o

Embannadurioù BARR-HEOL

OTELLO pe MAOUR VENEZIA gant William Shakespeare, Troidigezh gant Klerg, ( eil mouladur gant skeudennoù, 400 lur kozh + 90 Timbroù )

An advouladur-mañ a zo bet bravaet gant TITL ar pezh nozet gant an Timeur, J'e heul anv Shakespeare, hervez sinatur e destamant. (1616), Poltred Shakespeare e-unan, ha neuze Titloù nevez a-raok pep arvest. Amañ ec'h adskrivomp RAKLAVAR an eil mouladur-se

R A K L A V A R

Hemañ eo eil mouladur OTELLO pe MAOUR VENEZIA, pezh hollvudet Shakespeare. Evit an istorourion e lavaren ez eus bet tannet 120 skouerenn anezhañ. Va heritourion a lavaro pet a vo bet gwerzhet ha pet a vo bet manet war va lerc'h, eus ar mouladur-mañ hag eus ar mouladur kentañ, rak n'eo ket peurwerzhet mouladur 1959 a-benn bremañ c'hoazh.

Hoegn c'hoant am eus bet da adtenneñ an un doare dereatoc'h ha plijusoc'h al labour-mañ hag am eus lakaet ennañ ar pep gwellañ eus va anaoudegezh eus ar yezh lennek hag eus ar brezhoneg bev, hini Treger dreist-holl, daoust ma vezo kavet fuzmioù all, zoken eus Bro-Weped. Ne vefen ket souezhet e vanfe meur a hini boud dirak meur a c'her ha meur a dro-lavar. Fae ganin avat, stagañ ur geriadurig ouzh va labour : dav lezel un tamm poan hag un tamm dudi gant ar furcherien hag ar frioù-lemm ha reiñ tu dezho da zidoueziañ ar gwinizh diouzh pell ar mankoù-liesskriverezh.

Mankoù-liesskriverezh ? C'hwennet hon eus ar stenisloù implijet evit ar mouladur kentañ, koulz lavarout ger ha ger, naetaet hon eus anezho diouzh hor gwellañ. Dav e vefe bet adskrivañ pep tra. N'hellamp ket. Tri pe bevar fezi ( hag ouzhpenn moarvat ! ) a zo chomet, darn eus al linennoù n'int ket eeun-keer, geriennoù'zo e zo a-us pe dindan al linenn. Petra'servij ? Traitour a-walc'h ez eo al liv-reizhañ !

Fiziañs hon eus koulskoude e plijo al labour-mañ gwelloc'h eget an dro a-raok. Lakaet hon eus ober goloioù a-ratozh, un tammig hiroc'h ha ledanoc'h, da reiñ aer ha frankiz d'an destann. Goulennet hon eus digant hor c'heneil Tonig an Timeur ober stenisloù evit talbenn ar pazh-c'hoari, hag evit dispartiañ an arvestoù. Kerkent ha goulennet e genlabour, kerkent servijet ar goulenner ! Bennozh Doue dezhañ a wir galon.





Daoust ma vefe kalz sklaeroc'h da intent ma vefe lakent amañ un doalennig-douaroniezh, ec'h adskrivomp ar stagadennig lakaet e dibenn SEUREZ KERWENAN. Ne raio ket an askriadur-mañ eil-implij gant ar pezh a zo al levrig, peogwir ez eus ur bern lennerien eus BARR-HEOL n'hellint ket pouzchas al levr e-unan pa n'eus adtennet nemet 100 skouerenn ha dija ez eus aet meur a hini !

Anav a zo er gontadenn eus pardon Itron Varia'n Hollsikour, e Kerrien. Ur pardon o vont brudet mui-ouzh-mui pa'z eus bet ar bloaz -mañ 20.000 perc'herin e-kerz ar Gouelioù :7,8,9 a viz Gwengolo 62, hag an deiz diwezhañ e oa 10.000 a dud o pardonañ. Daou Eskob zoken a zo bet e penn ar Pardon evit ar bloaz...

#### KERRIEN :

##### KREIZENN DOUARONIEL BREIZH EN HE FEZH

-----

E-kerz an hañv e 1952, e oamp aet da Gerrien, e parrez-Lanbernez, e perc'herinded, da geñver Gouelioù trede Kantved Emziskouezioù Itron Varia an Hollsikour. ( \* )

Eus a Lokronan-ar-Porc'hoed e teuemp, 'lec'h ma'z eus ivez ur santual dediet abaoe kantvloazioù d'ar Werc'hez Vari : Itron Varia Gurunennet, e Tertignon, hag a voe darempredet da vat kent 1789. Ur bloavezh kentoc'h, hor boa taolet pled e oa bet graet, diouzh an deiziad kizellet warni, ar gador-brezeg e chapel ar geriadenn-mañ er bloaz 1652. Kemant-se a ziskoueze pegen birvidik e oa bet an devosion d'ar Werc'hez en daou du d'ar Menez, er XVII-et kantved, ha dougetoc'h a se e oamp bet d'hañv adkavout e Gouelioù-an-Éravor, e Kerrien.

E-pad al lidoù hor boa taolet hor selloù tro-war-dro, ha daoust ma'z eo strizh a-walc'h an dremmwel- en askont d'an tosennoù a vir ouzh an dooulagad da dizhout un dachenn ken frank hag an hini a c'heller gwelout diwar-gribenn Menez-Belaer, pe diwar lein Krec'h Yann Angilh, da skouer,- e kave dimp e tapemp e gwirionez betek harzoù pellañ Breizh. Ma paras dirak hor spered, evel dre ur seurt gweledigezh, edomp e kreizig-kreiz ar Vro,hag e oa bet dibabet aratozh-kaer gant ar Werc'hez Vari al lec'h-se teiraroueziek : arouez Unvaniezh ar Gelted, da gentañ, rak en em ziskouez a reas ar Werc'hez tost d'al lec'h m'edo an ti-bediñ savet gant an Iwerzhonad Sant Gall; arouez ha skeudenn Unded Vreizh, hag hi divyezhek, rak

(\*) Er bloaz-~~1950~~ 1950 eo e voe kurunennet Itron Varia an Hollsikour.(B.H)

Kerrien hag ar vro tro-war-dro evito da vezañ gallek an deiz a hiziv, o deus anvioù o tegas da soñj e oa brezhonegerion o chom eno gwechall. Ha neuze arouez e-keñver douaroniezh, ma oa al lec'h tre e kreizig-kreiz Breizh...

An noz-se end-eeun, e fallas dimp aprouiñ war ur gartenn-douaroniezh kenskeuliet bras-tre ha gwir e c'helle hezañ ar gou-lakadur-se diwanet en hor spered.

Ne oa netra, diouzh ar sell kentañ, a gement a c'helle diskouez ado ar wirionez ganimp. Ne vern ! Tresañ a rejomp ar pevar ahel o palefarzhañ Breizh : Hanternoz - Kreisteiz eus Bae St-Brieg da Wened. Reter Kornog gant penn an ahel e bag Ledenez Kraozon, en tu ar C'hornog. Neuze Biz- Mervent eus Bae ar Fraenez da Vae an Intel, Gwalarn - Gevred gant penn an ahel en Ingrand, diouzh tu digoroc'h ar Vro m'eo tu ar Sav-Heol.

Ur bam ! Ar pevar ahel-se a geje dres e Kerrien. Souezhus eo! ar muzulioù-se a glote neket gant bevannoù Breizh, en deiz a hiziv, met gant tachenn Breizh ez-klok, enni inizi ar Minkier ha kreisteiz ar Selun bet distaget diouzh Breizh war-dro ar bloaz 950, daoust d'o anvioù keltiek-rik,-neuze ar riblennad-dour strizh er Sav-Heol,betek harzoù ar rann-dour ( merket splann evel gwir harzoù ar Vro, gant gweledigezhioù ar Werc'hez, e 1871, e Pont-Mean, anv eus aloubadegoù meur ar Vretoned ),- neuze enezennad Roc'h-an-Nort, kantonioù Kamptosell ha Menez-Falc'hun, ha Bro - Sklison diouzh ar c'hreisteiz bet distaget e 1789, Palud Breizh gant Bae Breizh, Nermouster ( Her gozh ), Yeu gant Porzh-Breton ( Heuz kozh ), enezho rannbarzhioù hag a voe e dalc'h ar Vretoned d'an hevelep mare.

Da c'houde c'hoazh, hor boa taolet evezh ouzh meur a dra all: n'emañ ket Kerrien hepken keit-ha-keit diouzh Beg-ar-Raz ha diouzh Beg Lomaze Penn-ar-Bed, diouzh mammenn ar Ster-Salun, diouzh Pont-Mean ha diouzh Kreisteiz Nermouster, hogen bez'emañ c'hoazh diouzh Enez-Eusa ha diouzh Kreisteiz Bro-Sklison; diouzh Enez-Sun ha diouzh Enez-Yeu, diouzh Ingrand, ha dreist-holl diouzh an holl greizzennoù relijiel pouezusañ, e Breizh :

1\* Diouzh eskoptioù Roazhon ha Sant-Maloù ha diouzh Abati kozh Redon hag hini Kemperle, e adti.

2\* Diouzh eskoptioù Kemper ha Leon ha diouzh Kumuniezh kozh Bangor, gouzelat he daare-liderezh, hag a badas betek 1006 (Stag war-eeun ouzh Roma e chomas ar Gârveur, betek 1662 )

- 3\* Diouzh arc'heskopti Dol hag eskopti Landreger.  
 4\* Diouzh eskopti an Naoned hag Abatioù meur ar Veilheree ha Landevenneg.  
 5\* Diouzh eskopti Gwened ha diouzh Santez-Anna-Wened(Keranna)  
 6\* Diouzh eskopti Sant-Brieg hag Abati an Diskuizh-Mat.

ooo  
 ooo

Tu a vefe moarvat da gaout meur a gefveriadenn all. Lezel a reomp wer gont tud all ar garg d'o c'hlas hag ar blijadur d'o dizoleiñ. Trawalc'h hon eus merket da ziskouez pegen souezhus ez eo an holl fedoù-se o klotañ kenetrezo. Ma vefe bet ur wech pe ziv, na vefe ket peadra da vezañ estonet, hag e c'hellfed komz eus taolioù-chañs.

Hogen merzout kement all a gendegouezhioù o klotañ ervat an eil gant egile, eveshaat a kej ar pevar ahel douaroniel en hevel-lep lec'h, hag emañ al lec'h-se keit-ha-keit diouzh pennoù pellañ ar vro, ha keit-ha-keit diouzh ar c'hreizenoù relijiel pouezusañ ha brudetañ, a ra d'an den soñjal n'eo ket en em gavet kement-se hep ur youl visterius. Marteze e vo tud dishual o spered, evit ober ur c'hruz d'o divskoaz, met eno ez eus ur gudenn ha na vo ket diskoulmet dre c'hoapaerezh ha diwar skañv. Ur gudenn a lavaromp, ur gudenn douaroniazha ha jedoniazha.

Ne oa ket moarvat ar Werc'hez, hep gouzout pelec'h edo o tiskenn, ar 15 a viz Eost 1652, pa rentas ar gomz d'ar vesaez yaouank Janed Kourtell, hag a dra sur he deus diskoulmet brav-tre ar gudenn-se. Evel da verkañ e vanne-hi donet da vezañ Mes Mestrez ha Rouanez Vreizh, Breizh en he fezh. Ha n'eo ket hep esmae hor boa taolet pled ez eo dres 300 vloaz goude ar gweledigezhioù brudet, hor boa ni hon-unan dizoloet kement-se.

Sur-mat, n'eus ger ebet gant ar Vretoned da genkizañ evito o-unan Mamm an Aotrou Krist, e-giz m'o deus bet re all c'hoant da genkizañ Doue e-unan ( Gott mit uns ! O Lord our God arise! Scatter her enemies ! Dieu est-il Français ? La Fille Ainée de l'Eglise hag all...) Hogen Kerrien, kreizenn douaroniel Vreizh, bet dibabet gant ar Werc'hez hec'h-unan, a zo evidomp an testeni hag ar merk anat eus he mennadoù e-keñver ar Vro bet gweladennet nebeut a-reak **gant ha Mamm Santez Anna** ( e 1625 ).

G. LATIMIER, aotreag war al Lizheri,D.S.U.

Studi ha Dudi

A N V I O Û - L E C ' H I O Û

B R E I Z H - U H E L  
 -----

N'hellan ket kaout bravoc'h digoradur d'ar pennad-mañ eget an notennig peget ouzh ar Stagadenn amoc'h o pouez lakaet e dibenn SEUREZ KERWENAN.

" Troet eo bet ar pennad a-us ( Kerrien, Kreizenn Douaroniel B. ) diwar ar galleg. An anvioù-lec'hioù a Vreizh-Uhel hon eus brezhonekaet, met re nebeut a zielloù a oa en hor c'herz evit ober labour skiantel-rik.

Kamptosell = Champtocéaux, Menez-Falc'hun = Montfaucon  
 Fraenez = La Fresnaye ( SAV, Niv.29). Ar stumm Pont-Mean hon eus miret, hervez skrid G.L.

Ar stumm Ingrand en defe ezhomh da vezañ burutellet. Ingrand pe Igrann a vefe koulz, pe well zoken. N'eo ket a-ratozh-kaer eo hon eus graet un anv keltiek-rik BELAER\*gant ar stumm gallek BEL-AIR ! "

Da lennerion VARR-HEOL e rjomp an ali-mañ da lenn BELAER: BEL--AER ha ket Be-Laer . Bel- = brezel, gwizienn ar brezhoneg ar-vall, ar c'hembraeg = rhy-fel, orin ar brezhoneg-kreñn= belour H.a. ha Neuze AER = brezel, emgann, eus ar c'heltieg kozh \* agro hag e brezhoneg kozh : air

Kement-se avat n'eo en em gavet nemet dre zegouezh rik, ha skrivet e oa ar ger kent dimp teurel evezh ouzh an dra.

Evel-hen emañ ar gudenn : Un niver brasoc'h-brasañ a Vreizh-uheliz a zo deuet d'ar yezh hag a zo o tont d'ar yezh. Ha ma tege-meront hep chipotal stummoù brezhonek an anvioù-lec'h a Vreizh-Izel, o devez poan peurvuiañ oc'h asantiñ da furmioù gallek anvioù o rannvro c'henedik.

Unan, dreist ar re all, T.Jeusset, ur Breizh-Uheliad, anat

deoc'h, en deus klasket un diazez skiantel da stummañ anvioù lec'hioù Breizh-Uhel. Adskriveñ a reomp emañ ar c'henskrid d'e labour embannet embannet war SAV, niv. 27, Nevez-Amzer, 1943, paj. 63:

ESAE BREZHONEKAAT ANVIOÙ-LEC'HIOÙ BREIZH-UHEL

"Roll an anvioù-lec'hioù a vo kavet amañ a zo brezhonekaet evit ar wech kentañ. N'eo ket bet aes evidon reiñ o furm-orin evit al lod anezho a oa brezhon. Tennoc'h c'hoazh eo bet al labour evit ar re c'hallek.

Staget am eus ouzh ar reizhskrivadur nevez an anvioù-lec'hioù henvrezhonek. Troet am eus pe kenaozet kentoc'h, e brezhoneg an anvioù roman.

Stummet am eus ar brasañ niver a anvioù-parrez a c'hellis (hag evidon-m bezañ micherour e-pad an devezh).

Furchet am eus en dielloù kozh, en teskadoù-skridoù, el levrioù a bep seurt,- dreist-holl en Istor.

Ne gredan ket ez eo difazi va labour. Gouzout a ran e oa diaes-tre de ober.

Spil am eus ma vo barnet a-c'hred-vat gant ar vurutellourion a sello outañ.

Rak fiziañs am eus da gregiñ en ul labour talvoudus evit Dazont Breizh. Ha gant aked am eus labourer.

N'am eus ket kavet ar genskoazell am eus goulennet digant ar re varrek war an dachenn-se.

Mil bennozh, avat, d'ar vignoned o deus kenlabouret ganin, - dreist-holl da Wilhelm Berthou - Kerverzioù, ur paotr a gompren gallegerion Breizh-Uhel.

Th. J.

( savet e galleg e 1931 ha troet gant an oberour e 1932 )

Setu aze komzoù hag a zo sklaer hag onest, e-giz ma tere ouzh gouizieion. Tr-walc'h eo lenn e penn labour Jeussat ar pezh a zo anvet MAMMENNOU, evit kompren n'eo ket aes dezhi a-dro-jouaz, met dre voder ( evel Paskioù o reiñ yod d'e gazh !).

Setu bremañ addigoret kaoz anvioù-lec'h Breizh-Uhel gant ar gelaouenn HOR YEZH, niv. 33, paj. 29 : EVEZHIADENNOU diwar-benn Stummoù brezhonek Anvioù-lec'hioù BRO-BENTEUR, an dro-mañ gant ur Breizh-Izelad deuet da chom e Breizh-Uhel abaoe un nebeut bloavezhioù. Un dra vat. Hogen bepred emañ war un dachenn eus an

diasesañ. Evel m'emañ ar c'hiz a Breizh e soñjo da bep hini emañ ar wirionez gantañ.

N'heller ket mont re fonnus ganti. Gwelout e reer dija an Aotrou Gwegen, aozer ar skrid, o chañfoutreriñ stumm nemetañ anavezet ha degemeret e brezhoneg eus parrez PLOUNEVEZ-PENTEUR (Pléneuf). Hag hon eus implijet end-eeun en niverenn-mañ eus BARR-HEOL, paj. 33. Evit W.B.S. \* n'eus kudenn ebet eno hag e kas e lennerien da Largillière LS.31-2 ha Loth Chr.222. N'emañ ket, siwazh! al levrioù -mañ etre hon daouarn ha n'hellomp reiñ arroudenad ebet diwarno.

Kent mont hiroc'h war an hent-se ez eo dav en em glevout war ar pal a zo da dizhout hag an doare d'en em gemerout, na petra'ta.

\*

Da gantañ, daoust d'al labour bezañ a dalvoudegezh vras, n'eo ket un dra preset-preset kement-se ! N'eo ket diouzhtu, m eus eon e vo ezhomm da advadeziñ parrezioù ar rannvro divrezhonekaet.

Ur wech bennak avat, e c'heller kaout ezhomm. Setu end-eeun ar pezh a zo en em gavet ganin, an dro-mañ, pa'z on bet kroget da reiñ er bajenn 33, roll kantoniou an Departamant. Penaos ober ? Marellañ BARR-HEOL, gant gerioù gallek ? Evel ma ra kalz a skriva-gnerien pa gomzont diwar-benn broioù estren bet gweladennet ganto, hag o reiñ neuze an anvioù lec'hioù, e-giz m'emañ en o bro c'hennidik ? Un dra fur a-walc'h. Met ret eo bezañ sot un tammig war an tamm douar-patatez-mañ, evit bezañ un den... Ha lekaet em eus di-tamm chipot stummoù brezhonek, ( pe vrezhonekaet ganin ) er c'hantonioù. Hogen pa gomzimp un tamm sirioc'h : Pehini eo an aesañ da anavezout e-touez ar c'hantonioù-se ? Hini Lañnon ? Hini Koad-Linez ? Hini Staol ? Hini Benec'h zoken ? Klaskit eta pera a zo e Breizh-Izel hag re a zo e Breizh-Uhel !!!

Dav bezañ boaz a-walc'h evit gouzout petra eo an anv-mañ-mañ. Paotred ar C'horsez o deus graet o Gouelioù ( hervez e oant kaer ! ) er bloaz-mañ e Sant-Kae Porzh-Oluod ( pe Oluod, deoc'h da zibab ). Market e oa brav-mat war an TRIBANN : St Kae PORZTRED ( !!! ).

Ur wech bennak eta e c'heller kaout ezhomm eus stummoù brezhonek anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel. Setu end-eeun ar pezh a zo en em gavet ganin, 'n ur dreiñ SEUREZ KERWENAN. Un euzhadenn e vefe bet ar skrid ma vefe bet stlebezet a-fonn had-ha-had ar skrid anvioù gallek ar c'hennadenoù. Tuost-mat e oa moarvat va mekanik da skrivañ an deiz m'am boa graet al labour-se, rak hep teukañ an disterañ e oa deuet ar stummoù a lenner bremañ, em zroidigezh, ganin.

N'em eus keuz nemet d'ur ger : Kergeza evit La Chèze, dre ma son "evask" (iskis!) ouzh va divskouarn, hogen hennezh eo ar ger a ran gantañ (etre va sel mat ha me!) abaoe 30 vloaz, da lavarout eo abaoe ma ran war-dro ar yezh. Evit Lanbernez avat, e plij din kenañ-kenañ va c'havadenn, ha daoust ma'z eo ar ger-se LAN(N) ur ger hag a vez kavet e penn ar parrezioù kozh, n'eo ket ur ger marv evidon, tamm ebet, un tamm kembraeg; hag ouzhpenn, e beg ar c'hraoñ sonn-sonn a zo 'krec'h bourc'h vihan Lanbernez ez eus un anv kozh gallek: Ville Perne, orin anv ar barrez, hag eno en ur vont war hon troid gant hor mamm ( Doue d'ha fardono !) e sellemp ervat da welout ha darev-mat e oa ar groegon(prun bihan) er gwez !!! Ha goude e talc'hemp da vont war-du pal hor perc'herinded: Itron Varia an Hollsikour !

ooo  
ooo

Hogen n'emaomp ket mui war dachenn ar ouiziegezh. Petra a jinnigfemp eta ?

C'hoazh ur wech un ali a emziwall. Pennadoù an Aotroù Floc'h war STUDI HAG DBER ( Nedeleg 1941, niv.16 paj. 18 sq.) war an anvioù-lec'hioù a Vreizh-Izel, hag e vurutelladenn war obarenn T.Jeusset ( KAIEROU KRISTEN, kaier kentañ 1945,paj.74) a ziskouez sklaer-meurbet pegen dañjerus ez eo an dachenn. Ken gwazh ha kudenn ar reizhskrivadur, er bloavezhioù tremenet, 'm eus eon

An diazez kentañ hep mar ebet, ez eo ar studi. Hogen arabat kemmeskiñ an traoù. Ur c'hemm hag ur c'hemm bras a c'hall bezañ etre skrivadur un anv hag ar ster anezhañ. An hanter ha marteze ouzhpenn eus anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel a c'hell bezañ skrivet e brezhoneg, hep kemerout ar boan da glask da gentañ penn petra 'sinifi ar ger-se. Setu aze, d'am memo, un tamm brav e labour, hag a dabut espermet d'ar Vretoned ! Amzer 'vo goude-se da glask petra 'dalvez ar gerioù da lavarout. Ha war an dachenn-se e c'hell faltazi frouezhus-kenañ an hanter-ouizieion c'hoari pezh a garint !

Hogen ar studi hag ar studi a-zevri a vezo ezhome ivez. Hag an hent kemeret gant Teofil Jeusset eo an hent nemetañ da heuliañ, an hini surañ: studiañ an dielloù a c'heller da geout, da adkavout gwir stumm an anvioù. Setu perak e ran dinec'h-kaer gant ar stumm PLOUVAEL evit va farrez c'henidik distreset huc'h anv e Plémet, hervez ar skritur gall.

A-hend-all peseurt diazez a gemeror ? Doare-distagañ tud ar

ar barrez hag ar rannvro ? Ur brouenn a-du pe a-enep e c'hell bezañ, a-wechoù, met alies ur brouenn eus an disterañ. Evel just, evit abegoù-kalon e vefe gwell genin ar stumm Koelinez eget ar stumm Koad-Linez h-un eus roet uheloc'h paj.33 evit "Collinée !" dre ma'z eo anavezet ar ger-se dindan ar stumm KOELNEU. Met amañ e plegan d'an dielloù kavet gant Jeusset, petra bennak ma vefe gwell genin mirout KOED e-lec'h kemerout ar C'hoad modern, eus brezhoneg an hanternoz.

E-keñver an doare-distagañ avat, n'em eus ket nemeur a fizi-  
añs: anv va farrez c'henidik a vez distaget e tri pe bevar stumm disheñvel, diouzh an degouezhioù : Piemeu, Pleme ( atav gant tud ar barrez pa gomzont...gallec !!!), Plemé ( diouzh stumm distagañ ar C'hallaoued) ha zoken Plemet... Hag ar pezh a zo gwir evit Breizh-Uhel a zo ken gwir all evit Breizh-Izel: setu ma kinniger dimp war HOR YEZH paj. 30 skrivañ KAEPE evit KEMPER evit abegoù distagañ ur.

ooo  
ooo

Klask adkavout ar stummoù kozh, klask anavezout anv ar sant kuzhet dindan druilhoù gallek. Re a faltazi a zo c'hoazh war an dachenn-se. Bep bloaz e skrivan, pa en em gav Pardon Treduder(kanton Plistin),rak bep bloaz e vez gwelet an hevelep sotonioù diwar-benn anv ar barrez : Tre tud an Naer ! Pa'z eo bet studiet mat an istor Sant Bro-Blistin gant Largillière, ha brudet gantañ anv Sant Tuder. Ouzh an anv-mañ e tleer tostaat ar ger all PLOERDUD, e Bro-Wened, da vihanañ evit ar ster : Aer-Tud, Tud-Aer ( dres hon AER eus BEL-AER !) ha moarvat Pleurtuit(Bro Sant Maloù).

Labourioù gouiziek a zo bet graet war an anvioù-se gant tud evel LOTH, gant Smith ( De la Toponymie Bretonne, published by Linguistic Society of America, Baltimore, 1940) h.a.hag arabat eo ober fae warno.

Ur bern traoù, hep mar ebet a chom da zizolañ. Hervez Smith, o tispenn roudoù Largillière, e teufe PLEHEREL eus(Ploue) Merel ha setu an Dr.J. Gwegen o kinnig HEREL, met, siwazh! hep ober anv eus St-Merel, kêriadenn eus Parrez Pleherel, end-eeun. N'eo ket echu eta ar vreuradeg.( Hor YEZH op.c.).

Setu avat, St Trimoel gant St Hervoal da baeron.Ur gavadenn vray eta gant an Dr.Gwegen. Kement all a lavarfen diwar-benn LANDEHEN, deveret eus LAN ha Gwehen. Kalz sklaeroc'h e teu anv Landehen da vezañ, rak aes-tre ez eo tremen eus LAN-TO-Gwehen da Landehen evel eus LANN-TO-GWENNOG da Landevenneg.



Hogen ne vern penaos arabat mont re vuan. Gwelout a ran (bepred war HOR YEZH) ar ger MAROUÉ. Me'gav din ez a re vuan ar skrivagner. Mat e vefe goulenn ali ha kalenn digant an Aotrou Couffon " Société d'Emulation St Brieg, levrenn LXXV, 1945-46 ) kent en em avañturif war dachenn grenegellek istor ar parrezioù kozh hag o orin.

ooo  
ooo

Lezel a reomp a-gostez an traoù all. Ma! lakomp emeur dewet a-benn da gaout orin ar gerioù hag an anvioù. Peseurt stumm reiñ dezho. E gwirionez ne vo roet o stumm diwezhañ hag ofisiel nemet pa vezo mestr ar Vretoned war gement-se ! Hogen da c'hortoz n'eo ket difennet klask, evel just. Ma! sellomp evit ar wech diwezhañ ouzh " HOR YEZH " paj. 30 hag an anv LANDEHEN. Setu ma kinniger dimp evel stumm : Lanwehen. Setu ankuennac'haet talvoudegezh ar gerig bahan " TO ", ken orizius en skiant an anvioù keltiek. Me'zo gwell ganin, kent mil gwech, ar stumm LANDEHEN eget ar stumm nevez- deoust ma tleer trugarekaat ar skrivagner evit e labour. Nemet en deus kumasket dres ar pezh hor bor aon na c'hoarvezfe: ur c'hemm hag ur c'humm bras a c'hall bezañ etre skrivadur un anv hag ar ster anezhañ.

Aon am eus na ve ar skrivadur ar pep skoempañ, ar pep am-jestreañ d'ober el labour-se m'eo adsevel STUMM BREZHUNEK ANVIOÙ BREIZH-UHEL. Kinnigoù " HOR YEZH " evit Lanqaecog, Lanseog, h.a. hen diskouez anat-splann. Pep hini en deus e venoz war sa....

Destumomp ar gerioù, studiomp an dielloù kozh hag an istor, sellomp a-dost zoken ouzh doare-distegañ en dud, ha zolezomp ket studi al levrioù skrivet en hor reok gant istorourion, n'ankounac'haomp ket ez eo Breizh en hec'h orin ur vro geltiek stag korf hag ene ouzh ar Broioù Keltiek all, dreist-holl en he deroù. Bez'ez omp holl darbarerien. Ur Masuner Meur a zeuio abred pe zivezhat hag a ouio renkañ hon tammoù meinigoù d'ober ur palez.

mcmcmom  
omo  
m

### KENDALC'H LANDREGER

En hor ranteañ-kont eus Kendalc'h Landreger, n'hon eus ket komzet eus an Ofisoù Protestant ha Katolik dre ar munud, pa ne ouiamp ket dre sur petra a oa bet graet. Treiñ a reomp bremañ diwar Y FANER (13 Medi- Gwengolo) ul lodenn diwar danevell he beaj gant an Itron " Dwyrjd"...

Un ofis relijiel a voe graet a-ratozh evid'omp-ni, Protestant, ar sul beure. An Ao. Caradoc Jones ( eus Pempoull ) a reas ur brezegenn e brezhoneg. Kanañ a rejomp an imnoù " Calon Lân " hag " O Fryniau Caersalem " ( eus menezioù Jeruzalem ), gant devoision don. Neuze ez ejomp d'an oferenn d'an Iliz-Veur'lec'h ma voe lidet un ofis eus ar c'haerañ, ha leun-kouch an iliz. Goulennet e voe diganimp-ni kemerout perzh en ofis hag e rejomp dre ganañ " Efengyl Tangnefedd ", e meur a vouezh.

Evel ma weler: Protestanted o kemerout perzh en ofis Katolik. Heuliañ a rejont an ofis gant kalz a zevosion hag a evezh, hag e voe evit kalz ur skouer vat gwelout ar marc'hed o plegañ izel o fenn hag o ..zogoù uhel da goulz ar gorreoù. Kembreiz eo a ganas ar bravañ, hervez en testoù. Setu amañ testenn an imm kanet ganto hag an droidigezh anezhi ( an 2 boz kentañ diwar 3 a reomp amañ ) :

- 1 Efengyl tangnefedd, O! rhed dros y byd  
A deled y bobloedd i'th lewyrch i gyd  
Na foed neb heb wybod am gariad y groes  
A brodyr i'w gilydd fo dynion pob oes
- 1 Aviel ar peoc'h! o red dre ar bed  
Ha ra zeuio ar bobloù d'az sklerijenn holl gweitibunen  
Arabat e vefe den ha na oufe seurt diwar-benn karantez ar Groez  
Ha breudeur an eil d'egile a vo tud an holl amzerioù.
- 2 Sancteiddier y ddaear gant ysbryd y ne';  
Boed Iesu yn Frenin, a neb ond Efe;  
Y tywysogaethau mewn heddwth ei draed  
A phawb yn ddiogel dan arwydd ei waed.
- 2 Ra vo santelaet an douar gant Spered an Neñv;  
Ra vo Jezuz roue, ha den all nemetañ  
Ar priñselezhioù er peoc'h e-harz e dreid,  
Ha peb unan e surentez dindan arouez e wed.

ooo  
o

## EN EM OBER DIOUZH AR RE BAOUR.

Paour a eour, paour a zeskament klasel, paour a ouiziegezh, evit silañ enno karantez Jezuz-Krist, se eo ar pal da dizhout e pep bro, zoken e Breizh, setu ur wech c'hoazh ar soñj diwanet ennon, en ur lenn ar gelaouenn UNITAS, bloavezh 1962, levrenn III

Eus an 18 a viz Du d'ar 5 a viz Kerzu 1961, ez eo bet dalc'het e Nevez-Delhi, e Bro-Indez, trede Emvod Meur Kuzul an Ilizoù Kristen nann-katolik. Eus an holl ved e oa eno dileuridi. Ur misioner Jezuiet, an Tad de Meester, 1 300 kilometrad etre Delhi hag e dachenn-avielañ, a zeuas a-bell da welout mat penaos e oa ar stal ganto. En e bennad a zek pajenn, ez eus da bennaouañ menozioù yac'h-tre evit an avialerezh, soñjoù diwanet e spered ur beleg hag a glask er em ober diouzh e advro.

Skoet eo bet da gentañ gant pinvidigezh an dud-a-iliz, dezho tankirri prevez amerikant, pe degaset gant kirri-faurm, paet gant un tamm arc'hant div wech brasoc'h eget gopr pemdeziek ur miche-rour indiat. Gouzout a rae diouzhtu ar vlenierion da beseurt ostalerioù kas o zud, d'an Ashoka, d'ar Janpath, da v-Maidens, da Airlines, gwellañ re Delhi. N'eus nemet ar rajahed, an ijinerion vras, pe antrenion, hag a c'hellfe bezañ ken cheuc'h an traou ganto.

Ha koulskoude an Ao. Nawbigin, eskob e kreisteiz Indez en doa skrivet : " Hervez an hengoun relijiel indezat, ne c'heller en em ouestlañ da Zoue hep nac'h e gwirionez madoù ar bed-mañ. Don eo an doujañs e-keñver ar re o deus sevenet ur seurt aberzh. Ha poan o deus Indeziz o reiñ pouez da gredennoù relijiel ne da ket d'o heul un diouer bennak a voued, a evaj, pe e-keñver an doare-bevañ. Gouzhpenn, al lodenn vrasañ eus ar gristanion indezat a vev paour, disheñvel-krenn o buhez diouzh an hini ranet gant Ilizoù ar C'hornog. Ne c'hellimp ket tolpañ hor Bedadeg hep ober gant an ostalerioù bras a zo e Nevez-Delhi, e-lec'h m'emaomp staliet brav, met evit kalz e seblanto hon Emvod bezañ un Emvod a dud pinvidik. Ret eo degemer ar samm-se, met en abeg da se hon eus da vezañ muioc'h war evezh, evit chom hep gwallskoueriañ war dachennoù all. Fur e vefe eta ober an nebeutañ ar gwellañ gant alkoool ha butun, chom hep dispenn bilhedoù evit dispignoù dreist-ret..."

Anat eo, eme ar misioner, e c'heller neuze en em c'houlenn penaos e tougas an Emvod testení d'ar C'hrist en em gaset da netra betek mervel war ar Groez evit an danelezh a-bezh, ma tlee tud ar

Vodadeg klask herberc'h en destalerioù pompadus evel an Ashoka..."

Splann eo e klasker atav avialañ, hep teurel pled war dro-spered, menozioù ar re a glasker embann dezho ar C'heloù Mat. Pezh a zo gwir ivez evit ar gatoliked. Muioc'h-mui avat e lavar Roma dezho bezañ war evezh, magañ doujañs ouzh sevenadurioù ar bobloù nann-kristen. Evel-se emañ ar C'hardinal Marsilla, bet kannad e Bro-Japan, o paouez ober ur brezegenn e Jenova, a-zivout ar Sened-Meur da zont hag ar bobloù nann-kristen. Hogen pouezet en deus war zaoù venoz : 1\* Ret eo d'ar misioner en em ober gant doujañs ouzh gizioù, yezhoù, relijion, arzoù ar bobloù da avialañ 2\* Ret eo lakaat Keloù Mat an Avial da glotañ gant troioù-spered disheñvel diouzh re ar C'hornog.

Hag e kendalc'h an Tas de Meester evel-hen : " An dileuridi indezat o-unan a oa gwisket giz Europa, kravatenn ha tout. Gant kalz anezho e oa ul luc'hskeudennerez a-dreuz-skoaz. Galleg ha saozneg a oa ganto, tamm indezeg ebet. "A ! ya, pa vez traoù cheuc'h da vezañ, pa vez dilhad fero, pa'z aar e kêr, pa ranker ober gant doareoù seven, pa vez divizoù uhel, n'he deus yezh ar paour gwir ebet. O ! "plouk-plouk " e vefe ober ganti. C'hwez ar c'haoc'h-saut a glevfed. Naketa, te, va c'henvreour beleg e Breizh-Izel ? Marteze ne dout ket kannad ar C'hrist paour, rak ur wech c'hoazh, a bep seurt paourtezioù a zo. Ha bez'emaout tost ouzh da bobl paour eus ar c'hultur ac'h eus-te, met dozhañ ur c'hultur all ha na fell ket dit doujañ, skoazellañ, anavezout ?

" En ur zistreiñ diouzh Delhi e chomis a-sav en ur gêr, evit klevout un abadenn sonerezh an Nedeleg roet gant ur Vreuriezh Anglikan, ha darn eus dileuridi an Emvod a oa pedet. War ar roll, e oa da gentañ " Sonatenn d'al loer-gann " gant Beethoven, c'hoarriet war ur piano dezhañ ur son metalek. Goude, " Un Nozvezh Sioul " kanet gant ul lezh-kanañ gwazed ha merc'hed. Met ar merc'hed a zouge lostennoù europat; unan hepken a oa gwisket gant ur sari. En aner e klaskis war ar roll un dra bennak hag a vefe bet indezet groñs. Ar bommoù da c'hoarzhin zoken a sablante heñvel-mik ouzh ar re a vez distaget en ur barrez bennak eus ar Midland saoznek. An iliz katolik e-lec'h ma oferennis, ne oa enni nemet kadorioù ilinek landrammus, delvennoù sulpisiat... Nann, an doare-bevañ kemeret gant hor c'hristenion " sevenoc'h " n'eo ket hini ar gwellañ hengounioù indezat..."

Petra 'lavarefec'h, Tad paour, ma teufec'h d'ober un dro da Vreizh-Izel ? Amañ, kennebeut, ne gavfec'h mui kalz a dra hag a



SKRIDOU D STANKAAT

Betek - hen e oa tu da lenn ar skridoù brezhonek dre ma teuent er-maez, huger ken fonnus e teuent da vezañ ma vez mil boan oc'h erruout. Gwell a se d'ar re a zeu a-benn. Seblant vet a zo eta, nemet ez eo atav an hevelep re a bren al levrioù moulet, pe liesskrivet a zo oc'h aloubiñ tamm ha tamm al levraouegoù, ha ne vo mat an traoù e pep keñver pe vo bras a-walc'h kelc'hial al lennerion evit pep rumm skridoù, evel m'emañ kont er broioù all 'lec'h ma pren an dud ar skridoù a zo diouto: dauust pe lennegezh, pe brederouriezh, pe romantoù, pe varzhoniezh, pe skiantoù, pe studioù war ar yezh, pe traoù all. Dreist-holl abaoe m'eo deuet PREDER da aloubiñ ar marc'hal-lac'h gant e levrennoù tev o plediñ a bep eil gant politikerezh, gant geriadurezh, piederouriezh e ranker kaout amzer vak ha spered diskuizh evit tizhout heuliañ al labour war dachenn ar yezh.

Amzer vak ha spered diskuizh, rak echu eo an amzer ma oa tra-walc'h pegañ en ur skrid bennak hag hel lonkañ evel ma vez lonket ar c'heleier war ar c'hazetennoù en ur zebriñ e zijuniñ diouzh ar beure. Dav aketiñ, strivañ, prederiañ, a-benn kompren, pouezata, barn menozioù ar skrivagner, en doare ma tosta ar mare ma vo ret kaout skridvernourion a-vicher a vo miret dezho ur c'hornad bennak e kelaouennoù an Emsav, a-giz ma vez kont e lec'h all, evel da skouer war ar c'hazetennoù hag ar c'helc'hgelaouennoù gallek hag estren all. Eevel-se ne dalvez ket ar boan din komz eus labour A. Heussaf "EVEL-SE E KOMZE ZARATHOUSTRA", (Preder, 7,50 LN, K.R.P. Pariz 16.093-13 Dr.G.Etienne, Kastellin), troet diwar oberenn Nietzsche. Moarvat no oa ket ul labour aes da vrezhonekaat, rak e penn kentañ e levr en deus renket lakaat an troour lakaat ur rollig gerioù, e-touez ar re-mañ reoù nevez-flamm. Re bell'm eus son ez a an oberour war ar poent-se. Ne gomprenan ket kennebeut perak ez eus bet leket ur steredennig (\*) dirak HANVOUD, na perak ez eo troet e latin "existentia". E brezhoneg krenn e oa hambout, stumm ar ger-se o talvezout "stad" "doare-bezañ". Gwell eo eta, war va men, mirout ar ger-se (evel e kembraeg end-eeun) da vezañ "gwir natur" un dra. Anavezet-mat eo gwirizienn ar ger "han" a gaver da skouer e a-c'han-on; mat n'hellomp amañ ober war ar ger-se ar studiadenig e zo ezhomm.

TONKAD 62, gant Youenn Olier (teskad skridoù politikel 1945-1962, embannet gant PREDER- 136 pajenn liesskrivet brav. War ar 100 paj. gentañ e kaver an advouladur eus pennadoù savet diagent gant Y.O. evit e gazetennig AVEL AN TREC'H. N'eo ket difennet tamm abet breutaat war zorn eus menozioù an oberour, nemet e renker anzav

e lealded hag a striv anat da vezañ objektivel. Traoù lavar dizampart a deuker outo ur wech an amzer a greiz lenn. Gerioù "moumoun" evel = dres, da skouer, d'ar mare-se n'int ket eus ar plijuseñ, neg a-hand-all kennebeut. Ha bepred ar fazi kasaus-mañ: N'eus ket nemedomp ni, hag a zo gallek rik, hag o talvezout e brezhoneg dres ar c'hontrol eus menoz ar skrivagner: estregedomp (pe) n'omp ket hon-unan h.a. eo a dleer da lavarout. Hogen pa'z eo krog e darn eus ar vrezhonegerien an debron da grouiñ forzh gerioù nevez, e ra vat Y.O. o tiskouez ez eus tu da c'hoari brav ha diboañ gant an dibennger "kar, gar(our)liezh" da skouer "an-teringarouriezh", ha da ziwall ouzh euzhadennoù 'zo.

GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG gant R.Hemon Rann 5 DILEZER-DIVIZOUD embannet gant PREDER

- Setu amañ un nebeudig traoù da glokaat labour meur R.H.
- paj.403: Dilokez: (skouerioù eus implij ar ger) : bugale SAVET dil. tud GWISKET dil. BALE dil. ( Ploubêr-Pluned h.a.)
- paj.413: Dinodiñ: distrujañ ( Bro-Lennuon): traoù, loened diaes da zinodiñ ( Bro-Lannuon) NODIÑ = krouiñ,kaout re vihan
- paj.432: Digroc'henañ ( diruskañ e zaouarn)
- paj.436: Diseurt = bravoc'h, gwelloc'h. Ger aus Treger vihan ha Gweloù. ( Un tu bennak ez eo bet implijet gant M.Glanndour, met a-dreuz). Implijet e vez da geñveriañ. E Treger vras e vez lavaret "difer(t)"= gwelloc'h.Tud difert
- paj.444: Diskenn ankounac'haat Diskenn ( avalenn-gof) kaout un d.
- paj.462: Dispakañ: gwilioudiñ, passim e Treger
- paj.464: Disparti:koll, kolladenn, diforc'h ( evit an dud hepken) v-g bet ha deus un disparti;cfizeloc'h DISPARTIÑ
- paj.465 : Dispenn: ger a gigerzh ivez: dispenn en ul loen
- paj.481 : lakaat Distrevial(strevial), passim Treger
- paj.495 : Diverrañ ( un eil ster talvoudus)=gonit v.g. Petra hoc'h eus diverret oc'h ober se( Plouber-bulien, B-Haol, passim)

Traoùigoù all a vefe da verkañ: gerioù skrivet fall h.a. Mat chom e reer sebezet dirak talvoudagezh ha resisted labour R.H.

AR ROUE HA MEUDIG E VAB ( ul levr bugale skaudennet e liv) G.Th. Rotman ( skrivañ P.Bodenan, Verger St Yves,Kemper,K.R.212-23 Roazh.)

.....  
Da vezañ embannet HEPDALE... ur romant nevez gant R.Hemon...

M A R I V O R G A N

- war baper "Marais" niverenner aus 1 da 20..... 20 LN
- War " Lafuma " niverennet aus 21 da 50..... 15 LN
- War baper boutin..... 8,50 LN.

skrivañ da BER BODENAN.....



-----

Menegomp da gentañ joa ha levezeg tiegezhioù brezhonek hor c'he-  
neiled, Abanna hag Alan al Louarn. Setu amañ ar c'hartennoù hon eus  
resevet eus o ferzh:

ABANNA, e wreg, Gwihen, Genofeva, Iwan ha Brenda a zo laouen o  
kemenn deoc'h ez eo kresket an dud e Maen ar Ya. Gurvan-Gwendal-  
Anna a zo bet ganet d'an 31 a viz Eost 1962.

Tangi, Malo, Lena, Nolwenn, Riwall, Goulven, Katell, Gwennaël a zo  
laouen da gas keloù deoc'h eus ganedigezh o breur Tremeur-Yann-  
Vari e Roazhon d'ar Gwener 7 a viz Gwengolo 1962, - gant soñjoù mat  
e zad hag e mamm- Graet e vo ar vadeziant d'ar Sul 23 a viz  
Gwengolo, da 17 eur, Iliz Sant Stefan-Roazhon-

( Gourc'hemmennoù e brezhonek d'an holl dud vrezhonek-se ! )

.....

Hep mar ebet ez eus bet graet labour vat e-pad an hañvezh-mañ.  
Merdegomp KAMP AR VUGALE, en Elliant, dindan renerzh an Itron Gon-  
tez a Roc'han-Chabot hag an Itron Per Denez, KAMP KENDALC'H e  
Kommana dindan renerzh L.Roparz. ( 23-31 a viz Gouere )

KAMP AR VREZHONEGERION e St Nikolaz-ar-Pelem hag en deus gwelet  
123 den o tremen. Frealzus-tre ez eo lenn danevell al LIAMM, niv.  
93, paj.310, diwar-benn al labour graet eno, gant niver an dud,  
danvez ar studioù hag ar c'hentelioù, anvioù ar re o deus graet  
kaozeadennoù. Renerien ar C'hamp, an Itron de Bellaing, R.Huon, P.  
Kalvez ne labouront ket da rozallat meuleudioù; dre-se ne raimp  
ket hor gourc'hemmennoù dezho, diaoust ma tellezont anezho war an  
ampl, hag ivez re an holl vrezhonegerion...

DEVEZHIOU-STUDI AR BLEUN-BRUG. E dibenn miz Eost, e Gwengamp, e  
Skolaj an Itron-Varia, e-pad ur sizhunvezh ez eus bet studiadegoù  
aozet gant ar Bleun-Brug diwar-benn sevenadur Breizh hag he c'hu-  
dennoù war dachenn an arboellerezh. E-touez ar prezegenoù, dav  
ober anv eus prezegenn-digeriñ an Aotroù Chaloni Gloagen, vikel-  
vras Sant-Brieg, arriagon Kernev; neuze kaozeadeg Dom Laorañs eus  
Landevenneg o keñveriañ gant skouerioù eus ar souezhusañ muzik  
Breizh hag ar C'han gregoriat. E-touez ar c'homzoù pouezusañ  
lavaret e-kerz an devezhioù-studi e tleer lakaat displegadeg  
fraezh-meurbet J. Martray ha dreist-holl gerioù an Aotroù Kervea-  
dou, Eskob Sant-Brieg ha Landreger o respont end-eeun d'an Ao.  
Martray. Un 200 bennak a dud a heulias al labourioù.

Merkomp c'hoazh ez eus bet savet un " Emglev Bagadoù ar Skolioù  
Kristen" (E.B.A.S.K.) gant ar B.B. hag an Aotroù Troal da aluzener.

-----  
impr. Gér. Le Clerc, Buhulien-Lannion, C.d.N K.R.9I764 Rennes  
-----

# BARR HEOL



Dirac. Le Clerc, P. Ct. Bulien, C-4-N 91764 Rennes  
N° 33 Décembre 1962, Trimestriel, Prix Y. Roch 2 NF

Rener: M. Le Clerc, Bulien, Bro-Dreger  
N-enn 33 Miz KERZU 1962, Trimiziek, Koumanant: 6 LN

## T A O L E N N

|                                                            |         |
|------------------------------------------------------------|---------|
| ( Korf ha Spered.....                                      | p.1 )   |
| ( Tri Fazi Ur Votadeg.....                                 | p.6 )   |
| ( Lennegezh Kannadig-Parrez (Istor ur Gador-Gofez).....    | p.1 4 ) |
| ( Anaon ha ni, Maen-Hir Pleuveur hag an Anaon, Goanv)..... | p.1 4 ) |
| ( Evezhiadennoù war ar Pedennoù e Bro-Dreger.....          | p.2 1 ) |
| ( Sened Ekumenek ( Ar Pab hag ar Sened ..... )             | p.2 4 ) |
| ( Notennoù a-dreuz hag a -hed )                            | )       |
| ( Doareoù-Komz Relijiel a Vro-Dreger.....                  | p.3 3 ) |
| ( Pastorelezh ha Liturgiezh ..... )                        | p.3 7 ) |
| ( ( Gadeziant, Lidoù ar Briedelezh en Iwerzhon) )          | )       |
| ( Brec'hiad Plouz.....Bozad Greun.....                     | p.4 2 ) |
| ( Lizheroù ( Barr-Heol, Ar Skaouted Europat, Anvioù ... )  | p.4 8 ) |
| ( -Lec'hioù Breizh-Uhel )                                  | )       |
| ( Joaioù ha Poanioù Mignoned Barr-Heol.....                | p.5 6 ) |
| ( 30-et Deiz-ha-Bloaz "Skol Ober".....                     | p.5 7 ) |
| ( War ar Blanedenn-Veurzh (Kon-denn an Nedeleg).....       | p.5 9 ) |
| ( A-Dreuz-Lenn ( Har Yezh, 3 Barzhoneg Kv, Geridurig )     | p.6 6 ) |
| ( Levrioù ar Vugale, L'Avenir, Le Gai Saber, Koumanentoù ) | )       |



---

# BARRE - HIEOL

---

## War Feiz ha Breizh

---

### K O R F   H A   S P E R E D

---

An den a zo korf, hag ouzh ar c'horf-se ez eus stag meur a ezhomm; an den a zo spered hag ouzh ar spered-se ez eus stag ivez meur a ezhomm. Ur Vro, ur Bobl a zo korf hag ez eus ezhommoù ivez stag ouzh ar c'horf-se. Ur Vro, ur Bobl a zo spered hag ez eus ezhommoù stag ouzh ar spered-se. Breizh a zo korf ha Breizh a zo spered dre ma'z eo graet gant tud ha dre ma'z eo ivez ur Vro hag ur Bobl.

Sed aze un digoradur d'ar pennad-mañ hag a zo sklaer-tre, d'hor meno, ha ne gredan ket e ve hini ebet eus lennerien B-H.enep d'ar menozioù-se. Bez'ez eus koulskoude, zoken war zouar Breizh, meur a hini ha ne deo ar ger Breizh, nemet ur ger ha netra ken, evito. ha ma c'heller komz eus ezhommoù ar Vretoned a-hiniennoù, dirazo, e weler spis e chomont digompren-krenn avat, dal ma reer anv eus ezhommoù Breizh evel Bro ha Pobl. Hogen, hep mar ebet, ez a war goazhañ, war vihanaat an dud-se, gant an ton a zo bet roet abaoe un nebeut bloavezhioù, d'ar pezh a anver Kudenn Vreizh, da lavarout eo da ezhommoù korf ha spered Pobl ar Vretoned.

\*

Evit ezhommoù Breizh e-keñver he c'horf, da lavarout eo e-keñver Labour, Kenwerzh, Arboellerezh ha kement a sell ouzh aezamantoù-korf an dud hag o buhez emañ an holl a-unvan koulz lavarout. Strollad dileuridi Vreizh e parlamant ar Frañs, bodet er CELIB o deus boulc'het al labour. En tu-hont d'ar strollad-se hag a vod Kannaded ha Senedourion, setu war an dachenn, gant menozioù politikel merket spisoc'h, ur gostezenn vreizhat an M.OB.emsav evit Urzhiañ Breizh.

Evit ar mouezhiadegoù diwezhañ : 18,25 a viz Du 1962, e c'heller lavarout o devoa kement hini a oa war renk sinet bezañ prest da harpañ mennadoù ar CELIB, ha da labourat evit kaout ar pezh a anver al LEZENN-STUR. An M.O.B e-unan en devoa lakaet danvez-kannaded, el lis: hini ebet anezho n'en deus tizhet mont e-barzh. Hogen abred pe ziwezhat e tevio a-benn mouezh ar Vretoned da vezañ klevet ha selaouet.

Hag ar merk sklaerañ eus ar pezh a ziouganomp amañ ez eo emzalc'h ar Gornisted o-unan, an dro-mañ. Ar Gornisted o sevel a-du gant Madoù Breizh. Rak ar Gornisted a oa e bodadeg an Alre an 3 a viz Du 1962, da ziskleriañ e oant prest da harpañ labour ar CELIB. Hag a-benn bremañ ez eo diaes gouzout petra a zo gwir er pennad moulet war VARR-HEUL, Niv.21, Kerzu 1959 ( Ar Gornisted enep Breizh). An neb a oar an disterañ diouzh finesoù ha troidelloù diskibien Karl Marks a lavaro rektal: " Neuze e kred ar Gornisted emañ an emsav breizhat o vont da c'honit! Emañ an tu kreñv gant ar re a stourm evit Breizh ! Santet o deus he doa an avel cheñchet tu hag e oa poent lammat e bag Vreizh da sikour teurel lien, loveal ha sturial !"

Fentus a-walc'h e oa gwelout ar skritelloùigoù peget ouzh ar mogerioù e Bro-Lannuon o taeañ aotroù Maer Lannuon, ha Bourdellez an depute o tont er-maez, hag ouzh o c'houviañ da Di-ar-Bobl, e Lannuon, da goñfereñsif diwer-benn al Lezenn-Stur, en ur damall da vaer Lannuon bezañ aet da vodadeg an Alre, an 3 a viz Du ha bezañ chomet dilavar eno, hag o rebech da Vourdellez bezañ chomet er gêr e-lec'h respont da bedadenn ar C.F.L.I.B. Ret eo anzav ivez e oa mat-tre komzoù an danvez-kannad komunista, e Bro-Lannuon, e-keñver Breizh, en e "ziskleriadur a feiz".

Ar Gornisted moarvat n'int ket sot, hag o welout ar c'hostezenoù politikel all o vont a-du gant madoù Breizh, hag o welout ivez goulennoù ar sindikadoù hag ar c'horfoù-micher, hag o santout e oa prest ar gouarier da stankeñ hentoù-douar hag hentoù-houarn, n'o deus ket goulennet chom er-maez. Hep kaout muioù h a fiziañs eget na deo dleet enno, en o lavarioù,kaer, ez eus nebeut a riskl o kemerout o emzalc'h nevez evel ur sin, ur seblant eus ar pouezusañ. Un abeg start a fiziañs.

Kement-se avat, ne zeu ket da lavarout ez eo echu poan ha trubuilh ar re o dous sammet war o chouk ar garg diaes m'eo lakaet ar Gouarnamant da anzav ezhommoù-korf ar Bobl vreizhat hag o dic'hoanteñ. Nann ! Rak diaes ez eo gouzout petra emañ en-sell ar Gouarnamant d'ober. Hogen n'eus arvar ebet: gobariet-mat eo an traoù.

Pealec'h a zo bepred d'ar bruderezh hag a vo c'hoazh e-pad hir-amzer. Dre-se e vo mat d'an holl dud a youl vat, bezañ prest da skoazellañ ar re a zo e penn ar stourm.

Ha kement-se a ra dimp soñjal en ur stumm bruderezh ha n'eo ket tre hervez al lezenn: skignañ traktoù dizanv gant frazennoù berr-berr warno, pe skrivañ lavarioù gant pezhioù lizherennoù. Meur a wech ne dalvez ket kalz a dra ar skridoù hag an enskrivadurioù-se. Frazennoù ne dint ken, lavarioù hep reiñ abegoù an dra. Da skouer: petra'sinifi " Tachenn ebet d'an arme e Breizh " ( pas de bases militaires en Bretagne) ? Hep rak na perak ? Ret e vefe d'al lavarioù-brudañ bezañ eozet mat-tre ha strinkañ koulz lavarout e kreiz daoulagad an dremenerien ur wirionez diarvar, pe da vihanañ ur goulenn nec'hoazh-tre hag a vroudfe ar re hen gwelfe da glask an diskoulm. War ar poant-se o deus "paotred ar stourmerez breizhat kuzh" o micher da zeskiñ 'm eus aon.

"Paotred ar stourmerez breizhat" a rafen a-walc'h ivez eus ar baotred-se, paotred yaouank alies, hag a ra tro er c'herioù goude ar gouelioù folklorek da ziskregiñ ar bannieloù trilliv pintet e beg ar gwernioù; paotred ar stourmerez breizhat a rafen c'hoazh eus ar re a ya en noz da livañ war an hentoù, war ar monumantoù ofisiel hag an tiez privez al lavarioù a gomzen anezho bremaik. Met e gwirionez, ne zeu ket kalz a vad ac'hano, nemet marteze hardishaat ar re a ra seurt troioù, o boazañ da c'hoari enep al lezenn. Hogen ur c'hoari ne deo ken a-benn ar fin, ur c'hoari dañjerus marteze zoken, rak ma tichañs dezho bezañ pakeñ gant paotred an urzh e vezont en riskl da sachañ ar bec'h warno, war o ziegezh. Ur seurt "c'hoari" n'hell bezañ frouzhus ha talvoudus evit an Emsav nemet gant ma vo urzhiet-mat, gant ma vo pouezet-mat an heuliadoù, ha gant ma vo un digarez da zigeriñ kaoz ar Vro dirak al Lezioù-barn, mar dic'hañs d'an "oberourion enep lezenn" bezañ dastumet gant ar polis. Hogen ar pezh a glasker peurvuiañ an seurt degouezhioù ez eo mougañ an afer: ar re dapet kroget aon enno a zo prest da devel, ha diouzh an tu all, ar re a zo en o c'harg barn ha kastizañ ar felladennoù enep-lezenn n'o deus c'hoant ebet da reiñ tu da baotred an Emsav da vrudañ o menozioù hag o c'hredennoù.

Un dra avat, a c'heller teurel evezh outañ : ne vez ket souezhet ar bobl ken o welout ar seurt lavarioù hag enskrivadurioù kement evel ma'z eus bet skrivet ha skignet abaoe dreist-holl m'eo bet kroget an traoù gant ar baizanted. Ne spontont mui ha vezont ket feuket, e-giz ma'z eus bet c'hoarvezet gwechall....



\* \*

Gobariet-mat ez eo ar stourm evit madoù Korf Breizh. Nemet evidomp ez eus traoù gwan er stourm-se. Un nerzh diabarzh eo a vank : ar spered-bro, ar garantez-vro, da lavarout ar santimant don a stag an den ouzh douar, ouzh peadra korfel ha speredel bro e gavell. Un tamm a zo, evel just, hogen kentoc'h ur garantez fetis ouzh reuzeñdigezh ar bobl. Ar pezh a zo mat ha meulus, a dra sur, met berrefedus, da lavarout eo en riskl da gouezhañ ur wech tizhet ar pal a glasker: lealded ha justis evit ar rummadoù tud a zo o chom war zouar Breizh.

Hogen n'eo ket war ar poent-se e fell dimp pouezañ amañ. War un darvoud all hag a zo naturel-tre, er stad m'emañ an traoù e Breizh: n'eus mui an deiz a hiziv ar pezh a vez graet anezhañ Emsav sevenadurel-rik, da lavarout eo un Emsav gant strolladoù hag a bleustr hep muiken war dachenn ar Sevenadur. Da lavarout eo: staget ez eo hiviziken ar stourm evit ar Sevenadur ouzh ar stourm evit Madoù-korf Breizh. Ar stourm evit ar C'horf hag ar Spered war an dro.

\*

Lennerion feal BARR-HEOL, mar o devez pasianted a-walc'h da adlenn ar pennadoù-stur embannet amañ abaoe 1956, a welo a-walc'h o tonet en-dro evel lavar-stur: n'heller ket savetsiñ ar Sevenadur hag ar Yezh hep derc'hel kont eus ar pezh a zo ar stern anezho. Pe e plij dimp pe ne ra ket, ez eo enkorfet ar Sevenadur-mañ-Sevenadur hag ar Yezh-mañ-Yezh er Vro-mañ-Vro hag ar Bobl-mañ-Bobl. Pa vez klañv an eil e vez klañv egile pe eben.

Splann-meurbet e oa ivez ar c'heñver-se ar Roll-Mennadoù kinniget gant KUZUL AR BREZHONEG, an 2 a viz Ebrel 1959. Nac'het o devoa an Ouest-France hag an Télégramme embann anezhañ. Met kement-se ne vire ket outañ da vezañ fur ha reizh. Sebedennet e oa chomet ar Prezidant Pleven o welout seurt mennadoù arliv politikel warno, o tegouezhout gantañ.

Petra da lavarout neuze eus KENDALC'H o vale e dud yaouank dre straedoù Kemper, Brest gant pezhioù skritelloù a-dreuz an hen hent o c'houlenn labour da zaouarn ar Vretoned, brezhoneg d'o genoù hag ur chaoser vras da virout ouzh an dud yaouank da vont da heul dour an divroañ.

Petra da lavarout eus BLEUN-BRUG o tastum tremen 200 den, e-kerzh an hañv tremenet, e skolaj an Itron Varia evit klevout prezegennoù war ar c'hudennoù ekonomikel, hag o pediñ sekretour ar C.E.L.I.B da ober ur goñferañs ken brav ( ha ken trist war an

dro ma oa darbet d'ar prezager stonkañ e-unan), ha ken gwirion ma tisklerias an Aotroù Kerveadou, eskob Sant-Brieg ha Landreger e oa bet komzoù an Aotroù Martray ur sklerijenn dic'hortoz evit-tañ.

Ha setu c'hoazh ( ha n'eo ket ar wech kentañ), EMGLEV BREIZH, war niverenn diwezhañ ar SONER ( Kerzu 1962) o kas ur c'halvadenn a-du gant al Lezenn-Stur. Ma! mar ne deo ket kement-se estreget Sevenadur ne gomprenan mui banne e yezh ar C'hallaoued.

Bezomp fur eta ha poellek, hag anzavomp ez-leal ne gredomp ket e vezo **salvet** ar Sevenadur breizhek dre al labour war dachenn an oberoù sevenadurel hepken.

N'emaomp ket en ur vro 'lec'h ez a plaen ha sioul ar vuhez war-raok, hogen en ur vro 'lec'h ma teuz ar boblañs dre an divroañ dre ziouer a bennadurezhioù oc'h urzhiañ al labour hag ar c'henwerzh; ur vro 'lec'h ma'z eo pep skol evel ur forn 'lec'h ma teuz ar yezh evel amann en tan.

Breizh a zo da vezañ prederiet en he c'horf evel en he spered hag an daou labour - se ne reont e gwirionez nemet unan.

o o o o o  
o o  
o o o  
o o o o  
o o o o

## T R I F A Z I

U R

## V O T A D E G

- - -

Abaoc'ha ma t'arise an Estourbeilhon gwechall gant merc'hed yaouank ar maezioù, n'eus ket bet pouezusoc'h botadeg e Breizh moarvat, eget hini miz Du diwezhañ.

Ar c'hostezennoù politikel kozh a oa bet dinerzhet gant de Gaulle, nemet ar Gumunourion; unan nevez a oa bet krouet; kudennoù bara pemdeziek Breizhiz a oa bet lakaet sklaer dirak daoulagad ar voterion gant sekretour ar C.E.L.I.B., gant paotred ar MOB, gant ar c'hambroù-kenwerzh, gant an emglevioù-micher (al labourerion-douar dreist-holl) ha gant ar safer a-zivout an trenioù.

Daoust eta pet Breizhad a lakafe c'hoazh dreist o fobl, dreist o farrez hag o bugale, - o c'hostezenn ? Pet a lakafe pep fiziañs er Jeneral daoust d'ar pezh en deus graet enep Breizh Debré hag an dec'hokrated ? Daoust pet a redfe, gant an dizesper war-lerc'h ar Gornisted ? ha daoust pet a votfe a-du gant an emglev en o farrez, evit ar garantez strem Breizhiz, evit an Adsav ?

0 0

Unan eus ar skouerioù sklaerañ da studiañ eo hini botad botadeg Gwengamp.

Gwengamp a zo etre div dachennad disheñvel : un arvor pinvidik a-walc'h, poblet a M.R.P-ed (kantonioù Plouc'ha ha Lañnon), ha diouzh tu an doueroù, en argoad, ul lodenn a Vro-Gernev

brudet evit linenn hent-houarn strizh (linenn Gwengamp-Karaez). Un dachennad diboblet ha digrsitenet eo, chouanted troet da Gumunourion : Kantonioù Benec'h, Boulvriag, Mael-Karaez ha Kallag.

E 1958, an arvor en doa anvet da zepute un den ginidik eus an henternoz pellañ : an Ao. Gwenn, eus Plouc'ha, doktor war ar gwir hag ezel eus ar Gambr-Labour-Douar. 24.300 mouezh en doa bet en eil tro.

Kerneviz o doa roet o mouezhioù d'un den eus ar penn all, an Ao. Caroff eus Kallag, bet gantañ, d'an eil tro, 16.000 mouezh.

Gweget etre an div gostezenn veur, an dachennad-etre, hag emañ enni Ker Wengamp, he doa c'hoantaet en em zishualañ, Tomaz maer S.F.I.O Mousteruz, en doa bet tost da 12.000 mouezh (en eil tro). Hag er sulvezh kentañ e oa bet zoken war ar renk evit difenn Breizhiz, an Ao. Per Manac'h, ha 4.200 mouezh en doa bet. Ne oa ket chomet d'an eil sulvezh.

0 0

E-pad ar pevar bloaz m'eo bet an Ao. Gwenn depute e c'hoarvezas darvoudoù barrek, a greded, da zizallañ ar re zallañ. E Gwengamp, labouradeg Tanvez he deus dic'hopret 400 micherour bennek. E Pontrev eo bet serret a bep eil (goude ar milinoù-lin) ar vilin-eoul, ar beuraozadeg-eoul, unan eus ar milinoù traezh-raz, unan eus ar mengleuzioù, hag ar vilin-baper a zo ivez en arvar - Skol Labour-Douar Plouizi, daoust da bromesaoù ar gouarnamant, n'eo ket bet savet; linenn Karaez n'eo ket bet ledanaet (prometet e oa bet, goude se eo bet dibrometet, bremañ eo adprometet adarre).

Dre ar bastell-vro a-bezh eo kouezhet ar boblañs. E Kernev eo kouezhet en un doare spontus : "Amañ, eme an Tad Lapraz, deut da studiañ ar vro, eo deut ar gomunistiozh da vezañ an esperañs diwezhañ e-kreiz an dizesper."

Kalz gwashoc'h e vije bet deut an traoù da vezañ c'hoazh diwar ar prizioù nevez-lakaet war an hent-houarn, nemet eo en em savet darn eus pennoù Breizh, en o zouez maer Karaez ha maer Gwengamp, d'ober d'ar gouarnamant plagañ... betek gwelout... Maer Gwengamp, an Ao. Ollivro, en deus bodet en-dro dezhañ ur strollad mignoned ken kalonek hag eñ. Kelenner istor ha douaronerzh eo el Lise. Desket en deus brezhoneg. E burev-ren ar CELIB emañ.

Pa savas bec'h diwar-benn an hent-houarn edo war al linenn, gant al labourerien-douar, da 5 eur diouzh ar beure. Karet eo gant an dud e poan. Mont war ar renk evit bezañ depute a oa evitañ klaks gonit amzer ( ne raje ken skol) ha beli, da salviañ Gwengamp, Pontrev, Kernev ha Breizh a-bezh.

O O

Ar sul kentañ o deus bet :

- 1\* an MRP ( a-du gant de Gaulle) 12.800 mouezh  
( 1100 muioc'h eget tro gentañ 1958)
- 2\* ar C'HOMINOUR ( kelennour filozofiezh) 11.380 mouezh  
( koll a rae tost da 1.500 mouezh war sul kentañ 1958 )

N'eo ket etre an daou-se e oa ar c'hemm brasañ. Ar sosialour ( an hevelep den hag e 1958) a gollse tost da 5.000 mouezh (5.250 e-lec'h 10.200 e tro gentañ 1958) hag ar Breizhad, maer Gwengamp a c'honeze, a c'honeze 6.000 ( 10.200 an dro-mañ e-lec'h 4.200 e 1958 d'ar Manac'h).

Sklaer e oa edo o sevel war varr e Gwengamp ur c'hristen dibolitiker. Nag ar "gwenn" nag ar "ruz" ne oant evitañ enebourien. Ne glasko, emezañ, nemet unaniñ holl Vreizhiz er garantez hag el labour, ha 10.200 a dud a oa troet a-du gentañ.

Koulskoude ne zeus nemet d'an trede. N'eo ket chomet war ar renk an eil sulvezh, o soñjal moarvat n'hellje ket tremen. Diaes eo gouzout pe en deus graet mat pe en deus graet fall. Gwir eo e teuas, diwar an 20.000 ha n'o doa ket votet ar sul kentañ, 10.000 da votiñ an eil sulvezh, met an Ao.Rohou, maer Karaez, chomet war ar renk ne c'honezas nemet 1.000 mouezh eus ar sulvezh kentañ d'an eil ( 9.500 e-lec'h 8.500 )

Ya, eme darn, met ar re-se da vihanañ o deus dekset votañ a-d a-du gant ezhommoù an dud e-lec'h votañ evit kostezennoù. Hogen 2.155 voter an Ao.Ollivro e kêr-Wengamp ( diwar 4.007) o deus ranket adkouezhañ en toull kozh ar politikerezh, an enebiezh...hag an disker !.....

O O O

Ne oa ket eta d'an eil sulvezh nemet an div gostezenn veur krog-ouzh-krog : an MRP ( a-du gant de Gaulle) enep d'ar C'homu - nous.

Evit an darn-vuiañ eus an dud e oa sklaer ar gont:

1\* ar "c'hristen" en dije mouezhioù ar "gristenien" da lavarout eo

|                 |               |
|-----------------|---------------|
| G = ar Gwenn =  | 12.900        |
| + O = Ollivro = | 10.200        |
| <hr/>           |               |
| A war-dro =     | 23.000 mouezh |

2\* Ar C'homunour en dije holl vouezhioù an tu "kleiz" peogwir eo deuet an SFIO-ed da vezañ mignoned dezho a-nevez-'zo.

|                 |                |
|-----------------|----------------|
| L : Leizour     | 11.400         |
| + T : Tomaz     | 5.300          |
| + S : Serandour | 2.200          |
| <hr/>           |                |
| P.S.U           |                |
| <hr/>           |                |
| B war-dro =     | 19.000 mouezh. |

O O O

Pell e oa Yann diouzh e gazeg !

|                      |                                    |
|----------------------|------------------------------------|
| Ar Gwenn en deus bet | : 26.100 ( 3.000 ouzhpenn ar gont) |
| Leizour .....        | : 24.100 ( 5.000 ..... )           |

E-lec'h 4.000 mouezh etrezo, eval ma soñjed, n'eus bet nemet 2.000.

Peogwir ez eus bet kalz muioc'h a dud o votiñ an eil tro, n'eus souezh ebet o defe bet o-daou muioc'h a vouezhioù eget m'e-dod e-sell. Siwazh ! abalamour da se ivez, eo diaesoc'h gouzout gant piv eo mouezhioù piv. Komzomp fraezh ha distag : gouzout piv en doa votet, en taol kentañ, evit an Ao.Ollivro, pe re an tu "dehoù" pe re an tu "kleiz".

Hogen ni, ha kement hini eus ar Gristenien hag a gar Breizhiz, hon eus ezhomm bras d'han gouzout. Lavaret hon eus ha lavarout a reomp n'eus hent ebet etre an Adsav hag etrezek Doue nemet hent ar Garantez hag an Emglev. Lavarout a reomp e tistroio Breizhiz davet an Iliz pe gavint kristenien da samañ lod eus ar groaz ponner a zougont.

We dal netra hor c'homzoù ma n'en deus graet an Ao. Ollivro nemet skrapat mouezhioù digant an Ao. Gwenn...

Klaskomp gwelout eta ar pezh a zo c'hoarvezet.

O O

Un dra a vo anat dimp raktal, gant keñveriañ an niverennoù: ar c'hontoù graet en a-raok ne oant nemet huñvreoù ! Ar Gwenn n'en deus ket bet holl vouezhioù an Ao. Ollivro, na Leizour kennebeut holl re an tu "kleiz" .

Ker-Wengamp G+O = 2.500. N'en deus bet an Ao. Gwenn nemet 2.100 ( 400 nebeutoc'h). An Ao. Leizour, mar en dije bet L+T+S en dije bet 1.500. Hogen ouzhpenn 2000 en deus bet (500 muioc'h). Pa soñjer pegement e pouez ar c'hêrioù bremañ war ar vro, ez eus peadra da chom nac'het. Kalz a'Wengampiz o doa kavet un den d'o zennañ eus fankigell ar "politikerezh", hag o deus ranket adkouezhañ enni, hag adkouezhañ en hini gwashañ.

E Pabu ivez en deus bet ar Gwenn nebeutoc'h a vouezhioù eget ma konted ( - 20, e-pad ma c'honeze Leizour 160 ). E Plouizi kerkoulz all (G: - 15, ha Leizour + 90 ).

- Ya, eme darn, e kanton Gwengamp eo gwir kement-se, peogwir eo Ollivro eus Gwengamp !".

Aes eo respont: Leizour hag Ollivro a zo o-daou eus Gwengamp kelennerien el lise o-daou. Hogen er sul kentañ o doa bet e kêr:

Ollivro : 2155                      Leizour : 1068  
d'an eil sul                      " : 2070.

N'hell den dislavarout kement-mañ : e Gwengamp e oa un den barrek da zistreiñ an dud diwar hent dall ar gasoni, ha ne oa nemet unan..

E kanton Pontrev eo ken gwir all. E Kêr, en deus kollet ar Gwenn war gont G+O ( - 27) e-pad ma c'honeze Leizour + 93. E Sont-Jili: ar Gwenn - 30, Leizour + 54 - Ha daoust d'ar voterien nevez deuet d'an eil sul : Ploueg-Pontrev, ar F Gwenn -5; Leizour + 110. Pe c'hoazh Pleuzal, ar Gwenn +6 ha Leizour + 93.

Pouezomp war sifroù an teir barrez-mañ : rak enno emañ kempouez an div gostezenn. En eil sul e trec'he an M.R.P. e kêr-Bontrev diouzh 102 vouezh. E Pleuzal diouzh 12 - E Ploueg diouzh unan(1). Hogen ma en dije bet ar Gwenn mouezhioù Ollivro, zoken hep

kaout hini ebet eus re Domaz, en dije trec'het diouzh 200,109 ha 111.... (111 mouezh e-lec'h 1 e Ploueg ! )... 367 ouzh 3.

" Ar Gomunistiezh, diwezhañ esperañs e kreiz an dizesper " Ar pezh a zo gwir evit Bro-Gernev a zo gwir evit Ker-Wengamp ha Pontrev. Un esperañs all a oa bet krouet : hini al labour, an emglev hag ar garantez evit Breizhiz... N'eus ket bet a-walc'h a dud o kompren.

O O O

Ar re o do komprenet - ar re a oa bet "skrapet " gant an Ao. Ollivro - ne oant ket holl eus an "tu dehoù", anat eo dre ar sifroù. Anatoc'h e vo c'hoazh pa glaskimp gant piv eo aet, d'an eil sul, mouezhioù an Ao. Tomaz, maer S.F.I.O. Mousteru.

Arabat krediñ o defe sentet ar re-mañ holl ouzh Mollet ha votet evit ar c'homunour; pell bras ac'hano ! E Mousteru e-lec'h kaout 320 mouezh bennak (L.T.S) hep kontañ voterien an eil sul, n'en deus bet Leizour nemet . 237 (- 80) hogen ar Gwenn en deus bet 120 e-lec'h kaout 50.. Hag e Tregedel ( kanton Laffnon) hag e Lokenvel e tegouezhas traoù heñvel. Kalz mouezhioù labourerien-douar S.F.I.O. a zo aet d'ar Gwenn, ar pezh a goazh c'hoazh ar mouezhioù aet dezhañ eus re Ollivro.

Kerkoulz en tu kleiz evel an tu dehoù ez eus bet eta tud a youl vat, 4.200 e 1958 ha 10.200, e 1962, darn anezho diwennet, darn anezho diruziet, holl dibolitiket. Bodet e oant dreist pep politikerezh, n'eo ket evit harpañ de Gaulle enep da Gerneviz, nag evit hisañ Kerneviz enep da z-de Gaulle, met evit lakaat poan ha kalon da salviañ Kernev, Gwengamp ha Pontrev... Kalz anezho bremañ e zo bet adtaolet e park ar Gomunourien, hini ar gasoni hag ar fals-esperañs.

O O O O

Penaos e c'hell kement-se bezañ c'hoarvezet ? Abalamour d'an div dachennad disheñvel a zo bet staget ouzh Gwengamp.

Un dachennad vras a gomunourion a zo en Aodoù-an-Hanternoz, adalek Pléstin betek Gwareg: kantorioù Plistin, Plouared, Benec'h Mael-Karaez, Kalleg, St-Nikolaz, Rostren ha Gwareg. Evit mougañ mouezhioù ar gomunourion-se dindan ar re all e oa bet a-benn mouezhaideg 1958, rannet an dachennad-se etre teir lodenn, staget



unan ouzh Lannuon-Pempoull, unan all ouzh Loudieg, hag an hini graiz ouzh Gwengamp-Plouc'ha.

" Stoufet eo bet o genoù d'ar beorion" en dije bet lavaret Lamennais, moarvat, ha n'eo ket o vougañ klemmoù ur c'hlañvour e roer dezhañ ar pare. N'eus bet graet

Ar pezh a vije bet d'ober da vihanañ a vije bet pareañ Kernev. N'eus bet graet netra. Stad Kernev a zo aet war washaat. Setu amañ sifroù c'hoazh, re ar boblañs bet kollet gant kantonioù'zo etre 1954 ha 1962 ( 8 vloaz ) :

|                  |                      |
|------------------|----------------------|
| Benec'h : 12,8 % | Mael-Karaez : 14,2 % |
| Kallag : 12,6 %  | Boulvriag : 8,9 %    |

Met kanton Plouc'ha n'en deus kollet nemet 1,5 %. Ha ma sellomp pelloc'h etrezek an amzer dremenet ne vo nemet sklaeroc'h daou du an daolenn : an tu pinvidik hag an tu paour.

Abaoe 1936 o deus kollet :

|                  |                      |
|------------------|----------------------|
| Benec'h : 29,3 % | Mael-Karaez : 29,9 % |
| Kallag : 29,2 %  | Boulvriag : 26,6 %   |

Ha Plouc'ha : 1,9 %.

Div dachennad disheñvel int, ha pinvidien an Hanternoz ne gomprenont nag anken Kernev nag hini ar c'hêrioù.

0 0 0

Chomet eo eta, ur wech ouzhpenn, an div gostezenn veur tal-ouzh-tal, evel ma plij ganto. Er wech-mañ eo en M.R.P. en deus trec'het. Met dibuzh 2.000 mouezh hepken.

Ma n'o dije ket kollet ar pevar c'hanton anvet a-us 4.371 a dud abaoe 1954, ha Pontrev 870, piv en dije trec'het ? Kontan Plouc'ha n'en deus kollet e-keit-se, nemet 101 den...

Daou stumm a zo eta da zigomunistañ Breizh: dre ar bev ha dre ar marv...

An dismantr, an dilez, an divroañ hag a ra Komunourien, a voug ivez ar gomunourien pa vezont kaset pell a-walc'h... betek ar " gouelec'h gall "... Pa vo goull Kernev ne vo ken a gomunourien e Kernev. Met ret eo va hastañ, rak a-walc'h e vefe, kentañ mouezhiadeg a vo, da 1.000 mouezh mont c'hoazh war an tu-se evit reiñ an trec'h dezho, hogen e Ker-Wengamp hepken, ur wech distroadet

an Ao.Ollivro, ez eus bet adkouezhet 500 mouezh er c'hef ruz eus a ar sul kentañ d'an eil sul.

Digomunistañ Breizh dre ar Bev a vije bet gallet ober ivez. 4.000 a du e 1958, 10.000 e 1962 o doa asantet hen ober...diwar 43.162 voter, hep kentañ an 20.000 a oa chomet er gêr.

Ha bremañ ?

P.Bourdellez



## LENNEGEZH - KANNADIG PARREZ

1

## ISTOR UR GADOR-GOFEZ

Ar gwenervezh-se, goude kreisteiz, ec'h en em gavas nec'het a-greiz-holl person Bulien : an deiz war-lerc'h e tlee ur beleg eus a Lannuon dont da reiñ un taol-skoaz dezhañ da gofesaat tud ar barrez a-benn Pardon Sant Frañsez a Sal.

Taolet en devoa pled ar beleg kaezh e oa stoufet an eil kador-gofez (ar govizion, evel ma lavarer e Treger) gant ur bern kasedoù lakant an eil war egile goloat brav gant paper roc'hellek ha gant iliaev ha spoenv, he disheoliet gant plant-sapr !

Divinet hoc'h eus ! Kraoù ar Mabig Jezuz a vire ouzh ar beleg hag ouzh an dud da implijañ ar govizion-se evit Sakramant ar Bini-jenn.

Un dra sakr ez eo koustiañs an den. Hag unan eus an traoù a vez desket abred d'ar vugale eo e c'hellont e pep frankiz, choaz o zad-kofezour. Peogwir e oa bet degemennet d'ar barrezianiz e teufe ur beleg all e oa ret kaout, e stumm pe stumm ur gador-gofez all.

Ne oa ket se ur gwall afer. Er sekreteri kozh, ez eus pleget-mat, ur gador-gofez lem-laka ha n'eo ket bet en implij pell hag amzer'zo, harp ouzh ar vur. Ne oa nemet he degas da foñs an iliz da gichen ar foñs-badeziant, ha mat pell'za... Hag an Aotrou Person da gerc'hat e sakrist da reiñ un tamm sikour dezhañ.

Ponner da vat e oa ar Govizion. Gant amzer ha poan e oa bet hanter-zouget hag hanter-ruzet ar pevar damm eus ar govizion, pleget brav an eil ouzh egile ha dalc'het unanet gant un ibil-houarn kraouennek. Savet e oa bet ar Govizion en he sav ha tennet an ibil-houarn. War an tu gin e oa bet savet avat, evel m'hen diskoueze an div daolennig Kalon Jezuz tachet just dirak ar plas a gemerfe an dud daoulinet oc'h anzav o fec'hedoù hag o c'houlenn pardon digant an Doue madelezhus-se n'en deus nemet e Galon leun a drez hag a

garantez, da ziskouez ha da reiñ d'ar bec'herion c'hilac'haret, ma savint ac'hano leun a joa, gant ar pardon hag ar c'hras en o eneoù disammet.

Cheñchet e oa bet tu neuze d'ar Govizion. Met neuze c'hoazh ne oa ket mat an traoù. Rak...ya... bez'e oa traoù hag a vanke: div banell, ar panelloù-se hag a vez a bep tu d'an Tad-kofezour hag a zo toulllet enno daou garrez bihan da lakaat ar rakled. Peurvuiañ e vez daou du d'ar gador-gofez ha div rakled hag a vez digoret a bep eil dre ma tremen ar binijennerien da gofesaat o fec'hedoù.

Div rakled ? An Iliz Katolik n'eo ket ur sodez bennek moarvat ha diwall a ra gant kalz a evezh, enor, brud-vat ha santelezh he beleien. Ur vamm cvadelezhuz ez eo an Iliz Katolik e-keñver an dud klañv a rank kofesaat er gêr, ha reiñ a ra pep galloud war ar poent-se d'he beleien. Met a-hend-all etre ministred Sakramant ar Bini-jenn hag an dud fidel e laka un disparti, evit n'o devezo krog ebet teodoù ar re a vez techet da welout droug zoken 'lec'h n'eus ket an disterañ. Setu aze un dra hag na vo ket cheñchet moarvat netra ebet ennañ gant ar C'honsel bras Ekumenek: ar rakled evit ar merc'hed.

Kaer o devoa ar person hag ar sakrist sellout ouzh ar pevar zoull graet evit steudennoù ar panelloù ne oa netra d'ober: ur banell a oa dindan Kraoù ar Mabig Jezuz, hag eben o stoufañ toull-trap ar sekreteri kozh.

Evel-se ne voe nemet ur beleg o kofesaat. Met ur beleg a zo beleg ha ministr ar Sakramant koulz heg e genvreudeur all.

( KOULMIG AR GINDI 4.2.1962 )

( 2 )

A N A N A O N H A N I

Tremenet eo Gouel an Hollsent ha Gouel an Anaon. Met chom a ra al lodenn hirañ eus miz Du, miz an Anaon da dremen ha mat eo dimp a-hed ar miz-mañ kaout soñj eus an Anaon-se evit pediñ evito.

E broioù'zo ez eus un devosion souezhus d'an Anaon. E bro-Veksik, da skouer, e tremenont er beredoù, an noz etre an 1 hag an 2 a viz Du, hag ec'h elumont galsier bihan melen war ar bezioù ha neuze kanañ a-hed an noz, debrif hag evañ da c'hortoz sklerijenn an deiz da darzhañ. Ha lod an anaon a lakaont war ar

beziou ivez.

Ne spontont tamm ebet dirak ar marv, fae a reont warnañ zoken: kement a dud a veze lazhet e sakrifisoù gwechall en o bro, ma'z int kustum-tre dibouzh soñj ar marv. Ha daoust ma'z int deuet da vezañ kristen an darnvuiañ anezho, e chomuañ Indianed-se stag ouzh gizioù kozh hag a zo e gwirionez gizioù pagan. Un den

Un deiz ma oa bet goulennet digant un Indianez kozh eus pobl ar Vaiaed, hag-eñ e oa tremenet mat an traoù e-pad an noz, e respontas : " Ken kaer ha biskoazh. Seder e oa an traoù ganimp"  
- Hag ar re varv ?

- O! ar re varv, eme an hini gozh, a oa stad enne ivez. Pa oan o tont d'ar gêr, hirie'beure, da strink-an-deiz, e welen anezhe o vont hag o tont dre ar vered. Sur-mat o devoa bet o lod eus ar gouel : debriñ hag evañ mat o devoa graet, rak kaouigellat a raent un tammig !"

E-pad pell amzer - ha c'hoazh an deiz a hiziv, e kalz a bobladoù eus Afrika- e veze kinniget boued hag evaj d'an Anaon. Mamm Sant Augustin hec'h unan a glevas he jeu dre ma oa aet en noz, da gas traoù: boued hag evaj, war bez he zud. He pelloc'h a-raok, en amzer gozh, e veze klozet Faraoned an Ejipt, en o firamidennoù brudet, pa varvent, ha boued eus ar gwellañ e-kichen o c'horfoù marv.

Tu a vefe da gaout skouerioù all, en istor hon tud-kozh, pa oant digristen ha divadez, hag o heuliañ o Relijion bagan.

An deiz a hiziv e planter beuz benniget war ar beziou, deiz Sul ar Beuz. Ur c'hiz kristen, sur-mat, met n'on ket sur hag-eñ ne oa ket ur c'hiz pagan gwechall. E kornadoù'zo eus bro Normandi, e teu muioc'h a dud d'an iliz, d'an ofereñ, deiz Sul ar Beuz eget gant Gouel an Hollsent a-unan : a-diadoù a-bezh e teuont d'an iliz, an deiz-se, ha goude-se, ez eont da bikat un tamm beuz war bez o zud varv.

Un dra santel ez eo ar Beuz benniget, ha gant e liv glas ez eo merk ha sin ar vuhez hag an esperañs kristen, ha setu perak n'eus ket bet harzet gant an Iliz ouzh an dud da lakant ur bodig-beuz war ar beziou.

Met ret eo mont donoc'h eget gizioù diavaez, donoc'h eget ar c'hiz da gempenn brav ar beziou gant bleunioù ha glazur, ha klask kompren mister ar Marv ha mister ar re Varv. An Iliz Katolik hec'h-unan he deus resped evit ar c'horfoù divuhez bet badezet ha sakramantet, hag ar beredoù eviti a zo tachenoù lec'h m'eo hadet ar c'horfoù-se da c'hortoz addiwan ha bleuniañ evit ar Vuhez peurbadus. Met ne baouez

kammed da bediñ evit eneoù ar c'horfoù-se bet barnet gant an Doue holljust hag hollskiantek.

An devosion d'an Anaon n'eo ket ur c'hiz evit an Iliz hag ar c'hristen, lod eus ar Relijion ne lavaran ket

( KOULMIG 11 a viz Du 1962 )

( 3 )

MAEN-HIR PLEUVEUR BODOU HA MIZ AN ANAON .

Daoust ma'z eo krog Radom Pleuveur-Bodoù - ha Telstar-da labourat abaoe an 10 a viz Gouere 1962, ne oa ket bet c'hoazh Prezidant ar Republik o-tigeriñ ar stal evel ma tlee. Me 'oa o v vont da skrivañ : o vennigañ ar Radom hag ar Maen-Hir savet e-kichen, met kaer en deus an Aotrou Prezidant bezañ bras ha hir, n'en deus ket ar galloud da vennigañ. Ur Maen-Hir, forzh pegen hir, p pegen kaer ma c'hell bezañ a chom un dra direlijion, un dra bagan keit ha na vez ket lakaet war e benn, pe engravet ouzh e gostez, ur merk, ur sin kristen bennak, evel ma'z eus bet graet end-eeun e Pleuveur-Bodoù, gwechall, evit Maen-Hir SANT DUZEG, gant binvioù ar Basion engravet ha kizellet warnañ.

Brudet ez eo Breizh, evel bro ar Vein-Hir, an Taolioù-Mein, an Alezioù-Korriganed, Kromlec'hioù. Klaset ez eo an holl vein-se an deiz a hiziv, ha difennet ha diwallet a-berzh Lezenn.

E-touez ar re vrudetañ emañ regennadoù Mein Bras Karnag, evel ma oar an holl.

\*

Ne oar den, dre sur petra'verke 'verke ar Vein-Hir-se, na perak ez int bet savet: marteze niver ar soudarded barrek da vont d'ar brezel, niver an tadoù-familh pe ar baotred, pe mein o verkañ tachenn pep poblad pe al lec'h ma tlee an dud en em vodañ asamblez da zivizout diwar-benn traoù ar Vro pe ar Relijion.

Met e gwirionez, n'eo ket gant Bretoned ez eo bet savet ar Vein-Hir-se. N'eo ket zoken gant o zud kozh ar Gelted, met gant pobloù all, koshoc'h evito, hag a oa o vevañ amañ, pell a-raok donedigezh Hor Salver Jezuz-Krist. Ha Mein all heñvel a gaver e kalz a vroioù all, pell ac'han : betek Bro-Indez !

Petra en deus eta ar MAEN-HIR-se savet e-kichen ar RADOM da welout gant ar Vro-mañ ?

Sklaer-tre e seblant bezañ soñj ar re o deus goulennet digant Prezidant ar Republik divouchañ ar Maen-Hir, e skeud e veaj da Bleu-veur-Bodoù, an 19 a viz Here: ar Bed Kozh merket, skeudannet gant ar Maen-Hir e-unan, ha neuze ar Bed Nevez, Bed an Atom hag an Darempredoù-a-beoc'h etre ar broioù, skeudennet gant ar RADOM. An amzer gozh hag an amzer nevez kichen-ha-kichen : ur gentel istor moarvat o tiskouez an hent graet gant sperad ha skiantoù an den.

Met ur gentel re verr, ur gentel hag a seblant bezañ ankounac'haet ar 1500 vloaz kerañ a zo bet : Istor ar Vretoned, perc'hennet an douar-mañ abaoe 1500 vloaz.

E-skeud Gouel bras an HOLLSENT, ez eo mat, ez eo just, ez eo dleet d'ar Vretoned kaout soñj eus ar Sent-se, sent kaer, sent brudet pe hep nemeur a vrud o deus bet labourer ken mat gwechall evit evit ober gant ar Vretoned ur bobl kristen, hag a zo bet meret, stummet, maget gant an Aviel hag ar Relijion Gatolik...

E-pad miz Du, miz an Anaon, ez eo mat ivez soñjal el lignez hir a Vretoned o deus labourer an douar-mañ, aret an douar-mañ gant o eler, pe ar mor gant kein o bagoù. Ha pediñ evito, evel just.

Un toull, ur pezh toull, ur pikol pezh hini a zo etre ar Maen-Hir hag ar Radom e-keñver an Istor. Un toull, ur pezh toull, ur pikol pezh hini da stoufañ : ISTUR BREIZH.

( KOULMIG 28.X.1962 )

( 4 )

GLAV, FRIM, SKORN, DENT-GENVER, ERC'H : GOAÑV

Ur penn kentañ eus ar bed, ne oa na skorn na goañv. Ken bras e oa an heol ma tape betek penn uhelañ an douar, ha dre holl e oa tomm an amzer. Koadeler frank ha kaer a wiske ar pezh a zo deuet da vezañ un tog-skorn. Mar kirit e vo roet un testeni deoc'h : pa vez toullat ar gwiskad-skorn a c'holo broioù uhelañ an Hanternoz : an Artik, evel pa douller skornerer penn izelañ an douar: an Antartik e kaver glaou-douar, hag evel ma oar an holl ez eo ar glaou-douar gwec'ha bep seurt lonket gant an douar ha deuet da vezañ glaou gant an amzer.

Met bremañ - hag abaoe pell'zo ! - ez eus cheñchamant, hag e broioù 'lec'h ma vez dous a-walc'h an amzer, evel Breizh, e ranker

kaout un tamm goañv. Ne servij ket !

Ne blij ket ar goañv da galz a dud. Marteze abalamour n'ouzomp ket gwelout ennañ hag en e labour ar pezh a zo brav ha kentalius.

Evel just, ez eo kriz ar goañv evit ar re gozh, hag evit ar re yaouank ivez, gant ar c'hleavedoù a zeu d'e haul. Poanias ez eo soñjal en dud paour ha n'o deus ket peadra da stourm ouzh ar yanijenn gant dilhad tomm ha bowad tomm, ha sklerijenn an tan o flammañ en oaled. Trist ez eo soñjal ivez en dud klañv, o-unpenn, hep den ebet d'ober war o zro, hep kaout arc'hant a-walc'h da bremañ na glaou na louzeier, er priz m'emañ an traoù.

Dañjerus a-walc'h ez eo ar goañv ivez. Rak lekaet a ra an hentoù bras da vezañ lufr evel ur sklasenn, hag an neb na daol ket evezh a vez gwintret d'an traoñ diseblant-kaer... Unan bennak o pedaliñ dinec'h-tre a wel e rodoù o risklañ dindanañ hag eñ o vont d'an traoñ a-bennbouell, en riskl da derriñ un ezel bennak... Ur wetur gaer o luc'hañ gant an nikel a zo war he zro, hag o frizañ evel ul luc'hedenn war an hent, en em gav a greiz-holl en touflez, hag un taol-chañs ez eo d'ar re a vez e-barzh ma teuont er-maez bev, hag en o fezh, hep ezel ebet diblaset pe dorret. Met dilufret-naet ez eo ar wetur ha ret e vo he c'has da di ar mekaniker pe ar c'harrezoer da adlufrañ....

Koulskoude da neb a sell ervat ouzh pep tra, ez eus peadra da chom souezhet hag estlammet.

Sellit ouzh an dent-genver e pign ouzh barvenn an toennoù, kalz bravoc'h evel just, eget ar c'hantolorioù a vez lekaet a pign gant ar goañv ouzh...fui Yann-Grenn. Deoust penaos e c'hell an dour- rak dour n'eo ken- kemerout ur stumm ken souezhus ?

Sellit ouzh ar bleunioù treset ken brav ouzh gwer ar prenestroù, pa saver diouzh ar bours, dour pur troet en fleur.

Sellit ouzh ar plu skañv ha gwann o tiskann ken sioulik, ken sioulik, eus lein an oabl : an erc'h, dour gwisket gant dorn misterius ar Goañv.

Sellit a dost ouzh ar rev gwann-se strewet evel poultre arc'hant war ar geot; e beg pep geotenn e-leizh a stered munut, dour sklaer troet e dantelezh hag e stered.

Burzud an Dour ! Setu petra eo ar Goañv. An dour o



treiñ e bleunioù, e dantelezh, e perlez hag e stered. Ha c'hoazh e vefe tu da gaout keñveradennoù all. Met kaeroc'h a ra c'hoazh an dour...

E-kreiz ar Goañv emañ Gouel ar Bleunioù, Gouel ar Stered: Gouel an Nadeleg, dre ma n'eus nemet Bleunioù e Betlehem er C'hraou, ha Stered, en oabl.

Burzhud an dour ? Da heul ganedigezh Mab-Doue, ha dre vertuz an Dour, setu Bleunioù ha Stered all : ar Gristenion ganet da Vuhez ar C'hraou, gwisket o êneoù gant dantelezh ha perlez ar C'hraou, dre ZOUR O badeziant.

( KOULMIG AR GINDI 15 a viz KERZU 1957)

= = = =  
=

## RELIJION

### EVEZHIADENNOU

war

AR PEDENNOU E BRO - DREGER

Kement-mañ n'eo ket ur studiadenn; un toulladig evezhiadennoù hepken diwar-benn an doare ma ra Tregeriz gant ar pedennoù anavezetañ ha boutinañ e-keñver stumm aotreek ar pedennoù-se, pe mar kavit gwell, ar stumm implijet en Latin.

E-giz ma ouzer n'eo ket peurunvan ar pedennoù e Breizh-Izel. Dre vras ez eus pevar stumm d'o lavarout: stumm Gwened, stumm Kernev ( Eskopti Kemper ), stumm Bro-Leon, ha stumm Treger-Gweloù ha Kernev-Uhel ( da lavarout eo Eskopti Sant-Brieg ha Landreger). Stummoù all a zo ivez, evel stumm an "Iliz vihan": Bro-C'hourin hag Ar Faoud, stumm an Afc'hanoù ( dizarvez din-me), evit al lodennig-se e Vro-Wened stag ouzh Eskopti Kemper.

Evit anavezout ar stummoù-se an hent gwellañ evel just, ez eo heuliañ ar c'hatekiz. El levrioù-katekiz e kaver anezho. Iskis-tre ez eo, met ne lavar ket ar Vretonad e Wened, Kemper, Gourin, Sant-Brieg nag ar BATER NOSTER; nao an AVE MARIA (homañ koulskoude ez eo ar bedenn heñvelañ er pe var c'horn-bro), nag ar GREDU, nag ar GONFITEUR, nag AR GOURC'HEMENNOU ( reoù an Iliz ha reoù Doue), gant an AKTOU ( Feiz, esperañs, karantez).

Iskis ez eo, met evel-se emañ kont; ha n'eo ket ar rannyezhoù eo a zo pennabeg dreist-holl, met o vezañ ma implijer troioù-lavar disheñvel, ha geriennoù disheñvel. Tra ma lavaro un Tregeriad : Ho ROUANTELEZH DEUET DIMP e lavaro paotr Gwened "H. ROUANTELEZH DEGASET DEMP". Pa lavaro tud Bro-C'hourin "N'hon lezit da GUEZHEL-AN DENTASION" e lavaro an TREGERIAD " NA BERMETET KET E

## KOUZHFEMP EN TENTASION".

Hogen en tu-hont d'ar stummoù merket el levrioù-katekiz, hag el levrioù-ofis, e c'hell bezañ ar pezh a ran anezhañ: istummoù, pe eilstummoù ha na gaver nep lec'h ebet nemet war vuzelloù an dud. Setu end-eeun ar pezh a fell din merkañ emañ e-keñver ar PEDENNOÙ e BRO-DREGER

O O

Krogomp, mar kirit, dre SIN AR GROAZ. Ar c'homzoù da heul sin ar Groaz eo ar re-mañ: En anv an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Santel. Evel-se bezet graet. Parrezioù evel Bulien 'lec'h ma ra an holl war an dro a-unan gant ar beleg, sin ar Groaz, en latin goude an oferinier, hag e brezhoneg a-hend-all, a lavar evel-se. Abaoe pell'zo moarvat e vez desket ar stumm-se er c'hatekiz. Hogen ur stumm nevez ez eo, da vihanañ e-keñver an EVEL-SE BEZET GRAET-se dianav d'ar re gozh. AMEN eo ar ger implijet goude ar pedennoù, gant ar re gozh, da lavarout ar stumm kozh, ar stumm a-viskoazh, ar stumm hengounel.

Met n'eo ket se eo ar souezhusañ-holl. Ne ra ket an dud sin ar Groaz e-giz ma vezer boazet an deiz a hiziv: kas an dorn d'an tal, d'ar galon, d'ar skoaz kleiz ha da echuiñ d'ar skoaz dehoù. Daoust hag e rafent neuze evel kristenien ar Sav-Heol hag an Ortodoksed? Kennebeut all. Evel-hen e reont: kas an dorn d'an tal, d'ar galon, d'ar skoaz kleiz, d'ar skoaz dehoù ha da echuiñ d'ar galon en-dro.

Graet em eus "brezel" d'ar stumm-se er c'hatekiz, ha poaniet eus va gwellañ da zeskiñ ar stumm "reizh" d'ar vugale.

Hogen chomet on batet ur wach bennak o welout IWERZHONIZ oc'h ober sin ar Groaz er stumm-se pe dost. Evel-hen e reont: kas an dorn d'an tal, d'ar galon, d'ar skoaz kleiz, d'ar skoaz dehoù, d'ar galon en-dro, ha neuze da beurechuiñ juntrañ o daou-arn. Beleion hag all a re evel-se, tra ma n'em eus gwelet beleg ebet e Breizh-Izel oc'h ober evel ar vugale hag an dud vras.

Ne don ket sur tamm ebet pelloc'h ez eo stumm Tregar ur stumm direizh ha da vezañ kondaonet. Daoust ha ne vefe ket eno ur restad eus boszioù an Iliz Keltiek?

O O

N'emañ ket al lec'h da adskrivañ ar pedennoù war o hed. N'emañ ket al lec'h kennebeut da studiañ ar yezh anezho.

Traoù plijus a vefe da verkañ koulskoude evel "Hon Tad pini ""ho polonte(z) be(z)et ( pe bezañ, beañ ) graet" peogwir e klevet-nemet koulskoude ar Z eus ar ger bolontez- an holl zis-tagadurioù. Hag em eñvor da skouer e tesson bepred mouezhioù peotred vihan Kemper-Gwezeneg o lavarout " Hon Tad pini'zo en Naoñ "!

Markomp hepken an dibenn eus ar bedenn hag a zeu evel-hen gant an dud en oad :

Mez hon delivret a bep droug, a bec'hed. Amen.

Evel troidigezh eus al Latin : Sed libera nos a malo.Amen, e ran-ker lavarout ez eo frank un tammig bihan."Hag e-pad pell amzer ez on en em c'houlennet daoust eus pelec'h e oa deuet ar stumm-se na gaver e levr-katekiz ebet, evel just. Moarvat emañ an orin anezhi da glask e levr hollvrudet an Aotroù Briz, beleg. Rak setu ar pezh a lenner el levr-se, pajenn 2, hervez advouladur ar bloaz 1856 ( St-Brieg)

Hoguen hon dilivrit a zrouc:  
Hac a bec'het ar muia tout. Amen.

O O

Evit an AVE MARIA n'eus ket kalz tra da lavarout. Nemet koulskoude en eil lodenn eus ar bedenn-se, pa lavar an dud :  
" pedet ewidomp, pec'herien, pec'herezed "

Evit ar GREDD menegomp hepken fin ar bedenn : Me a gred er Spered Santel, en Iliz Santel Katolik, Abostolik ha Roman. E Bro-Dreger a-bezh e vez lavaret er stumm-se, ha pa oa deuet an Aotroù Kerveadou da gonfirmañ bugale Kaoueneg ha Bulien ez eo ar stumm-se reas ar vugale o "profesion a feiz ". Nep lec'h ebet koulskoude nag e Kredo an Ebestel nag e Kredo Nikaa-Konstantinopl n'eo ket ken hir all an traoù. Kredo an Ebestel a lavar hepken : Me a gred... en Iliz Santel Katolik. Ha Kredo Nikaa-Konstantinopl a gomz evel-hen : Et Unan, Sanctam, Catholicam et Apostolicam Ecclesiam. Ger ebet eta eus ROMANAM ECCLESIAM. Ne ouzon ket eus pelec'h ez eo stumm Tregar da embann o feiz. Teurel evezh ivez ouzh distagadur ar ger ROMEN ha ket ROMAN e-giz ma c'hellfed bezañ en-gortoz.

Evit ar GONFITEOR, kuit a hiraat hon danevell, menegomp daou dra..." Me a gofez ouzh Doue... ouzh an Holl SENT ha SENTEZED, ha C'hwi (sic) ma AEL MAT abalamour am eus pec'het en bras.

Marteze ez eo stag un tamm istor ar Relijion Katolik, e Tregar ouzh ar munudoù-se. Met kement-se a zo trec'h d'am gouiziegezh

Arabat da lennerion ar gelaouenn-mañ bezañ en-gprtoz da gaout el linennoù-mañ da heul doareoù dreist-ordinal diwar-benn Dalc'h Kentañ ( pe Reuz\*kentañ) ar Sened-Meur, eil Sened ar Vatik, 1962. Re nebeut a zoareoù a zo bet embannet evit ma vefe tu da gaout menozioù resis diwar-benn al labour kaset da benn gant Tadoù ar Sened etre an 11 a viz Here hag an 8 a viz Kerzu. Ma skrivomp un dra bennak ez eo kentoc'h evit na vo ket lavaret ez eo tremenet an Degouezh bras hep dedennañ selloù Breizhiz, ha selloù ar re a glask komz en o anv. Peditañ a reomp da gentañ holl lennerion da adlenn hor pennad, embannet war niv.31 Barr-Meol, Mezheven 1962, paj.41 sq. dezho da welout, ouzh sklerijenn an doareoù hag ar c'heleier embannet war ar c'hazetennoù, e oa mat ar studiadenne-se, ha n'eus nemet un draig bennak enni da sklæraat ha da resisaat.

Advoulañ a reomp da gentañ, gant kemmoù bihan, ar skridig moulet war GOULMIG AR GINDI (25 a viz Du) a-zivout Hon Tad Santel ar Pab, an Eskob-Meur, Yann XXIII, hag en eil lodenn e klaskimp tennañ un ali bennak evit Breizhiz.

#### AR PAB HAG AR SENEDEMEUR

Bez'ez eus unan bennak ha n'eus ket kalz a dud o kaout avi outañ: ar Pab Yann XXIII. Evel just, ez eus tud all er bed hag o deus labour ha trubuilh sof-kont, evel, da skouer, ar re a zo e penn ar broioù, evit mirout ha diwall ar peoc'h. Met ar Pab en deus e lod gant ar C'honsil bras. Gout a'ouie moarvat pesourt bec'h edo o vont da sachañ warnañ, p'en doa galvet an holl Eskibien da Roma, rak kinniget en deus d'an Aotroù Doue e vuhez zoken evit ma teufe da vat ar Sened Hollvedel.

N'amañ ket an holl labour war e gont e-unan, rak ne zeufe ket a-benn d'hen ober. Tud all a zo gentañ, evel just, hag o deus hen sikouret da aozañ danvez-labour ar C'honsil "Strolladoù-studi" a vez graet eus ar burevioù karget da brepariñ an traoù, gant unan evel Sekretour-Bras ha rener pep tra: An Aotroù

\* Reuz: hannezh eo ar ger a ran gentañ peurvuiañ em frezegennoù.

'n Eskob Pericle Felici.

\*

C'hoazh ma'z afe plaen ha sioul a-walc'h an traoù war-raok. Met an deiz kentañ setu ur C'hardinal o sevel en e sav, an Aotroù Lienart eus Lil, o tapout ur follenn-baper hag o lenn un tamm latin diwarnañ da ziskleriañ ne oa ket mat votañ diouzhtu da choaz Eskibien da sevel Burevioù-Meur ar Sened, peogwir n'en em anavezet ket an Eskibien etrezo - ar pezh a oa gwir-mat ! Ha **strakedag-daouern** dezhañ, da ziskouez edod kreñn a-du gentañ. Ha dilerc'het ar votadeg neuze, amzer d'an Tadoù d'ober anaoudegezh etrezo, da sevel listennoù gant anvioù an Eskibien varrekañ hag akuitañ war an dabhenn-mañ-dachenn.

Evel just n'o deus ket c'hwitet paotred ar c'hazetennoù dreist-holl en Italia hag e Bro-C'hall zoken, war an degouezh-se evit moulañ ha brudañ d'ar pevar avel e felle d'ar Frañsizien kaout "kroc'hen" Lez-Veur Roma, d'en em veñjiñ abalamour d'ar setañoù douget ar bloavezhioù tremenet enep darn eus esaeoù Eskibien Bro-C'hall war dachenn an abostolerezh: beleien en uzinoù, katekiz, Skritu-Sakr h.a. Esaeoù ha n'o deus ket graet berzh, met a zo ur gentel da glask hentoù nevez, suroc'h ha frouezhusoc'h. Ha stala meur a hini o vezañ ma oa ar baotred vras, Kardinal Lez-Veur Roma da glevout o fegement, ispisial an Aotroù Kardinal Ottaviani, Sekretour an Ofis-Santel, hag e genvreneur ar C'hardinal Ruffini, arc'heskob Palermo, hag o devoa ar vrud da vezañ sacharion-adreñv ! Kerkent ec'h embanne LE MONDE e oa disheñvelderioù bras etre menozioù Strollad an Deologiezh hag hini ar Skritur-Sakr da ziskleriañ lodennoù 'zo eus al Levrioù-Sakr...N'helle ket an fals-tamalloù-se ober nemeur a blijadur d'ar re na glaskent nemet ar wirionez, zoken pa c'hellent war boentoù'zo kaout menozioù disheñvel. Ha titloù bras sabatuus "France-S" ne raent nemet diessant an traoù.

Mestr e oa an Tadoù war reolennadur ar Sened (gant heuliañ evel just an urzhiadur gourc'hemennet gant ar Pab) ha dilerc'het e oa bet ar vouezhiadeg amzer da Dadoù ar Sened d'ober anaoudegezh etrezo. Met pa oa bet votet ne oa ket nemeur anezho o kaout an hanter eus ar mouezhioù, ha ret e vefe bet advotiñ evel ma vez graet pa ne vez ket aet an Deputeed e-barzh an taol kentañ !

"Ma' eme Hon Tad Santel ar Pab, mat eo evel-se. Ne dal ket ar boan koll amzer; degemeromp eta ar re o deus bet ar muiañ a vouezhioù !" Hag ingalet an traoù brav-mat evel-se.

Tost d'ur miz avat, eo bet an Tadoù oc'h esa en em glevout diwar-benn ar pezh a zo da renkañ a-nevez el Liderazh, el Litur-

giezh. Pep hini o sachañ d'e du hag o komz kaeroc'h latin, an eil eget egile, hag an eil o tislavarout egile: "Ma! eme H.T.S.P. trugarez ha bennozha deoc'h da vezañ displeget ken fraezh all ho soñj. Met ne gav ket deoc'h ez eo poent votañ war ar pezh a zo bet kinniget ?

- O geo ! eme an Tadoù " Ha votet ha kazi tout memes tra! Gant tammoù traoù da adgwelout, da reizhañ, da beurgempenn da c'houde."

E giz-se ez eo votet koulz lavarout war e hed " Skema" al Liturgiezh, lodenn dre lodenn, goude bezañ dalc'het kont eus kinnigoù an Tadoù war ar poent-mañ-poent.

\*

Lezel a ra ar Pab Tadoù ar C'honsil da ziskleriañ ar pezh o devez c'hoant. N'a ket zoken d'ar bodadegoù, evit diskouez splann-meurbet ne venn ket pouezañ war zivizoù an Tadoù. Nemet evel just e oar kement a vez lavaret ha diskleriet. Lakaet en deus zoken ur mikro en e vurev hag evel-se e c'hell klevout an holl brezegenoù.

Kaeroc'h'zo: lakaet en deus ar skinwel en e vurev hag evel-se e c'hell heuliañ an traoù a dost, n'eo ket gant e ziskouarn hag e spered hepken, met zoken gant e zaoulagad.

Mar befe re start an traoù ha re zises da ingaliñ e vefe goulennet digantañ e setañs, e zisentez.

N'eo ket nec'het ar Pab, tamm ebet, rak ur feiz divrall, ur fiziañs divrall en deus e sikour ar Spered Santel, ha n'eus forzh pegeit e vo ret d'erc'hel gant labourioù ar Sened-Meur, ez eo sur e teuy frouezh eus ar c'haerañ diwarno evit an Iliz hec'h-unan hag ar Bed-Holl.

- Goude-Skrid. E-giz ma ouzer ez eo bet gwall-glañs ar Pab e fin labourioù ar Sened, ha dav e oa bet dezhañ paouez e-pad tremen eizh deiz da zegemerout perc'herined. Hervez e brezegnn-glozañ, graet d'an Tadoù, an Iliz Sant Per, an 8 a viz Kerzu, deiz Gouel ar Werc'hez Krouet dinamm en deus esper e vo klozet Eil Sened-Iliz Ekumenek ar Vatikar a-benn Gouel an Nedeleg e 1963.

Nec'het eo avat, ar Bed Kristen gant yec'hed Penn an Iliz Katolik. Krog ez eus ur c'hlañved dalc'hus en H.T.S.P. hag e komzer mui-ouzh-mui eus krign-bev.

0 0 0

## NOTENNOU A-DREUZ HAG A-HED

e-skeud ar

SENEDEK EKUMENEK 1962

---

Ar yaouvezh-se, 11 a viz Here, e oa bet digoret eta ar Sened Ekumenek. Dre ar Skinwel e oa bet tu da heuliañ penn-da-benn ar Gouelioù-Digeriñ, gant prosesion meurdezus an Eskibion, anezhañ ar pep bravañ evit an daoulagad, ha neuze lidoù an oferrann eskobél lavaret gant ar C'hardinal Tisaerant, devosion don ar Pab beuzet en e bedenn da goulz ar Veni Sancte Spiritus (gwerezad an Alleluia a-raok an Aviel) hag e-kerz ar Sakridigezh, bodad niverus Tadoù ar Sened e-diabarzh an Iliz, hep menegiñ ur bern traoù all. Eus prezegenn latin Yann XXIII ec'h adskrivomp ar gerioù hepken hag a ziskouez sklaer mennadoù ha soñjoù Tad ar Bed Katolik o c'hervel ar Sened-Meur:

" N'eo ket studiañ ar pennad-mañ-pennad eus ar gelennadurezh kristen eo a zo d'ober dre adlavarout ar pezh o deus gallet lavarout diwar-benn-se Tadoù an Iliz hag an deologourion; ur Sened-Meur n'eo ket se anezhañ e-unan. Studiañ ha klask stummoù-displegañ nevez, eno emañ an dalc'h: un dra ez eo danvez ha bouedenn ar gelennadurezh a-viskoazh, anezhi teñzor ar feiz, un dra all avat, ar fuzmioù a wisker dezhi."

Ket traoù nevez eta, met doareoù-displegañ nevez o klotañ gwelloc'h gant tro-spered an amzer-mañ. Ket ur Sened o tiskleriañ "dogmennoù nevez", met o klask hentoù nevez da embann kelennadurezh ar Feiz. Setu pal ha mennad ar Pab hag ar Sened-mañ.

\*

N'eo ket souezhus e vije bet keit all an Tadoù o tastornat a-raok kaout un daora-labourat fonnusoc'h hag ampletusoc'h. N'eo ket aes dija labourat ha studiañ a-gevret ur gudann bennak pa vez ur bagadig-tud. Hogen kas en-dro un dastumadeg a 2500 Eskob a zo un tamm diaasoc'h, diaesoc'h un tamm ren anezhi eget un dornadig kolisted n'o devez nemet Amen da respont war-lerc'h o ferson. Rak bez'e oa Tadoù hag a venne komz, dre m'o devoa traoù da lavarout ha da ziskleriañ.

Ar yezh implijet gant ar brezegegerion a oa al Latin. Ha war ar poent-se unan eus an diskleriadurioù furañ ez eo hini R. Hemon war ar BED KELTIEK Miz DU 1962, paj. 172. Adskrivañ a reomp



amañ komzoù R.H. "

" Er Sened Ekumenek a vez dalc'het e Rom bremañ, e vez graet gant al Latin. Poellekoc'h hag aezetoc'h eo a dra sur eget aotren implij meur a yezh a rankout treiñ pep prezegenn e yezhoù disheñvel, evel ma ra ar Broadoù Unanet hag hogos an holl vodadennoù etrevroadel. Penaos e c'houzañv ar broioù bihan an dra-se, ne ouzomp ket. Ne ra nemet astenn mac'homerezh ar yezhoù " bihan " gant ar yezhoù " bras ".

E gwirionez, heb a zo bet en un emvod etrevroadel a gompreno ervat komzoù R.Hemon. Trawalc'h ez eo bezañ bet ur wech da skouer en ur C'HENDALC'H KELTIEK bennak evit kompren kement-se. E Landreger, e miz Eost diwezhañ, ne oa bet nemet div yezh: brezhoneg ha saozneg. Ar Gelted eus an tu all d'ar mor a rae e saozneg, darn e eus ar Vretoned a rae e saozneg ivez, darn all eus ar re-mañ o devoa komzet e brezhoneg hepken. Daoust da youl vat ar jubennourion, e oa ret ober un tamm pinijenn gant an tannoù traoù diaskorn ha divuhez a veze servijet da c'houde. Ne oa bet ger ebet a implijañ an teknikoù nevez: togoù-selaouiñ, ha servij-jubennerezh. Aesoc'h e vefe bet marteze e Landreger c'hoari gant an teknikoù nevez eget e Roma, rak estr eget div yezh a vefe deuet gant ar brezegegerien, hag a-benn ar fin e vefe bet gwelet ha santet pegen gwir ez eo komzoù ar BED KELTIEK.

Un den, evel Maximos IV, patriarc'h katolik Antioc'hieia, n'en deus ket komprenet an dra-se. Un den dishual-tre ez eo, ha lavaret ez eus bet ne oa ket e Lid-Digeriñ ar Sened-Meur, dre na felle ket dezhañ bezañ lakaet war-lerc'h ar Gardinaled, eñ eskob 'lec'h eo bet Sant Per, eskob. N'en deus komzet nemet galleg, ha kerkent go goude e brezegenn, hervez reolennoù ar Sened, e veze troet e gomzoù e latin, evit ar re 'niverus-tre!) na nant ket akuit war yezh ar C'hallaoued. Evit an Aotrou Maximos IV, ez eo al latin ur yezh varv hag ur skoilh el liderezh; hogen en ut-hont da se o deus aon eskibion katolik ar Sav-Heol nesañ na zeufe al latin hag ar spered latin da lemel diganto o spered, o gizioù, o stummoù-liderezh, o yezh zoken marteze. Ne vennont a-briz ebet, bezañ lonket, un tamm evel ma'z eo bet an Iliz Keltiek hag an Iliz vreizhat, er Grennamzer.

Hogen pa gomzont eus yezh varv implijet el Liturgiezh latin, n'eo nemet damleal an tamall-se, rak el lodenn vrasañ eus liderezhoù disheñvel ar Sav-Heol, ez eus ivez e-leizh a draoù en "yezhoù kozh ha marv " daoust ma'z eo chomet an anv kozh war ar yezhoù nevez !

0 0 0

Pa vez tu da gaout ur yezh hepken, evel yezh an darempredoù hag an divizoù, ez eo kement-se an tu gwellañ-holl hep mar ebet da ziskoulmañ kudenn al liessyezhegezh. Un Eskob ( ha n'eo ket diskuliet e anv) eus an tu all d'ar Rideoz-Houarn a lavare da unan eus kazetennerion "Kroaz Pariz " e oa ur bennozh hag ur c'hras a-berzh an Aotrou Doue kaout ur yezh evel al latin hag a bermete da dud eveltañ ober kaoz gant holl Dadoù ar Sened.

En ur dremen adskrivomp amañ komzoù an Aotrou Kerveadoù ten-net eus al lizher skrivet gantañ eus a Roma ( Kannadig Eskopti St Brieg, 19 a viz Here 62):

Da 7 eur 30 ec'h antreen er Vatikan dre an Nor-Arem, ha dija er skalieroù bras hag en trepasioù hir e kejen gant va breudeur, eskibion a bep bro hag a bep yezh. Kentañ hini ma toullis kaoz gantañ a oa un eskob eus an Amerik Latin. Ober a rejomp anaouerezh e ail gant egile, dre al latin, yezh voutin nemeti etrezomp. Ha pa glevas e oan eus Breizh Vihan, e lavaras din raktal: " Kalz a veleien hoc'h eus du-se. Me avat, n'em eus nemet hiniennoù". Padiñ a ris gredus evit an Eskob-se hag e eskopti..."

Peseurt latin a zeue gant ar brezegegerion? Ken na vo embannet ar prezegennoù ha diskleriet traoù hag a chomo kuzh ur pennad mat ez eo diaes hen gouzout. Hogen, lec'hiet-mat ez omp-ni Bretoned, ez eus daou seurt yezhoù: an hini skrivet, hag an hini komzet. Bez'ez eus Breizhiz, desket ar yezh ganto en o oad-gour peurvuiañ, hag a zo gouest da skrivañ hep bezañ gouest da gomz. Dalc'hump sonj eus ar Brezhoneger meur Merven MORDIERN hag a skrive brezhoneg a-hed an deiz, ha na oa ket barrek da gomz. Bez'ez eus Breizhiz all hag a zo akuit da skrivañ ha da gomz diwar-benn traoù uhel hag o deus mil ha mil boan ouzh en em zibab gant an traoù boutin ha pemdeziek. E-touez ar vrezhonegerion all, brezhonegerion a vihanik pe vrezhonegerion emc'hrast, e vefe tu d'ober meur a rumm ivez.

Evit al Latin moarvat ez eo heñvel. Etre latin diasur ha reut ur saoz evel Godfrey ha latin gwevn ha direbech un Italian Ottaviani ez eus kemm, hep mar ebet. Hag evit pezh a sell ouzh prezeg e oa trawalc'h d'an Tadoù gouzout lenn peogwir e c'hellent lenn o evezhiadennoù ( aozet ganto pe gant ur sekretour bennak )

Hogen un dra a bouez ez eo evezhiañ penaos ez eus bet pleet gant tachennoù nevez, e latin: skingomz, skinwal, fiñvskeudennerezh, stummoù nevez an darempredoù denel, gwask ( lavrioù, kazetennoù, kelaouennoù skeudennet h.a.). N'eo ket gerioù eo a

rae diouer dezho, rak meur a wech ez eo studiet ar c'hudennoù gant ar Pibien. Moarvat n'eo ket gerioù ar c'hardinal BACCI, en e c'he-riador " LEXICON Torum Vocabulorum Quae Difficilius Latine Redduntur ", a zo bet graet bep tro ganto.

A-ratozh-kaer em eus sellet evit ar ger a implijer en holl gelaouennoù brezhonek da envel ar skridoù a bep seurt a vouler an e hiziv: ar ger GWASK, emæoc'h o paouez lenn. Er "skema" roet d'an Tadoù e komzed ( hervez displeger latin ar Radio Vatikanat) - DE PRELO. Ne gred ket BACCI en e Lexicon ober gant ar ger-se en noazh koulz lavarout hag e tro ( a-douez' meur a droidigezh all e kuñtuilhomp homañ) Scripta praelo (prelo) edita:= Skridoù embannet dre ar Wask.

Bez' ez eus tu alies e meur a yezh da deo'hel dioazh ar gerioù difetis evit implijañ traoù-lavar all, met tabut ar gerioù fetis ha difetis a zo stag ouzh ar stad-mañ-stad eus ar yezh implijet. Ur wech blerimet a-walc'h ur ger nevez e teu da vezañ ken bev ha n'eus forzh pehini all alies. Gwir eo dre vras evit kement yezh a zo, brezhoneg ha tout.

0 0 0

Evit bezañ klok e-keñver an ober gant al latin, gant Tadoù ar Sened, e ranker merkañ e veze roet alies an urzhioù e meur a yezh : spagnoleg, italianeg, galleg, germaneg, saozneg, hag arabeg.

Hogen marteze e c'hellfe an ober-se gant al latin bezañ un digarez da spisañ hor sell ouzh an ober gant ar brezhoneg e Breizh, gant ar c'hevredadoù a zo o fal plediñ gant hini pe hini eus tachennoù ar Vro, dreist-holl, tachenn ar Sevenadur.

Eus a douez an holl gevredadoù o klevout ouzh ar Yezh hag ar Sevenadur, n'eus moarvat nemet unan a gement a ra gant ar Brezhoneg, en o darempredoù hag en o emvodoù: KUZUL AR BREZHONEG. Klaskit zoken strollad BEILHADEGOÙ BRU-DREGER ennañ tud eus ar bobl evit ar muiañ, n'int ket deuet a-benn d'en em beurevrehonekaat goude tri bloavezh labour; labour vat e raont a dra sur, o reiñ ton d'ar yezh hag o prezeg karantez ar yezh en o abadennoù dirak saliadoù seleouerion: warlene o devoa displeget o abadennoù dirak 10.000 bennak a dud.

Digarezioù a vez roet aes-tre gant ar re a zo e penn ar c'hevredadoù all: kemmesk a vrezhonegerion hag a c'hallegerion. Aesoc'h ober gant ar galleg ha fonnusoc'h. E gwirionez n'eus ket bet klasket a-zevri ingaliñ an traoù en ur stumm all. Kement ha ken bihan ma'z eo yezh Vreizh un afer brevez ! Rak taolit evezh: dalc'hmat

e c'hoari kemmesk ar yezhoù war an hevelep tu: tu ar galleg. Ar vrezhonegerion a gaver naturel o gwelout o kemerout perzh en galleg en emvodoù, hag int o-unan ne gavont ket seurt ebet da lavarout.

Kement-se n'eo ket un diskoulm, kaer a vo lavarout, kaer a vo reiñ abegoù d'an doare-ober-se.

Kerkoulz all e c'hellfed komz diwar-benn ar c'hevredadoù politikel a labour war dachenn ar Vro, hag a zifenn ur politikerezh rannvroel. Evel just, e vo enebet: pa vez ul lestr bennak o vont d'ar goueled ne chomer ket war ar pont d'ober filozofiezh, na da gontañ kaozioù kaer, met da gontañ stoufañ an toullou, kalafetif anezho. Goude 'vo amzer da filozofañ ha da varzhoniañ !

Erru 'omp tre gant doare-ober an Iwerzhoniad hollvrudet O'Connell: klask gonit ar frankiz politikel ha goude e vo gwelet. Hennezh a rae politikerezh, na rae ket filozofiezh ! Ha koulskoude e tamall garv dezhañ ar vrogerourion iwerzhoniad dezhañ bremañ bezañ renet ar stourm evit e vro hep soursial eus...filozofiezh nag eus barzhoniezh !

Ar broioù bras savet en div Amerika hag o komz yezhoù europek: Stadoù-Unanet, Meksik, Brazil, Republik Arc'hantina, hag ar stadoù niverus en disbarzh Amerika ar C'hreistaiz ha war ar Meurvor Habask,\*\* a seblant dislavarout ar mennozioù a fell dimp displegañ amañ. Hogen koulskoude daoust ha faos ha diwirion ez eo penn-da-benn an arrouded-mañ diwar b-BREDERIADENNOÙ (levrenn 1, paj.58, GwALARN, 76 Meurzh 1935)

" Gant skoazell arc'hant ( Iwerzhoniz ar Stadoù-Unanet) eo o deus gallet Iwerzhoniz Iwerzhon stourm ouzh Bro-Saoz hag adkavout o frankiz. Nemet petra'dalv ar frankiz politikel adkavet pa vez sanket da vat, enlout'het-don an empenn ar frankiziid yezh ar vac'homerien ? Petra a iwerzhonek a gwirionez, pa lavaran iwerzhonek, a c'hell menel e tud stummet holl venozioù ha traoù o spered gant moull ur yezh estren ? Na vez ken eus an anv iwerzhoniad nemet un ardamezenn doullus peget ouzh ur pakad marc'hadaouezh a vaez-bro."

Setu end-eeun ar pezh a zisklerie ivez J.Konan, en niv. Mezheven 1962, Barr-Heol, paj.36. :

Da betore pal, lakaomp, eo bet digabestret Iwerzhon ma'z doo evit krouiñ ur stad saoznek nevez hepmuiken ? dezhi un ene dibar, ur sparedelezh dreist, arzourien

\*\* Ha Republikoù nevez Afrika ?

skrivagnerion he prederourion, e labouro Iwerzhon evit brasañ mad impalaeriezh ar saozneg. h.a. "

0 0 0

Hogen peogwir em eus digoret kaoz yezh ar vro-mañ e-skeud komz eus yezh ar Sened Meur, ez eo mat marteze reiñ ar skouer-mañ hag a vo kavet souezhus a-walc'h gant darn eus hol lennerion. Un diskoulm d'al liesyezhegezh adarre dre al latin.

Komzet en deus BARR-HEUL (Mezheven 1960 paj.4-5) eus an Eskob Jord Strossmayer, un eskob taer an e venozioù, dir war e fas zoken hag a lakae holl sabatuet gant bevder ha pinvidigezh e latin er Sened Ekumenek (Vatikan 1-añ). Ken empart e oa war yezh al Latium ma tidue e amzer o lakaat Bossuet e yezh Kikero. Hogen un ebeg mat a zo d'e ampartz war al latin ha da ampartz an Eskibien all e vro-Hungaria: e Buda-Pest hag e servijoù ar Gouarnamant, pa oa ken mesket ar yezhoù he rannyezhoù magiarel, germanek, slavek, e veze graet gant al Latin, mar plij.

Ne lavaran ket d'ar Vretoned dibab al latin evel eil yezh, hogen ne vern penaos n'eo ket dre zegemer an divyezhegezh evel reo-lenn-labour hag evel pal d'o abostolerezh e tiluziint ar stal, rak c'hoazh ur wech, er stad m'emañ an traoù ne c'hoari an divyezhegezh nemet diouzh un tu hepken. Divyezhegezh penn-da-benn war holl dachennoù an abostolerezh breizhat pe ur yezh all, dinoaz evel liamm ha benveg an darempredoù ? ' M eus son n'eus nemet ar stumm -se da zerc'hel kompouez skudelloù ar balansoù etre brezhonegerion ha galleggerion, etre Breizh-Izel ha Breizh-Uhel.

Ur sorc'henn ouzhpenn pe...

0 0 0

vereat a-walc'h e vefe din bremañ lavarout ur ger diwar-benn labour ar Sened-Meur e-unan, diwar-benn Kemennadurezh ar Sened d'ar ded-Holl, Prezegenñ diwezhañ ar Pab o klozañ dalc'h kentañ ar Sened da verkañ ar menozioù pouezusañ enno. E gwirionez gorrek-tre ez eo aet al labourioù war-raok : "Evel un digor divall ha meurlidel", evit ober gant gerioù ar Pab e-unan ez eo bet an dalc'h kentañ-se. Betek-hen n'eus ket divizet nemeur a dra, zoken goude ur mizvezh prezegennoù war al Liturgiezh. Koulskoude ez eo digouet an nor el lidoù-sakr d'an holl yezhoù modern, broadel, rannyezhoù hag all. Dre-se n'eus netra palloc'h moarvat o virout ouzh ar Brezhoneg da gaut e lod eus ar wastall !

DOAREDU-KUNZ RELIJIEL A VRO-DREGER

---

Da voulc'hañ ur studiaden hag a c'hello bezañ peurechuet gant tud all e lakomp amañ notennoùigoù a-zivout ar stummoù a implijer e Treger da gomz diwar-benn Doue hag ar Sent.

DOUE. Ar ger Doue a vez implijet e-unan e troioù-lavar'zo, hogen anat eo ne blij ket ar ger-se e-unan-penn, rak peurvuiañ e leverer: an AOTROÙ DOUE, ar ger Aotroù ha Doue oc'h ober e gwirionez, ur ger hepken. Er prezegennoù, er pedennoù ez eo evel-se e leverer peurliesañ. Hag en AVE MARIA: An Aotroù Doue'zo ganeoc'h.

Graet e vez koulskoude gant ar ger-se alies meurbet dreist-holl, el lavarenn vrudet ... "VA DOUE" pe gentoc'h MA DOUE". E troioù-lavar all evel : Doue d'ho pennigo, Doue da vezañ meulet, Doue d'e bardono ( d'he, d'o fardono !), Doue da gresko e ioajo(ù) ( o komz diwar-benn ur bugel, "un ael" marvet gant gras ar Vadeziant ), Doue d'o frazer-vo ( o komz diwar-benn loaned ). Doue'gar

Lakomp c'hoazh : Bannozh Doue, ha moarvat ne vo ket kavet nemeur a dra da hiraat er rollig-se. Ne gomzomp ket amañ eus troioù-lavar ha n'o deus netra evit gwir da welout gant an doujañs dleet d'an Aotroù Doue: bemdeiz-Doue, h.a.

AOTROÙ. Setu aze ur ger hag en deus kollet un tamm brav eus e nerzh hag eus e gaerder. Ar ger nesañ dezhañ e-keñver an implij ez eo ar ger italianek: SIGNORE hag ar ger spagnolek o klotañ gant an hini italianek : SEÑOR. Hogen, hep mar ebet ez eo kouezhet star ar ger AOTROÙ izeloc'h eget ar gerioù nevez-latinsek-se deuet o-unan eus al Latin " Senior " = koshoc'h, dre gemmadenn-ster. Ar galleg " Seigneur " a hevelep orin a zo disheñvel e ster.

E-keñver an implij anezhañ er Relijion e tleomp menegiñ ar GREDO : hag en Jezuz-Krist, hon Aotroù. Ha neuze er c'hantik : Un Arc'hael a-berzh an Aotroù - A ziskennas eus an Nefvoù

Iskis a-walc'h e keve an dud da gentañ pa ganent, e-kerzh ar C'horaz, an Attende Domine, e brezhoneg Hor Selaouit, Aotroù, hag ho pet truez.

Moarvat ez eo an dro-lavar: Aotroù Doue eo en deus dinerzhed ar ger Aotroù e-unan ha n'en deus ket meurdez ar ger SIGNORE da skouer. Ezhomm a vezo amzer hag implij stank evit hen adlufañ.

## AR WERC'HEZ

Evit Mamm an Aotrou Krist, ez eus evel just lavarennoù ni-  
verus a-walc'h. Ar ger GWERC'HEZ, ar Werc'hez a vez implijet  
a-s-tre e-unan-penn. Komz diwar-benn ar Werc'hez, kaout  
devoasion d'ar Werc'hez, pediñ ar Werc'hez, Gouelioù ar Werc'hez  
h.a.

Pa gomzer eus skeudennoù ar Werc'hez e lavarer SKLUDENN AR  
WERC'HEZ, pe ar Werc'hez berr-ha-berr. Liester ar ger neuze a  
zo Gwerc'hizi pe Gwerc'hezad, hervez al lec'hioù

Da heul ar ger GWERC'HEZ e leverer alies: ar Werc'hez Vari,  
O! Gwerc'hez Vari !

Met ne vez ket atav lavaret GWERC'HEZ VARI, lavaret e vez  
O ! Gwerc'hez divin ! O Gwerc'hez sakr ha divin ! O Gwerc'hez  
venniget ( pe vinniget, hervez al lec'hioù )

An dro-lavar SANTEZ MARI ( ne vez ket klevet SANTEZ VARI )  
a vez graet ganti en eil lodenn eus an Ave Maria, evel ar ger  
MARI er penn kentañ eus ar bedenn-se: " Me ho salud, Mari,  
leun a c'hras. h.a."

Lavaret e vez ivez MARI hepken, er pedennoù hag er prezegen-  
noù

Hogen en tu-hont da VARI e vez klevet hag implijet ivez ar  
ger hesonoc'h marteze MARIA, dreist-holl an dro-lavar-mañ :  
an ITRON VARIA. Ha dindan an anv-se ez eo anavezet dreist-holl  
evel Patronez al lec'hioù gouestlet dezhi, da skouer

ITRON VARIA'R FULLGOAD, ITRON VARIA AR JOA, ITRON VARIA-  
WIR-SIKOUR ( Gwengamp), ITRON-VARIA LOURD, ITRON VARIA AR  
C'HALVAR ( Eviaz ) h.a...

## AR SENT HAG AR SENTEZED.

Dav ober un diforc'h etre ar Sent kozh hag ar Sent nevez,  
pe nevesoc'h eget ar Sent kozh.

Ar SENT a reomp SENT KOZH anezho amañ ez eo dreist-holl  
SENT AN ILIZ KATOLIK: Yann-Vadezour, Per ha Paol, h.a. E

Evel just, pa gomzer diwar o fenn e leverer Sant Yann,

Sant Per ha Sant Paol, e-giz ma vez graet pa gomzer diwar-benn ar  
Sent all.

Hogen stummoù all a zo. Da gentañ gant ar ger Aotrou evit  
Sant Yann da skouer: Me 'gofes ouzh Doue hollc'halloudek, ouzh ar  
Werc'hez Vari bepred Gwerc'hez, ouzh an AOTROU SANT YANN-VADEZOUR.

Evit an daou Abostol bras e leverer AN IBBESTEL BENNIGET  
St P.&StP. Ar ger"benniget" a vez implijet a-walc'h a-hend-all  
evel m'hon eus gwelet uheloc'h: Va Doue benniget, Gwerc'hez  
venniget.

Hep mar ebet ar stumm koshañ-holl eo an hini na laka ket ar  
ger-doareañ Sant dirak anv ar Sent kozh hag an testeni gwellañ eo  
al lavarioù-mañ :

GOUEL YANN, GOUEL PER HA PAOL, PARDON PER, GWAZH PER,  
FEUNTEUN BER.... GOUEL-MIKAEL

N'eus netra dizoujus pe dismegañ eus eno; traoù-lavar ne dint ken.  
Da dostaat amañ ar furmioù-se ouzh an anvioù-lec'hioù brezhonek,  
evel da skouer BERC'HED evit Santez Berc'hed. Skouerioù a-fonn a  
c'haller tennañ eus an anvioù-lec'hioù e PLOU, LANN, LOK evel ma  
oar an holl. LOKEMO, LOMIKAEL, LOMAZE (penn-ar-bed) ..h.a.

Tostoc'h ez eo ar furmioù-se ouzh ar furmioù latin eget ar  
furmioù implijet gant ar c'hallegerien. Setu perak e kinnigan evel  
furm reizh anvioù an Avielerien: Mazhev, Lukaz, Mark, Yann. Hag  
embann evel-hen komzoù digeriñ ar pennadoù aviel da lenn:  
Sequentia Sancti Evangelii secundum Mat.Marc.Luc.Ioan.

KENDALC'H eus an AVEIL SANTEL, HERVEZ MAZHE, MARK, LUKAZ, YANN

ooo

Evit ar Sent Nevesoc'h pe da vihanañ ar Sent n'int ket ken  
brudet ha Sant Per, Sant Paol, e leverer eeun-hag-eeun SANT hen-ha-  
hen. Nemet e laker aes-tre ar ger AOTROU a-raok ar ger SANT e-unan.  
Aotrou Sant Erwan ( benniget). Er c'hantik savet en enor da Sant  
Frañsez a Sal, patron an Iliz-parrez a-unan gant Santez Marc'harid,  
em eus laket a penn an diskan:

Gant fiziañs ha karantez, Aotrou bras Sant Frañsez

Evit ar SENTEZED e vez lakaet ar ger SANTEZ a-raok o anv:  
Santez Koupaia ( mamm St Tual), Santez Anna, Santez Marc'harid.  
Alies e vez staget ivez ar ger BENNIGET: da skouer Santez Anna  
venniget. Santez Marc'harid venniget.

Dav e vefe studiañ hini ha hini anvioù ar Sentezed evit



gouzout dre sur pere a zegemer aes ar ger ITRON en o raok. Ar ger ITRON, n'en deus ket hepken talvoudegezh ur plac'h a renk uhel "di-mezet hag euredet" ( evit komz evel ar c'hanaouennoù), met ivez ste ster ur plac'h a renk uhel, da vihanañ pa gomzer diwar-benn ar SENTEZED, o vezañ ma'z eo ar Santelezh un noblañs eus an uhelañ, na petra'ta !

E Kernev, e kantik Santez Barba, e kaver ar gomz-mañ:  
O ITRON SANTEZ BARBA, O GWERC'HEZ HA MERZHEREZ

( Da vihanañ, mar deo mat va memor!). Evit Santez ANNA, patronez Vreizh, n'eus kudenn ebet. N'eo ket hepken er c'hantik anavezet gant an holl ( ret eo klavout an dud o sachañ warni pa vez kanet!):

Mamm an Itron Varia,  
Ha mamm ar Vretoned  
O! Itron Santez Anna  
Ni ho karo bapred,

met a-hend-all e vez lakaet ar ger-se Itron dirak anv Mamm santel Mamm an Aotrou Krist.

0 0 0

E-keñver ar yezh hon eus lezet a-gostez studi ar c'hemmadurioù : ar c'hemmadurioù war-lerc'h ar ger Sant ha Santez. Ha koulskoude e vefe meur a dra da ziskeriañ, hep mar ebet.

o o o o  
o o o  
o o o o  
o o o o

### PASTORELEZH HA LITURGIEZH

Prometet hor boa war niverenn Meurzh 1962 Barr-Heol reif doare an Euredoù Katolik, en Iwerzhon. Araok seveniñ hor promesa e kav dimp ez/ao mat komz eus emzalc'h ar Sened-Meur e keñver Liderezh, ha diskouez dre un nebeudig skouerioù petra'zo el lidoù sakr hag a vefe tu da wellaat. N'eo ket lavaret e rafe ar Sened, hervez ar pezh a verkimp amañ, hogen p'en em gavo ar reizhadurioù votet gant an Tadoù ne vo ket re souezhet ar re o devezo lennet ar studiadennig-mañ ha c'hoazh hon eus fiziañs e komprenint gwelloc'h ar pezh a c'hellint lenn a-hend-all.

\*

Pastorelezh ha Liturgiezh, setu unan eus gerioù-stur ar Sened-Iliz meur: klask doareoù nevez tostoc'h da spered an den modern. Neuze ivez implijañ kement tra a zo da dostaat an den a vremañ ouzh Doue, da vevañ gwell ur relijion welloc'h ha donoc'h. Ober ma vo bevoc'h an ofisoù-sakr, sklerijennusoc'h. Ober zoken eus al Liderezh ul labour a abostolerezh hag a gelennadurezh. Ac'hano ar c'hoant da frankaat lec'h ar yezhoù-pobl e darempredoù sakr an den gant Doue

N'ouzer ket petra a vo kemmet en Ofisoù-Sakr: Oferenn, Sakramantoù, Sakramantelioù. Ur gwall labour hag a ranko bezañ graet gant tud a anaoudegezh, gant ispisialourien. Moarvat e vo aozet an traoù dre vras gant ur Strollad-Kreiz evit an Iliz Latin, ha neuze aotreet pep eskob, pep kuzul-eskibien rannvroel pe vroadel ( evit ober gant gerioù aes) da adstummañ an traoù-se tamm pe d'aoz d'o lakaat da glotañ ar gwellañ ma vo gallet gant ezhommoù an dud fidel, ha spered ar rannvroioù pe vroioù bras.

\*

Kemeromp da skouer ar VADEZIAN. E gwirionez ez eus traoù e lidoù ar Vadeziant hag a zo diamzeriet pe da vihanañ traoù hag o deus ezhomm diskleriadurioù diaes a-raok kompren ster gwirion ha talvoudegezh al lidoù-se ha menoz don an Iliz Katolik.

Roet e vez ar VADEZIANT d'ar vugale, hervez al lidoù a veze implijet e penn kentañ an Iliz d'ar c'houlz ma oa bev-mat ar pezh a vez graet anezhi: Katekemeniezh. Da lavarout eo gant lidoù graet evit tnd en oad; ha lakaet stag ha stag d'ober Ritual Badeziant ar Vugale.

Anez anavezout ervat istor ar Gatekumeniezh ez eo diaes gwelout sklaer el lidoù-se. Hag ar re o devoa troet e galleg evit ar wech kentañ ar Ritual n'o devoa komprenet seurt ebet e meur e lid: treiñ al latin diouzh o gwellaik, ha setu tout.

Setu amañ ar bedenn a vez lavaret en ur ober sin ar Groaz war dal ha war galon ar bugel:

"Resev sin ar Groaz war da dal ha war da galon, degemer ar Feiz e gourc'hemennoù an Neñv, ha **REN DA VUHEZ EN DOARE MA C'HELLI BEZAÑ ADALEK BREMAÑ TEMPL DOUE: talis esto moribus ut templi Dei iam esse possis** = bevit eta adalek bremañ en doare da vezañ dia dija dre Ho puhezegzh da vezañ Templ Doue.

Penaos goulenn digant ur bugel ren ur vuhez evel-se? D'un den bras eo e lavarer kement-se.

HAG AN HOLEN. Holen ar Furnez. Evel just e komzer eus an holen en Aviel ha kentelioù kaer en deus roet Hor Salver ouzh en em harpañ war an holen: C'hwi eo holen an douar H.a. Hag e c'hell komzoù Jezuz talvezout bepred da reiñ da gompren efed ar Vadeziant. Hogen petra eo gwir ster an holen? Ma lennit kontadenn ALI BABA HAG AN 40 LAER, troet gant Jakez Kanan, e brezhoneg mat, paj. 36 Mouladur al Liamm, 1953, e komprenot gwell. Rak Mestr al laeron o tont en ti dindan an anv a Hadj Houssein a nac'h debriñ boued sall. Ur boued sakr eo an holen ha setu perak e veze kinniget holen gant mestr an ti d'an estren d'hen degemer evel unan eus e diegezh. Brasoc'h torfed eta en devije greet mestr al laeron o lazhañ unan eus e familh, peogwir dre an holen e teuent da vezañ evel kerent.

Neuze e teu sklaer a-walc'h ar gerioù-mañ hag a oa tremenet brav-mat dindan fri an droourin gentañ "primum pabulum salis gustantem": ar c'hentañ boued sakr, an holen. An eil e ouzoc'h a-walc'h petra eo: ar Gomunion.

Traoù evel-se, gant kemerout poan a c'heller o displegañ hag o c'hompren a-walc'h. Met pa gomzer eus RUDIMENTA FIDEI? Daoust pelec'h eo bet ar bugelig-se o teskiñ ar c'hentelioù

kentañ-se war ar Relijion?

E gwirionez n'eus ket ezhomm da eilpennañ an traoù: ur gerig amañ hag a-hont a vefe tu da gemmañ ha mat an traoù. Rak evel ma lavarfe Loeiz Herriou ma vefe bev c'hoazh (Doue d'hen pardon!) ur vengleuz a anaoudegezh hag a sklerijenn ez eo lidoù ar Vadeziant zoken er stad m'emañ. Evel da skouer, an darempredoù misterius, e soñj an Iliz etre ar gerioù "gustare, sal, Sapientia (eus Sapio) hag a daol ur sklaerder souezhus war ar bedenn n'hon eus nemet hanter-zispiegat uheloc'h... Met n'eo ket ur gentel war al Liderezh eo a vennemp ober amañ

0 0 0

Evit SAKRAMANT AR BRIEDELEZH ez eus bet goulennet ma vefe kement doare an Eured Katolik, dre ma'z eo sec'h, yen al lidoù anezhi hervez ar c'hiz roman, ha re heñvel ouzh ur c'hontrad. Goulennet ez eus bet ivez ma vefe unanet gwelloc'h gant an Oferenn-eured hec'h-unan.

Da c'hortoz (ur bloavezh pe zaou c'hoazh pe marteze un tammig ouzhpenn) gwelout petra'zivizo ar Sened, e verkomp amañ war-lerc'h an droidigezh eus ar pedennoù a implijer, en Iwerzhon, hervez ar Ritual teiryezhik hon eus bet komzet dija anezhañ (B.H.Niv.30)

\*

Ne seblant ket bezañ netra geltiek, pa lavaran keltiek, el lidoù-se a adkaver heñvel a-walc'h e Belgia, en Alamagn, war a gredan.

- Setu amañ urzh al Lidoù :
- 1\* Ur ger a gelennadurezh a-berzh ar beleg
  - 2\* Ar Sakramant (an Asant)
  - 3\* Roidigezh an doarn
  - 4\* Bennozh ar beleg
  - 5\* Bennozh ar walenn
  - 6\* Ar priedoù o reiñ ar walen an eil d'egile
  - 7\* Eskemm an arc'hant pe an aour
  - 8\* Pedenn ar beleg
  - 9\* Bennozh diwezhañ a-raok an oferenn.

Ar brezegenn a zo berr, o tagas da soñj eus kelennadurezh an Iliz war ar Briedelezh, deverioù-ar priedoù.

2\* Ar Sakramant : N.N. (anv ar paotr yaouank) daoust hag e fell e pap frankiz hag a youl vat kemerout N.N. amañ dirazoc'h, evit pried reizh, hervez lezennoù Doue hag an Iliz Santel.

An hevelep goulenn a ra ar beleg d'ar plac'h yaouank goude.

3\* Roidigezh an Dorn: (ar beleg): Bremañ ma'z oc'h unanet dre ar Briedelezh santel, unanit ho torn dehoù ha livirit; Me..(N.N.) ho kemer c'hwi (N.N.) evel va gwreg reizh d'ho kaout ha d'ho mirout hiviziken adalek hiziv, en eurvad hag en drougeur, er binvidigezh hag er baourentez, er c'hleñved hag er yec'hed, ken na zeuio ar marv d'hon dispartiañ.

Goude m'en deus ar paotr yaouank lavaret ar gerioù a-us e ti-partiant o daouarn ha goude-se e rooat o dorn dehoù en-dro an eil d'egile hag ez eo tro ar plac'h yaouank da lavarout:

Me..(N.N.) ho kemer c'hwi (N.N.) evel pried hervez al lezenn, d'ho kaout ha d'ho mirout .... h.a.

4\* Ar beleg ( e latin ) ego conjungo vos etc... - AMEN. ( e yezh ar bobl ): Goulenn a ran diganeoc'h-holl hag a zo amañ bezañ test eus an unvaniezh- santel-mañ: " Ar pezh en deus Doue unanet, arabat d'an den hen dispartiañ " ( Mazh.XIX,6)

5\* Bennigañ ar walenn-eured hag ivez un tamm arc'hant pe aour Ar bennigañ ar walenn a vez graet evel e lec'h all, e latin ha gant an hevelep komzoù.

6\* An Den Yaouank a gemer neuze ar walenn digant ar beleg. Evel-hen e lavar an den nevez d'e bried : Gant ar walenn-mañ, hoc'h euredan, En anv an Tad ( neuze e tremen ar walenn e biz-meud dorn kleiz ar wreg yaouank ), hag ar Mab ( en eil biz ), hag ar Spered-Santel ( en trede biz ). Amen ( neuze e biz ar bizoù hag echu )

7\* Eskemm an aour pe an arc'hant: Neuze an den nevez a laka an arc'hant, pe an aour hag an arc'hant e dorn dehoù e bried, en ur lavarout :

" An aour hag an arc'hant-mañ a roan deoc'h, evel an arrez eus va holl beadra".

8\* Pedenn ar Beleg ( latin Confirma hoc etc... gant an Drezon-mañ e latin ivez, daoust ma c'heller he lenn e yezh ar bobl war an douar-bras RESPICE etc...) Ha neuze e saozneg pe iwerzhoneg:

. PEDOMP,

Doue hollc'halloudek ha peurbadus, c'hwi hag a grouas hon tud kentañ, Adam hag Eva, hag a lakas etreo un unvaniezh sakr, santelait kalonoù ha korfoù ho servijerien-mañ; bennigit anezho ha grit ma vint unan dre ar garantez. Dre Jezuz-Krist, hon Aotrou. AMEN

Neuze e lavar ar beleg :

Plijet gant an Doue hollc'halloudek ho pennigañ hag unanif ho kalonoù dre liammoù padus ar garantez.

Hag an holl a respont : AMEN.

9\* Bennozh Diwezhañ a-raok an oferenn:

Ra chomo dalc'hmat peoc'h an Aotrou Krist en ho kalonoù hag en ho ti. Ra viot benniget en ho labour ha ma tãrvaot ar frouezh anezhañ. Plijet gant an Aotrou reiñ deoc'h un eost kaer a vuhez santel. Evel--se ouzh hen servijer gant feiz en e rouantelezh war an douar e veritot kaout evel digoll, e rouantelezh, en Neñv.

R. AMEN

Kit e peoc'h, ha ra vo an Aotrou Doue ganeoc'h da vikan.

R. AMEN.

( Ar peurrest, mar bez oferenn-eured a vez graet evel e lec'h all ).

Notenn : Meur a dra eus al lidoù-se a zo bet miret gant ar Brotestanted o-unan, da vhanañ diouzh ar Ritual kembraek a zo etre hon daouarn, anezhañ troidigezh ar PRAYER BOOK brudet " Levri Ar Bedenn Gmun" pe ( hervez darn ) LEVRI KUMUN AR BEDENN. Nemet ez eo bet tennet kuit eus al lidoù protestant-se, pap sin ar Groaz, an dour benniget, pep bennozh gant sin ar Groaz gant ar beleg, daoust ma'z eo miret ervat lid ar walenn evel m'emañ a-us amañ.

Hon troidigezh a zo bet graet diwar ar saozneg hepken; un draig bennak a zo laosk anni.

0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0 0

0 0 0 0  
0 0 0 0  
0 0 0 0

0 0 0 0  
0 0 0 0  
0 0 0 0

\*\*\*\*\*  
 \*\*\*\*\*  
 \*\*\*\*\*  
 \*\*\*\*  
 \*\*  
 \*

\*\*\*

\*\*\*\*\*  
 \*\*\*\*\*  
 \*\*\*\*\*  
 \*\*\*\*  
 \*\*  
 \*

## BRECH'IAD PLOUZ ... BOZAD GREUN

gant BENEAD

Studi hon istor n'en deus ket e Breizh ar plas a enor a dlefe bezañ e hini. Pell a se, siwazh ! Seul zesketoc'h e vefe ar Vretoned war ar poent-mañ, seul grefivoc'h e vefe, sur-mat, o c'hañ antez-vro. Setu perak e tleomp meuliñ ar Gevredigezh Vreizhat, a zo o paouez embann ur studiaden 90 pajenn diwar-benn ul letanant da Gadoudal, Yann Frañsez LE PAIGE DE BAR. N'eo ket anavezet mat istor ar Chouanted e Bro-Gernev, ha kement-se a ro muioc'h c'hoazh a dalvoudegezh d'al levrig.

Ur gwir romant eo ar vuhez-se, ha danevellet eo bev-buhezek gant ur skrivagner lemm e bluenn. Ar C'homandant de Montfergon, marv tri bloaz'zo, a zo bet ur marc'hag hag ur chaseour dispar. Anat eo en deus kemeret plijadur eñ ivez o redek a-dreuz maezioù Kernev, war-lerc'h haroz e levr. Tenn e voe awechoù d'an oberour adtapout krog er C'hernevad kalonek, tachet bepred da ziflipañ bremañ diouzh pajennoù an Istor, evel m'en em sile gwechall eus etre daouarn soudarded Republik kentañ Bro-C'hall.

N'am eus ket plas amañ evit dezrevellañ deoc'h buhez dra-maek Le Paige de Bar: pajennoù'z6 koulskoude a dalvezfe ar boan bezañ troet e brezhoneg. Gwelit da skouer marv skrijus Aodren Eskob touer Kemper. Lennit dreist-holl penaos e kouzhas-evit Breizh- de Bar hag e zaou soudard feal, an Droz hag ar Gwern, war zouar Enezenn-Hoad ( miz Du 1812). Goulennit eta al levrig digant hor c'heneil Per Manac'h.

O O O O

Gouelioù bras a zo bet, nevez'zo, en Aostralia, evit lidañ

hanter-kantvet dez he bloaz sakridigezh Arc'heskob kentañ Melbourne: an Aotrou MANNIX, an hini eo, 98 vloaz, bet sakret d'ar 6 a viz Here 1912, a Skolaj Maynooth ( Manout ), Iwerzhon ' lec'h ma oa bet studier ha da c'houde skolaer ha Pennrener. Unanet gant Aostralia, Iwerzhon a-bezh he deus graet lid d'he mab brudet en deus servijet anezhi e-pad keit-se, gant e holl nerzh. Rak stourmet en deus kalonek a-hed e vuhez evit harpañ Iwerzhon, dreist-holl pa oa-hi o vrezeliñ evit gont he frankiz. Setu perak en deus resevet an Aotrou Mannix merkoù a-leizh a aneooudegezh - vat eus e vro c'henidik : an Ao. de Valera e-unan en deus kasz dezhañ un eilskouerenn eus Kalir Burgo ( XV-et Kantved ) a zo e mirdi broadel Dulenn. Izili ar Gouarnamant o deus profet ur fac-simile eus an dornskrid hollvrudet, anavezet dindan anv : Levr Durrow ( VII-et Kantved ). Skolaj Maynooth en deus kinniget d'e Fennrener kozh ur gazul alaouret, par d'ar gwiskamantoù sakr kaer-maurebet a oa bet roet d'ar Skolaj e 1880, gant Elizabeth, Impalaerez Aostralia. Met ar prof a reas moarvat brasañ plijadur d'an Iwerzhoniad feal, a zo bet an hini paeet gant skodennoù ar bobl a-bezh, tud pinvidik ha tud paour: un adskeudenn eus Kroaz Kong, a zo moarvat an hini gaerañ e-touez kroazioù kaer an Enezenn ( 12<sup>e</sup> Kantved ).

- Marv eo a Sant-Laourens war Sevr, d'an 30 a viz Eost, an Tad Yann-Vari AR BAIL, en a bevar-ugentvet bloaz. Genidik eus Eskopti Gwened, bet e-pad pell Prokolor Meur Breizh-Vari, e Roma, e labouras gredus evit lakaat Grignon Monforz war roll Sant an Iliz. Eñ eo a oa bet galvet d'ar Vatikan evit deskiñ d'ar Pab Pi XII, an div frazenn e brezhoneg:

Ra vo maulet Kalon glan Mari  
 Ra vo maulet Santez Anna, Patronez vat ar Vretoned,

oc'h echuas ganto e brezegenn d'ar 26 a viz Gouere 1954, d'an deiz m'hoc'h eus soñj, ma voe Breizh gouestlet da Vari e Santez Anna-wened.

- Marv eo ivez d'an 29.7.1962, an Tad Ernest KANEVED, eus Eskopti Kemper, Oblad Mari Dinamm, a zo bet, en un doare dispar, misioner ar Zouloued. Diredet eus a bell ez eus bet miliadoù anezho, a zeus, en ur ouelañ, da heuliañ an arched. Komz a rae o yezh a oa, d'e veno, ken heson ha brav. Anavezout a rae o doareoù, o c'hudennoù... Skrivet en deus diwar o fenn pennadoù dudius ha fentus a-wechoù " Damskeudennoù du evit un den gwann". Da zeiz e interamant, e c'haize ur veouez kozh a oa bet sikouret gantañ e-pad pell : Hon Tad a zo aet kuit diouzhimp, amzivadeg om bremañ"....



- Peogwir e komzomp eus misionerion, menegomp an niverenn a zo bet gouestlet da Vreizh e Mae-Mezheven diwezhañ gant Kelaouenn Leanezed St Jozeb Kluni. Eskopti Kemper anezhañ e-unan en deus roet d'ar Vreuriezh 779 leanez, 302 anezho bev c'hoazh, 121 en o zouez o labourat ar Misionoù...Lennit en niverenn-se buhez C'hoar Jasinta, Mari BITAULD, eus " Le Sel ", eskopti Roazhon, ur visio-nerez laouen ha dispont-kaer, ne vae ket nec'het en he buhez nemet gant deou dre : da gentañ, dre ma oa bet ganet ar 14 a viz Gouere, hag hi merc'h un tiegezh chouanted penn-kil ha troad ! D'an eil, dre m'he devoa gwechall chouket en he fenn un toullad brav a sonennoù-kerantez ( dinoez-meurbet evel just ) ; ha pa vae deut da vezañ leanez, n'hellas morse o disañjal, en desped d'ar chepeledeoù dibunet e-sell d'en em zizober diouto !

O O O O

Un nebeut bloavezhioù'zo hon boa dastumet notennoù diwar-benn an Urzhioù leanez ha leanezed bet krouet e Breizh pe gant Bretoned. Ur bern a zo, kredit ac'hanon ! Setu perak n'eo ket klok va roll, na tost da vezañ moarvat. N'aus ket pell, am eus kavet un all c'hoazh, o klevout keloù eus ar gouelioù graet e Kemper, e miz - Eost diwezhañ, e ti an " Azulidigezh Peubadel ", da lidañ kantvedad Frañsez Vari LANGREZ, ganet e Sant-Servan, d'an 22.7.1787, beleset e St-Brieg, marv e Kemper d'an 9 a viz Gwengolo, 1862, lec'h ma oa d'ar c'houlz-se Dean Chaloniad an Iliz-Veur.

Krouet en deus ur Vreuriezh evit azauliñ noz-deiz ar Sakramant - ra vo meulet - hag ivez sikour ar merc'hed yaouank paour ha dilezet. Abaoe un nebeut bloavezhioù o deus kresket souezhus an oberoù renet gant Leanezed ar Chaloni Langrez. E Kemper, un ti plijus, ennañ ur c'hant bennak a vugale; ur greizenn-aveshaet hag ur greizenn hanter-frankiz evit merc'hed 15-18 vloaz. E Trevidi-Plouigno, ur skol evit merc'hed namet ha gwan o spered, ennañ an niver anezho o kreskiñ, siwazh, en un doare spontus. Re vihan eo dija ar skol-se, ha ret e vo digeriñ hepdale un ti evit ar re o deus echu gant ar skol. E Brest hag e kêrioù all, ez eus ivez tiez evit bodañ studierezed ha merc'hed yaouank o labourat pell diouzh ar gêr. Tiez ret-kaer, hen gwelout a rit ; n'en deus ket ar Breton Langrez hadet greun mat en aner.

U O O O

Skouer vat ar broioù bihan... ret eo he menegiñ bep gwech ma

kejomp ganti. Gwelomp hiziv, mar kirit, hini Israeliz a zo deut da vezañ mail war vicher diaes an Hendraouriezh. Dindan bluenn an ispisalourion ha betek er c'helaouennoù relijiel, n'eus nemet meuladurioù evit pobl Israel a striv gredus ha speredek da adkavout roudoù hec'h amzer dremenet (1). Ur c'hant bennak a lec'hioù istorek a zo bet furchet en ur ober dek vloaz; kavadennoù e-leizh a zo bet graet a bep tu, bras o zalvoudegezh n'eo ket evit ar Yuzevion hapken, met draist-holl evidomp-ni, kristenion. Pep tra a vez graet gant ar Stad evit diskouez ar c'havadennoù en un doare skiantel-rik, met war un dro mistr ha plijus : mirdioù bihan e-leizh, liorzhoù adplantet brav ha savadurioù kozh kempennet mat.

An estrenion o tont da studiañ en Israel a vez graet war o zro evit ma c'hallint labourat aes ha spleitus. Mistri ha diskibion a zo esun hag hegarat-meurbet o darempredoù kenetrezo.

Dom Moris Bogaert, beneaded flamankat, en deus kontet dimp penaos eo h implij du-hont ar yalc'had-studi gonezet gantañ war-lene e Skol-Veur Strasburg. Da gentañ-holl, en deus tremenet tri miz hanter en " Ulpan ", ur skol savet evit daskiñ buan an hebreeg modern : pemp eurvezh skol diouzh ar heure, hep kontañ kente-lioù ha poelladennoù da c'hweziñ warno e-pad an endarvezh ! Met talvezout a ra er boan, peogwir eo bet goude-se Dom B. gouest d'en em zibab en hebreeg; ouzhpenn-se en deus desket ar pep retañ da c'houzout diwar-benn an istor, frammadur ar Stad, boazioù an dud.

Divrezet m'eo bet al labour gant an " Ulpan ", e vo fon fonnusoc'h a se kelannadur ar Skol-Veur. Nevez-flamm eo hini Jeruzalem, bras-divent, lec'hiet-kaer, gant salioù sklaer, ha ma' oar !... Hag al Levraoueg ! Bestediñ a ra Dom B. gant an esmae pa gomz diwar he fenn. Ti an Hendraouriezh a zo bet savet diwar brokusted Elizabed, Rouanez kozh Belgia, hag ar beneaded flamankat an em gav eno ar gêr, evel just.

Kouez ha berr e vez ar vakañsoù du-hont. Ret eo d'ar studierion ober o mad, e miz Gwengolo, eus Gouelioù an Teltlennoù, a bed eizh deiz, evit mont da vale ar vro tro-dro. Pe neuze, ober un tammig skol al louarn !...

Met, ur wach aet war raok, pegen dudius ha talvoudus eo beajiñ evit tud hag a anavez mat ar Skriturioù Sakr, hag a c'hell ober gant yezh ar vro !

Mont, da skouer, betek Kesareia, pinvidik-mor gwechall,

pa voe toullet dezhi ur porzh-mor gant Herodez-Meur. Ur mil bloaz bennak pelloc'h, e voe gouezet gant ar Groazidi, a gavas enni - hervez - ar Graal Santal. Krenlec'hiet gant Sant Loeiz, ne gouezhas etre ddaouarn an Arabed nemet e 1291, goude dek vloaz sazi. Setu perak e tiskouez bremañ ar furchadennoù ur meskaj souezhus eus mogerioù savet gant a bep seurt pobloù.

Bloaz ' zo e voe adkavet er C'helc'hva daou dra a dalvoud-gezh vras evit an Istor : delwenn un doueez, goloet he bruched gant bronnoù e-leizh; a denn anat da Artemiz ar " Vamm-Veur " hollvrudet azeulet gant Efeziz. Ha kalz prizioc'h c'hoazh, un enskrivadur, an hini nemetañ a gomz dimp eus Pons-Pilat.

Beth Shearim ivez a zo dudius da weladenniñ; ur vered-veur a oa, e tegase ar Yuzevion o re varv betek enni eus a bell bro. Eno ez eus bet beziat ur c'halz a dud evel-se, etre an 8<sup>e</sup> kantved a-raok H.S. betek ar 4<sup>e</sup> goude. Ul lodenn vat eus an enskrivadurioù kizellet war ar beziou a zo ken gresianeg, ken hebreeg. Un dra all da verkañ : ar furchadennoù a ziskleir pegen don e voe levezon ar bed gresianek en Israel kozh, en abeg dreist-holl d'ar Yuzevion aet d'ober " an Diaspora ".

Ha setu hor studierion o tegouezhout dirak Nazared; emañ ar Frañsiskaned o sevel eno un iliz bras-meurbet, dediet da I.V. ar C'heloù-Mat. Souezhet eur bet o kavout dindan ar benniliz vizantat, un iliz kristen kalz koshoc'h. Ar savadur-mañ a zo heñvel-tre ouzh ar sinagogannoù, ha dreist-holl ouzh hini Crim-al-Amed ( 15 km. eus Nazared ) pe hini Dikkie, hag a seblant bezañ eus an trede kantved.

E-touez ar "graffiti " niverus, ez eus arouezioù kristen e-leizh : kroazioù, bigi, rouedoù, gwiniannoù bihan. Anv Jezuz a gaver ivez, pe kentoc'h " Aotrou Jezuz ". Met ar gerioù fromuseñ a c'heller da benn e Nazared e zo sur mat ar re-mañ, kizellet war sichenn ur golonenn : XAIRE MARIA ( C'haire Maria ) da lavarout eo : Me ho salud Mari.

A-dal deroù er Gristeniezh eta, e veze pedet ar Werc'hez Vari e Nazared, kalz a-raok me voe savet ar benniliz vizantat a zo dija koshoc'h eget ar bloaz 427, peogwir ez eus kroazioù treset war varelladur ar pavez: rak, er bloaz 427 eo e tifennas grañs Teodoz II tresañ kroazioù war al leurioù.

Hiviziken e seblant bezañ prouet da vat ar pezh a lare

e 570 ur perc'hirin italiat dizanv, o tremen dre Nazared : "Domus Mariae, basilica est "

0 0 0 0

Evel just, ez eas Dom Bogaert da vamiñ dirak marelladur burzhodus an iliz a zalc'h soñj eus Kreskidigezh ar Bara, a zo dindan gward Beneadiz aleman : " Ha koulskoude, emezañ, n'eus ket er vro-mañ kalz tra great gant dorn Mab-den, hag a vefe bravoc'h eget an Natur ".

Pelloc'h, o skeiñ war-du an norz, setu Hatsor, kêr bras-meurbet, savet gant Kanaaniz. Adkavet ez eus bet eno, miret mat, un templ koshoc'h eget Salomon, hag a denn kalz d'ar pezh a ouzomp diwar-benn Templ Jeruzalem a-raok an Harlu.

Lezomp bremañ hor manac'h flamankat da lemelladur, 'vel ma c'hell, ar gwiskad holen ledet war e groc'hen gant dour put er Mor Marv. Moarvat hor bo da zistreiñ diwezhatoc'h war an dizoloa-dannoù ken talvoudus a vez graet du-hont bemdaiz. Warlene c'hoazh ez eus bet kavet tost da Em-Geddi ( oasis - glazvezeg- Kanann ar C'hanennoù an hini eo ), ur bern-skridoù a lezennouriezh hag a genwerzh, eus mare Bar-Kosiba (130 vloaz goude H.S. ).

E Nitsana, tost-tre da harzoù an Ejipt, ez eus bet kavet ivez, nevez'zo, ur strobad papirusoù gresianeg ha latin... A-walc'h da gaout avi ouzh ar re a c'hell gwelout kement a gavedennoù burzhodus !

(1) Gw. da skouer pennedoù Leon. RAMLOT, e Bible & Vie Chrétienne.

\*\*\*  
\*\*\*\*\*  
\*\*\*



Roazhon, d'an 30 a viz Herez 1962

Aotrou Person,

Degemeret am eus ar follenn ouzh va c'houviañ da vont da Gallag. ..Dre zic'hañs ne c'hellin ket mont rak k merket on da vezañ servij-dialtel d'ar sul 4 a viz Du. Esaet em eus cheñch deiz deiz gant ur c'heneil bennak met, gant vakañsoù bihan an Holl Sent , n'eus ket bet tu. Keuz am eus.

Boemet on bet gant KENDALC'H Landreger ken birvidik ha yaouank ha ma oa. Plijet on bet bras gant KAMP ar WUGALE en Elliant. A drugarez d'an Itr.de Rohan Chabot ha d'an Itr.Denez eo bet gwel- laet kenañ d'am daou vugel henañ war dachenn ar spered breizhek. N'em eus ket gallet mont da Gamp ar Vrezhonegerion ha gwazh a se din !

Amañ e Roazhon hon eus kroget en-dro gant oferennoù miziek ar vrezhonegerion ha gant bodadennoù ar C'helc'h Sevenadurel Brezhonek ( ennañ tud a bep soñj diwar-benn ar reizhskrivadur) E miz Du e vo kroget adarre, evel warlene, gant ar pourmenaden- noù o vodañ ar vugale brezhoneger.

Va soñjoù doujus hag anaoudek a gesan deoc'h....

Y.S-D.

N'eus ket pell unan eus leanezed ar C'hour kozh e Roazhon he deus lakaet unan eus va merc'hed da lann pennadoù brezhonek ( goulennet am boa ). Evit se he deus implijet " Koulmig ar Sindi " Brav !

=====  
Al lizher amañ da heul a zo eus an talvoudusañ, evel me vo mer- zet rektal. Klokaet a ray an diskleriadurioù a zo bet roet war STURIER BLEIMOR, diwar-benn ar SKAOUTELEZH BREIZHAT EUROPAT.

BLEIMOR  
Framm Breizh  
ar Skaouted Europat

Klamart d'an 29 Here 62  
d'an ao.Klerg  
person Bulien

Aotrou ha Kenvroad ker,

Degemeret em eus ar paper-engelv evit bodadeg Kuzul ar

Brezhoneg e Kallag. N'hellin ket mont, siwazh. Ho trugarekaat a ran avat evit bezañ dalc'het soñj am boa roet anv Bleimor evel strollad ar C'huzul tri bloaz'zo. Lakaet eo bet ganeoc'h Kudenn ar Yaouankizoù war ho roll-labour. Degas a ran deoc'h enta un nebeut keloioù diwar yaouankizoù " BLEIMOR ".

Setu amañ an darvoud pouezusañ evit ar mare : divizet eo bet e bodadeg hon aluzonerion e Landreger, d'an 21 a viz Eost, hag e poellgor hor pennadurezhioù, d'ar 7 a viz Here, en em zizo- ber eus framm ar Skaouted a Vro-C'hall ha goulenn digor evit ar Skaouted Vrezhon war an dachenn europat.

Raktres ur feur-emglev da sinañ etrezomp hag an Europiz a zo bet savet da gentañ gant ar Poellgor ha kinniget ganin d'ar BUREV ETREVROADEL. Diaes e oa an abadenn, ha treuz ar spi a c'hellemp magañ. Rak ne oa betek-han nemet ar Stadoù Dieub a gem- hent a oa anavezet e framm ar Skaouted Europat (F/S/B).Eizh a oa anezho en holl. Daoust ha ne oa ket ur barr-follentez goulenn evit Breizh an enor da vezañ an niverenn " Nav " ?

Ne c'hellemp ket bezañ degemeret, anat e oa, a-enep ali Framm broadel gall ar Skaouted Europat. Ar rener - ur poatr hegarat-tre - ne oa ket Breizhat pell ac'hano ( ha gwelloc'h e oa marteze ). Anavezout a rae mat ar gudenn evelato. Lennet en doa alies a-walc'h an " Heure Bretonne " e-pad ar brezel ha zoken " Dihunamb " e 1939 gant sikour ur Vretoned eus ar Morbihan ! Diskouezet en deus din un dastumadenn bet miret ez-aketus gantañ. Uedennet ha disfizius war un dro. Ret eo stagañ kement-mañ : n'eus pres ebet er Stadoù all da zegemer ar broadelezhioù-suj er Skaou- telezh Europat. E Beljig zoken n'eus nemet ur framm hepken evit Walloniz hag ar Flamanked, ar renerion o vezañ Flamanked anezho peurliesañ.

Un toullad lizheri ha dihelloù a zo bet eskemmet etre ar C'homiser Mour Jean-Claude Alain, ar c'homiser Serg Saliverstoff, ar Bundfeldmeister Timmermans ha me. Asantet o deus erfin kemer ar wirionez-mañ da ziazezañ hol labour : falsat eo bet reolenn ar c'hoari gant an Dispac'h Gall pa'z eo bet diverket diwar ar gartenn anv hor Bro. Goezet e oa an abadenn neuze : kement gwir hor boa miret evel proviñs Bro-C'hall e 1789 a c'hellje bezañ rentet deomp e 1962 evel proviñs an Europ. Kasat ez eus bet ul lizher skrivet gant an ao. Guicysse, en anv Kuzul Broadel Breizh, o tegas koun eus ar gwirioù-stad a voe anavezet d'hor banniel-mor betek 1790 ha goulennet evit klozañ e vije anavezet adarre ar



gwirioù-se gant ar SKAOUTELEZH EURO PAT. Asantet eo bet : ret e vo bremañ, e nep kamp ar Skaouted Europat e Breizh dougen bri d'hol livioù broadel he pa vefe strolladoù gall anezho.

Ar brezhoneg a zeuio tamm ha tamm ivez da vezañ yezh a-berzh-stad ar Skaoutelezh Europat. Kemer a ray e blas e kichen yezhoù all ar F.S.E. war un nabeut dihelloù ofisiel, pa vezint embannet ( gwelet em-eus darn anezho skrivet e seizh yezh disheñvel). Evit bremañ, e Framm Breizh ar Skaouted Europat, n'eus nemet testenn ar bromesa, ar c'hanaouennoù-lid, ar padennoù hag anvioù ar strolladoù a gement a vo dre-ret e brezhoneg. Ar peurrest a vo troet tamm ha tamm. Ar re a vo drouklaouen oc'h ober e Breizh an emouestl skaoutel europat e brezhoneg a c'hellio atav mont da Angers pe Laval d'ober ar bromesa e galleg, en ur strollad eus ar framme gall, pe c'hoazh emezeliñ da Skaouted Bro-C'hall, e Breizh. Skrihadedegoù-dent hor bo da glevout hag hon eus klevet endeo zoken ... e Ker-Vreizh, er-maez eus Bleimor dre eurvad.

Rak en hor strolladoù-ni ha zoken e-touez kerent hor Skaou-Skaouted ha Skaoutezed n'eus betek-hen nemet asant ha levnezh, ur souezh ! Un trec'h-lid eo bet emvod-meur ar gerant an 28 a viz Here evit disparti-an daou strollad kentañ: an "daouvet" hag an " c'hwec'hvet Pariz F.B.S.E. ". N'eus ket bet kavet nag un tad nag ur vamm evit levarout nann na zoken evit termal.

A-ouez d'an holl ez eo bet roet an disparti d'ur c'hantad bennak a yaouankizoù. Kemennet eo bet ganin da gentañ :

" Skarzhit an arouezioù gall a-ziwar ho tilhad !"

An erminoù zoken a vo stlapet kuit : Rentit da Gaezar kement a zeu eus Keezar !" Lezet e vo evel-se da Skaouted Bro-C'hall, e Breizh, an ardamezioù-proviñs erminiget-leun.

C'hwezek vloaz 'zo e c'hortozemp ar pred-se. Komprenit hon eürusted. Degaset eo bet neuze ar Banniel gant ur soudard kozh eus ar B.P. Astennet eo bet gentañ arouez al lu d'ur skaout yaouank en ur zistagañ fraezh ar c'homzoù-mañ e brezhoneg : " Setu amañ ar banniel a vos arouez hor stourm dec'h evel gwechall. Ra zeuio da vezañ en ho teouarn arouez hon trec'h !" Daou emouestl a vos distaget gant paotred ar Bozen Brendan ha kanet ar Vro gozh gant an holl.

Deut omp evel-se da vezañ: FRAMM BREIZH AR SKAOUTED EURO PAT. 12 strollad hon eus endeo e Pariz, e Sen-ha-Oaz hag e Breizh. 6 rannvro a vo savet, unan evit pep Departamant hag unan evit an Harlu.

Tost d'an hantter eus ar Skaouted Europat a vevañ ar Stad gall hiziv a zo Bretoned anezho : n'hon eus ket kemeret an Disparti re ziwezhat enta.

Ur Strollad-Diazez a zo bet savet gant hor mignoned evit harpañ hor stourm hag hon emledidigezh. Ne c'houlenn ar strollad-se nemet brasaat ha bezañ skoazellet gant hor mignoned all eus an emsav.

Bennozh Doue evit kemeñt a c'hellot ober evit hon harpañ. Arabat avat, ober ar bruderezh e galleg; se a zo bet goulennet gant renerion ar F.S.E. Na vo posubl embann nemet ar pennadoù gallek aprouet ganto evit bremañ.

A greiz kalon evit Doue hag ar Vro.

Per.G.Keraod.

=====

diwar-benn anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel:  
Setu un arroudad bennak diwar ul lizher a-berzh J.Pennaod, 2.X.62  
" A-zivout Ingrandes. Hervez Holder, (ACS.i, 1485-6, v°  
awiranda), Lebel (Romania, 1937, lxiii, 145-203) ha Fr. Le Roux (UTC  
1956, viii, 15-49) e vefe da vezañ lakaet gant Ivranda, Egurende, Ev-  
gurande, Guirande, Arande, Hérent hag e teufe eus \* quoranda. Diaes  
eo kudenn ar ger-se, met da heul labour F. Ar Rouz a c'heller sonjel  
e ve diogel a-walc'h gwelout amañ \* eros + \* pr-sna (Pokorny,  
IEW.301 hag 817) hag ar ger a-unan a gaver e Kembraeg Ebran =  
boued sec'h evit al loened, boued-loened " (GM.203b.) pe, spiseoc'h  
al lec'h ma veze kavet boued evit ar c'hezeg, sur-awalc'h. Ober  
a rafan eta gant Ebrann evit Ingrandes...

...Tuet e ven da skrivañ Landevehen = Landeheh: nend eo  
ket bet degemzet ar w, siwazh, e skritur 1941...

...Bez'e c'heller diskleriañ, a gav din Here ha Merel:  
graet e veze alies gant mo- koulz ha gant to- dirak anvioù sent  
o reiñ dezhe ur ster bihanaat...Anv ar sent a vefe bet \* araljos  
( marteze ?) o vont da arail; \*mo-araljos, \*plebe-mo-aralji, +-  
\* plae-verail +- \* ple-erel +- Pleherel oc'h ober gant an h evit  
aroueziañ ar stok-vogalennoù... Ur vartezeadenn n'eo ken peogwir  
n'anavezet ket ar stummoù kozh. Gwirheñvel a-walc'h eo avat. Reizh  
e vefe eta Plouerel...."

Evel ma lavar hor c'henskriver" diaes spontus eo ar gudenn  
ha ne heller nemet meuliñ " Teo" evit bezañ bouc'het ar pikol  
labour-se".

( Diwar ul lizher a-berzh an Ao.Gwegen(Plounevez-Penteür)

U vezañ ma vefe re hir lakaet war e hed lizher an Aotrou Gwegen o respont d'ar pennad-skrid embannet war VARR-HEGL,32 paj.51, ec'h adskrivomp kemant-mañ.

" Pezh na gomprenan tamm ebet ganeoc'h eo ez oc'h ali kemerout an anvioù hep diskleriañ ar ster anezho... Paseurt mod kinnig ur stumm e brezhoneg a-vremañ hep kompren peseurt elfennoù a zo anezhañ ? ..C'hwil a ra kontrol rik eus ar pezh a larit peogwir e skrivit PLOUWINAZ evit Plougena ha just n'eo ket GWINAZ a zo diskleriet paeron ar barre gant Loth(Revue Cel.) met KENAW...

" Dav eo gouzout n'eus ket anv amañ eus trefodachoù, distresaourioù, met eus EMDROIDIGEZH o vont gant hentoù eeun, re ar rannyezh...Anet eo gouzout eo LANDEHEN ur ger o heuliet rolennoù rannyezh Penteür ha nann re ar brezhoneg evel LANDEVENNEG. An TU a zo tost d'ho kalon, ma'oar met, met perak neuze ez eo bet lemet an D/T gant Jausset e LANAVRAN = LANDAVRAN(AVRAN)

" Setu amañ da skouer rummad LAN = LANN.

- LAN + kensonenn a chom
- LAN + vogalenn = LANT
- LAN+ GW = LANT ha W a ya kuit
- LAN+ B,P= LAM.

" LANGEDG ( hervez ar rannyezh) a yafe da LANGIEUX ha nann LANGEUX... Perak am eus kinniget PLOEREL e-lec'h MEREL ( anavezad m mat-tre) peogwir ez eo EUNDC'H : betek gwalout ez eo PLOEREL gwir-heñveloc'h eget PLOVEREL n'eus abeg ebet e steuziadur V..."

En ur dreemen e tegasan da soñj deoc'h- peogwir stad a zo bet graet ganeoc'h gant Loth ez eo PALAY ha nann BALAY an hini a zo pa paeron PLOUBALAY: chom hep meskañ gant VALAY( eus LANVALAY) (Rev. Celt.) "...

E-giz ma weler anat, avel ma skrivomp, a ziskouez pegen skoemp ez eo labour ar brezhonekaet pe an advrezhonekaet anvioù-lec'hioù ar Warlaezioù. Dre vras hon eus-ni heuliet labour Jausset, ha degemeret ar stummoù kinniget gantañ. Zoken evit an anv PLOUBALAE, merket sklaer e geriadur Vallee( ha Doue'oar koulskoude pegement e tiwalle hemañ da vont re bell en hent !).

Evit ar gerioù e LAN-LANT, n'eo ket ken eeun an traoù ha ma soñjer rak da zisfizidut a zo: Lan(t) a c'hell bezañ evit NANT. Evit LANDEHEN avat, e talc'homp d'hon diskleriadur ha d'hor c'hinnig, diouzh kavadennoù an Ao.Gwegen e-unan evit gwir.

Evit PLEHEREL ez eo fur eta kemerout kentel digent J.Pennaod o tiluziañ, e kement ha ma c'holler-da c'hortoz dielloù ha testennoù asur-orin ar ger-se. Kudenn an M o tont da V hag ar V o kouezhañ n'eo ket ur gudenn tamm ebet: un dra anavezet mat ez eo: (m)ab,(m)añvor, Plouilio = Plouvilio h.a.

Afer LANGUEUX avat, n'eo ket sklaer-sklaer, marteze ha koulskoude ! LANGIEU(X) eo a dlefed da gaout amañ ? Met daoust ha n'eo ket evel-se, war-bouez nabeut, e vez distaget ar ger gant romonegerion Vreizh-Uhel : Lan(g)eu, gant distagadur ar(g) dre an teod ?

Ul labour hir, diaes-tre ez eo - c'hoazh ur wech- adwiskañ e yezh Vreizh-Izel an anvioù-lec'hioù. Ul labour ramzel ma vez c'hoant d'ober al labour-se n'eo ket evit ur c'hornad hepken eus ar Brezioù-Krec'h, met evit Breizh-Uhel a-bezh. Dav

Breizh-Izeliz, 'm eus aon, a ra foutre-kaer eus se. Al labour a vo graet- mar bez graet- gant ur strollad Breizh-Uheliz ha ke-neiled all dezho a Vreizh-Izel troet gant Breizh-Uhel. Met mont da furchal e dielloù an Departamantoù, an dielloù kozh, e pape-rioù an istorourion, en teulioù an notered, kembrioù an "echnoù" pe sekseterioù, ha solieroù presbitalioù ha ma'oar... n'eo ket ul labour da vezañ kaset da benn ken prim ha lavarout...chou d'ur yar. Marteze n'eo ket ret mont keit-se! labourioù all muic'h preset a zo,siwazh !

.....

LAVAL-DES RAPIDES, d'an 8 a viz DU 1962

" Hir e kavan an amzer evit an deizioù : Ewan an deus bet niverenn "BARR-H" tost da 3 sizhun'zo bremañ ha ni, kaer dimp gedal paotr al lizheroù da dreemen bep kreisteiz( rak war-dre an eur-se eo e teu pa deu betek an ti) ne vez ket B.H abet gantañ evidomp...

" Ur c'heloù trist hon eus lannet war "L'AVENIR":hini marv Herve Maze hag a oa ur mignon bras dimp. Ur paotr mat ken na oa, e oa Herve Maze hag ur Breizhad diouzh ar c'hentañ. En hon c'henver-ni ez eo bet zoken muic'h eget ur c'henañ ha gla'harat-bras omp bet o c'houzout e oa ast diwar ar bed-mañ... J.K.

.....

Brest, 24 a viz Eost 1962 :

Gourc'hemennoù doujus evit B.H.Niv.31,paj.62 va heul ar gerioù-se a berzh ar Mezeg-Jeneral Laurent e oa taolenn nesañded TANGI MALMANCHE a vo lakaet war B.H. kentañ ma vo gallet.

JOAIOÙ HA PDANIOÙ MIGNONED BARR-HEOL

E Redon, en Iliz Sant Salverez eo bet euredet Rojer Laouenan ha Soazig Noblet. Anavezet ez eo Rojer evel diazezer BELIHADÉGOU Treger hag a bried yaouank evel telennerez ampart.

En Iliz Sant Loeiz ar re Vuturniet ez eo bet euredet Per Manac'h ha ha Marivon Vallerie, an 11 a viz Here. Bennozh ar Briedelezh a zo betroet d'an dud nevez gant an Tad Jezuiet Mikael Jaouen.

E Lion (Bro-C'hall) an 27 a viz Kerzu, en Iliz-Rouanez St-Marzhin eo bet euredet Erwan Kemere, mab an Ao. Itron. Kemere eus Kemper gant Daniela Marechal,

( Bennozh an Aotrou Doue war briedelezh an dud nevez hag o c'herent)

- Klevet hon eus keloù eus marv Anj Noury, apotiker e Kraozon, Penn-ar-Bed. Un den sioul, hegarat-meurbet, don en e greiz e garantez evit kement a sell ouzh Breizh. Didrouz-kaer e tegase e adkoumanant da VARR-HEOL, gant un draig ouzhpenn hag ur ger leun a hag a gennerez. Nebeut a-walc'h a vrogarourion a oa aet d'e interramant pe ne oa ket bet gouezet. Kasas eo gwelout stourmerion o vont evel-se, hep testeni diwezhañ a garantez o mignoned.

- Heñvel a zo c'hoarvezet gant Herve Maze, ijinour war ar strilhou-riezh, ha brogarour **leizh e** neudenn. N em gavet e o skuizh e ti, e geneil Yeun ar Gov e Gouezeg, goude Kendalc'h Landreger, met gallet en devoa adkregiñ gant e labour, e Rouanlec'h m'edo o vevañ. En un taol koulz lavarout ez eo aet.

Anaout a raen Herve Maze abaoe Sul Fask ar Pantekost 1940. Se'oa e-pad ar brezel: eñ a oa ofisour o labourat e milin-boult Pont-ar-veuzenn he me'oa soudard e Kazarn ar c'hloardi bras kozh. Dre berzh Lannuzel, moñcher e Kemper, ha Per Loazel e ris anaoudegezh gantañ. Ha peogwir e oa torret an holl barmisionoù en askont da aloubidigezh Bro-Velvia gant an Alamaned a oa deuet eñ, gant dilhad nann-soudard da Kemper, un tamm galoñs en e zoug-paperoù. Per Loazel a oa en sivil ha me'oa boa kemeret neuze va dilhad-beleg. Un devezh eus ar bravañ e dremenjomp, e Benoded, a-wel enezennoù Glenan, a bag Lannuzel: an Alarc'h. War ul lizher d'am ferson kozh, an Aotrou Lec'hvien em boa kontet tenor an devezh. Allaz! devet e voe al lizher-se a-unan gant paperoù all, goude drouklazh person Kemper... Abaoe en em wlemp bep bloaz koulz lavarout, hag e-doug gouelioù Landreger hor boa tremenet pennadoù hir a-gevret.

Keit ha ma oa bet chomet bev ar gelaouenn SAV en devoa skrivet dindan an anv H. AR Sperneier. Met abaoe ar brezel e oa chomet mut, ha ne gemere perzh abet en tabutoù.  
( Doue da bardono d'an 2 vreizhad mat he da frealzo o zud en anken)

TREGONTVET DEIZ - HA - BLOAZ SKOL OBER

ENOR

DA VARC'HARID GOURLAOUEN

E-touez an oberennoù pouezusañ a stourm evit ar Brezhoneg e c'heller kontañ SKOL OBER. Hag abaoe 30 vloaz- abaoe miz Meurzh 1932- emañ Marc'harid Gourlaouen oc'h ober war-dro SKOL OBER. Ul labour tenn, dalc'hus ha diaes ma'z eus unan. Abaoe 30 vloaz, bep sizhun, hep disterniañ morse (nemet ar 15 daiz tremenet er prizon enor bras dezhi en abeg da e l) e reizh Marc'harid Gourlaouen poelladennoù. A-wechoù 150 ar sizhun. Ha Marc'harid Gourlaouen he deus evel pep unan ac'hanomp, labour all d'ober: prederiañ ouzh he c'henwerzh, prederiañ ouzh he zi hag an tiegezh. Ha deoust da se, ingal, dibaoez, e rank ober al labour....

H A G E R A !

Ne vefe ket an emsav ar pezh ez eo hep Marc'harid Gourlaouen. Hi eo he deus desket - pe addesket - brezhoneg d'an darn vrasañ ac'hanomp. Hi eo he deus pourchaset d'an emsav e skrivagnerion, e vrudourion, e studierion. E 1932 e krogas Marc'harid he skol gant 59 diskibl. E 1962 e kendalc'h gant 150 diskibl.

SKOL OBER- gant he Skol Izel, renet gant Marc'harid Gourlaouen hag he Skol Uhel, Skol an Trec'h Kentañ, renet gant Yann Thomas-Ravallag- a zo unan eus mein-diazaz an emsav. Ha ma'z eus eus ar maen-se, ez eo a drugarez da labour sioul, kalonek, hep e bar, hor mignonez. Hepti ne vefe ket an emsav ar pezh ez eo hiziv.

N'eo ket Marc'harid Gourlaouen unan hag an em lak er gouloù bras: ne blij dezhi nag an trouz nag an enorioù. Met he labour evit Breizh a rank bezañ enoret. Setu perak en doa divizet KUZUL AR BREZHONEG, lakaat he mignoned - ha kalz a zo - da ginnig dezhi ur pred, hag ur prof.

Ur pred en enor da Varc'harid Gourlaouen a zo bet graet e Kallag o'ar sul 23 a viz Kerzu 1962.

Evel ma verke al lizher-kouviañ kaset da geneiled Marc'harid e oa deredet ur bern tud da Gallag da ziskouez dezhi an doujañs o deus evit he c'halon, he dalc'husted hag he madelezh: tost da 100.

Eus an Neoned, eus Roazhon, eus Sant - Brieg, eus Gwongamp, eus Lannuon, eus Brest, Kemper, Douarnenez, Kemperle, Konk-Kernev, eus Bro-Wened e oa d'edet tud, hag eus a lec'h all c'hoazh.

Re bell e oa k'frioù evel Pariz evit ma c'hellje mignoned Marc'harid dont da gemerout perzh er gouel, met o gourc'hemenoù hag o hetoù o devoa degaset. Ha Kerlann, a drugarez da vagnetofon F.Kervella a gans ur sonig en enor da vestrez-kelenner. z OBER

An darnvuiañ eus pennoù strolladoù ar C'huzul, ha brudetañ skrivagnerien ar Vro: P.Denez, R.Huon, Maodez Glanndour, Yeun ar Gov, Abanna... e oa eno. Niverus e oa ar yaouankizoù: paotred ha merc'hed yaouank; bugale a oa ivez ken niverus all. Hag ur yezh hepken gant an holl.

Pennrener ar Bleun-Brug, Gab ar Moal hag e bried, a oa eno ivez. Hag e kichen Marc'harid edo F.Kervella, unan eus ar re a roas lusk da SKOL OBER e 1932.

Ur brezhoneger yaouank a Vro-Wened, ar Manteg, ken ampart war e rannyezh ha war ar yezh peurunvan a lennas ur pezhig-barzhoniezh eus ar c'hoantañ. Maodez Glanndour, ha Per Denez a saludas mestrez an devezh, ha neuze e stagjod gant ar c'hanaoüenoù.

Hiroc'h ha fetisoc'h rentañ-kont eus ar Gouel a vo gwelet war ar c'hazetennoù ha war gelaouenoù an Emsav gant luc'hskeudenoù, ha dre se n'eus ket ezhomm da bouezañ re amañ war an degovezh-mañ. Hep mar ebet, an hini souzhetañ eus an holl dolpad -se, e oa Marc'harid Gourlaouen hec'h-unan o walout kement a destenioù a geneilliezh, a garantez, ken naturel ha ma kav labourat evit ar Vro. An hini a ro a galon vet, ha dreist-holl an hini a ro ar pep gwellañ a zo ennañ: a galon, ne gompren ket eus pelec'h e sav kement a zoujans, a istim hag vignoniezh en e zekver....

Forzh pegeh kaer e oa ar bleunioù kinniget dezhi gant ar vugale e oa kaeroc'h c'hoazh ar bokedoù bev karget d'o c'hinnig dezhi: ar vugale o-unan, en o daoulagad un asked eus he spored hec'h-unan ha war o muzelloù an heklav eus ar yezh ha deus desket dezho dre berzh o zud bet kelennet ganti.

N'eo ket ar re a ra ar muiañ a drouz eo a ra ar muiañ hag ar padusañ labour : kant lavarer ne dalvezont ket un oberer. Gant he gouiziegezh don ha dilorc'h, gant hec'h amgrausted didro, hec'h emroustet dierbed, hec'h oberiantiz diastal he deuz Marc'harid Gourlaouen dallezet anaoudegezh ha grad vat an holl vrogarourion. Buz ha buhez dezhi ha d'he labour !

6-5. Da skañvaat un tamm labour Marc'harid o deus he mignoned kinniget dezhi ur mekanik-da-skrivañ.

### Kontadenn Nedelek

#### WAR AR BLANEDENN - VEURZH

Ur paotr souezhus e oa an Divarvel. Ma c'heller komz eus paotr pa reer anv eus ur c'hrouadur o chom war ur blanedenn all estreget an douar... Met ret eo dimp komz evel ar re a vev war an Douar evit bezañ komprenet. Ac'hanta! Ur paotr souezhus e oa an Divarvel. A re da re e oa tremenet an dud all; tud nevez pe grouadurien all, evel ma plijo ganeoc'h lavarout, a oa bet krouet er podoù-gwer strink a dalveze da gavell d'ar re vihan. Met Divarvel a chome bev, rak implijañ e rae al louzoù divarvelaat ijinetañ gantañ e-unan. Den ebet avat, n'en doa avi outañ na c'hoant da chom bev pell. Eno ne oa ket stag an dud, evel Douariz, ouzh ar vuhez. Heugañ a raent abred ganti. Ha koulskoude ne vanke-seurt ebet dezho. Abaoe pell'zo o devoa dizoloet sekredoù ar Bed hag ar Vuhez. Binvioù a gement-seurt a zo a labours evito. Tamm poan evit kaout boued. E korn ar ruiou e oa boestoù-plastik gant ur bern mozelennoù ha trawalc'h e veze pouezañ un disterañ, war unan bennak eus an nozelennoù-se da gaout - hervez blaz ha c'hoant pep debret- ar bouloùigoù a zalc'he buhez en dud.

Mekanikoù elektronek hag arc'helaktronek a vire ouzh an dud da skuizhañ o empenn. Ken mat e oa aozet ar mekanikoù-se ma ne vezent direnket kammed, ha ken kalet ha fetis - evitañ da vezañ eus ar skañvañ - an darvez a ouzh o ober ma ne oa ger ebet d'o gwelout oc'h uzañ.

Anaout a rae ervat tud ar Blanedenn - Veurzh, rak eus ar Blanedenn-se e komzomp, - nerzh ar sklerijenn a zeu eus Heol, ha klasakat o devoa zoken tostaat ouzh an Heol, hogen devat e oa bet kement hini en devoa bet hardizhiegezh a-walc'h da nesaat re. Ur skouer fall e oa bet zoken an taol-se, rak adalek neuze, pa ne veze mui Meurzhiz evit gouzav ar vuhez dibreder, ha dilabour a renent, ez an em daolent a-dreuz an amzer da dostaat ouzh an heol d'en em zevañ en-bev.

Met ar paotr kozh a zalc'he bepred, kaer o devoa an dud all ober goap anezhañ, sevel o divskoaz ha mont d'en em zevañ en-bev e tan an heol, pa vezent skuizh gant ar vuhez.

Fent o devez dreist-holl pa groge ar paotr kozh gant a istor. Rak d'ar hec'h da gantañ an hevelep istor a-dreuz ar



c'hantvedoù. Ur gambrig en devoa aozet, hag enni ur benveg fiñv-skeudennerezh, hag alies e vez klevet ar benveg o frañval dousik-dousik. Met ar re zic'hafse dezho mont ur wech bennak er gambrig-se a zirulle da c'hoarzhin gant ar fent, dreist-holl, pa glevent ar c'homzoù iskis a veze klevet da heul ar film.

0 0 0

Pell, ya pell bras a oa abaoe ma oa bet an Divarvel oc'h ober e veaj kentañ d'an Douar. Bez'e oa kompagnunezhioù hag a veze graet anezho: Kompagnunezhioù Beajerezh Ireuz-ar-Bed, hag a gase beajourien d'al lec'h a garent; dreist-holl da weladenniñ ar Plenedennoù all. Aozet e oa bet zoken ur veaj ur wech betek Urenuz met eno e oa ken teñval ha ken yen ma oa bet darbet d'an holl ma-nel hanter-hent, daoust ma oa kloz-mat ha sklerijennet ha tommet ingal al lestr-beaj... Peurvuiñ e veze graet un dro betek an Douar. Da welout diouzh Meurzh e oa heñvel a-walc'h an Douar ouzh Meurzh e-unan. Alese e veze gwelet bep bloaz hag a bep eil pennoù an Douar o wennaat, ha goude-se e steuzie ar gwenn-se, nemet'vel un tog gwenn a chome bapred ledan pe ledanoc'h war an deou benn: 6 miz e pade pep kemmadenn pe war-dro. Heñvel a-walc'h eta war ar poent-se ouzh Meurzh e-unan. Mat war Veurzh pe stage an tog gwenn da en em astenn neuze e tivros an dud da glask tommder war Verc'her pe Wener, evel Douariz o vont etrezek ar C'hreisteiz e-pad ar goañv.

Ar bloaz'se eta e oa aet an Divarvel da heul ur gompagnunezh-veajerezh betek an Douar. En noz e tiskenned peurvuiñ, rak ne fizie ket nemeur Meurzhiz en dud-se gouez, hag hep deskamant a veze war an Douar. Fae a vefe bet ganto zoken skoulmañ darempredoù gant ar siseurt poblañs. Dre fent koulskoude ez aent tost da diez an dud, da sellout a-dreuz ar magerioù, ar pezh a raent diboan-kaer gant o zaolerezed bannoù disgwel. Ar pep fentusañ a gavent e oa gwelout koulz lavarout e pep ti, daou zen bras, unan brásoc'h ha kreñvoc'h eget agile, hag an hini disterañ oc'h ober war-dro tudigoù vihan. D'ober petra kemerout kement a charre na'z eo ken aes krouiñ ha sevel bugale e podoù gwer-strink ! Holl Veurzhiz a c'hoarzhie gant se, nemet koulskoude pa veze merc'hed ganto, ar re-mañ ne choment ket da sellout, nemet hastañ buan mont da glask traoù all da welout. Gwir eo ez eo gant ar merc'hed e oa bet ar muiañ d'ober a-raok diazezañ da vat giz ar grouadurion podoù-strink....

An Divarvel eta a oa aet d'ober e damm tro d'an Douar. E filmerez a oa gantañ, na petra'ta, ur filmerez hag a labourere en deñvalijenn evel er sklerijenn. Aet e oa diouzh e du da glask traoù fentus mat da boltredif ha da filmañ. Un dra bennak a welas

o fiñval en deñvalijenn. Ur paotr hag ur plac'h e oa. Tapout a eure e gamera ha stagañ da filmañ. Ne oa ket ur mouch avel en aer, ha didrouz-kaer e c'hellas an Divarvel lakaat e balikulenn da en-skriavañ fiñvadennoù divall an daou zen-se eus an douar. Ar plac'h a oa azezet war ul loen bihan a-walc'h louet e vlev war a hañvale a-dreuz an noz, hag ar paotr a oa krog e penn al loen. Divarvel ne ouie anv ebet d'al loen-se, met klevout a rafe gant implijidi ar Gompagnunezh-veajerezh. Derc'hel a rae an dud hag o loen da vont war-raok ken na voen erru dirak genoù un toull don a-walc'h, hag int o zri en toull, evel pa vent o vont da lojañ ennañ. E gwirionez Divarvel a welas an daou zen o vont en o gourvez war ar plouz, o mantell paket en-dro dezho. Neuze Divarvel a reas d'e mekanik-filmañ ehanañ hag e troas e seulioù da vont kuit. A-drek e gain avat, e welas evel ur sklerijenn o parañ. Kerkent e reas ur sell dreist korn e skoaz hag adpouezañ war nozelenn e filmerez. Ur bugelig a oa war barlenn ar plac'h, ha krog e oa ar paotr da firbouchal evel da c'haek un dra bennak er pakad traoù a oa eno e-kichen.

Divarvel a hastas buan filmañ an darvoudig-se. Un dra gurius a vefe bapred da gas gantañ, rak war ar Blanedenn-Veurzh ne veze ket gwelet traoù ken evesek-se. Edo o vont kuit, pa zic'h-sas dezhañ sevel e benn. Biskoazh kement all. Ur steredenn a wela en oabl. Ya ur steredenn daoust ma oa milieroù ha milieroù o luger-niñ e bolz an oabl, met Divarvel o anavezse holl; homañ avat a oa dizanav-krenn dezhañ. Ma chomas alvaonet, mentret. Hag evel ful-tan o nijal a-dreuz an oabl hag o kanañ. Ful-tan ha kanadeg a voe paket kerkent gant ar filmerez, daoust ma ne gomprens Divarvel netra ebet hag er pezh a c'hoarveze nag er yezh a glavas. Plijet zoken gant an arvest. Adlakaet en devoa e gamera a-dreuz e skoaz pa welas un tamm mesk o sevel ur pennedig ac'hano, hag e spurmantas un toullad paotred o tostaat, daou rumm loened ganto, ur rumm hag zalc'he da lammat ha d'ober trouz, hag ur rumm all blev rodellek gwenn war o c'hein, heñvel al liv anezho ouzh an tog gwenn a veze gwelet diwar ar Blanedenn-Meurzh traoñ ha krec'h an Douar.

An dro-se ez eas nec'het, ha ken estonet e oa ma tigoras hep gouzout dezhañ ar c'hlapedig a oa war e dal. Ur c'hwitelladenn skiltrus a glavas, hag e santas evel un taol-horz war e benn. Hastañ buan e eure serriñ ar c'hlapedig, rak ankounac'heet an doa e oa war an douar ha ket war e blanedenn e-unan... Kouezhas a reas avat a fardiglev, evel semplet. Pa zisemplas e soñjas gantañ e wela ar bugelig bihan o c'hoarzhin outañ diwar varienn e vamm, ha war benn ar bugelig edo ar steredenn nevez a bare bremaik en oabl.

Met parañ a rae ar sklerijenn gantañ war an dremmwel, ha poent e oa dezhañ adaptout ar Voull Ireuz-ar-Bed, ma felle dezhañ

distreiñ d'ar gêr, rak kerkent ha gouloù-deiz e tibrade ar Voull da nijal war-du Meurzh. Ur Voull hep netra dreist-ordinal en-dro dezhi nemet e oa ur voull beurlvat, rak taolet e oa bet pled na oa nemet ar bouloù peurvat a gement a c'helle treuziñ ar bed dizrouk ha dinoaz dre na gave krog ebet warno ar meteoritennoù o troieta en ec'honder. Un nor doubl e oa da antren enni: un nor diavaez a-stok ouzh aer an douar, ha neuze un tamm kleuz, hag an nor diabarzh. Ne dalvez ket ar boan taolennañ dre ar munud ar stumm ma labourer an nor doubl: un tamm evel ar skluzioù e kanolioù bageal.

Divarvel a gemeras e lec'h en-dro, ha kentizh e kuitas ar Voull Treuz-ar-Bed an Douar. Paseurt nerzh he c'hase en-dro: sklerijenn an heol ha netra ken. Da loc'hañ e veze implijet ur voestig kleuz <sup>nant ur berad</sup> bet karget eus ar sklerijenn vuzhodus-se, un tamm e-giz ma labour an daspugnerien-tredan da gas war-raok ar gweturioù-dre-dan.

Ne bade ket pell ar veaj: ken fonnus hag ar sklerijenn hec'h-unan ez ae ar Voull. Ken fonnus pe dost, rak biskoazh, en desped d'o gouiziegezh ha d'o enklaskoù ne oa deuet a-benn Meurzhiz da vont en tu-hont da dizhder ar sklerijenn: kerkent ha ma tizhed tizhder ar sklerijenn e veze pulluc'het, dispennet, diza-tomekaet an dra gaset. Dav e oa bet paouez gant an esaer.

U U U

Kement a efed en devoa graet e weladenn, ha marteze muioc'h c'hoazh ar stokadenn rust-se a-berzh aergelc'h an douar, p'en devoa digoret klapedig e bennwisk, ma stagas diouzhtu Divarvel da zanevellañ e droiad. Ar re all a rae van da selaou, met pa gomzas eus ar steredenn war benn ar bugelig, e tirollas e genveajourien da c'hoarzhin: "Ur steredenn, emezout? Ma, surmat, ouzhpenn ur steredenn ac'h eus gwelet pa c'h eus bet ur seurt taol evel-se war da dal !!!"

Ma renkas Divarvel tevel.

Het abaoe e veaj war an Douar ne voe mui Divarvel ar memes hini. Un huñvre sebezus e oa bet e dro, met un huñvre gwir-mat, rak kerkent ha ma tispakas al luc'hskeudannoù kemeret war an Douar ha ma tirollas ar film ec'h adgwelas pep dra, pep degouezhig, pep darvoudig, dres evel m'en devoa o bevet hag o gwelet. Gwir e oa neuze...

Bemnoz, hep skuizhañ, ac'h en em gloze en e gambrig hag e lake e venveg-sinema da vont en-dro. Ha bep tro e sante ar memes sebez hag ar memes c'hoant da gompren penaos e c'helle bezañ ur steredenn war benn ur bugelig.

Klasket en devoa gouzout pelec'h e oa diskennet war an Douar hag e peseurt bro e oa bet. Diouzh ar studioù graet gantañ war ar paperennoù en devoa bet digant Kourataerezh ar Beajoù Treuz-ar-Bed e tles bezañ ur gêrig anvet MEHELZEB. Met kaer en devoa selaou hag adselaou kanadeg ar ful-tan ne gomprens grik enno: e gwirionez n'eo ket ful-tan an hini e oant, met skeudoù kentoc'h, pe-tra bennak ne oa ket gouest da lavarout resis petra'oant. Ya skeudoù, rak traoù digorf e hañvalent bezañ.

...A re da re e tremene ar remziadoù Meurzhiz ha ne oa nemet Divarvel a gement a chome bepred. Hogen war dristaat ez ae ar vuhez war Veurzh. war greskiñ a vloaz da vloaz ez ae er grouadurien distumm hag euzhus a veze desavet er padoù gwer-strink. Da eveshaat ouzh an desevel-se e oa bet ret leuskel merc'hed, rak ne zeue ket an traoù da vat gant ar baotred: ne ouient ket, pe ne blije ket an traoù eveshaat ouzh kreskidigezh ha stummidigezh an danvez-Meurzhiz, ha daoust ma veze graet ar c'hemmañ padoù d'an danvez-Meurzhiz-se, dre ma kreskent, gant skoazell mekanikoù arc'helakronek ha digontamet a-grenn, n'o devoa ket ar baotred an sked distar, nag an ijin-distar-tre koulskoude- a oa ezhomm.

Hogen ar merc'hed a oa karget hepken eus al labour-eveshaat rak int o-unan a veze lemet diganto, kerkent hag anavezet o natur ar galloud ar grouiñ. Bet e oa bet kaoz zoken d'o distrujañ, met en abeg d'ar Veurzhiz vihan ha da c'hwitadeg ar baotred war ar poent-se e oa bet lezet o buhez ganto.

Hogen war greskiñ ez ae bremañ a vloaz da vloaz ar grouadurien vihan: hep lagad, hep ezel ebet, pezhioù pennoù, izili gwan, an eil ezel e lec'h egile. Ma stagas Meurzhiz da vezañ nec'het un tamm, rak kent pell e vefe echu gant e gouenn.

Gwashoc'h a c'hoarvezas zoken...

War ur menez uhel-uhel e oa ur pezh tour hag a dalvez da genurzhiañ pep tra: labour ar mekanikoù, war ar Blanedenn, donemoneadeg ar beajoù Treuz-ar-Bed ha me'oar. Heñveloc'h e oa an tour-se ouzh ur pezh kaolenn-bome eget ouzh un tour e gwirionez: ar MODAR a veze graet anezhañ, ha dal ma veze un dra bennak a-dreuz, an distarañ rodig, e veze gouezet dre ar goleier ruz a alumine kerkent o tiskouez diouzhtu pelec'h edo an dalc'h. Bemdez ha meur a wech bemdez bremañ e talc'he ar goleier ruz da alumine. Un draiz bennak e oa bet spouronet Meurzhiz: ar MODAR ne oa nemet ur voull a dan: an holl listri-beaj ast da gas beajourien d'ar Planedenoù all e oa diheñchet ha kollset, ha gant o lestradoù e oant aet d'en em zevif e sklerijenn an Heol.

Bez'e oa un dra all hag a lake nec'hamant ha ranellerezh da sevel e kalonoù Meurzhiz. E-kerz o beajoù a-dreuz ar bed e oa di-chañset dezho kaout war o hent listri hañval a-walc'h ouzh o re, hag a seblante bezañ blienet ivez evel o re; gwelet e oa bet zoken meur a hini eus oablistri dianav-se oc'h ober tro o flanedenn o-unan, ha tamm ha tamm ez eas ar vrud e oa tud enno deut da spiañ ha da glask penaos diskenn war Veurzh. An holl neuze war Veurzh en em lakaas, un tamm evit ankounac'haat o zrubihoù all, da studiañ doareoù Douariz, diwar gement doare a oa bet degaset gant ar veajourien, hag ivez gant o radaroù ultra-elektronek.

Goulenn a rejont neuze digant Divarvel adtremañ dirazo ar film en devoa kemeret tremen 2.000 bloaz a oa. Evit ar wech kentañ ne c'hoarzhas den ebet o walout ar plac'h, ar paotr, ar bugelig gant ur steredenn war e bann, ar ful-tan en aer o kanañ, nag al loened.

Ha mui-ouzh-mui e troas selloù ha speredoù Meurzhiz war-du an Douar, hag e teuas da soñj dezho eus ar pezh a oa bet lavaret gant ar re gozh, pa oa en em daolet Meurzhiz gwechall-gozh da vekanikaat pep tra: "Un dro bennak e savo keuz deoc'h, ken na zeuio estrenien diwar ur Blanedenn all da addeskiñ deoc'h petra eo ar gwir vuhez !"

0 0 0

Krog e oa adarre tog gwenn penn-krec'h an Douar da greskiñ, evel ma rae bep bloaz. Divarvel, en deveze poan mui-ouzh-mui o pellaat diouzh e gambrig hag hep paouez koulz lavarout e lakae e ardivink-fiañskeudennerezh da vont en-dro. E-giz-se e c'hoarveze gantañ, dre ma tostae deiz-ha-bloaz e droiad kentañ d'an Douar. Met ar bloaz-se e oa un dra bennak en e galon hag a rae dezhañ soñjal e oa traoù dic'hortoz o vont d'en em gaout gantañ.

Dres da geñver an deiz-ha-bloaz, pa ne bade mui gant ar c'hoant da adveañ penn-da-benn an droiad kentañ-se a tapas krog en e ardivink dreistelektronek hag hen treiñ war-du ar poent-se anavezet mat gantañ 'lec'h ma en devoa "douaret": erru e oa an noz war an douar. Met n'en devoa ket amzer da chom da sellout.. War ar manez edo krog ar MODAR d'ober sinaloù. Diskregiñ a eure diouzh e radar ha sellout: ur pezh boull o oa o tiskenn diouzh an oabl. Kerkent e komprenas Divarvel: "Douariz !" emezañ. Ha d'ar red e-maez e di. E-touez ar re gantañ ec'h en em gavas e-kichen ar Voull, dres pa oa o tigeriñ evit lezel da ziskenn krouadurien gant gwiskamantoù tev warno, ur pennwisk ront gant ur werenn dev er penn a-raok anezhañ ma weled o parañ drezi deoulagad an estrenien. Ar re-mañ a chomas a sav ur pennadig, digeriñ un duellenig

dindan o c'hazel, ha gortoz. Sklaer e oa : ouzh en em gustumiñ diouzh aergelc'h Meurzh edont. Neuze e lamjont kuit o fennwisk ha minc'hoarzhin ouzh ar bobl a oa bodet en-dro dezho: "Douariz!" Setu ar griadeg a voe klevet a bep tu.

Bac'h a oa war Veurzhiz, me'lavar deoc'h, da dostaat ouzh an diavaezourien-se, da stokañ outo. Daoust ma oa diabs ober kaoz pa ne ouie ket nemeur Meurzhiz yezh Douariz na Douariz yezh Veurzhiz e teujont e benn evelkent d'en em gompren trawalc'h.

0 0 0

N'hellomp derc'hel da zanevellañ deoc'h kement a c'hoarvezas da c'houde, met un dra a zo sur. Divarvel a bedas an estrenien da zont betek e di, betek e gambrig, hag eno e tiskouezas e film.

Klevout a reas gant unan anezho, (ur beleg anezhañ, a-hervez kement a c'hoantae klevout ha gouzout. Diskouezet e voe dezhañ penaos lenn ervat gerioù skrivet Douariz, rak war an tu gin e lenne anezho: n'eo ket MEHELZEB eo anv ar gêrig, met BEZLEHEM. Deskiñ a reas ervat ivez ar gerioù a gane ar skeudoù digorf lugernus, deskiñ a reas anv ar plac'h hag ar paotr, anvioù al loened en devoa gwelet hag e klevas piv 'oe ar re a oe tont a-dreuz an deñvalijenn, an noz ma oa diskennet evit ar wech kentañ d'an Douar.

Ne fellas ket dezhañ implijeñ al louzoù-divarvelaat ijinet gantañ. Pa ginnegas dizoleiñ e sekret da Veurzhiz e respontas ar re-mañ n'o devoa ket ezhomm kennebeut. Hag en gwirionez, adalek an deiz ma oa diskennet Douariz evit ar wech kentañ war Veurzh e voe kemmet an traoù war ar Blanedenn-mañ. Tamm ha tamm a voe dispennet ar stal desevel Meurzhiz vihan hag ec'h en em lakaas ar merc'hed da sevel bugle evel ar Plac'h a oa bet komzet dezho anezhi, hag e klaskont o stuhmañ hañval ouzh an hini a raent anezhañ "Bugelig e Steredenn war e benn". Ar bootred a lakas en o soñj sevel ur skeudenn d'ar Bugelig-se hag e lakjont evel just ur steredenn war e benn. Savet e voe ar skeudenn el lec'h ma oa diskennet Tud an Douar. Ha divizet e voe ober bep bloaz war an ton bras ur gouel eus ar c'haerañ en añvor eus Diskenn ar Bugelig war an Douar ha war Veurzh !

Hini ebet ne deas mui d'en em zeviñ en-bev e sklerijenn an heol, rak divarvel e oant deuet holl da vezañ, diwar-bo-jez sellout ouzh BUGELIG E STEREDENN.

(Noz ar Pellgent, ar bloaz 2691, MEURZH)

X....

HUR YEZH (N.36) : Paj.13 e verkomp un toulladig notennoù diwar bluenn T.Jeusset hag a dalvezo da glokaat ar pezh hon skrivet diwar-benn anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel.(paj.53-4). Evit Plenhaod e c'heller chom en arver evit c'hoazh, en abeg m'eo ar barrez dindan baer-niezh St Per ha St Paol.Gwir eo ma tegemerez goulakadur Jeusset hon eus d'ober amañ neuze gant ur barrez kozh gallo-roman\*\*Evit Langall ez eo ar furmioù kozh-mañ a gaver eviti: Langaal (XII-et kantv.), Langaal (1330), Langal 1432).Er barrez-se e kaver ur gêriadann anvet MONTREL= Moustier, ar Vouster, ar Manati.Bez'ez eus ivez ur chapel dediet d'ar Sant er barrez-se c'hoazh; ur feunteun ha meur a bezh-douar a zoug e anv ( Cf Histoire du Pèlerinage de N.D.de QUERRIEN, 1951, Gwaskoù Breizhek, St Brieq, paj. 10-11).

Paj. 15. Amañ a rankomp dislavarout a-grenn T.Jeusset a-zivout en anv AN NAONED. Moarvat ez eo hennezh ar stumm gwirion e Breizh-Izel a-bezh, implijet e Bro-Dreger ivez. Evit pezh a sell ouzh Bro-Wened, kemerout kentel digant "Chansons Populaires du Pays de Vannes ( L.Herriou ) paj. 43 " Merc'h Duq An Naoned. Klevet e vez zoken AN NANVNEDE. E-skoad ar ger-se ez eo mat sachañ evezh ar skri-vagnerien war ar stumm-mañ: AN NEDELEG, Gouel an Nedeleg h.a.

TROIS POEMES EN MOYEN-BRETON, gant R.Hemon, embannet gant The Dublin Institute for Advanced Studies:(1962) Levrenn 1

Ur blijadur gwelout pegen brav ez eo moulet al levr, ennan Irmenvan an Ytron Guerches Maria, Pemzec Leuenez Maria, Suhez Mab Den. Diazezet mat ez eo testenn an tri barzhoneg brudet-se; gant gouiziegezh hag onestiz ez eo kempennet ar mouladur hag an droidigezh gant R.Hemon, hep kuzhat,e stumm abet,an diaesterioù en deus kavet, hag hep lekaat e faltazi da ziluziañ pep tra. Betek bezañ skurpulus a-wechoù, evel pa dro Mac en gloat doe'n tat elchades evel-hen : Et au royaume de Dieu le Père(?) régente (?). Me bepred, na welan ket petra'zeu an daou bik-goulunnata d'ober aze ! Sklaer-meurbet ez eo ! Evit ELCHADES, e-keriver an distagdur ez eo mat derc'hel soñj eus an anv-familh LELCHAT distaget An Elchad.

Er poz 6,paj.4, goude m'en deus merket R.Hemon ez eus ur silabenn a re er werzenn n'eo ket diaes lenn neuze: En UN lifrae GANT pobl ar bed : Un ha Gant o vont mat-tre asamblez.

Ur studi sketus, ha marteze ar gerioù krennvrezhonek bev atav

\*\*-Orin an devoision brudet-tre da Santez Anna ( Ste Anne du Houlin) a c'helle dont da harpañ ar pezh a lavaromp amañ o tiskouez ez eo kozh-tre Plenhaod. Techet on da sellout an devoision-se, en ul lec'h souezhus, evel un devoision a orin pagen.

er rannyezhoù e c'hello sikour diskleriañ meur a dra. Evel da skouer ar gerioù tregeriek: resped(äd), restañ, imporneant, keuz (ha reuz), roue 'n tron h.a.

GERIADURIG GALLEK-BREZHONEK AN TROIOU-LAVAR POBLEL: (Embannet gant Hor Yezh, kourmant-bloaz 10 LN, D-ell J.Queillé, 47 Ru an Itron Varie, Gwengamp, K.R.P. 1240-22 Roazhon ).

Ul labour all gant R.Hemon. Ket ul labour nevez, peogwir e oa bet embannet ar wech kentañ e 1935. Hogen un oberenn a briz bras. Daoust ma oa diaes moarvat kaout un titl d'an oberenn, ne blij ket din an anv roet d'ar geriadurig. Rak an darnvuiañ eus an troioù-lavar-se ne dint nemet troioù hervez ijin ar yezh, hag evit gwir ar stummoù poblel pe rannyezhel a zo gant darn anezho a zeu eus ur ger rannyezhel bennak e gaver enno.Lakomp da skouer ..E SAVAS KABAL E-TOUEZ AN ARCHERIEN paj. 7 (Agitation) Lakit ar ger MESK e-lec'h kabal hag ho poa an hevelep ster gant ul liv rannyezhel : liv rann-yezh Treger.

Jr geriadurig diglok, eme R.Hemon a bed e lennerion da studiañ e C'HERIADUR ISTOREL. Marteze, ha sur zoken, peogwir eo an digloketur ur si stag dre natur ouzh ar Geriadurioù, met n'eus forzh, ur geriadurig priziüs o tigoll un tamm GERIADURIOU ALL R.Hemon ha ne dint, siwazh! nemet rolloù-gerioù sec'h hag a zo ezhomm anaoudigezh don ha resis eus ar yezh a-benn gallout ober gento.

LEVRIOÙ AR VUGALE: Istor ar Mabig Jezuz, Rozenn Wenn ha Rozenn Ruz, Pêrig hag ar Briñsez, an Eostig, Bleiz Noz Nedeleg, an Tri Borc'hell Roz ( 2 LN pep hini -Goulenn al levrioù digant PER BODENAN, Verger St-Yves, Stank ar C'hoad, Karfeunteun-Quimper,K.R.P.212-23, Roszhon).

Hep mar abet ez eo un dra eus ar braveñ gwelout skrivagnerion veur ar Vro o ouestlañ o fluenn da vugale Vreizh: R.Hemon,F. Kervella, Gwion Rolland, Maodez Glanndour. Hor gourc'hemannoù d'ar skrivagnerion, ha d'an embannerion. Tammoù traoù kou:lkoude a zo hag a gavan displijus: perak skrivañ Jozef ( Istor ar Mabig-Jezuz): skrivañ neuze Yosef, pe Jozef. Moarvat ez eo gwell ivez (id.p4) skrivañ ur morad-tud eget ur morad a dud ( ur mor a dud avat!), hag er bajenn diwezhañ: penaos lenn " hag en em drein" pe an em REIN ?

(Al levrioù all, nemet BLEIZ NOZ NEDELEG n'hon eus ket lennet evit c'hoazh !)

AR BED KELTIEK,21 Ru Dixmude,St-Mark Brest,K.R.P. Roazhon,Kt.10 LN War greskiñ ez eo aet e bajennoù. Ul lip-e-bev kontadennoù ha sonennoù R.Hemon...Kelleier.Gerioù-Kroaz...Kourmantit hep mui dale.



L'AVENIR ( kelaouenn ar MOB). Ur c'halvadenn d'en emglev ha d'ar peoc'h etre div gostezenn an Emsav Sevenadurel. Se'ne sinifi ket kalz tra. Pell'zo ez eo bet kinniget kement-se ! An hent aesañ, peoc'husañ, leal ez eo an dic'hotomiezh.

LO GAI SABER Julhet-October 1962 - Gouere-Here-. Er pennad-digeriñ e komzer eus ar gouelioù bras graet en enor d'ar varzhez Okitanek ~~3~~ Filadelfa de Gerdo(+ 20 a viz Eost 1952) hag e klemm ar skrivagner dre ma oa bet lavaret ar pedennoù en ur yezh na oa ket hini an Iliz katolik nag hini ar Varzhez.'M eus aon e c'hell al latin bezañ sellet evel ar yezh voutin etre ar Frañsizien !

Er bajenn 160 e lennomp kement-mañ a droomp diwar an Okitaneg: " (Resevet hon eus) kannadig-diabarzh breuriezh ar Veleion hag ar Relijiuzed mignonied ar Yezh Ok ( Preires & Religios amics de la lenga D'oc ). Kalz gwelloc'h eget kaozioù ha tabutoù diwar-benn an traoù okitanek ha felibrenkek, ez eo ar vreuriezh da saveteiñ hor yezh. An deiz m'o devezo komprenet hor beleien hag hor relijiuzed ar c'homzoù-mañ frouezh ar skiant-prenañ " Hag e laren ouzhin va-unan pelec'h emañ eta sekred al levenez a lennen en o daoulagad ha war o dremmoù ? Ya hep mar abet emañ er yezh, en hor yezh, heñvel ouzh muzik dudius hag enni un nerzh dedennus hep e bar, ha netra ken ~~met~~ dre ma'z eo hor yezh. Perak ne gompren ket eta va c'henvreudeur ha perak en em aheartont da gomz en ur yezh a rampl war an eneoù hep antren er c'halonoù ?"... Dija ez int deuet a-benn da sevel Pardon Ukitania da Itron Varia Lourd. Perak ne glaskfe ket ar gato-liked okitaniat sevel, en o c'herioù, un oferenn ur wech ar miz, gant prezegennoù ha kantikoù en Okitaneg... Daoust ha ne vefe ket ~~tu~~ da lakaat lenn an Aviel en Okitaneg, diwar hini pe hini eus an troidigezhioù okitaneg pa'z eus kement a reoù vrav anezho ? Kement-se a c'hellfe ober da vihanañ ar veleien n'en em gavont ket barrek da sarnon en Okitaneg.

=====

BUHEZ BARR-HEOL: Er bloaz-mañ, 1962, ez eo gwellaet stumm diavaez BARR-HEOL. Gant ur golo gwelloc'h, gant pennadoù un tamm sklaeroc'h Er bloaz-mañ hon eus roet d'hol lennerion tremen 250 pajennad da lenn. Gout a ouzomp e plije gwelloc'h d'hor c'houmananterion gwelout B.H. o tont er-maez aliesoc'h, gant pennadoù berroc'h, ha stankoc'h. Allaz! diaes eo reiñ o c'hoant dezho !

Lezel a reomp ar C'houmanant er priz ma oa warlene: 6 LN, da nebeatañ. Bennozh Doue d'ar re a zegaso maoc'h. Bloavezh mat d'an holl- bloavezh mat d'hor c'henlabourerion- bloavezh mat da Vreizh ha da gement hini a labour eviti. Ha Bloavezh mat da GELTIA a-bezh !